

# KANNADIG GWALARN



BIBLIOTHEQUE  
QUIMPER  
DIOCESAINE

MEURZ 1932

*Santez Ursula  
hag an unnek mil Gwerc'hez.*

Diocese de  
Quimper & Léon  
Evangelio Quimper & Léon

Document numérisé en 2016

# KANNADIG GWALARN



Meurz 1932

## TAOLENN

### AR BEAJOU KAER

Gant Piou eo bet kavet an Amerik ?

### KERIOU BRAS AR BED

New-York.

### BED AL LOENED

Bered an Olifanted.

### POBLOU KOZ AN DOUAR

An Ejiptiz.

### BURZUDOÙ AN NATUR

Ar C'heviou

### ISTOR BREIZ

Santez Ursula hag an Unnek Mil Gwerc'hez.

### KONTADENNOÙ

Yann ar C'hemenner.

Lunedou an Torfedour.

### EVIT C'HOARZIN

Fentigellou koz ha nevez.



Al levriou kaera  
gant skeudennou  
evit an dud yaouank hag ar vugale

## a vez moulet gant " GWALARN "

Tud e-leiz o deus skrivet d'imp da lavarout  
pegen bras plijadur o deus bet, int hag o bugale,  
o lenn al levriou kaer-se :

### NIJADENN AN AOTROU SKANVIG

dre ar post ..... 20 real.

### PLAC'HIG VIHAN AR MOR

dre ar post.. 1 skoed 12 gweneg.

### PER AR C'HONIKL

dre ar post ..... 4 real.

### LEVR AL LOENED

dre ar post ..... 7 real.

### Ar Beajou Kaer .

## GANT PLOU EO BET KAVET AN AMERIK ?

Desket hoc'h eus er skol moarvat ez eo bet kavet an Amerik gant Kristof Kolomb er bloaz pevarzek mil daouzek ha pevar-ugent (1492).

Ma ! bez' ez eus en em gavet tud, evel m'en em gav atao, evit lavarout ne oa ket gwir. Pe da vihana evit lavarout ne oa ket heñ en doa kavet an Amerik ar c'henta.


Ar vro anvet Groenland, en hanternoz an Amerik, a oa bet tizet, a-raok ar bloaz 1.000, a lavarout gant tud an Norvej. Ar re-se a oa martoloded dispart, ha mont a raent war o bagou pell a-dreuz d'ar mor, betek an Island. N'eo ket souezus eta e vijent aet pelloc'h. Hervez eur marvailh eus an amzer-se, ar c'henta Europad a lakaas e droad war douar an Amerik a oa eun den anvet Lief, mab Erik Ruz. Konta a reer penaos e kasas ar Gristeniez er vro-se. Ober a reas tro al Labrador, an Douar-Nevez, hag e tiskennas zoken betek ar vro a zo bremañ ar Stadou-Unanet.

Komz a reer ivez eus eun den anvet Cousin, eus kêr Dieppe e Bro-C'hall, hag a voe kaset gant an avel, pevar bloaz a-raok kenta beaj Kolomb, betek genou ar stêr Sant Lorañs, er C'hianada. War e vatimant e oa eur martolod, anvet Pinson, hag a vije aet goude d'ar Spagn, e-lec'h m'en dije graet anaoudegez gant Kolomb, ha displeget d'ezañ ar pezh en doa gwelet.

Ar pezh a zo sur eo ec'h anaveze pesketaerien

Sant-Malo ha Dieppe hent an Douar-Nevez kalz a-raok ar bloaz 1600, hag ez aent di da vorua.

Diwar-benn Kristof Kolomb e-unan, n'anavezzer ket kalz a dra. Hag evel ma c'hoarvez bepred



*Lestr Kristof Kolomb  
pa gavas an Amerik  
(hervez eur skeudenn goz)*

ez eo diwanet marvailhou a bep seurt diwar e benn.


Tabut a zo savet, nevez 'zo, da c'houzout e pelec'h e oa ganet. An holl a grede betek-hen e oa ganet e Genoa, eur porz bras eus an Itali. Setu m'o deus tud ouziek en em lakaet da gredi e oa genidik eus bro Katalonia, e biz bro Spagn. Unan bennak am eus klevet zoken o lavarout e oa mar-teze eur Breizad, genidik eus kichen Rosgo, peogwir er c'horn-bro-se ez eus tud anvet Kolom pe Koulm, ha peogwir e teu kalz martoloded vat ac'hano.

Displegomp berr-ha-berr beaj kenta Kristof Kolomb, ha kavidigez an Amerik :

Deut e oa Kolomb a-benn (n'eo ket hep poan) da gaout tri lestr digant rouanez bro Gastilh (er Spagn), Izabella, evit mont da welout ha gwir e oa e vije kavet eun douar en tu all d'ar mor, war-du ar c'huz-heol. Sevel a reas an eoriou d'an 3 a viz eost 1492. E-pad ouspenn daou viz e verdeas, ha hec'h en doa gant e vartoloded, a felle d'ezo distrei. Erfin, d'an 11 a viz here, pa oa an ekipajou digalonekaet prest d'en em sevel, e welas eun enezenn, a voe anvet da c'houde San Salvador.

Kredi a rae Kolomb en doa kavet, n'eo ket eun douar nevez, mes aod bro Indez, diouz tu ar sav-heol. Abalamour da se ez eo bet lesanvet tud an Amerik Indianed, hag an Amerik hec'h-unan a zougas pell amzer an ano a « Indez ar C'huz-Heol ».

Kêriou bras ar Bed



*New-York, gwelet eus eur c'harr-nij*

## NEW-YORK

*Unan eus hor mignoned, eur martolod a Vreiz, bet nevez 'zo gant e vag en Amerik, a skriv d'impal lizer-mañ :*

New-York ! Kalz porziou-mor am eus gwelet, ha koulskoude n'em eus kavet hini ebët heñvel ouz hemañ. Kêriou brasa an Europ n'int netra, a gredan, en e gichen. Na Paris, na Londrez zoken ne deuont tost outañ. Rak amañ e kaver kement a gaver er c'hêriou-se, mes kresket dek gwech,... hep menegi an traou a gaver amañ, ha na gaver e lec'h all ebet.

Souezusa tra a zo da welout e New-York eo ar pikoliou tiez anvet e saozneg *sky-scrapers*, da lavarout eo, « skraberien-oabl », d'ezo ugent pe tregont estaj hag ouspenn, hag a sav uhel en oabl e-giz meneziou graet gant tiez hag ilizou lakaet bern-war-vern. Da lavarout int brao, gwelet eus a-dost, n'int ket. Mes gwelet eus a-bell, dreist-holl e-pad an noz, pa vez sklaer an amzer, ez int kaerdispar, gant o frenester sklerijennet, evel o klask pignat gant eur skeul betek an neñv.

Bet oun e-barz eun *hotel* bras, savet evel-se. Me 'lavar d'eoc'h, mar doc'h bet sabatuet gant an diavaez, e rankit beza muioc'h c'hoaz gant an diabarz. N'eus nemet mogerioù marbr a bep tu. Al lodenn vrasa eus ar c'hambrou hag an trepasiou a rank beza sklerijennet e-pad an deiz, abalamour da deoder an ti, ha koulskoude, an aer a zo fresk, tost ken fresk hag er-maez. Evel just n'eus ket a skalierou, mes « *ascenseurs* » (pe *pignerezed*), hag a gas ac'hanoc'h ken buan ha ken sioul ha tra betek an tregontvet estaj mar kirit. Aet oun betek lein an ti. Ac'hano ez eus eur gwel kaer, a c'hellit kredi. Lavarout a reer, pa ra avel, e vez horellet lein an ti evel eur vag. Mes daoust d'an avel beza kreñv a-walc'h d'an deiz m'oun aet, n'em eus santet netra, hag evel-se n'oun ket evit lavarout d'eoc'h ha gwir eo.

Ar pezh a c'hellan lavarout eo e oa an hotel-se evel eur gêr drezañ e-unan, eur gêr e-barz ar gêr vras, gant eur « *restaurant* », eun ti-post, ha staliou a c'helled prena enno marc'hadourez a bep seurt, lakaat tenna e boltred, trouc'ha e varo, koara e votou, ha me 'oar. Pep kambr a zo tommet e-pad ar goañv dre ar « *chauffage central* » (pe *tommerez-kreiz*), hag e-kichen ez eus atao eur « *salle de bain* » (pe *kambrig-kibella*), e-lec'h ma

kavit dour yen ha tomm evel ma karit. E darn eus ar c'hambrou ivez, war am eus klevet, ez eus eur benveg *T. S. F.* (pe *skingomzerez*), en doare ma c'hellit klevout ar muzik betek en ho kwele.

Arabat e vefe kredi evelato n'eus e New-York netra nemet « skraberien-oabl ». Ar re-mañ a zo holl bodet en eul lec'h anvet Manhattan. Hogen e lec'h all ez eus tiez ha ruiou evel er c'hêriou all : tiez goude tiez, ruiou goude ruiou, a-hed kilometrou. Soñjit, ma 'z afe holl dud Vreiz da New-York, ne vefent ket gouest da leunia an hanter eus kêr.

Evel e pep kêr vras ez eus e New-York tud pinvidik e-leiz, mes ivez tud paour e-leiz, kalz muioc'h a beorien eget a binvidien. Ar beorien a chom e karteriou a zo eur vez o gwelout, koz tiez divalo ha dirapar, e-lec'h ma 'z eus naon, yemjenn, dienez, kleñved ha loustoni a bep seurt.

En amzer-mañ dreist-holl ez eus en Amerik, evel en Europ, — evel e Breiz, siouaz, — kalz micherourien dilabour. Ma 'z eus e-touez va c'henvroiz unan bennak hag a vefe e soñj divroa, ra selaouo ac'hanoun : n'emañ ket ar mare. Ma ranker frita paourentez, gwelloc'h hen ober c'hoaz en e vro, e-touez e gerent hag e vignoned, eget en eur vro estren, hag e skeud ar skraberien-oabl e vefe !

J. V.

---

*Goulennit digant GWALARN*


## **NIJADENN AN AOTROU SKANVIG**

*Istor fentus gant kalz imajou.*

*Priz (dre ar post) : 20 real.*

---

### *Bed al Loened*



*(Skeudenn graet e Bro-Indez  
er 17<sup>vet</sup> kantved)*

## **BERED AN OLIFANTED**

Pell, a-dreñv menezioù bras hag erc'hek an Himalaia, pell diouz bro Siam ha diouz bro Indez, pell diouz diweza tiez an den ha diouz diweza roudou ar sevenadurez (pe *sivilizasion*), pell e

doun ar c'hoadou bras-divent ha kaer-meurbet, aze, e-lec'h n'eo ket c'hoaz tremenet troad mab-den, ha na dremeno biken, eno, kuzet-mat, ez eus eun draonienn deñval, traonienn ar maro : bered an olifanted.

Olifanted bras, bep an amzer, a ya da bardona etrezek diribinou ar menez, e-lec'h m'emañ ar vered kevrinus (pe *misterius*). An olifanted a bir-c'hirin war an tu-se, asamblez gant o breudeur oadetoc'h, pe gant ar re a sant dija war o c'horf dourn an Ankou, pe dant an amzer.

Adal ma sant eun olifant emañ war-nes mervel, hasta a ra da vont da ziskuiza da viken er vered-se, hag e genvreudeur a ya d'e ambroug war e hent diweza.

Eno, ne ren nemet ar maro, eur peoc'h hag eur sioulder peurbadus. Eno, netra nemet hiboud ar c'hoad o vouskana e gan didermen...

\*\*

Evel-se e bro Indez ; evel-se en Afrika. Eno, e gouel d ar Soudan, en eun tu bennak en Tanganika, pe er C'hongo, pe e bro al Lennou Bras, eno, en eul lec'h dianav d'an den, geuniou doun divuzul tro-war-dro d'ezañ, hent ebet da gas d'ezañ nemet hentou kevrinus, diwel da lagad mab-den hag anavezet gant an olifanted hepken ; eno, emañ kuzet ar memes lec'h : bered an olifanted.

\*\*

Setu aze marvailhou koz a vez kontet en Afrika hag e bro Indez. Kredet e vezont, koulskoude, n'eo ket hepken gant pobladoù ar broiou-se, ha gant an Europiz a vev en o zouez, mes ivez gant eun niver bras a dud ouiziek.

Perak ?

O veza ma ne oar den ebet penaos e varv ar brasa eus loened pevarzroadek ar bed, den ebet ne oar penaos e varv an olifant.

\*\*

Hen gouzout a rit, hini ebet, o veva war an douar-mañ, n'en deus eur vuhez peurbadus (pe *eternel*). Eur wech erru koz a-walc'h, an den hag an aneval a rank mervel. Eun deiz, marteze, hoc'h eus gwelet eun den o koueza maro en eun taol war an hent. Ha war ar maez, pep hini ac'hanoc'h, hep mar ebet, en deus kavet korf maro eul loenig bennak : konikl (pe *lapin*), goz, kaz, labous, h. a... Morse c'hoaz, avat, n'eo bet kavet korf eun olifant marvet a varo naturel. Eur mister (pe eur *c'heurin*) iskis e chom, evit an holl, buhez, ha dreist pep tra, maro an olifant gouez.

Ar re vrudeta end-eeun e-touez an dud o deus furchet ar broiou gouez n'int ket evit lavarout o deus eun dro bennak kavet korf maro eun olifant. Bez' ez eus chaseourien (pe *hemolc'herien*), hag o deus tremenet dek ha trizek vloaz penn-dabenn, e rannvroiou bro Indez, e-lec'h n'eus nemet strouez ha koadou. Diskaret o deus a daol fuzuilh a bep seurt loened, hag olifanted zoken. Biskoaz avat n'o deus kavet korf maro eun olifant. Bep gwec'h m'o deus goulennet ouz tud ar broiou-se petra e teue da veza an olifanted maro, atao o deus klevet ar memes marvailh.


Den gouiziek ebet n'eo bet gouest da ziskulia ar mister-se, ha da gredi eo e chomo kuzet, goloet ha teñval, evit pell amzer.

*Hervez eun droidigez graet gant*

MARC'HARID GOURLAOUEN.



Poblou koz an Douar



*Piramidenn vras C'heops*

## AN EJIPTIZ

Bro Ejipt a zo eur vro eus an Afrik, diouz tu ar biz, e-kichen an Azi. Dre ar vro-se e red eur stêr vras, anvet an Nil, hag a ya d'en em deurel er mor Mediterane (pe mor *Kreizdouarek*), e-lec'h ma ra eun *delta*, da lavarout eo, en em ranna a ra en eun niver bras a stêriou bihan a-raok tizout ar mor.

An Nil a zo, goude ar Misisipi (eur stêr vras eus an Amerik) hira stêr an douar. 6.497 kilometrad a hirder he deus. N'eus nemet ar mil kilometrad diweza a zo en Ejipt.

Traonienn an Nil en Ejipt a zo striz-meurbet. N'he deus nemet etre dek hag ugent kilometrad a ledander. War an daou du d'an draonienn-se, n'eus netra nemet an dezert (pe ar *gouelec'h*), da lavarout eo, broiou bras-divent, enno netra nemet traëz ruz ha melen, ha mein krinet gant an heol.

Eur stêr souezus eo an Nil e gwirionez. Di-c'hlanna a ra bep bloaz. Mes e-lec'h dic'hlanna e-pad ar goañv, evel ar stêriou all, dic'hlanna a ra e-pad an hañv. Eus mezeven betek gwengolo, sevel a ra an dour betek ouspenn dek metrad a uhelder, o c'holei ar parkeier tro-war-dro. Arabat kredi koulskoude e vez rivinet ar vro gant an dour-beuz-se. Ar c'hontrol eo a c'hoarvez. An dour, pa 'z a kuit, a lez war an douar eur gwiskad le-c'hid a ra eun tremp eus ar gwella. Hag evel-se, pa zeu miz here ez eo prest an douar da veza digoret hag hadet.

An dud a veve gwechall en Ejipt ne ouient ket perak e tic'hlanne o stêr bep bloaz, rak en o bro e vez tomm-grizias an heol, ha ne ra kazi morse a c'hlaeo. A bep seurt kaoziou o doa kavet da ziskleria an dra-se, hogen n'o doa ket kavet ar gaouz wirion. Gouzout a reomp hizio ar wirionez : dont a ra an Nil eus lennou bras hag eus menezioù uhel a zo e kreiz an Afrik ; ar glao a gouez eno e-pad ar goañv, hag an erc'h o teuzi war ar menezioù da vare an hañv a goeñv dour ar stêr.

Tud a zo bet o veva en Ejipt abaoe an amzeriou pella. Lezet o deus war o lerc'h eur bern monumañchou (pe *savaduriou*), hag a zo bet miret mat a-walc'h, daoust m'o deus an darn vuia anezo etre 2.000 ha 5.000 vloaz. Kalz anezo a zo goloet gant eun doare skritur iskis, anvet *arouezlunioù*. E-pad pell amzer, den ebet ne oa bet barrek da

lenn an arouezluniou-se. Eur Gall, Champollion, eo a zeuas ar c'henta a-benn da gompren ar skritur-se, wardro ar bloaz 1824.

Ar re vrudeta e-touez ar monumañchou savet gant an Ejiptiz eo ar Piramidou. An hini a welomp amañ war ar skeudenn, Piramidenn C'heops, (a zo ivez an hini vrasa), a zo eur bern mein, d'ezañ 145 metrad a uhelder, war 232 a ledander : 2.300.000 metr-kub a veñ etre tout !

Petra eo ar Piramidou ? Bez' e oant beziou savet evit rouaned ar vro, anvet *Faraoned*. Ribouliou a zo enno, ha kaoiou da lakaat ar c'horfou maro. Ar c'horfou-se, a-raok beza archedet, a veze balzamet, da lavarout eo, e vezent gwalc'het ha lakaet enno dourennou ha louzeier evit o diwall diouz ar vreinadurez. *Balzamegnou* a vez graet eus ar c'horfou miret evel-se.

Soñjit el labour a zo bet ret evit sevel ar Piramidou-se, ouspenn 2.000 vloaz a-raok amzer Hor Salver, pa ne oa ket ano c'hoaz eus an holl vekanikou a zo bet ijinet abaoe. Soñjit en niver a dud hag a loened, hag en amzer a zo aet da beurechui seurt savaduriou, ar re vrasa biskoaz graet gant mab-den !

An Ejiptiz o doa eur relijion damheñvel ouz holl relijionou ar baganed. Adori (pe *azeuli*) a raent doueou. Osiris, Isis, Amon, Phtah, Horus, Hathor, Anubis, C'hnoum, setu aze anoiou darn eus ar re anavezeta anezo. Pa veze graet statuiou (pe *delwennou*) eus an doueou, e vezent kizellet peurliesha dindan furm eun aneval, pe eun den d'ezañ penn eun aneval, pe c'hoaz eun den e-kichen eun aneval. Amon ha C'hnoum, da skouer, o deveze furm eun tourz (sellit ouz ar skeudenn) ;

Anubis a oa eur c'hi ; Hathor eur vuoc'h ; Horus eur falc'hun, hag all.

(da genderc'hel p. 18).



*Eun Doue, e furm eun tourz  
(kavet e Bro-Ejipt)*


---

*Evit deski mat  
ar brezoneg*

*e ranker kaout eur « Grammaire »  
Hini GWALARN, e brezoneg hag e galleg  
ne goust nemet eur skoed*

---

Burzudou an Natur



*Keo Fingal*

## AR C'HEVIYOU

War ribl, ar mor, a-hed aodou hor bro, e kaver keviou pe kavarniou kleuzet dindan an douar. An darn vuia anezo a zo bihan a-walc'h, mes darn ivez a zo bras ha kaer-kenañ, doun hag uhel-meurbet, enno reier a bep furm hag a bep liou. Lavarout a rafed saliou bras e-barz eur palez, pe c'hoaz ilizou, gant pilerou ha statuiou kizellet. Ar re gae-ra a weler en Enezenn ar Gerveur, pe e ledenez Kraon, e-kichen Morgad, ha dreist-holl war-dro an Toull-Inged, e-kichen Kameled.

E broiou all ez eus keviou brasoc'h ha kaeroc'h c'hoaz. An hini a welomp amañ war ar skeudenn

a zo brudet dre ar bed holl. E ano eo Keo Fingal, en Enezenn Stafá, unan eus an enezennoù anvet *An Inizi Gall*, e Bro-Skos, en hanternoz da Vro-Saoz.

Ar c'heo-se e lavarfed ez eo bet graet gant dourn mab-den. Goloet holl eo ar mogerioù anezañ gant peulioù maen-bazalt, renket kempenn an eil e-kichen egile. Dor ar c'heo-se he deus ouspenn daouzek metrad a ledander, ha war-dro pemp metrad warn-ugent a uhelder. Pa vez brao an amzer e c'heller mont e-barz gant eur vag, betek en tu-hont da tri-ugent metrad dindan an tornaod. Pa vez fall an amzer, avat, an tonnou-mor a ra eun trouz bouzarus, evel eun ograou bras.

Ar mor o krignat tamm-ha-tamm reier an tornaodou eo a ra ar c'heviou. Bez' ez eus ivez, koulskoude, keviou e-kreiz an douarou. Ar re-se a zo bet graet gant an dour-glao o sila, hag oc'h ober evel stèriou dindan an douar. Klevet hoc'h eus marteze ano Keviou Padirac, e kreisteiz ar Frañs, ha Keviou Han, er Veljig.

An dud o deus a viskoaz kontet marvailhoù iskis diwar-benn ar c'heviou. Setu amañ unan anezo :

En eun tu bennak er Chin (pe *Bro-Sina*), war ribl eul lenn vras, ez eus eur pikol roc'h a sav a-bik a-zioc'h an dour. E-barz ar roc'h-se ez eus eur c'heo burzudus. Rak e-lec'h beza teñval, ez eo lugernus diabarz ar c'havarn-se. Abalamour da se eo bet anvet *Ar Maen Lugernus*.

Hervez lavar tud ar c'harter, — anvet *Kirgized*, — e vefe eun diaoul o loja eno. Eur wech, a lavarar, ez eas eun den e-barz ar c'heo, mes morse ne voe gwelet na klevet kelou anezañ abaoe. Debret e oa bet moarvat pe skrapet gant an diaoul.



Er bloaz 1895, avat, eun den gouziek a vro Rusi, ha diwezatoc'h, er bloaz 1928, eur bagad gouzieien rusian hag alaman, aet da furchal dre eno, a zizoloas kaoz ar mirakl-se : n'eus maen lugernus ebet, emezo. Nemet toull eo ar roc'h a-zioc'h ar c'heo, hag an diabarz a zo eta skierijennet... gant an heol pe al lear.

(Kendalc'h « An Ejiptiz »).

Ar rouaned, pa varvent, a veze graet doueou anezo. Evel-se e c'heller kompren perak e veze savet ar pikoliou Piramidou-se d'ezo. Kredi a rae an Ejiptiz e talc'he ene an den da veva goude ar maro. Evit beza eürus er bed all, avat, e ranke ar c'horf maro beza balzamet ha sebliet hervez doareou merket piz gant ar relijion. N'eo ket ar rouaned hepken, mes koulz lavaret an holl dud, a veze balzamet. Abalamour da se eo e kavomp bremañ en Ejipt *balzamegennou* a vilierou.


An Ejiptiz a zo bet eur bobl ampart hag oberiant. Savet o deus templou (pe *azeuldiou*) d'o doueou, goloet a gizelladuriou hag a skeudennou kaer-kenañ, a chomomp hizio c'hoaz sabatuet hag estlammët dirazo.

---

*Ma plij d'eoc'h ar C'hannadig-mañ,  
diskouezit-heñ d'ho mignoned,  
grit brud evitañ tro-war-dro d'eoc'h.*

---

Istor Breiz



*Rélegaouer Santez Ursula  
e Brugge.*

*(graet gant ar peinter brudet  
Memling. 1435-1494)*

**SANTEZ URSULA HAG AN  
UNNEK MIL GWERC'HEZ**

Setu amañ ar pezh a gontar e Breiz diwar-benn Santez Ursula :

War a lavare gwechall hon tud koz, Konan Meriadeg, deut amañ gant kalz tud yaouank eus a

Vreiz-Veur, a oa eun den a zoare hag a galon. Paotred yaouank Breiz-Izel o doa hen goulennet evit ober ar brezel d'ar Romaned. Hag o veza trec'het ar Romaned hag o c'haset er-maez eus ar vro, en em lakajont da youc'hal e vije Konan o roue.

Hemañ ne gave ket e-touez merc'hed ar vro eur gristenez evel ma c'hoantae evit pried. Rak ne oa ket c'hoaz kalz kristenien er vro. Kas a reas eta tud-da Vreiz-Veur evit goulenn da bried d'e-zañ eur brinsez, unan eus ar re fura hag ar re desketa eus e amzer. Ober a reas ivez goulenn merc'hed yaouank fur ha kristen evit an dud yaouank a oa deut gantañ e Breiz-Izel.

Ursula, an hini en doa lakaet e c'hoant enni, ae doa kemeret Jezuz-Krist evit pried. He zad, roue, a reas d'ezi pignat war al lestr a dlee he c'has da Vreiz-Vihan. Unnek mil eus he c'henseurtezed a bignas ivez war al listri. Ursula a oa o frinsez. Al listri a savas an eor e Londrez, a zo bremañ kêrbenn Bro-Saoz. Setu amañ **petra** a erruas :

Ursula he doa pedet an Aotrou Doue na laoskje ket eun all nemetañ da veza perc'henn he c'halon. He fedenn a oa selaouet. Rak ne oant ket hanter hent, ma savas eur wall-amzer, eun avel ar vrasa. An tonnou-mor a oa spontus. Ar gwerniou a dorre hag a goueze an eil war eben. Ar gwerc'hez-zed kaez hag ar vartoloded a gave d'ezo e oa ar mor o vont d'o lonka. Ursula n'en em glemme na ne ouele. Ne rae nemet pedi Doue. Lavarout a rae d'he c'henseurtezed en em zastume en-dro d'ezi evel o frinsez kemer kalon, hag esperout e Doue hollc'halloudek. An avel vras ne ehane, hag

erfin al listri a voe taolet war ar c'herreg e-kichen an douar, pell diouz Breiz-Izel. Saveteet e oant holl ; bez' o doa gallet dont d'an douar.

Pa voent deut d'ar gêr a Gologn en Alamagn, an dud eus ar gêr-se, paganed, o welout kement a verc'hed koant, a fellas d'ezo o c'haout evit priedou.

Ar gwerc'hez, aliet gant Santez Ursula, ne raent van evit klevout komzou an dud fall-se. Hag ar re-mañ, direizet, o lazas a daoliou kleze.

*Hervez « Istor Breiz » ANNA MEZMEUR (Leanez Anna Jezuz).*

*Evit DEK LUR*

*e vo kaset d'eoc'h*

*DAOUZEK niverenn*

*eus*

**KANNADIG**

**GWALARN**

## YANN AR C'HEMENER

Gwechall-goaz e veve e Breiz eur c'hemener yaouank, e ano Yann. Ne veze graet ano ebet anezañ nemet Yannig ar C'hemener. Eun den kaer e oa. Eun den dournet-mat e oa ivez. Ne veze ken kaoz dre ar vro tro-dro gant ar merc'hed yaouank nemet eus Yannig ar c'hemener, hag eus e di bihan kempennet-kaer. An holl verc'hed yaouank a oa e c'hoant da gaout anezañ da bried, met heñ a oa e spered hag e soñjou war unan, ha ne felle ket d'ezañ kaout re all.

Damdost d'e di e veve eur gemenerez ivez, o chomgant he mamm, hec'h ano Janedig, karet-meurbet dre ar vro dre he skouer vat, rak meurbet e oa skouerits he buhez. Nez ha deiz e labourer hep ehan evit gounit ar bara pemdeziek d'he mamm ha d'ezi. En eur gas en-dro he nadoz hag he neudenn, e kane dalc'hat soniou ha gwerziou en enor d'ar vro ha da sent koz Breiz. Eun dudi e oa beza e kompagnunez eur plac'h ken fur, ha spered Yannig a veze dalc'hmat o soñjal e se, rak, ma oa heñ eun den dournet-mat, hag eun den kaer a gorf hag a spered, Janedig a oa ivez eur vaouez a zoujañs Doue.

Eun devez, Yannig a lakaas en e benn dimezi, hag e soñjas mont etrezek ti Janedig evit gouenn hec'h asant diganti. Janedig a chomas mantret o klevout ar gouenn-se, rak ne oa tamm eus renk Yannig, daoust ma oa kemenerez hec'h-unan. Yannig a oa pinvidik, rak e zoare mat hag e vrud vat o devoa lakaet anezañ da gaout kalz a labour, hag evel-se e c'hounenze kalz a arc'hant.

Janedig, er c'hontrol, a oa paour, ha peurvuia an hini a vez paour a vez ret d'ezañ chom paour dalc'hmat, rak ivez ouz ar baourentez e vez droug dalc'hmat, hag eur wech aet paourentez war

varc'h e vez diaes-bras he diskenn. Ne c'houlenn ken diskenn en traoñ. Setu ar pez a erru gant ar beorien gaez, na vezont morse sikouret a-walc'h.

Ma, Yannig ne sellas ket ouz se. C'hoant en devoa d'he c'haout da bried. Bez' en divije anezi sur mat. Evit dinec'ha anezi, e roas d'ezi da ober eur boned bihan evel e vez lakaet d'ar vugale da vont da vadezi. Henez a oa broudet hag advroudet ha kempennet kaer-meurbet, ken e vije lavarret ne vije ket graet war an douar. Yannig a lavarras d'ezi :

— Janedig, emezañ, c'hoant am eus d'az kaout da bried hag e kredan e vi kontant eus va gouenn, met evit-se e ri d'in a-benn disadorn (hizio ez omp al lun), eur boned bihan evel henez. Neuze e vimp dimezet.

Janedig ne lavarras ger ebet, mes ne soñjas ket nebeutoc'h. Diouistu e krogas gant al labour, hag e reas ivez eur boned, mes daoust m'en devoa an heñvelidigez ouz hini Yannig, ne oa ket da dostaat. Kaer he devoa brouda anezañ, ne dostae tamm da hini Yannig, hag e oa o vont da lezel anezañ a gostez hep sellout outañ ken, pa 'z eruas eun Aotrou bras en ti.

— Demat, emezañ, plac'h yaouank. Mont mat a ra ar bed ganeoc'h ? Gwall nec'het ho kavan, petra a ra d'eoc'h beza ken trist ? Kontit d'in, mar plij, ho tristidigez.

Janedig, o welout madelez an Aotrou-se hag e stumm mat (daoust ma oa an diaoul) a gontas d'ezañ he doare er c'hiz-mañ :

— Aotrou, emezi, me am eus roet va ger da zimezi da Yannig, ar c'hemener, a garan kalz, hag evit-se en deus roet d'in eur boned da ober evel henez, hag em eus labourer hep ehan e-pad ar sizun. Erru eo an deiz diweza, ha va boned n'eo

ket c'hoaz pare. Ne vo ket zoken, rak ne labourin ken warnañ.

— Diskouezit anezañ d'in, Janed.

Janedig a ziskouezas ar boned.

— Hola, emezañ, ma n'eo ket nemet unan evel-se, me a roio unan d'eoc'h hep dale. — Sellit, emezañ, ouz hemañ.

Hag eus e c'hodell e tennas unan hag a oa heñvel-tre ouz egile, evel pa vije heñ e vije.

— Setu amañ eur boned, eme an aotrou, hag a zo heñvel-tre ouz hennez.

— Ya, avat, eme Janedig. Ma karit rei anezañ d'in, me 'zo sur eus va fortun.

— Ya, eme an aotrou, en eur ober eur c'hoarz skrijus, ken na dregernas an ti, te 'zo sur eus da fortun ! Mar karez, me a fortunio ac'hanout. Rak n'ec'h eus ken da ober nemet dimezi d'in, hag ez po ar boned.

— 'Rin ket avat, eme Janedig. Ne zimezin ket d'eoc'h, rak roet em eus va ger da Yannig, ha ne garan nemetañ.

— Ma, eme an aotrou, ma karfes lavarout d'in e teufes ganin a-benn eur bloaz amañ, deiz evit deiz, me a roio d'it ar boned.

Janedig, hep soñjal, a lavaras ya, rak ar boned a gave mat, ha gantañ e oa sur eus Yannig, hag en deiz war-lerc'h, e vije dimezet d'ezañ.

— Dal, kemer anezañ 'ta, eme an aotrou, ha dalc'h da bromesa, ac'han d'an deiz-mañ penn bloaz.

Janedig, ken dinec'h ha tra, a gemeras ar boned. War se an aotrou a yeas kuit hep lavarout ger, e-pad ma oa Janedig o sellout ouz ar boned hag o soñjal e Yannig.

Ne oa ket aet mat an aotrou eus an ti pa zis-

troas en-dro da lavarout da Janedig, ar c'homzou-mañ :

— Plac'h yaouank, emezañ, lavarout a ran d'eoc'h c'hoaz em eus eun ali all da rei d'eoc'h, rak arabat eo d'in ankounac'haat rei va ano d'eoc'h. Va ano eo Markiz Rokilo. Dalc'hit soñj eus an ano-se, rak m'ho pefe soñj anezañ, e vezo mat, hag e lezin ac'hanoc'h da veva e peoc'h gant ho pried, nemet ma n'ho pefe ket a soñj, e teufec'h ganin.

Neuze ez eas kuit hep distrei mui.

Kerkent ha ma 'z eas er-maez ec'h erruas Yannig da c'houlenn kelou ar boned. Janedig, dinec'h-mat, a roas d'ezañ.

— Mat, eme Yannig, bremañ e vimp dimezet. Anzav a rankan ez oc'h par d'in evit al labour.

Setu e voe graet an eured gant lidou ha digorou bras. Paour ha pinvidik a voe pedet da zont, hag holl e oant laouen gant o lod, hag e veulent tro e-pad ar pred madelez an daou bried nevez.

Goude e voe fin d'ar reuz bras, ez eas an daou bried da chom en o zi o-unan. Biskoaz ne voe gwelet tiad tud o veva eürus evel ar re-mañ.

Yannig a gane kalonek en eur wriat, e-keit ha ma veze e wreg o pledi gant labour an ti. Beva a rejont eürus ha laouen ken na zeuas soñj da Janedig eus ar bromesa he devoa graet d'an aotrou en devoa roet d'ezi he bonedenn.

An anken hag ar boan-spered a lakaas anezi deiz-ha-deiz da zizec'ha diwar he zreid, ha Yannig o welout e bried ken drouklivet ha ken kasti, rak ne oa mui nemet er skeud anezi, a c'houlennas diganti petra a oa kiriek d'ezi da veza evel-se karget a velkoni, peogwir heñ en devoa bepred eviti ar memes karantez.

Janig a lavaras :

— Ne dalvez ket ar boan d'in lavarout d'eoc'h, peogwir n'oc'h ket evit va diboania.

— O ! Janedig kaez, emezañ, lavarit d'in mar plij, ha mar doun gouest d'ho tiboania, m'hen tou d'eoc'h e rin.

— Nann, nann, emezi, n'oc'h ket gouest, na c'houi na den ebet.

Derc'heñ a reas evel-se da zizec'ha ken ne oa ken evit chom en he say. Ne oa ken ivez nemet eiz deiz ma tlee seveni ar bromesa he devoa graet. Noz ha deiz ne rae nemet gouela. Yannig, o welout glac'har hag anken e bried, a c'houlennas c'hoaz diganti petra oa kiriek d'he c'hleñved ha d'he daerou.

— Ma, emezi, Yannig, ret eo d'in anzav d'eoc'h An deiz a-raok e oamp dimezet, e oan nec'het-bras o welout ne oan ket evit ober eur boned da hañvalout ouz ho hini, ha ken nec'het e oan ken na ouien da betore sant en em ouestla. E oan evel-se nec'het-bras pa antreas eun den en ti, heñvel ouz eun aotrou.

Hag e kontas d'e bried kement a oa c'hoarvezet.

— Ha gant an amzer, emezi, me 'zo deut da ankounac'haat e ano, ha ne chom ken nemet eiz devez ma rankimp en em zispartia an eil diouz egile goude eur bloavez eürusted penn-da-benn.

— Janedig, eme Yannig, marteze e oa kemener ivez en e stad, ha m'hor bije galvet an holl gemenerien da zont amañ, marteze ho pije anavezet anezañ ?

— Ya marteze, eme Janed.

Va feiz, graet e voe. Embannet e voe dre-holl e Breiz d'ar gemenerien en em gavout, a-benn ar yaou da noz, d'an diwezga termen, en ti Yannig ar C'hemener, e kanton Perroz, evit eun dra a dalvoudegez.

Setu oa en em gavet prez war ar gemenerien. Deut e oant holl nemet unan, ha Janig n'anavezze hini ebet anezo. Koulskoude unan a vanke c'hoaz ha hemañ a oa ret da gaout. Gortozet e voe, nemet ne errue ket. Setu e voe nec'hamant adarre muioc'h-mui.

Hemañ a oa o tont evel-se a dren vat, rak eun tamm e oa diwezat ivez, pa welas eur c'had o ti-fourka a-douez eur vodenn lann.

— Hola, eme hemañ, ma c'hellfen tapout ar c'had-mañ, se a rafe kalz a blijadur da Yannig ha d'e wreg.

Eur reder mat e oa, mes evelkent pevar droad a red muioc'h eget daou, ha ne c'hellas ket he zapout.

Heulia a reas ar c'had eur pennad mat koulskoude, ken na 'z eas en eun toull louarn en douar.

— Mat, emezañ, aze e tapin anezi bepred !

Diskenn a reas en toull, mes pegen souezet ne voe ket, pa 'z en em gavas en eun draonienn vras, leun a c'hlazur hag a wez uhel, e-kichen eur c'hastell kaer-meurbet.

— Boñ ! emezañ, sell amañ eun dra fentus avat ! Sur a-walc'h eo ez oun diskennet en ifern. Ma ! deuomp bepred da welout piou a zo o chom er c'hastell-mañ.

Ankounac'haet gantañ Janedig hag ar c'had, ez eas da welout piou a oa o chom er c'hastell. Pa 'z erruas, e oa ar vevelien o ficha eur c'harron kaer hag o pourchas pep tra evit mont da gerc'hat Janedig an deiz war-lerc'h.

— Demat d'eoc'h, tud vat, emezañ, c'houi a lavarfe d'in pelec'h emañ, rak me am eus kollet va hent, ha ne ouzon ken pelec'h oun erru.

— Ya, emezo, diskennet emaoch e ti eur mar-

kiz bras, ha, mar hoc'h eus c'hoant mont kuit, dalc'hit da vont gant an hent-se,

— Trugarez d'eoc'h, emezañ. Mes lavaret ho piye d'in ivez, mar plij, peseurt ano en deus ar markiz-se, rak me a gred eo bras ha pinvidik, peogwir en deus traou ken kaer.

— E ano, va den mat, eo Markiz Rokilo.

— Trugarez d'eoc'h c'hoaz eur wech, emezañ adarre, mes lavarit d'in evit petra e labourit ken kalonek-se, hag e lakait an traou-se ken kaer.

— Abalamour, emezo, e tle hor mestr mont warc'hoaz davit eur plac'h yaouank war an douar hag a zo promessa etrezo eur bloaz a zo.

Ar c'hemener-mañ a soñjas dioustu e Janedig.

— 'M eus aon, emezañ, n'oun ket war an douar amañ.

Hag heñ da redek ken na nac'he e alan ennañ, en eur lavarout bep kammed :

— Markiz Rokilo, Markiz Rokilo ! — Gant se, emezañ, me 'm bo soñj. Rak sur a-walc'h, hemañ a yelo warc'hoaz da gerc'hat gwreg Yannig. Me a ya da lavarout d'ezañ.

Hag e rede adarre en eur lavarout ano ar markiz. E oa o vont evel-se d'ar red pa skoas e droad en eur wrizienn wezenn, hag e kouezas d'an douar.

— Malloz ar foeltr, emezañ, Markiz Rok ! — Arsa Doue, emezañ c'hoaz, ankounac'haet em eus.

Setu e rankas adarre mont en-dro.

— Gortozit 'ta, va zud vat, emezañ, peseurt micher a rae ho mestr gwechall ?

— Kemener, emezo, e oa.

— Ha bremañ, peseurt ano en deus ?

— Markiz Rokilo, emezo adarre.

— Findampret ! emezañ, laer e oa eta mar deo deud da veza markiz eus kemener. Sur a-walc'h hemañ a yelo warc'hoaz da gerc'hat Janed. Lez anezañ ! N'en devo ket anezi avat !

Hag heñ d'ar red adarre en eur lavarout bep tro :

— Markiz Rokilo ! Markiz Rokilo !

Degouezout a reas e ti Yannig a-benn ar fin, ha bec'h warnañ, evel eun den o vont da vouga.

— Yannig, emezañ, na groz ket d'in, rak ma ouijes peseurt tro am eus graet !

Hag heñ da gonta e dro hag o lavarout pelec'h e oa erruet ha dre belec'h e oa tremenet.

— Hag, emezañ, ar pez am eus kavet ar fentusa e oa klevout e oa aet eur c'hemener da varkiz. Me 'zo sur e oa laer hennez, ha bremañ emañ en ifern.

Ne lavaras ket a c'hevier, peogwir ar markiz a oa an diaoul.

Gant prez vras e c'houlennjont peseurt ano en devoa.

— Markiz Rokilo, emezañ.

— Hennez eo, eme Janedig dioustu. Dont a ra soñj d'in bremañ.

— Setu aet kuit ar gemenerien pep hini da gaout e vro. Ne oa ket aet pell bras treid an hini diwez e-maez an ti pa 'z en em gavas ar markiz.

— Ac'hanta, plac'h yaouank, emezañ, soñj ac'h eus eus da bromesa ?

— Ya, emezi, soñj am eus.

— Peseurt ano am eus 'ta ?

— Markiz Rokilo, eme Janedig kerkent.

O klevout an ano-se, an diaoul a yeas er-maez evel eur c'hi klañv, hag a gasas gantañ an hanter eus mogerenn an ti.

Janedig ha Yannig, en eur sevel ar vogerenn anevéz, a oa kuit. Hag an diaoul n'en devoa bet netra evit e lod.

Beva a rejont e peoc'h e-pad pell amzer. Bez' o devoe kalz a vugale. Beva a rejont koz-koz hag o devoe an eurvad da welout o lignez oc'h en em astenn dre ar vro, ha zoken beza 'zo diouto c'hoaz e-touez kemenerien ar vro-mañ, hervez am eus klevet. Met ne vo ket ret d'eoc'h lavarout ez eo ar gemenerien a zo c'hoaz er vro-mañ eus ar memes gouenn ganto ivez. Me am eus klevet vanan, ha me ivez a lavar d'eoc'h evel em eus klevet.

L. CHARRAN,

(*Tennet eus « Kroaz ar Vretoned »*).

*An holl a gar lenn*

*ar «brezoneg uhel»*

*a lenn*

**GWALARN**

## LUNEDOU AN TORFEDOUR

Eur bobl a dud a oa en em zastumet dirak an ti bras a ra korn war blasenn ar « Merc'hed dibreder ». Hag an teodou a flipenne, gwasoc'h eget kant golvaz en eur poull-kanna... Soñjit 'ta ! Wardro pemp eur eus an abardaez e voe dizoloet, e-barz an ti bras, korf eur vaouez koz lazeta ha diskolpet gant eur c'hrizder skrijus. Ha piou ken nemet eul laer an hini a reas an taol ?

Eur barner-enklasker, eur c'homiser hag eur medisin a oa deut dizale da welout penaos e oa an traou.

E-barz ar gambr, tra amañ, tra aze ! Bec'h a oa bet, ret eo kredi, hag an hini goz he doa dalc'het penn d'he muntrer ; ar c'hadoriou pilet, gwer ha boutailhou drailhañ ; war an daol, eun dournad bleo diframmet diouz penn an hini lazeta, chomet war he c'hein, en eur poullad gwad, e-kreiz ar gambr, he dilhad roget warni, he fenn bronduet ha kant gwech kignet ; eun druez, eur spont he gwelout !

Eur vilin-gafe a oa e-kichen, livet a wad.

— Setu, eme ar medisin, ar benvez en deus graet gantañ an torfedour e daol !

Kement gwenneg a oa en ti, ha meur a dra a dalvoudegez, a oa bet skrapet gant al laer. Mes penaos kaout roudou hemañ ? Kaer a oa bet furchal ha difurchal, an enklasker ne zeue a-benn a netra. Edo zoken an holl o vont d'en em denna kuit, evel m'en doa graet ar c'homiser, deut klask warnañ, pa voe kavet war lenn ar gwele eur re lunedou hanter uzeta : o ferc'henn, emichañs, a oa deut war an oad, ha ne wele nemet eus a bell.

Ar gavadenn he doa he fouez. Ne chome ken da gaout nemet ar pep gwasa : an torfedour.



\*\*

Ar barner-enklasker a c'houlennas piou a oa bet, goude ar c'hreisteiz, e ti an itron goz. Eun amezegez a ziskulias, mall warni, eur c'homiz eus eur stal vras, a oa bet deut da douch arc'hant, emichañs.

— Tres fall a-walc'h zoken a oa warnañ, emezi. Gourc'hemennet e voe klask ar c'homiz.

An Aotrou Pluenn, ar c'homiz-se, eun denig bihan, souchet eun nebeudig, hanter-kant vloaz pe war-dro, disto e benn, izel e gomz, a oa o tont da zegouezout er gêr. Edo o tenna e dreid diouz e votou-ler, pa zeuas daou bolis en ti.

— Deuit ganimp dioustu, emezo.

Hag an daou bolis en em roas da furchal e pep tu.

Ar c'homiz a oa nec'het kement ha ma c'helle beza. E vaouez hag e ziou verc'h yaouank a oa diskordet da ouela dourek, o gwalc'h.

— Perak e teuit d'am c'herc'hat ? eme an Aotrou Pluenn.

— Gouzout a-walc'h a rit perak !

— Petra a zo da damall d'in ?

— Ar c'homiser a zegaso soñj d'eoc'h. Da c'hor-toz, mar plij, dalc'hit ho teod en ho kenou, gant aon d'hor bouzara.

Ar bolised n'eo ket brao atao ober ganto. An daou-mañ a oa ken rust ha spern du pe kelenn garo.

Klask a rejont eur wetur. An Aotrou Pluenn paour a voe bountet e-barz hanter varo, ha buan e tegouezjont o-zri dirak sekretour ar c'homiser, eun den rok, hanter gousket war e gador.

\*\*

— Hoc'h ano, lesano, oad ? emezañ en eur zi-c'henaoui.

— Pluenn Tomaz Herve, pevar hag hanter-kant da hanter east.

— Pet gwech oc'h bet kondaonet ?

— Pet ! Me ?... Gwech ebet, emichañs, eme ar c'homiz souezet.

— Ni a welo kement-se. Lavarit d'imp petra hoc'h eus graet hizio.

— Evel bemdez, ez oun savet da seiz eur. Ha pa 'm eus evet va banne kafe, ez oun aet d'am bureo.

— Mat ! Ha goude ar c'hreisteiz ?

— Ez oun distroet d'am labour. Tenn zoken e oa warnoun, abalamour d'ar sardin eoul am boa debret gant ognon, ha na raent nemet klask sevel war-c'horre...

— Petra 'faot d'eoc'h a rafe ar justis gant ho sardin hag ognon ? Mar klaskit ober goap, e c'hellfe kousta d'ho ler.

An Aotrou Pluenn a vennas diskenn en e votou. En em zastum a reas, evel eur velc'houedenn gornek en he c'hrogen.

— Goude se ez oun bet o touch arc'hant digant tri ostiz...

— Ankounac'haat a rit eun ostizez. Da bet eur oc'h bet e ti an Itron Drouklazet ?

— War-dro peder eur, peder eur hanter.

— Gouzout a raec'h kavout an Itron-se hec'h-unan d'an ampoent ?

— Sur avat, peogwir emañ he mab o labourat er porz.



- Neuze an Itron Drouklazet a oa hec'h-unan ?  
— Ya, hec'h-unan, ha roet he deus d'in an hanter-kant skoed am boa da douch.  
— Mat, Da bemp eur an itron goz a zo bet kavet lazet.  
— Piou ? An Itron Drouklazet a zo bet lazet ?  
— Hi ! Ha c'houi ne ouiec'h ket, hañ !  
— Ha penaos em bije gouezet ? Pa 'm eus he gwelet, ar vaouez kaez a oa leun a vuhez.  
— Ha koulskoude den all nemedoc'h n'eo bet gwelet o tont eus he zi, setu...  
— Ha setu perak emañ, eme ar c'homiz, strafuilhet-holl.  
— Ya, setu perak.  
— Me a zo tamallet da veza lazet an itron baour Drouklazet ?  
— An dud a lavar eo c'houi...  
— Kement-se n'hall ket beza ! Goapaat a rit, n'eo ket ?  
— N'emañ ket ar mare da c'hoapaat, pa 'z eo sklaer hag anat ez oc'h kablus.  
— Sklaer, eme mouez ar c'homiz o krena.  
— Aon a zeu d'eoc'h ?  
— Peadra a zo da gaout ! Koll a ran va fenn.  
— Evit gwir, e goll a c'hellfec'h !  
— Ha perak em bije-me graet ken gwaz torfed ?  
— Evit laerez.  
— Laerez ! Va zammig spered a dro.  
— Alo ! eme ar sekretour, degasit d'imp ar wirionez.  
— Ne lavaran nemet ar wirionez.  
— Arabat d'eoc'h kenderc'hel da nac'h. Ne dalv ket ar boan ! Diskleriit hoc'h eus graet an taol : kement-se a c'hell c'hoarvezout gant an holl. Aet oc'h da douch arc'hant ; ... an hini goz a oa hec'h-unan ; ... digoret he deus an armel ; ... gwelet

hoc'h eus peziou aour, bilhedi ; ... klasket hoc'h eus krabanata unan bennak ; ... an hini goz he deus gwelet ha klasket gervel d'al laer ; ... c'houi hoc'h eus kollet ho penn ; kroget hoc'h eus er vilin-gafe, ha skoet, ha skoet ganti...

— Va Doue ! Va Doue !

— Evel-se eo c'hoarvezet an traou, n'eo ket 'ta ?

\*\*

Ar c'homiz paour a zalc'he start d'en em zifenn. Ar sekretour a fellas skei eun taol mat.

— Lavarit d'in 'ta. Lunedou a rankit da gaout ?

— Ya, ne welan ket mat nemet gant lunedou.

— Mat eo, va den ! Setu aze ho lunedou hoc'h eus dizoñjet war wele ar paour kaez itron !

— Va lunedou d'in-me ?

— Ya, anaout a rit anezo, emichañs ?

Hag e tiskoueze al lunedou,

— Aotrou, al lunedou-se, evit gwir, a zo gwall heñvel ouz va re...

— A ! a ! Anzav a reot bremañ !

— Aotrou, e gwirionez, ... n'em eus lazet den ebet.

— Mat ! mat ! a-benn warc'hoaz e vo gwelet. Diouz ar mintin e viot kaset dirak korf an hini lazet. Goude e vezo tennet ho poltred ha kemeret muzul ac'hanoc'h. Arabat d'eoc'h kredi e vefe daleet ganeoc'h, sellit.

\*\*

An Aotrou Pluenn ne oa mui gouest nemet da grena, ar pez a reas e walc'h, pa voe kaset d'an toull, e-lec'h ma voe lezet da c'hourvez war eur c'holc'hed kalet. Hag e spered a rede, a rede gwasoc'h eget eur marc'h spontet. Penaos 'ta ? Heñ tamallet da veza lazet evit laerez ? Pebez tra di-

valo ! Hag e vignoned hag e vestr, petra 'soñjfant anezañ ? Siouaz Doue ! Hag e wreg, e verc'hed yaouank, pebez taol evito !

Ya, me lavar d'eoc'h, eur wall nozvez a dremenas ar paour kaez komiz en toull striz e-lec'h ma skrigne a-wechou dent ar razed hag al logod. Skeud an « dibennerez » a baras zoken war ar mogeriou gleb, war-dro an hanternoz... « Oei ! va gouzoug ! »

Mintin abred, an Aotrou Pluenn a voe galvet dirak ar c'homiser hag e sekretour.

— Me n'em eus graet netra, eme ar c'homiz spontet.

— Evel-se e lavaront holl bepred, eme ar sekrekour. Mes, aotrou komiser...

D'an ampoent eur polis a zeuas en ti.

— Alo ! a grias-heñ, emañ kavet an torfedour en taol-mañ ! Eun amezeg divalo eo en deus graet an taol. Hanter sot e rank beza, rak anzav a ra e dorfed !

Ar c'homiser a grafigne e benn.

— Mes, aotrou komiser, eme ar sekretour, setu amañ al lunedou en deus lezet hemañ war e lerc'h...

— Dal ! va lunedou-me, eme ar c'homiser. O klask gouzout edon ivez e pelec'h em boa o ankounac'haet. Setu int kavet !

Ar sekretour a sellas ouz an Aotrou Pluenn.

— Petra 'glaskit neuze amañ, emezañ fuloret. Bale e reot buan ac'halen, pe ni 'welo bremaik !

Ar c'homiz paour a chome sebezet, pladet. Eur polis a zigoras an nor d'ezañ da vont d'ar gêr.

*Hervez E. C.*

e « Kroaz ar Vretoned ».

*Evit C'hoarzin*

## FENTIGELLOU KOZ HA NEVEZ

— Petra 'rez aze ? eme he mamm da Gatellig, a zo puchet e-kichen an caled, e-lec'h m'emañ asied ar c'haz.

— Ar c'haz en deus lakaet e fri e-barz ya laez, eme Gatellig. Neuze em eus evet e laez, evit deski d'ezañ.

\*\*

An Aotrou Karaba a lavar d'e vab yaouank :

— Gwelomp, va mab, kemer ar boazamant da veza dereat e-keñver ar porzier, ar jardriner, ar paotr-karr, ar vevelien hag ar mitizien. Er c'hiz-se, marteze e teui a-benn da veza evel ma tere e-keñver an holl, ... memes da gerent.

\*\*

Emañ Perig, eur bugelig tri bloaz, o sellout gant e dad ouz eun interamant o tremen. Dirolla a ra da c'hoarzin.

— Ro peoc'h 'ta ! eme e dad. N'eo ket brao c'hoarzin dirak ar re varo pa 'z eont d'ar vered.

Perig a ro peoc'h. Mes eur wech aet an interamant e-biou, e c'houlenn :

— Ha bez' e vo beziou a-walc'h er vered evit kement all a dud varo ?

\*\*

Eun den piz-meurbet a oa kouezet klañv. Goude beza chomet o termal pell amzer ez a erfin da gaout eur mignon d'ezañ, eur medisin, da c'houlenn kuzul digantañ.

— Aotrou Doktor, emezañ, n'oun ket evit mi-  
rout netra. Dislonka a ran kement a gemeran,  
kerkent ha debret.

— Lakait eur pezh pevar real, a respont ar me-  
disin, etre ho tent, kerkent ha m'ho pezo debret.

\*\*

Eur reklam en eur gazetenn :

« Ho kwreg hag ho pugale kresket, livet ha la-  
kaet e-barz eur framm evit eur skoed. — *Magic-  
Foto.* »

\*\*

Eun Itron, d'he mignonez :

— Plijout a ra d'eoc'h va matez nevez ?

Ar vignonez :

— Eun dra bennak a blij d'in enni.

An Itron :

— Petra 'ta ?

Ar vignonez :

— Ma 'z-eo hi ho matez, e-lec'h beza va hini.

\*\*

Ar wreg (d'he fried) :

— Mont a ran hizio da gêr da breña d'in dilhad  
nevez. Peseurt amzer a raio ? Sell ouz ar gaze-  
tenn.

Ar gwaz (o sellout ouz ar gazetenn) :

— Glao, kazarc'h, erc'h, skourn, reo, avel ha  
kurun.

\*\*

Ar mab :

— Tad, penaos e oar an dud ouizieq da bet eur  
e vo uhel pe izel ar mor a-hed ar bloaz ?

An tad :

— Diod ma 'z out ! Hag e kav d'it ne oar ket  
an dud ouizieq lenn an almanagou kenkoulez ha  
te ?

\*\*

Ar paotrig (da zimezell an ti-post) :

— Degouezout a raio al lizer-mañ e Brest war-  
c'hoaz ?

An dimezell :

— Sertenamant, va bugel.

Ar paotrig :

— Ne raio ket, avat, peogwir e kasan anezañ da  
Vontroulez.

An holl levriou brezonek a vez kavet e

**TI KERILTUD**

11, rue d'Algésiras, BREST

dalc'het gant an Dimezelled Torcol

Dalc'hit soñj eus an ano-se !

# GWALARN

ano ar gazetenn gaera biskoaz moulet  
e Breiz



An holl dud desket a oar lenn ar « brezoneg uhel »  
a gemer « GWALARN »



Priz ar c'houmanant diouz ar bloaz :  
30 lur

(Romantou, peziou-c'hoari, barzoniez, marvailhou,  
studiadennoù a bep seurt : war-dro 500 pajenn  
bep bloaz etre tout).



Skriva da :

**GWALARN**

Boîte Postale 75, Brest.

(C. C. 96-38, Rennes).

Evit kaout listenn al levriou hag an traou a  
bep seurt moulet gant « GWALARN », skrivit  
d'an adres-mañ :

# GWALARN

Boîte Postale 75

BREST.

Setu amañ hon niverenn chek-postal :  
96-38, RENNES.



Priz ar C'hannadig-mañ eo

**PEVAR REAL**



# KANNADIG G WALARN

Eun Niverenn bep Miz — Ar Pemzek eus ar Miz



*Ar vag « Artiglio », a zo bet o pesketa, aour an  
« Eept » e strad ar mor.*

## KANNADIG G WALARN

ne goust nemet DEK LUR  
ar bloaz

(Broioù estren: 15 lur)

Skrivit da:

Journal de G WALARN

Boite Postale 75, Brest

(C.C. 96-38, Rennes)



TAOLENN

◆  
KELEIER AR MIZ

◆  
Kontadenn  
AR VLEIZEZ

◆  
AN ELEKTRISITE  
HAG AL LABOUR-DOUAR

◆  
G. AR YANN  
EUR BEAJOUR A VREIZ

◆  
DRE AR VRO  
PAJENN AR MERC'HED  
PAJENN AR VUGALE  
A-ZEHOU HAG A-CLEIZ  
FENTICELLOU  
HOR BOEST-LIZIRI





# HOR BOEST-LIZIRI

Setu amañ « Kannadig Gwalarn ». Dister eo. Hogen pep tra vras a zo bet graet er bed-mañ a zo bet dister da genta.

« Kannadig Gwalarn » a zo bet savet evit rei plijadur d'an dud. Traou fentus a vo kavet ennañ e kichen traou a bouez. Bez' e vo ennañ peadra da lenn evit an holl.


« Kannadig Gwalarn » a gas e c'hourc'hemennou d'an holl Vretoned a lenno anezañ, ar re a zo e Breiz hag ar re a zo skrignet dre ar bed holl. Klask a raio servija anezo e pep giz. Bez' e vo evel eul liamm etrezo. Deski a raio d'ar re na ouzont ket pebez pobl dispar eo pobl ar Vretoned, ha petra a c'hell ober ar Vretoned pa garont.

Amañ n'hon eus nemet eur ger-stur :

Bevet ar Vretoned ! Bevet hor bro garet Breiz !

## Liziri, mar plij

Bretoned a vro Leon, a vro Dreger, a vro Wened, a vro Gerne, Bretoned a Vreiz-Uhel, ha c'houi, labourerien ha martoloded a Vreiz, en holl vroioù ha war an holl voriou eus ar bed, skrivit d'imp hep aon, ma hoc'h eus eun dra bennak da c'houlenn pe da lavarout. Eur bajenn eus *Kannadig Gwalarn* a vo prest atao da zigemer ho liziri.



Er Spagn ez eus bet roialisted o klask diskar ar Republik. 51 anezo a zo bet barnet ha kaset kuit eus ar vro. Amañ e weler anezo e Cadiz (Cellon-Paris).

## E pelec'h n'eus ket a Vretoned ?

« Beajet em eus en Afrik, en Amerik hag en Oseani, hag e pep lec'h em eus kavet Bretoned. E New-York evel e Madagaskar, evel en Nevez-Kaledoni, klevet em eus tud o kaozeal brezoneg. Deut qun da gredi ez eo gwir al lavarenn goz : « E pep lec'h ma tremen an heol e tremen ivez ar Breton. »

MARTOLOD.

## Ano hor G'hannadig

« Gwelit em eus niverenn miz meur. Mat a-walc'h hen kavan, gwelloc'h eget kement tra a zo bet graet betek bremañ... Hogen kalz a chom c'hoaz da ober. Eun dra a venegin d'eoc'h hepken : an ano. An ano-se a « Gannadig » a zisplij d'in kenañ ; koz eo. Ober a ra d'eoc'h sonjal en eur bern kazetennoigou parrez, nebeut diouz an amzer-vremañ dre an diabarz evel dre an diavaez. Setu aze va menoz. Gant plijadur e welfen ac'hanoc'h o lakaat eun dra bennak en e lec'h evel « Gwalarn, Kornog, hag all... »

A. P.

## Ar yoyo

« Penaos e vez lavaret yoyo e brezoneg mat ? »

YOYOEREZ.

Respont. — Ales-meurbet a feu d'imp liziri da c'houlenn gwir ano brezonek eun dra pe dra. Unan a garfe gouzout petra a vez graet eus eur *moteur*, egile eus eur *parachute*, hag all. Setu bremañ tro ar yoyo.

Ma ! ma ne fell ket d'eoc'h lavarout yoyo, lavarit : kornigell-indian, kornigell-skourr, kornigell-a-istribilh, kornigell-war-bouez-korden, kornigell-veni, kanell-gornigell.

Grit ho choaz eta, dimezell Kanellgornigellerez !

# KELEIER AR MIZ

## Ar c'honversion

D'ar 16 eus ar miz eo bet votet, e Paris, gant ar Gambr, konversion ar rantou. Antronoz e vo votet ivez gant ar Sened.

Dre ar c'honversion-se, interest an arc'hant plaset war ar Stad abaoe 1915 a zo digresket. Ar c'hospital a roe 5, 6 ha 7 % betek bremañ ne roio mui nemet 4,5 %.

Setu eta eur c'holl adarre evit an dud o doa presitet arc'hant d'ar gouarnamant. An darn vuia anezo o doa roet eur c'hospital en « aour », hag e veze paet d'ezo an interest e « paper ». Setu digresket c'hoaz an interest-paper-se !

## An Alamagn

Ar Reichstag, pe Kambr an Deputeed, a zo bet torret d'an 12 gant ar ministr Von Papen, a zo e penn ar gouarnamant. N'en doa en em vodet nemet diou wech.

D'ar sul 4, 160.000 a dud, izili ar « C'haskou Dir », o doa tremenet dirak ar C'hronprinz koz, war dachenn Tempelhof. Ha setu an holl o krial haro war an Alamaned abalamour da se.

Erfin, gouarnamant an Alamagn en deus kaset da c'houarnamant Bro-C'hall eul lizer da c'houlenn evit an Alamaned ar gwir d'en em arma evel ar re all. Petra a reas Herriot, kenta ministr Bro-C'hall, nemet kas al lizer-se da c'houarnamant Bro-Saoz. Hemañ en deus embannet war se eul lizer all, da lavarout e vije gwelloc'h c'hoaz lakaat an holl vroioù da zizarma.

En eur brezegenn vras, d'ar 25, Herriot en deus diskleriet ne felle ket da Vro-C'hall, e doare ebet, e vije cheñchet netra e skrid-emgleo Versailles.

## Gorguloff

Gorguloff, an den hanter ziskiant a lazaz Doumer, President Republik Bro-C'hall, a zo bet trouc'het e benn d'ar 14.

## An dorifora

War-lerc'h broioù all, an Holland he deus lakaet harz war ar patatez o tont eus ar Frañs. Evit kas patatez d'ar vro-se, e vo ret kas eur sertifika da zis-

kouez n'int ket bet taget gant ar c'houil flerius-se. Setu eun taol fall adarre evit Breiz.

## Eur gwall zarvoud

E Turenne, en Algeri, e-kichen Tlemsen, eun treñ leun a soudarded eus al Lejion a zo kouezet e traoñ eur stankenn, d'ezi 80 metr a zounder : 60 lazet hag ouspenn 200 gloazet.

## Ar « Persée »

Goude al lestr-splujer « Prométhée », setu unan all, ar « Persée », c'hoarvezet gantañ eur gwall zarvoud e Cherbourg. Ar wech-mañ n'eo ket kollet ar vag, met c'houec'h den a zo bet lazet, ha kalz gloazet, en o zouez Bretoned.

## Koñferañs Stresa

Eur c'hoñferañs dalc'het e Stresa, en Itali, evit gwellaat stad broioù kreiz an Europ, n'en deus graet labour vat ebet.

## Gandhi

Bec'h a gav ar Saozon atao en Indez. Gandhi, a zo dalc'het e prizon ganto, en deus nac'het kemer boued, ken na vije roet o gwir d'ar beorien eus e vro, gwasket ha dismegañset gant an dud uhel. A-benn ar fin, ar Saozon hag an dud uhel o deus ranket plega.


## E Jenev

Kuzul Kevredigez ar Broioù a zo en em vodet e Jenev, d'an 23, dindan renadur De Valera, Prezidant Stad Dishual Iwerzon. Hemañ, e-lec'h ar brezegenn a oa bet aozet evitañ en a-raok, en deus diskleriet fraez e venozioù. Kevredigez ar Broioù, emezañ, ne vo mat nemet en deiz ma vo lakaet par he holl izili, — e-lec'h bremañ ar broioù bras, ar re o deus armeou niverus ha bagou-brezel e-leiz, a c'hell ober peza garont.

Den ebet n'en deus stlaket e zaouarn d'ezañ. Gwellet fall e vez atao neb a lavar ar wirionez.

Prezegenn De Valera a oa e saozneg hag en iwerzoneg.







Sir John Simon, unan eus ministred Bro-Saoz, o tigouezout e Croydon war e zistro eus Jenev




Mab roue ar Roumani a zo bet oc'h ober eun dro e Paris hag e Londrez da welout e vamm, ar brinsez Héléna.




Ar marechal Lyautey er manevrou e Champagn.



Ar jeneral Von Schleicher, a lavar e rank an Alamaned arma evel ar re 'all.



Ne glever nemet trouz a vrezel en Europ. Amañ ar jeneral Weygand ha Paul Boncour er manevrou bras graet gant ar Frañsizienn e Champagn (Cellon-Paris).



Tra m'emañ ar Frañsizienn oc'h arma, an Italianed ne gollont ket o amzer. 50.000 a baotred yaouank a weler dastumet amañ e Rom. Desket e vez d'ezo micher an armou gant o mistri (Cellon-Paris).



**Petra a vez graet gant an elektrisite ?**

Gant an tredan pe elektrisite e c'hall beza graet meur a dra gant ar re a labour an douar. Talvezout a ra dreist-holl da rei sklerijenn ha nerz evit ar moteuriou, evit lakaat da vont en-dro ar ploumennoù, an diennezed, ar ribodou, ar pilerezed, an dournerezed, hag all. Hag ar re o deus gwelet arat dre an tredan a oar mat pegen trec'h eo ar marc'h elektrik war ar mire'hien.

**Oc'h ober evit an heol: ar sivi elektrik**

Esaet ez eus bet ivez ober gant ar goulou elektrik e-lec'h hini an heol, dre ma vez kuzet hemañ re alies gant ar c'hoabr hag ivez gant an noz. Diou wech buanoc'h e vez darevet ar sivi gant ar bannou sklerijenn anvet *bannou dreist-glas-ruz* digaset gant eul lamp elektrik graet e maen-kouarz. Ne vez ket gwerzet ker a-walc'h ar sivi, avat, evit gallout gounit arc'hant, ken ker e koust ar goulou.

**Evit kreski plantennoù 'zo**

Pa ne dalvez ket ober gant ar goulou, ez eus bet esaet ober gant an tredan e-unan.

Eur roued orjal a voe stegnet a-zioc'h an douar, daou vetrad a-us d'ar plantennoù. Eur red elektrik a 15 pe 25.000 volt a voe kaset e-barz, e-pad eur pennad, diou pe deir gwech bemdez. E-kerz ar goañv, ma oa berroc'h an deiziou, e voe kaset aliesoc'h hag e-pad hiroc'h amzer. Hogen ne oad ket evit lavarout ha berz en devoa graet an doare-se da ober, pe n'en devoa ket.



*Prins Kembre, mab hena roue Bro-Saoz, a vez kaset evel komiz-beajour e pep bro da vruda marc'hadourezioù ar Saozon. Amañ eo aet da lakaat e fri en eun ti-farm skouer e bro Sued (Cellon-Paris).*

Gant plantennoù 'zo, patatez, butun, da skouer, e oa bet eur wellaenn dreist. Plantennoù anezo a dape deliou a 1 m. 20 hed, ha diou wech muioc'h a frouez a oa ganto. Gant plantennoù all, avat, karotez, irvin, fao, ne voe gwellaenn ebet. Ha n'eur ket evit gouzout perak.

Ober gant ar goulou elektrik a zo re ger eta, ha re arvarus ober gant an elektrisite e-unan.

**An elektrisite o tomma an douar**

Setu ar pezh a zo deut da soñjal eur jardriner eus an Alamagn.

Pa vez re yen an amzer, 6 pe 8 derez dindan zero, e paouez ar c'hlazvez da greski. Netra da ober eta nemet tomma an douar. Setu ar pezh a vez graet en tiez-gwer gant tuellennoù dindan an douar, dour tomm o redek e-barz. Nemet diaes eo tomma an dour-se, ha ker e teu da veza pa vez ret ober tan e-pad daou pe dri miz. Hag aesoc'h e vefe ober gant an tredan evit tomma an douarou ?

Her gouzout a rit : pa dremen eur red tredan en eun orjalenn e sav gwrez en houmañ, ha seul vrasoc'h e vez nerz an tredan, seul danoc'h an orjalenn, seul dommoc'h e vez.

Ar jardriner eta a ledas e orjalennou a gammigellou, hag o-douaras dindan 30 santimetr douar. Goude meur a esa e kavas just an nerz tredan a oa dereat, hag hel lakaas da dremen en e orjalennou. Daou zevez goude se e oa savet tommder an douar betek 20 derez. Evit mirout ouz ar wrez da vont da goll e c'holoas an douar gant gwerinier. *(ar fin, p. 15)*



D'an amzer ma oa bleizi e Breiz, e veze kontet kalz marvailhoù diwar-benn al loened fero-se. Ar re spontusa anezo a oa diwar-benn ar c'hrouaduriou iskis, anvet tud-vleiz, a oa tud e-pad an devez ha bleizi e-pad an noz.

Au dud ouiziek a lavaro n'eus netra da gredi e kement-se, ha ganto emañ ar wirionez, sur a-walc'h. Ar filozoferien a zisplego d'eoc'h n'eo kement-se netra nemet eun imaj, eur simbol eus spered mab-den, a-wechou mat ha skiantek, hag a-wechou kriz ha fallakr e-giz ar gwasaneval. Evidoun-me, ne rin amañ nemet konta d'eoc'h eun dra a ouzon. Ha ma c'hellan ober plijadur d'eoc'h, gwell a se.

Va marvailh a zo souezus, abalamour n'eus ket ennañ, evel en holl varvailhoù all diwar-benn an dud-vleiz, eun den koz, sorser pe dorfedour, o veva e-unan-penn en eun toull bennak e-kreiz ar c'hoadou, — hogen eur plac'h yaouank kaer-meurbet, hag a veve, e-mesk an dud, en he maner, e parrez Trebabu, etre Brest ha Konk-Leon.

Stella a oa hec'h ano, eun ano na veze ket roet alies en hor bro, zoken da verc'hed an dudjentil en amzer-se, war-dro ar bloaz 1700. Pelec'h, a leverot, em eus klevet an istor-mañ ? N'em eus ket klevet anezañ. Ne ran, e gwir, nemet lakaat e brezoneg evidoc'h ar pezh am eus lennet e paperou koz, skrivet gant eun denjentil en deus hec'h anavezet.

« E oan neuze, emezañ, eur paotr yaouank seitek vloaz, hag e oan aet sot-pitilh gant Stella, evel holl dudjentil yaouank ar c'harter. N'eo ket c'hoaz e oa kaer, hogen eun dra bennak a oa en he daoulagad n'em eus gwelet morse e daoulagad den ebet: lavaret e vije bet ne sellent ouz netra ; atao e vezent difinv, ha doun, ha du, ken du hag he bleo du-bran. Ne oa Stella na trist na laouen. Ne gomze ket alies. He spered a oa dalc'hmat evel eun tammig nec'het, ha koulskoude e oa pinvidik, hag, hervez ma ouiemp, dibreder.

e oa, — edomp eur bagad tud yaouank, bodet e maner Kerfili, er sal vras, en-dro d'an oaled. Bez' e oa eno gwazed eus ar maneriu tro-war-dro, mes maouez ebet, nemet merc'hed an ti. An amzer yen marteze he doa miret outo da zont, pe ivez ar spont rak ar bleizi, a oa stank-meurbet, dreist-holl er c'hoadou bras en hantnoz, etre Lokournan ha Trebabu. Ar gaoz a zeuas war Stella.

« Eun nozvez c'hoañv, — an 20 a viz genver 1702 — Marteze, eme unan, he deus bet aon rak ar vleizez vras.

« Er goañvez-se, ne oa ano nemet eus eur vleizez a gantree dre ar vro, hag a oa brasoc'h, hardisoc'h ha krisoc'h eget ar bleizi all. Kalz tud o doa he gwelet, mes kaer e oa bet lakaat pejou, pe mont a-vagadou, tudjentil ha kourerien, d'an argad, nikun ne oa deut a-benn da laza pe da baka anezi. Al loen-se a oa fin, ken fin hag eun den.

« Ma, dre forz kaozeal, hag eva gwin ha gwinardant, e oa tommet ar pennou, hag e oa an holl o fougeal, pa savas unan e vouez :

— Aotrounez, emezañ, evit echui an nozvez, ha ma 'z afemp da chaseal !

« Ar merc'hed a glaskas enebi. Mes ne oa netra d'ober gant ar baotred. Setu-ni buan er-maez, evel ma oamp, lod gant fuzuilhoù, lod all gant klezeier.

« Me n'em boa netra nemet va c'hontell. Sklaer e oa an noz. Mes sklasus e oa an avel, ha keuz a zeuas prim d'ar re ac'hanomp na oant ket re vezo evit kompren an taol-follentez hor boa graet. Edomp o vont, ne ouiemp ket da belec'h, e-kreiz eur vro brein gant loened marlonk fero.

« E oamp daou pe dri asamblez, o kerzout a-dreuz eur bodad gwez uhel, pa glevjomp souden eur yudadenn, a lakaas va c'halon da skrija. Eun taol-fuzuilh a strakas, ha neuze daou, ha tri, ha pevar, ha netra ken.

« Me 'lavar d'eoc'h e oan spontet. Ha me da redek, evel ma vije bet krog tan an ifern em divesker. Redek a ris evel-se eur pennad. Neuze e rankis chom a-sav da zialana. Edon va-unan. En-dro d'in, netra nemet sioulder ha teñvalijenn.

« En eun taol kont, rag-eeun dirazoun, e tigoras ar strouez, hag eur pikol loen a sailhas warnoun. E oa va c'hontell ganin em dourn. Sanka a ris anezi, — broudet gant ar spont, hep gouzout mat pezh a raen, — en e gorzailhenn. N'em eus soñj eus netra, — rak sempla a ris raktal, — nemet eus diskouarn al loen, a welen sklaer war an oabl, hag eus ar yudadenn a reas pa voe gloazet, — pas yudadenn eur bleiz, mes eur garm skiltr, etre garm eur vaouez hag eur bugel.

« N'em eus ket kalz da lavarout da echui. « Antronoz, e voe kavet Stella, en he gwele, maro, eun toull en he c'horzailhenn.

« Ha ne voe mui gwelet ar vleizez vras morse. »

ROPARZ HEMON.

# DRE ar VRO

## Bleun-Brug Brest

Goueliou bras ar Bleun-Brug a zo bet graet e Brest d'ar 4, 5, 6 ha 7 a viz gwengolo, dindan renadur an Ao. D<sup>r</sup> Cornic.

D'ar sul e voe gourenadegoù ha kaniri er Velodrom. D'al lun e voe tro ar studiadennou. Prezegennoù dudius a voe graet gant an Ao. Chaloni Uguen, person Plougastell, an Ao. Tréguier, kelenner e skolaj Sant Loeiz, an Ao. Bécot, eus an Traez-Hir, hag all. D'an noz e voe eun abadenn vras e Sal ar Goueliou.

Ar gouarnamant, dre aon rak an otonomisted, emichañs, en doa nac'het rei an traou (muzikerien, kezeg, hag all) a oa bet prometet. Daoust da se e voe eun dibunadeg dre ar ruiou d'ar meur. Kaermeurbet e voe kavet gant an holl, hag e vije bet kaeroc'h c'hoaz panevet ar glao. An Ao. R. Micheau hag ar re all eus strollad ar gouel n'o doa ket espernet o foan evit kempenn pep tra a zoare. Diouz ar mintin e oa bet graet ar c'honkourioù lenn ha kana.

D'ar merc'her, ar vrugerien a yeas d'ober eur bourmenadenn vras. Mont a rejont d'an Traez-Hir, da Loumaze Penn-ar-Bed, ha da vered Konk da bedi war bez Ar Gonideg, « tad ar brezoneg ». Neuze ez ejont betek Brelez da welout ti an Ao. Chevillotte, Maner Kergroadez.

## Bleun-Brug Gras

Eur gouel all, bihanoc'h, a voe graet d'ar sul 18 e Gras-Gwengamp gant Bleun-Brug bro Dreger. Kaerkenañ e voe ar gouel, met siouaz, d'an noz, e voe klevet eur gwall gelou: ar c'harr a gase « Paotred ar Minibriag » d'ar gêr a oa bet devet war an hent. An holl dud a oa e-barz a c'hellas mont er-maez hep droug, dre vuzud. Met kement tra, binviou muzik, bannielou, hag all, a voe pulluc'het. Eur gest a zo graet evit sikour ar strollad kalonek-se da brena binviou nevez. Kas an aluzenou da verour ar gazetenn « Breiz », an Ao. Le Clec'h, person Koadou, dre Wengamp.

## Afer Roazon

Ar baotred yaouank o oa tamallet d'ezo beza brunet monumant Roazon gant eun tenn-min, d'ar 7 a viz east, a zo bet lezet da vont kuit eus ar prizon d'an tregont. Bez' e teuer muioc'h-mui da gredi n'eo i o deus graet an taol. Ar boliserien o deus dalc'het da furchal e pep korn eus Breiz e-pad miz gwengolo.

## Pardon bras ar Folgoad

N'eo ket bet ken kaer ar gouel er bloaz-mañ abalamour d'ar glao, a gouezas eus ar mintin betek war-dro kreisteiz. En oferenn-bred, ar brezegenn a voe graet gant an Ao. Chaloni Kerbaol, person Ploueskad, e-barz an iliz, a oa leun-chouk a dud, evel ma c'heller kredi! An Aotrou arc'heskob Roazon a gomzas e-pad ar gousperou.

## Ar pesketaerez


Atao ar memes tra en hor porziou-pesketaerez: ne vez mui gwerzet ar pesked, ha setu ar besketaerien hag o familhou en dienez. A bep seurt kaozeadennou a vez graet, a bep seurt pennadoù moulet war ar c'hazetennou. Darn a damall perc'henned an uzinou, darn ar varc'hadourien, darn an heñchou-houarn, darn ar besketaerien o-unan. Hag atao ne reer netra, pe koulz netra!

## Ar « Seefalk » hag an « Iroise »

Ar vag « Iroise », he deus saveteet kement a vago paket gant ar wall amzer, a oa bet dizarmet, peogwir e oa deut eur vag alaman, ar « Seefalk », da gemer he flas. Setu ma vo adarmet hep dale.

Eun dra vat, e gwirionez. Mezus eo gwelout estrenien o tont da denna ar bara diouz genou hor martoloded. Ha koulskoude, ar « Seefalk » a zo kalz gwelloc'h, kalz kreñvoc'h, kalz buanoc'h, kalz muioc'h diouz an amzer-vremañ eget an « Iroise ». Bez' ez eo, a lavarer, gwella bag-saveteerez ar bed-holl.

Neuze: perak n'eus ket ganeomp eur vag evel-se? Ha ne vefe ket gwelloc'h implijet hon arc'hant o prena eur vag e-giz ar « Seefalk » eget o sikour ar Gompagnunez Treuzatlantik, ha me 'oar?



Paotred eus Plougastell gant o gwiskamañchou kaer e Brest da zeiz ar Bleun-Brug.

E gwerz e ti « Gwalarn »

**COURS ELEMENTAIRE DE BRETON**

(dre ar post)..... 12 lur

**GRAMMAIRE BRETONNE**

(dre ar post)..... 3 lur (1 skoed)

**DICTIONNAIRE BRETON-FRANÇAIS**

(dre ar post)..... 22 lur

**LENNIT « GWALARN »**

Niverenn miz gwengolo:

**AN TASMANT DIMEZET**

kontadenn gant Hoffmann

Niverenn miz here:

**GWELDIGEZ MAB KONGLIN**

marvailh farsus

Niverenn miz du:

**AR C'HOAR HENA**

kontadenn gant Roparz Hemon

Pep niverenn (dre ar post): 16 real



# GWILHERM AR YANN

EUR BEAJOUR A VREIZ

## Eur paotr a Vreiz-Izel

Gwilherm Ar Yann a zo ganet e mil eiz kant eiz war-nugent (1828), e Plegad-Gweran, e-kichen Montroulez. E dud a oa gounideien-douar. Met abred-meturbet, evel kement a Vretoned all, ez eas da redek bro.

## O klask mammennou an Nil


Eur veaj kenta a reas e bro Durki. Da c'houde ez eas d'an Ejipt. En amzer-se, ne ouied ket c'hoaz eus pelec'h e teue an Nil, ar stêr vras a red dre ar vro-se, ha meur a veajour en doa klasket ar mammennou, en aner. Setu Ar Yann en e hent evel ar re all. Met evel ar re all e reas taol gwenn, hag e rankas dont en-dro hep beza kavet netra.

## Ar Prezidant o skuba e di!

E mil eiz kant daou ha tri-ugent (1862), e oa Ar Yann adarre e traonienn an Nil. Karget e oa bet gant ar gouarnamant da vont da gaout Teodoros, *negus* pe roue bro Abisini.

War-e hent etrezek ar vro-se e tremenas dre eur gêr, anvet Gallabat, kêrbenn-eur republik vihan a vorianed. Mont a reas Ar Yann evel just da welout Prezidant ar Republik-se. Setu ma kavas anezañ o skuba ar porz dirak e di. Ar Prezidant a ginnigas d'ar beajour breton da zebri ha da eva. Met ne ziskrogas ket diouz e valaenn evit se.

— Al labour da genta, aotrou ! emezañ.



E Paris, eur bern genaouerien aet da glask gwelout eun dra bennak d'ar mintin ma voe dibennet Gorguloff (Cellon-Paris).


## Bro Abisini

Ar re ac'hanoc'h n'o deus ket ankounac'haet o Istor Santel o deus soñj eus rouanez Saba, an hini a yeas da gaout Salomon, roue bras ar Yuzevien. War a lavarer, e teue ar rouanez-se eus bro Abisini, a zo eur vro e-kreiz ar menezioù, pell-pell er c'hreisteiz eus an Ejipt. Ar pez a zo sur eo ez eo tud an Abisini disheñvel-bras diouz ar poblou tro-war-dro, hag ez-int kristenien, evito da gaout eun doare iskis a-walc'h a gristeniez.

## Teodoros

Setu amañ penaos e kont Ar Yann ar weladenn genta a reas da roue an Abisini, an *negus* Teodoros, d'ar pemp war-nugent a viz genver eiz kant tri ha tri-ugent (1863) :

« Lavaret e oa bet d'in, emezañ, e tlee an *negus* lakaat tenna eur seurt kanol graet evitañ gant ar visionerien. Gwisket em boa eta va dilhad konsul. War-dro dek eur, e teuas unan bennak da gemenn d'in e oa ar roue o tont. Mont a ris er-maez raktal, hag e welis eur bagad trouzus-meurbet a ofiserien vras, gwisket ganto o saeou broudet, re an devezioù gouel. En o c'hreiz e oa eun den, diskabell ha diarc'henn, en-dro d'ezañ eur vantell soudard na oa ket eus ar re wenna, eur sabrenn gavalier stag-ouz e c'houriz, hag eur goaf (pe eul *lanis*) en e zourn, ma en em harpe warnañ o vale. Aes e oa gwelout koulskoude e oa heñ ar roue, peogwir ne oa nemetañ a gement a oa goloet e ziou skoaz gant eur vantell. An den-se a oa Teodoros II, Roue ar Rouaned ! »



E bro Indez, tra m'edo Gandhi o yuna, edo ar beorien o pedi (en traoñ e weler e-boltred) (Cellon-Paris).

## Ar Yann ha leoned ar roue

Antronoz, Ar Yann a zigasas d'an *negus* lizerou digant gouarnamant Bro-C'hall, hag a voe digemeret gantañ a-zoare. E oa Teodoros azezet war e dron, e-kreiz eur bagad leoned bras. Doñv e oa an anevaled-se. Unan anezo a deuas da lakaat e baoiou a-raok war diskoaz ar paour kaez konsul. Hemañ, emezañ, a vennas koueza gant an aon.

## Ar Yann taolet en toull-bac'h

Hegarad-meurbet e oa Teodoros e-keñver Ar Yann. Met ne felle ket d'ezañ lezel anezañ da vont kuit.

Eun deiz ma teue Ar Yann d'e gaout, da c'houlenn koñje digantañ da vont en eun enezenn vihan, er Mor Ruz, kounnar vras a savas e Teodoros.

— Ne day ket ! eme an *negus*, o skei gant e droad. Tapit krog ennañ, chadennit anezañ, ha ma klask tec'hout, ra vo paket ha lazet !

C'houec'h den a grogas ennañ. Unan a stardas e vruched, ken na vennas mouga. Daou all a ziframmas e dog hag e gleze dioutañ. Neuze e voe digaset eur chadenn houarn pounner, hag a voe rinvedet ouz daou arzourn hor c'henvroad sabatuet.

Chom a reas evel-se e-pad pemp eur war-nugent. Neuze e voe lezet da vont, hag e voe diskleriet d'ezañ ar pez a oa c'hoarvezet :

An *negus* Teodoros a oa mezo-dall, ha ne ouie ket petra a rae !

## Merc'hed faro an Abisini

Pourmen a reas Ar Yann dre ar vro. Gwelout a reas Gondar, a oa neuze ar gêrbenn. Eur gêr binvidik e oa, savet war vord eul lenn, enni marc'hadourien, micherourien ha tud ouiziek e-leiz. Evel merc'hed ar c'hêriou, merc'hed Gondar a oa faro-meurbet. E-lec'h mont gant o zreid noaz, e-giz merc'hed all ar vro, botou o doa, ha chadennoùigou arc'hant ouz traoñ o divesker. Brozioù gwenn a oa ganto, hag eur *burnous* (pe vantell hir) e seiz glas, plakou arc'hant kizellet hag alaouret gwriet warnañ. An itronezed pinvidik ne daent morse war droad, met war gein eur mul, eur sklavez o terc'hel penn al loen, eur vatez o kerzout war-lerc'h, hag alies eur bagad gwazed, armet gant goafioù ha skoedou.

## Ar venec'h gwall nec'het

En Abisini e oa meur a gouent, enno menec'h o heulia, evel just, relijion ar vro. E-barz ar c'houenchou-se e veze roet bôd d'ar veajourien. Met difenn a oa d'eur vaouez, pe zoken d'eur vamm-loen bennak dont e-barz ar gouent.

Pegen nec'het e voe eta ar venec'h vat eun deiz, pa deuas Ar Yann da c'houlenn lojeiz evitañ hag e vulez ! Ret e voe d'ezañ tabutal gant ar manac'h-porzier, ha ne felle ket d'ezañ digemer al loen e-barz ar mogerioù santel.

(ar fin, p. 15)

# PAJENN AR MERC'HED

## AN TI

### An tan

Lakait helen e-barz dour bero ha lezit an dour da virvi e-pad pemp munutenn da nebeuta. Taolit an dour war ho sailhad c'hlaou. An tan a vo kalz splannoc'h ha tommoc'h e-giz-se.

### Al ludu

Na daolit ket al ludu er-maez. Silit, gwalc'hit ha sec'hit anezañ. Ho tan a chomo beo dindan.

### Dilhad ar re vihan

Prenit « alun » digant an apotiker ha lakait eun dournad mat e-barz an diweza sailhad dour ma walc'hit enni lienaj ar re vihan, pe ridochou ar c'havell. Evel-se, ne c'hel ket an tan kregi e-barz.

## AR GEGIN

### Ar piz bihan

Pa vezont sec'h, n'int ket gwall vat da zebri. Evit o lakaat da veza tener ha sukret, n'hoc'h eus nemet o mirout e-pad triouec'h eur e-barz eur sailhad dour klouar. Neuze, sec'hit anezo ha lakait anezo war eur blanken e-pad an devez. Pa denio kellid er-maez, e c'hellot o foaza. Sukret e vint.

### Ar c'harotez

Ha gouzout a rit e c'hellit ober soubenn gant deliou karotez ? Ar memes blaz a vo gant ar soubenn-se evel pa lakait karotez enni. Evit daou zen, ret eo lakaat peder pe bemp delienn.

### Ar c'hafe

Tud 'zo na garont ket c'houez ar gegin. A-wechou ivez pa deu al laez er-maez war ar fornigell ez eus eur c'houez fall. Neuze lakait eur c'hreunenn gafe pe ziou war ar fornigell domm (pe eun tamm sukr), hag ar c'houez fall a yelo kuit.

E Breiz e vez graet kalz kafe. E pe di ne ever ket kafe bemdez ? Ha gwall ger-co ar c'hafe bremañ. Evit espern eun tammig, lakait dour yen war ar c'hafe malet a lakait e-barz ar c'hreg en deiz war-lerc'h. Tost an hañter nebeutoc'h a gafe a implijer evel-se.

## EVIT BEZA KOANT

### Ar bleo

Pep hini en deus c'hoant da veza koant, n'eo ket gwir ? Ya, zoken ar baotred, nemet mez o deus d'hen anzav. Ma, — pa vezer oc'h ober war-dro eun ti, dreist-holl e-pad an hañv, ne chom ket kalz amzer

evit en em ficha. Ha koulskoude, merc'hed, arabat ankounac'haat ho penn, — hag ho pleo dreist-holl ! N'hoc'h eus ket trouc'het ho pleo, ha bravoc'h eo. Klevit avat ! Ma 'z int rodellek dre natur, gwell a se evidoc'h. Ma n'int ket, na 'z it ket da rodella anezo gant eur fer tomm. Devet e vint kent pell, dilufr, maro, ha c'houi ne viot ket koant neuze ! Broustit mat ho pleo bemnoz e-pad pemp munutenn da nebeuta evit o naetaat a zoare. Kribit anezo bep abardaez ha bep mintin. Mes n'eo ket a-walc'h. Ret eo o gwalc'hi. Arabat mont da di ar peruker da glask « shampooing » ha traou evel-se. Koll arc'hant ha netra ken. Gwalc'hit ho pleo gant soavon. Lakait kalz a zour. Arabat lezel nemet eun tammig soavon war ho pleo. Eur walc'hadenn bep pemzek deiz a zo a-walc'h ma ne 'z it ket er-maez hep tra ebet war ho penn. Neuze, avat, gwalc'hit anezo bep sizun. Dreist-holl soñjit ez eo ret brousta ha kriba mat-tre ho pleo bemdez. N'ho po ket a geuz pa welot pegen brao e vint goude se !



*Eur plac'h divorfil : an nijerez amerikan Mrs Haizlip, a nijas buanoc'h eget n'he doa graet maouez ebet a-raok : 408 km. an eur !*

# PAJENN AR VUGALE



## AR C'HI BARBET OCH OBER SKOL

En eur c'hoad bras, a oa loened ennañ a bep seurt, eur c'hi barbet, eun doktor en doa graet e studi, o veza bevet eur pennad mat e-touez an dud, a soñjas en em lakaat da ober skol. Gwelout a rae al loened yaouank er c'hoad-se a oa dizesk ha n'o doa tamm sevenidigez. Fellout a rae d'ezañ eta rei d'ezo eun tammig deskadurez, ha dreist-holl deski d'ezo beva.

An doktor en doa brud, ha kerkent ha m'en doa digoret e skol, e tiredas al loened yaouank a brez hag a vandennou da resev e genteliou. Gwelout a raed eno mesk-ha-mesk leoned, tigred, marmouzien, leueou, ebeulien, chas, kizier, ourzien, hag all, en eur ger, eus a gement gouenn loened a oa er c'hoad.

An doktor a boanie. Ar skolidi a zeske. Koulskoude al loened koz ne blijje nemeur d'ezo an deskadurez a roed d'o bugale. Ne gave ket d'ezo e vijent skoliet diouz o doare, ha dalc'hmat e teuent d'en em glemm ouz ar mestr-skol.

Ar c'had a deve da rebech e oa kalz re aonik e vugale. Ar bleiz en em glemme o lavarout e oa e vugale marlonk, ne oa netra evit o c'harga. An tigr a gave e vugale kalz re vuanek, re golerus. « Ha koulskoude, emezañ d'ar barbet, eo ret ho pefe lakaet anezo da drec'hi gouenn, rak o mamm a oa ar wella eus ar mammou, n'oa drougiez ebet enni, ha me a

gav d'in n'eus ket kennebeut kalz a zrougiez ennou. » Ar marc'h a deuas ivez. « Asa, emezañ, mestrskol, va bugale a zeske ganeoc'h, sevel a ra kanfarded anezo. Eur si bras, avat, a welan enno, kivioul int, an distera tra a zisplij d'ezo, emaint o kriza o diskouarn hag o sevel o divesker da rual. Mar o deskit da veza kivioul evel-se, ne raint ket kalz a enor d'eoc'h. »

Neuze e teuas ar marmouz d'en em glemm eus e vugale, a oa desket d'ezo, emezañ, ober ardou hag orbidou ha n'o devoa gwelet morse da ober er gêr.


Al leon a deuas goude, droug ennañ. « Doktor Barbet, emezañ, va mab a zeskit da veza otus ha digar. Eun orgouilhus e sav da veza. Ma n'hen deskit ket da veza hegaratoc'h, me hen tenno eus ar skol, hag a ray e skolia er gêr dirak va daoulagad. »

Al loened all a deuas ivez pep hini d'e dro, ha pep hini en doa eur rebech bennak da ober d'ar mestrskol.

An ourz a gave e ourzien bihan pataok. Al louarn en doa aon na deuje e vugale da veza re fin. Ar gwiñver a gave d'ezañ e oa re a finv en e re. Ar pemoc'h a lavaras en eur c'hrognal e teue e voc'higou bihan lousoc'h-lousa : kaer a oa o gwalc'hi meur a wech bemdez, e vezent atao goloet a gailhar pa zistroent eus ar skol. An azen zoken, en eur zifronellat, a douas ez ae bemdez sotoc'h-sota e vugale. Skuiz ouz o c'hlevout, ar c'hi barbet a lavaras :

« Va mignoned, eeunit eun nebeut ho pugale, ha roit skouer vat d'ezo, ha neuze digasit-i d'ar skol. »

G. MORVAN.



*Eun doare nevez da zebri makaroni (Berliner Illustrierte Zeitung).*



Lennit :

# GWALARN

Kazetenn viziek  
e brezoneg uhel

Priz : 30 lur diouz ar bloaz (broiou estren : 35 lur)

Adres : Journal de Gwalarn, Boîte Postale 75 - BREST (C. C. 96.38 Rennes)

## Embannadurioù Gwalarn

1926

J. Kerrien. — AR ROC'H TOULL. — Diviet.  
J. M. Synge. — WAR VARCH D'AR MOR. — 2 lur 25

1927

Roparz Hemon. — AN AOTROU BIMBOCHET E BREIZ. — Diviet.  
F. C. Murray. — NEVEZ-AMZER. — 4 lur.  
TONKADUR BUGALE TUIREANN. — 4 lur.  
G. Th. Rotman. — PRINSEZIG AN DOUR. — Diviet.  
GERIADUR GALLEK-BREZONEK A GORFADUREZ. — Diviet.

1928

Aeschulos. — PROMETHEUS EREET, AR BERSÉD. — 12 lur.  
B. Potter. — PER AR C'HONIKL. — 1 lur.  
G. Th. Rotman. — PRINSEZIG EN DEUR. — 5 lur.  
H. Andersen. — PLAC'HIG VIHAN AR MOR. — 3 lur 60.  
Roparz Hemon. — GERIADURIG-DOURN BREZONEK-GALLEK. — 22 lur.  
Roparz Hemon. — YEZADUR BERR AR BREZONEG. — 3 lur.  
AR SIMBOL. — 0 lur 50

1929

Meven Mordiern. — ISTOR AR BED, levrenn I. — 14 lur.  
M. Gourlaouen. — LEVR AL LOENED. — 1 lur 75.  
A. Blok. — AR PLAC'H DIANAV. — 4 lur.  
G. Th. Rotman. — NIJADENN AN AOTROU SKANVIG. — 5 lur.  
A. Brizeug. — TELENN ARVOR, FURNEZ BREIZ. — 6 lur.  
Roparz Hemon. — REIZSKRIVADUR AR BREZONEG. — 3 lur.

1930

Meven Mordiern. — ISTOR AR BED, levrenn II. — 10 lur.  
MARVAILHOU AR VRETONED. — Diviet.  
ENKLASK DIWAR-BENN STAD AR BREZONEK E 1928. — 4 lur.  
GERIADURIG ESPERANTEK-BREZONEK. — 4 lur.  
Roparz Hemon. — EUN DRO E KEMBRE (Gwalarn 24). — 2 lur 50.

1931

Abeozen. — PEVAR MARVAILH. — 3 lur.  
Roparz Hemon. — EUR BREIZAD OC'H ADKAVOUT BREIZ. — 15 lur.  
OWEN HA LUNET. — 3 lur.  
DIARMUID HA GRAINNE. — 5 lur.  
Tanguy Malemanche. — AR BAGANIZ. — 10 lur.  
Sei Chonagon. — NOTENNOU AR GOUBENNER. — 3 lur.  
Roparz Hemon. — LINA AN TAN E TI KERNASPREDEN (peziou-c'hoari). — 4 lur.  
Boccaccio. — AR MARVAILHER ITALIAT. — 5 lur.

1932


Meavenn. — IVERZON DISHUAL, SKOL S. ENDA. — 4 lur.  
X. de Langlais. — KANOU EN NOZ. — 10 lur.  
D. K. Kongar. — AR WAZIG. — 3 lur.  
Y. Drezen. — AN DOUR EN-DRO D'AN INIZI. — 4 lur.  
Meavenn. — PA C'HOUEZ AVEL WALARN. — 5 lur.  
Meven Mordiern. — ISTOR AR BED, levrenn III. — 8 lur.  
Hoffmann. — AN TASMANT DIMEZET. — 4 lur.

Mouleréz 17, ru d'Algeriras, Brest.

Ar Merour : Y. LE DREZEN

# KANNADIG GWALARN

Eun Niverenn bep Miz — Ar Pemzek eus ar Miz



An « Normandie », eur pennadig a-raok mont d'an dour

## TAOLENN

KELEIER AR MIZ



Kontadenn

AR C'HRAFER KOZ



JAKEZ KARTER

EUR MARTOLOD A VREIZ

AR PATATEZ  
HAG  
AN DORIFORA



DRE AR VRO  
PAJENN AR MERC'HED  
PAJENN AR VUGALE  
A-ZEHOU HAG A-CLEIZ  
FENTIGELLOU  
HOR BOEST-LIZIRI



Bennoz Doue d'an dud o deus skrivet d'imp da lavarout o deus kavet brao kenta niverenn hor C'hannadig ! Amañ e roomp darn eus al liziri mat hon eus bet, hag a ziskouez hon eus mignoned eun tammig dre holl.

Hor gwella mignon, avat, n'eo ket an hini a gas d'imp gourc'hemennou, met an hini a ro d'imp sikour. Rak « Kannadig Gwalarn » a zo bihanik c'hoaz, hag a rank kreski, ha penaos e kreske hep sikour e lennerien ?

Setu amañ tri dra a c'houlennomp diganeoc'h ober evidomp :

1. Kemer eur c'houmanant-bloaz d'ar C'hannadig, ma n'hoc'h eus ket graet c'hoaz. Dek lur ar bloaz n'eo ket kalz evit kaout eun niverenn digaset bep miz betek ho ti.

2. Diskouez ar C'hannadig d'ho mignoned ha lakaat anezo da brena anezañ pe da goumananti.

3. Mont da welout er bourk pe er parrezioù tro-war-dro, er staliou ma vez gwerzet kazetennou brezonek. Ma n'eo ket « Kannadig Gwalarn » e gwerz er staliou-se, kasit d'imp ano hag adres ar perc'henn. Kaset e vo d'ezañ dioustu eun toulladig Kannadigou da werza.

Soñjit mat : a-raok fin ar bloaz e rank « Kannadig Gwalarn » kaout ouspenn 1.000 koumananter, ha beza e gwerz e pep parrez eus Breiz-Izel ! Hoc'h interest eo, peogwir seul vuioch a goumananterien hag a brenerien a vo kavet, seul vrasoc'h ha kae-roc'h e vo niverennou ar gazetenn.

## Deut mat eo ar C'hannadig !

O paouez kaout ar « C'hannadig » nevez, Brao-tre !

F. VALLEE.

Emaoun o paouez kaout « Kannadig Gwalarn ». An taol-lagad kenta a ra plijadur.

Y. DREZEN.

O paouez kaout « Kannadig Gwalarn ». Mat-dreist ! ha berz a raio sur.

R.Y. KRESTON.

Lennet em eus « Kannadig Gwalarn » gant kalz a blijadur.

Abad E. RENAN.

Lennet em eus ar « C'hannadig ». Plijout a ra d'in.

M. GOURLAOUEN.

## Ar C'hannadig er broiou estren

Eus bro Veljik e teu d'imp al lizer-mañ :

Digouezet eo ganin niverenn genta « Kannadig Gwalarn ». Pe-bez levenez e-touez ar Vreiziz ken niverus amañ. Ne gomzer

mui nemet eus ar « C'hannadig ». Heti a ran d'ar C'hannadig mont d'ober tro ar bed evel ar martolod a gomzer anezañ en niverenn-mañ. Deut mat e vo gant ar Vreiziz skignet dre ar bed holl. Pep miz a gaso d'ezo eun tammig eus aer ar Vroig karet muioc'h c'hoaz pa vezer pell.

Anavezout a ran Breiziz harluet e Madagaskar pe er Brazil. Alias e tigasont d'in istoriou diwar-benn boazioù ar broiou-se.

F.C.

## Ano ar C'hannadig

Va lezit da rei d'eoc'h va soñj, evel m'en deus graet A.P., diwar-benn ano ho gazetenn vat...

Kredi a ran ez eo bet an ano-se dibabet gant kalz a furnez. Daoust ha ne vo ket « Kannadig Gwalarn », ar c'hannad a zigaso da bep oaled breizat kelou mat adginivelez hor bro, grañt gant ar re o deus savet « Gwalarn » ?

Ouspenn se, ne gomprenan ket perak e vez dismegañset gant A.P. ar c'hazetennouigou parrez, « nebeut diouz an amzer-vremañ dre an diabarz evel dre an diavaez. » Ar c'hazetennouigou parrez a zo talvoudus-meurbet... Skrivet int, peurvuia, e brezoneg, hag a-wechou zoken e brezoneg eus ar gwella. Perak neuze lezel anezo a gostez, pe zoken, dismegañsi anezo ?

Y. ar B.

## Peziou-c'hoari evit ar merc'hed

Lakaat a reomp dirak hol lennerien goulenn eur renerez skol gristen :

Bep bloaz e c'hoariomp eur pezh-c'hoari brezonek evit ar pri-zioù. Ha n'ho pefe ket unan bennak vraso da zigas d'in ?

## Brezoneg ar Vugale

Hol lennerien a oar e vez roet gant « Gwalarn » levriou da vugale ar skolioù. Abaoe pevar bloaz hon eus roet evel-se ouspenn 15.000 a levriou bras ha bihan. Kenderc'hel a reomp d'hen ober, daoust na vez mui kaset d'imp nemeur a arc'hant evit se, ne ouzomp ket perak. Setu amañ eur pennad tennet diouz eul lizer digant ar memes renerez skol :

Dont a ran da lavarout d'eoc'h va anaoudegez vat evit an holl levriou hoc'h eus digaset d'in. Ne oan ket e gortoz kement all evit netra. Trugarekaat eta a ran ac'hanoc'h em ano hag en ano va bugaligoù. Holl, mestrezed ha bugale, o devo soñj ennooc'h en o fedennou.

Resevet em eus ivez gant plijadur « Kannadig Gwalarn » miz here. Brao-kenañ em eus kavet anezañ. Lennet em eus d'am merc'hed bihan « Pajenn ar Vugale. »

## « Ar c'hoar hena »

Na pebez plijadur am eus bet o lenn romantig nevez Roparz Hemon « Ar C'hoar Hena », war niverenn « Gwalarn » miz du ! Setu aze traou a rafe enor da lennegezh n'eus forz pe vro, ha squezet oun o welout ne reer ket muioc'h a vrud en-dro d'ezo. Rak aze ez eus kened ha gwirionez, traou na vez ket kavet alies asamblez en amzer-mañ.

Eur ger, avat, n'eo ket eur rebech ! An istor a bad c'houec'h vloaz. Mat ! er bloavezh kenta e welomp Eliza hag e vuia-karet Herri o vont d'ar sinema-kaoz (evel-se e c'heller marteze lavarout *cinéma parlant*). Ar sinema-se, avat, n'eus nemet tri pe bevar bloaz ma 'z eus anezañ en hor bro. En doare ma echu ar romantig e tro ar bloaz 1935 pe 1936 ! Gouzout a ran n'eo ket kement-se evit sponta aozer *Bimbochet* !

A.G.

## An toull

Gouarnamant Paris en deus kavet e vanke 12 miliard en e c'hodell ! E miz mae, war a lavare, ne vanke nemet 3. Da belec'h 'ta eo aet 9 miliard e c'houec'h miz ?

Ha setu Herriot hag e vignoned o klask stanka an toull : krenna amañ, krenna ahont, digreski pae an dud e karg, kreski an tailhou ! Evel just, den ne fell d'ezañ beza touzet. Gwelloc'h gantañ e vefe touzet e amezeien.

Ne vefe ket diaes kavout ar miliardou a vank ma karfed dispign nebeutoc'h evit an arme, ha sevel nebeutoc'h a vatimañchou brezel (n'eus kaoz er journalioù pemdeziek nemet eus ar batimañchou nevez moret amañ pe ahont).

Gwir, met e pep bro eo ar memes tra. Ha bro ebet ne fell d'ezi dizarma a-raok ar broiou all. Atao an avel a follentez o c'houeza war ar bed !

## Priz an ed

Kenta tra he deus graet Kambr an Deputeed e Paris en eur en em voda a nevez d'ar 25 a viz here eo tabutal diwar-benn stad truezus al labour-douar. Tabutal, avat, a zo eun dra, hag ober eun dra all.

## Mussolini

Setu dek vloaz abaoe m'emañ Mussolini mestr bras an Itali. Dek vloaz 'zo, ar fasisted a gerzas war Rom hag a gemeras penn ar gouarnamant.

En eñvor eus an darvoud bras-se, emañ Mussolini o redek bro en eur ober prezegennoù kaer : diskar ar paemañchou-brezel, lezel an Alamaned da adarma, mirout ouz broiou 'zo da veza re greñv e-keñver ar re all, setu ar pezh a c'houlenn.

« Ar fasisted, emezañ, a labour evit ar peoc'h ! »

## Roosevelt pe Hoover ?

Piou, eus an daou-mañ, a vo prezidant ar Stadou-Unanet ?

Kredi a reer e vo Roosevelt, ha, da heul, echu e vo gant ar « sec'hor », pas sec'hor an amzer, met sec'hor ar c'hourlañchenn. Da lavarout eo, koñje a vo roet da eva gwin ha gwin-ardant evel gwechall.

Lavarout a reer ez eus dija bagou karget a win hag a likeurioù o c'hortoz ar mare da loc'ha evit ar Stadou-Unanet.

## Sened Paris

Senedourien nevez, 111 anezo, a zo bet anvet d'ar 16. Cheñchamant ebet, koulz lavaret.

## An « Aéropostale »

Gwall fin an neb a gompren eun dra bennak en abadenn an « Aéropostale ». Ar polis, minister ar brezel, politikerien hag a bep seurt tud divalo all a zo paket e-barz. Paperioù faos, tud faos, ha breinadur a bep tu ! Da gredi eo e vo mouget an afer, gant aon na vefe re saotret tud uhel eus gouarnamant Paris.

## Trouz e Belfast

E kêr vras Belfast, en hanternoz bro Iwerzon, ez eus kalz a dud dilabour. O veza n'o doa ket, d'o meno, a-walc'h a sikour digant ar gouarnamant, e fellas d'ezo, d'an 11, ober eur manifestasion bras dre ruiou kêr. Se a vo difennet gant ar gouarnamant.

Emgannou taer a voe etre ar vicherourien hag ar bolised. Ar re-mañ a oa ganto fuzuilhou ha revolve-riou. Staliou a voe kemeret gant an dud ha skrapet kement a oa enno. Gweturioù-dre-dan, enno bara ha laez, a voe kemeret ivez ha bruzunet.

An trouz a badas daou zevez. E-pad an noz, ar vicherourien a gleuzas trañcheoù hag a savas bardelloù. Petra a reas ar bolised, nemet mont en tiez da denna tud eus o gwele evit lakaat anezo dre heg da zizober ar bardelloù ha da stanka an trañcheoù. Darn a labouras evel-se en o dilhad-noz, dindan ar glao.

War-dro 70 den, paotred ha merc'hed, a voe arestet.

## Arme an naon

Bagadou paotred ha merc'hed dilabour, deut eus Bro-Skos hag eus Bro-Saoz, a zo aet betek Londrez war o zreid, da denna evez ar gouarnamant war o stad. « Arme an Naon » a zo bet graet anezo.

D'ar 27 int digouezet er gêrbenn. Hag i d'en em voda en Hyde Park, ar jardrin bras e kreiz kêr, polised a bep tu d'ezo. An traou a voe sioul da genta. Met souden, den ne oar mat perak, e savas trouz, hag ar bolised a sailhas meur a wech war ar paour kaez tud. Darn anezo a voe gloazet ha douget en ospitalioù, darn all kaset d'ar prizon.







Collin-Lucco, unan eus ar re paket en afer an « Aéropostale » (Cellon, Paris).




Ar brinsez Ingrid, eus bro Sued, aet d'ober eun dro e Londrez (da zimezi, a lavarer, gant unan eus mibien roue Bro-Saoz).



E Beljik, Renkin, ar c'henta ministr, en deus ranket mont kuit (Cellon, Paris).



En Alamagn, an Doktor Goebbels, unan eus mignoned Hitler, a gomz d'an « Nazied » (Cellon, Paris).



E krec'h : Roosevelt, anvêr Prezidant ar Stadou Unanet. En traoñ : Hoover, en deus bet korbell. A-dreñv : an Ti Gwenn, Palez ar Prezidant (Cellon, Paris).



An Aotrou Herriot, kenta ministr ar Frañs, aet da welout Prezidant Republik Bro-Spagn e Madrid (Cellon, Paris).

## Eur paotr eus a Sant-Malo

Ni Bretoned, n'anavezomp ket a-walc'h an dud vras a zo ganet en hor bro. Pebez levr kaer a c'hellfed da sevel koulskoude gant o istor, eun istor hag a lakafe ac'hanomp da dridal gant al lore'h hag ar garantez-vro.

Hizio e fell d'in displega d'eoc'h berr-ha-berr buhez unan eus hor brasa kabitened a vor, Jakez Karter, an hini a gavas ar C'hanada.

Ganet e voe er bloaz 1491, e Sant-Malo. Paotred Sant-Malo, evel ouzoc'h, a zo bet a-viskoaz martoloded eus an dibab. Pa lavaromp en deus Karter kavet ar C'hanada, e lavaromp e gwirionez ez eo heñ a zo bet ar c'henta e diabarz ar vro-se, rak pell 'zo e oa ar Vretoned hag ar Vasked kustum da vont da vorua war achou al Labrador hag an Douar-Nevez.

## Eur gêriadenn Indianed

Teir beaj a reas Jaker Karter d'ar C'hanada. En dro genta, e 1534, ez eas, en aber vras ar stêr Sant-Lorañs, betek al lec'h ma emañ Kebek bremañ. Met ret e voe d'ezañ dont war e giz, abalamour d'ar wall amzer.

Er bloavez goude ez eas adarre gant teir batimant, ha neuze e tizas al lec'h ma emañ bremañ kêr vras Montreal. Bez' e oa eno eur gêriadenn Indianed, gant eur blasenn vras e-kreiz. Pa zigouezas Jakez Karter gant e genseurte, an holl verc'hed, yaouank ha koz, a deuas er-maez eus o lochennou gant o bugale da welout an estrañjourien, a oa gwenn o c'hroc'hen, hir o baro, hag a oa gwisket en houarn hervez giz an amzer-se. Biskoaz n'o doa gwelet kemend-all ! Fel-

lout a rae d'ezo touch anezo, pa ne ouient ket piou oant, tud pe doueed diskennet eus an -Neñv !

## Ar c'habiten medisin !

Ar wazed a deuas goude, hag a azezas tro-war-dro d'ar Vretoned. Ar roue, pe ar penn-bras, a oa klañv, hag a voe kaset dirak Karter astennet war eur c'hroc'hen karo. Aspedi a reas ar c'habiten breton da barea anezañ. Karter a resitas eur pennad eus Aviel Sant Yann, hag ar Basion da c'houde. Neuze eas kuit, o lakaat e soudarded da seni an trompilhou, ar pez a leunias an Indianed kaez a souez.

## Ar butun

E-kichen Montreal eo ivez e welas Karter evit ar wech kenta tud o vutuni. Gouzout a rit ne veze ket anavezet ar butun e Breiz en amzer-se. Ar blantenn-se a zo deut eus an Amerik abaoe. Setu petra a lavar Karter e-unan :

« An Indianed, emezañ, o deus eun doare geot a zastumont bep hañv, hag a lakaont da sec'ha dindan an heol. N'eus nemet ar wazed hag a ra gantañ. Lakaat a reont ar geot-se e-barz eur yalc'hig, a zougont a-istribilh en o c'herc'henn, ha bez' o deus ivez eun tamm maen pe goad kleuzet, damheñvel ouz eur c'houitell. » (Evel-se e komze Karter eus eur c'horn-butun !) « Tana a reont ar geot-se, o lakaat war-nañ eur c'hlaouenn veo. Neuze e tennont ar maged e-barz o c'horf, ken na deu er-maez dre o genou hag o fri, evel dre siminal eun ti. »

(da echui, p. 31)



Eskob nevez Nevers, an Aotrou Flynn, sakret e Paris, en iliz-veur an Itron Varia (Cellon, Paris).



E kostez Brest e veve eun den pinvidik-mor, oajet a dri-ugent vloaz, e ano Nikolaz Paobran. E nizez yaouank, anvet Jozefin Dilavar, hag heñ, setu an tiegez.

An den-se, evit d'ezañ kâout madou, a oa piz, ha skoet, war ar marc'had, gant ar remm. Ret e oa d'an nizez kaout gantañ pasianted eun ael. Evit he digoll eus ar boan a gemere gantañ, e soñje d'ezañ he faea mat en eur lavarout d'ezi alies :

— Goude me, va holl vadou a vezo d'eoc'h, ha neuze e c'hellot ober eun dimezi a zoare.

Evit d'ezañ beza drouklivet, e tebre mat e voued ha yac'h atao. Eun den mat a lavaras da Nikolaz e riskle e nizez da chom bepred plac'h yaouank.

— Te ! te ! emezañ, me ne viran ket outi... ha ma kav unan d'he c'hemerout evit he daoulagad milliour, n'he deus nemet dimezi.

Eun den fur, oc'h anaout he douster, he fasanted, he goulennas da bried. An eured a voe graet en desped d'an eontr koz drouklaouen, ha d'ar gourdrizou a rae d'he disherita. An daou bried a gendalc'he d'en em intent mat, da veva eürus. Mes ar c'hrafer koz a gendalc'he ivez da gaout droug ha kasoni ouz e nizez :

— Biken, emezañ, liard toull n'he devo diganin-me !

Mes nec'het bras en em gave gant e zanvez, o klask gouzout petra d'ober anezo, da biou rei anezo. Ne gare den, na kar nag estren. Tout a oa mat evitañ hag ar re all mat da sellout. Sina a raje anezo d'eun ospital, d'eun iliz bennak, evit ma vije pedet Doue gantañ goude e varo ? O ! an dra-se a oa pell diouz e soñj !

O zestamanti a raje d'an ti-kêr, d'ar gouarnamant ? O ! emezañ, a-walc'h eo bet d'in paea an tailhou e-pad keit amzer. Evit an dra-se, ne rin biken ! Gwelloc'h eo ganin en em rivina !

Ober vad da eur re bennak gant e zanvez, pebez rann-galon evitañ ! Gortozomp : n'en em rivin ket

atao an den a fell d'ezañ... Eur soñj a zeu da Nikolaz, e-kreiz e nec'hamant : ha ma lakfen va holl zanvez war interest, e doare da douch evito, a-hed va buhez, rantou nevez. Er c'hiz-se ne vo nemedoun o profita anezo gwech ebet.

Niveri piz ha piz a ra e zanvez, ha goude beza gwelet emañ e baperou en urz, e laka anezo holl gant evez en eur valizenn, hag heñ en hent war-zu Brest evit en em veñji diouz e nizez.

Erruet e Brest, e wel eun ostaleri. O veza aet en ti, e roer d'ezañ an digemer-mañ :

— An Aotrou a c'hoanta marteze eur gambr evit diskuiza ?

— Ne lavaran ket nann, eme Nikolaz Paobran.

— Eur gambr er c'henta estaj ?

— Re ger eo evidoun-me. Pignat a-walc'h a rafen en eil estaj. Va divesker a zo mat a-walc'h c'hoaz... ha va diouvrec'h ivez (En eur denna e valizenn a-dre daouarn ar mevel prest d'he c'has d'e gambr). Te ! te ! na douchit ket, paotr, ouz va valizenn : traou a zo e-barz hag a c'heller da derri buan a-walc'h !

— Per, eme ar mestr d'ar mevel, diskouezit d'an Aotrou ar gambr niverenn 23.

— Ha neuze, eme Nikolaz, emichañs ar gambr-se a zo enni eun oaled d'ober tan !

— Eun oaled, e miz gouere ? a c'hrozmolas Per.

— Ya, Aotrou, eur gambr eo gant eun oaled, eme ar mestr.

— Mat eo neuze, rak e miz gouere, a-wechou en em gav gwall amzer, gwall varrou-glao arne war gein an dud, pa soñjer an nebeuta.

Eur wech aet er gambr ha serret an nor, e teu da lavarout outañ e-unan :

— N'eus ket da fiziout re e tud an ti-mañ ; (hag e tenn eus e valizenn eun tamm brao a rollad paper) ; a-hend-all, n'eo ket dizañjer dont da Vrest gant kalz arc'hant. Ar filouterien a zo ken stank ha ken ijinus dre amañ ! Gwella 'zo, em eus amañ eur guziadell vat !

Hag o vont betek an oaled, e klenk er siminal e rollad paper.

— Aze, emezañ, e chomo. Den n'hall soñjal mont da glask aze va faperiou keiz.

Laouen evel eur pintig ez a e kêr da gaozeal gant paotred an asurañsou, evit gouzout gant peseurt kompagnunez e c'hello, dizale, ober ar gwella aferiou.

Goude beza bet en holl vureviou, edo o tistrei d'e gambr. Mes eur goumoulenn du-pod a luc'he en oabl, ha souden eur glao puilh a ziroll warnañ. Evel e oa war droad, hervez e gustum, pa en em gavas en ostaleri, ne oa ket eun neudenn sec'h eus e zillhad.


— O ! Aotrou kaez ! na c'houi a zo glebiet, a lavaras en eur vousec'hoarzin ar vestrez ouz e welout. Mes kaset em eus Per d'ober tan en ho kambr.

— Tan ! emezañ, gant eur vouez pounner.

Hag evel eur pennfollet e pign d'e gambr, bua-

(da echui, p. 31)





O sevel an « Normandie » e Penhoed-Sant-Nazer (Cellon, Paris).

E gwerz e ti « Gwalarn »

**COURS ELEMENTAIRE DE BRETON**  
(dre ar post)..... 12 lur

**GRAMMAIRE BRETONNE**  
(dre ar post)..... 3 lur (1 skoed)

**DICTIONNAIRE BRETON-FRANÇAIS**  
(dre ar post)..... 22 lur

## DRE a r VRO

### An « Normandie »

Ar sadorn 29 a viz here eo bet moret e Penhoed, e-kichen Sant-Nazer, al lestr-beajourien « Normandie », brasa lestr-beajourien ar bed-holl.

Bez' en deus 313 metr a hirder, 39 metr muioc'h eget al lestr alaman « Bremen », a oa an hira betek-hen. 75.000 tonnenn en deus, tost eun hanter muioc'h eget ar « Majestic », a oa an teva betek-hen, ha n'en deus nemet 56.600 tonnenn. E diz a vo 30 skoulm, tra na ra an « Europa », al lestr buana betek-hen, nemet 28. Kredi a reer e c'hell treiza an Atlantik e nebeut ouspenn pevar devez.

Ma vefe lakaet pevar dour e-giz ar C'hreizker an eil war beg egile, e vankfe c'hoaz 5 metr evit tizout hirder an « Normandie ». Hiroc'h eo eget pont Montroulez (29 metr muioc'h). Bez' en deus 36 metr a ledander. 4.000 den a c'hell mont e-barz. Evit sevel anezañ eo bet ret ober eur c'hal nevez e Penhoed. Hini ebet ne oa hir a-walc'h. Ret eo bet kleuza porz Sant-Nazer evit ma c'hell tremen. En Haor-Nevez ivez, emeur o kleuza dirak ar c'hae, e-lec'h ma vo staget. Hag e New-York ez eus bet graet eur c'hae nevez a-ratoz evitañ.

Moret eo bet an « Normandie » da 14 eur 50, pa oa uhel ar mor. Eur bern tud a oa diredet da welout ar voridigez. Lebrun, prezidant Republik Bro-C'hall, a oa eno gant e itron, ouspenn eun toullad politikerien, deputeed, amiraed, jeneraled, evel ma weler atao pa 'z eus eun dra bennak evel-se.

Binniget e voe al lestr gant person ar barrez. Goude se, an itron Lebrun a dorras warnañ (war al lestr), eur voutailh champagn. Ar vadeziant politik, moarvat !

Kement-se a zo brao-tre. Met an teodou fall a lavar ne oa ket ezomm marteze dispign kement a arc'hant evit eur vag, d'an ampoent ma emañ goullou ar c'hefiou hag ar godellou. Rak mar deo an « Normandie », brasa lestr ar bed, bez' ez eo ivez koustusa lestr ar bed : 750.000.000 lur da vihana ! Ha piou a baeo ? — Ma ! labour a vo bet atao evit tud Sant-Nazer !

**T. S. F.**

Neb en deus c'hoant prena eur post radio, ne vern a be seurt, ra skrivo d'ar gazetenn, a gaso al lizer.

### Afer Roazon

Ar bolised a zo atao o c'haloupat, atao o klask, o furchal, ha ne gavont netra. Piou en dije kredet ? Betek e ti Gwalarn int deut da c'houlenn diganeomp ha gwelet hor bije penn pe lost eus an tarzer monu-mañchou !

### Hag e kaner atao !

War-lerc'h ar « Ganaouenn war Sujed Torfed Roazon », savet gant unan eus paotred « Ober », eus Montroulez, setu amañ unan all, « Disfoeltradur Roazon », savet gant ar skrivagner brudet, Tanguy Malmanche. Da gredi eo n'eo ket bet re spontet c'hoaz ar Vretoned gant polised Paris !

### Kannadig miz Kerzu

Kannadig miz kerzu a vo bravoc'h c'hoaz eget hini miz here ha miz du. Evit an Nedeleg, neketa, e ranker ober gwelloc'h eget Roaz !

Bez' e vo ennañ, e-touez traou all, eur pennad brao-kenañ, an hini kenta eus eur rummad pennadou, diwar-benn « Ar Pelerinajou Brudet. »

Bez' e vo eur pennad diwar-benn stad truezus ar gouerien e bro Rusi, dindan ar vistri nevez.

Bez' e vo eur pezig-c'hoari nevez, savet a-ratoz evit beza c'hoariet er patronajou « An Eteo Nedeleg. »

Bez' e vo imajou kaer ha pennadou dudius.

Hastit afo, d'ar 15 a viz kerzu, mont da brena niverenn « Kannadig Gwalarn », pe gwelloc'h c'hoaz : komanant evit eur bloaz. Dek lur eo hepken, ar gwella marc'had eus an holl gazetennou brezonek !

### Skol dre Lizer

Eur skol dre lizer evit deski ar brezoneg a zo graet e Montroulez. Daou rummad a zo : unan evit ar re a oar dija ar brezoneg, hag o deus c'hoant da zeski gwelloc'h, hag unan evit ar re na ouzont ger brezonek ebet. Skrivit, pe lavarit d'ho mignoned skriva da : « Ober », B.P. 25, Montroulez.

Peogwir emaoomp gant « Ober », lavaromp d'ar re, d'an dud yaouank dreist-holl, o deus c'hoant labourat hag ober eun dra bennak talvoudus evit o bro, kas o anoiou ar c'henta ar gwella da renerien ar strollad kalonek-se. N'hellfent ket kavout eun implij gwelloc'h eus o amzer eget o skoazella ar Vretoned a fell d'ezo « adsevel ar brezoneg hag ar sevenadurez vreizek. »



An Ao. Pagnet, a vo koman-dant an « Normandie » (Cellon, Paris).

**LENNIT « GWALARN »**

Niverenn miz gwengolo :

**AN TASMANT DIMEZET**  
kontadenn gant Hoffmann

Niverenn miz here :

**GWELEDIGEZ MAB KONGLIN**  
marvailh farsus

Niverenn miz du :

**AR C'HOAR HENA**  
kontadenn gant Roparz Hemon

Pep niverenn (dre ar post) : 16 real

# AR PATATEZ HAG AN DORIFORA

## Peseurt loen eo an dorifora ?

An dorifora ! daoust peseurt bosenn eo a vez graet ganti an ano spontus-se ? Eur c'hleñved n'eo ket, na zoken unan eus al loened-se eus ar broiou pell a blij d'ezo toulla o fenn d'ar paour kaez morianed evit lipat d'ezo o empenn. Eun amprevan eo : eun doare c'houil, euzus, taer, marnaoniet ha barrek d'hon lakaat holl da vervel gant an naon.

Heñvel eo a-walc'h ouz eur c'houil-dero, d'ezañ eur meudad bennak a hed. Aes eo da anavezout dre m'en deus war e zaou wisk-askell pemp linenn du a-dreuz d'e gein war pep hini. E miz mae ez a pep parez da zozvi he viou a verniadou ruz-orañjez dindan deliou glas ar patatez. Eun devez bennak e teu anezo preñved, hag eus ar preñved, a-benn teir sizun, pupennou damruz. Aet da guz dindan douar e teu ar remañ er-maez, o stumm c'houil ganto, eur pemzek devez bennak war-lerc'h. Ha kerkent e krogont da zozvi dalc'hmat, ha dalc'hmat da zebri deliou patatez.

## Eus pelec'h eo deut ?

Dianav-kaer e oa gwechall en Europ. Deut eo d'imp asamblez gant eur bern traou eus an Amerik. Eno eo e voe taolet pled outañ evit ar wech kenta, eur c'hant vloaz bennak a zo. Patatez a oa er stad Colorado. Dont a reas an dorifora, ha nebeut amzer goude, ne voe patatezenn ebet ken. Kalz muioc'h a amprevaned, avat, a oa. Hag en eur zebri patatez penn-da-benn e krogjont gant o hent war-zu ar sav-heol.

E 1874 eo en em gavjont e New-York ha Philadelphia, dare da argadi an Europ. Adalek 1879 e voe difennet digas en Europ eus an Amerik ar plantennou a ya da voued gant an dorifora : patatez, alberjez, tomatez, hag all. Koulskoude, gant marc'hadourez all e teuas a-benn da dreiza ar mor bras hag ec'h erruas en Alamagn, e Bro-Saoz, en Holland. Eno avat e voe graet e stal d'ezañ dioustu. Troet, distroet ha drastet a-bez pep tachenn en doa graet e annez enni, mont a reas buan da get er broiou-se. E Bro-C'hall, avat, ez eas gwelloc'h an traou gantañ.

## An dorifora e Bro-C'hall

War-dro 1920 eo e tigouezas e porz Bourdel. Gal-laoued ar c'horn-se a zo gwelloc'h ganto ar gwini eget ar patatez. Re varc'had-mat e teu di patatez Breiz evit koll poan d'o gounit. A-hend-all n'o deus ket moc'h a-walc'h evit debri ar plusk.

Bourdeliz eta ne rejont van ebet o welout an dorifora o tebri eur paour kaez patatezenn bennak. En he flas e lakajont gwini. Dre se an dorifora, den o soursial outañ, a gemeras e amzer, a lartaas, a zozvas, hag a nebeudigou a astennas e dachenn en-dro da Vourdel. A-benn ar fin e c'hoarvezas e departamant ar Creuse. Patatez e-leiz a zo eno, hag an dud da hopal.

Galvet e voe tud dindan ar gouarnamant, goui-

zieien, hag all, hag e teujont eus Paris da sellout ouz an dorifora o tebri deliou patatez. Goude beza gwelet mat e kemerjont o hent en-dro da Paris, evit mont da guzulia. Kuzul a zo bepred, ha bepred emañ an amprevan o tebri avalou-douar. Aloubet en deus tregont departamant, hag an dekvedenn pe ouspenn eus an douarou o rei patatez. Ar re wella zoken, re Vreiz, a vo argadennet kent pell, peogwir n'eus kael ebet etre douarou Breiz ha re Vro-C'hall.

## Penaos e kresk

E gwir, n'heller ket bremañ herzel outañ. Re vuan emañ o kreski an niver anezañ. Dozvi a ra pep parez dre deir gwech bep bloaz, ha bep gwech e teu etre 1500 ha 2000 doriforaig eus ar viou. Mervel a ra unan bennak anezo. Koulskoude a-benn miz du eo deut diwar pep parez war-dro 10.000 amprevan. Spontus, n'eo ket 'ta ? Ha debri a ra an amprevaned ! A-walc'h ez eus gant 200 parez evit drasta eun devez-arat a-bez. Lezirek int, avat, hag hep skoazell ne 'z eont ket pell da zozvi, nemet douget e vefent, pe gant an avel, pe gant an dour, pe gant kirri. Setu penaos int deut betek doriou Breiz, en-dro da Naoned, da Erne. Setu perak e vo debret gantañ a-raok pell hon avalou-douar.

## Ar c'holl evidomp

Deut e vo neuze en hor bro mare an orpimant-gwenn, ar soufr, ar c'houevr, hag all. Ret e vo labeza dibaouez ar parkeier glas gant a bep seurt loustoni kontammus. Ha c'hoaz ma ne vez ket debret a-bez hor gwella trevadenn, an hanter moarvat a yelo da get dre gaer pe dre heg.

Eur c'holl bras e vo evit hor bro.

Eur c'holl bras eo a-benn bremañ. Betek-hen, diouz Sant-Malo, Sant-Brieg, Lanuon, Montroulez, Rosgo, Lotudi, e véze kaset bep bloaz da Vro-Saoz ouspenn 180.000 tonnellad patatez, o talvezout eun 200 milion dur bennak. Adalek warlene eo bet serret d'imp doriou Bro-Saoz, gant aon na zigasfe hor paour kaez avalou-douar ar vosenn en enezenn wenn. Setu perak ne dalvezont ket nemeur ar boan d'o gounit er bloaz-mañ. Gwaz a se evidomp.

Gwell a se evit ar Frañsizien. Debri a reont evit nebeut a arc'hant patatez n'o deus ket bet ar boan d'o hada. Gwell a se c'hoaz evito dre m'emañ e Bro-C'hall an uzinou bras oc'h aoza (n'eo ket evit netra) ar *bouillie cuprique* hag al louzou a bep seurt a vo ret-mat d'imp prena diganto.

A-hend-all, gouzout a rit, Breiziz, ar ganaouenn :


Evit ar moc'h patatez Breiz,

Evit o zud 'vo plusk e-leiz.


An hini goz, goz, goz...

Klevout a reot anezi meur a wech c'hoaz, hag en ho pro zoken. Treut, avat, e teuo da veza ar moc'h e Breiz.

F. TORRAVAL.



An Aotrou Azana, ministr ar brezel e Bro-Spagn, o tremen dirak ar soudarded (Cellon, Paris.)



Penaos e vo an « Normandie » pa vo echu (Cellon, Paris.)

# PAJENN AR MERC'HED

## AN TI

### An daol

Tud a zo deut da zebri en ho ti ha setu ma 'z eo bet saotret taol lufret ho sal-debri ! Gwin kouezet eus eur voutailh pe gafe pe me 'oar. An daol a oa ker brao ! Ma ! Kemerit eur stouv bennak ha frotit an daol gantañ. Ma ne da ket kuit ar saotrenn, devit ar stouv eun tammig ha frotit adarre. Naetañ goude. Setu ho taol brao ha lufret evel gwechall.

Ha peogwir emamp gant an traou saotret, chomomp ganto.

Ha gouzout a rit penaos ober pa vez dilhadou *gwen* saotret gant liou du ?

Lakait anezo en eur pod laez-ribod e-pad eun eur pe war-dro. Frotit mat ha gwalc'hit gwelloc'h. Aet kuit al liou du.

Evel just, pa vez fresk al liou du war an dilhadou, aesoc'h eo gwalc'hi anezo dioustu.

Pa gouez boutailh liou du ho mab war an daol, n'hoc'h eus nemet gwalc'hi gant dour tomm, pe, ma ne da ket kuit al liou du, gant gwinegr ez aio kuit, sur.

## AR GEGIN

### Ar moru

Diaes a-walc'h eo disalla ar moru. Setu amañ eun doare da ober hag a zo aesoc'h koulskoude. Gwalc'hit ar moru hag hel lakait da boaza gant dour yen *sallet* (ret eo salla, ya !). Pa vez poazet, hel lakait en eur skudellad dour klouar e-pad eun hanter eur. Disallet e vo ar moru.

### An ognon

N'eo ket plijus dibluska ognon, neketa ? Ma ! ne ouelot ket ma lakait anezo en dour bero e-pad pemp munutenn ha ma taolit anezo e-barz dour yen goude. Dibluskit anezo en eur o zenna eus an dour yen.

### An te

An dud a oar mat ober eur banne kafe dre amañ. Met ne ouzont ket alies ober eur banne te, avat ! An te graet mat a zo mat koulskoude. Setu amañ eun nebeut traou da nompas ankounac'haet pa reer eur banne te.

1. Ar pod-te a zo eur pod-te hag arabat eo ober kafe na tra ebet ennañ. Ne die morse beza gwalc'het. Taolit hepken eur banne dour bero e-barz evit tenna an te er-maez bep gwech ma hoc'h eus graet te.

2. Eul loaïad (loa vihan) te a zo a-walc'h evit diou dasenn.

3. An dour a die beza bero-bero p'hen taoler war an te.

4. Pa lakaer laez e-barz an te n'eus ket ezomm tomma al laez. Hel lakait da genta e-barz an dasenn, a-raok an te.

5. Arabat eva re a de ! N'eo ket mat evit an nervennoù, dreist-holl pa vez kreñv. Hag ez eer buan war dreutaat ivez pa ever re a de.



Ar c'hiz diweza evit ar bleo eo ar poultr lugernus. Betek-hen, pa 'z ae eur vaouez da dremen an abardaez er-maez, e veze livet he bleo ar memes liou evel he broz. Gwelet em eus en deiz all eun itron gwisket e ruz gant eur pennad-bleo ruz-tan. Eur sizun goude em eus gwelet ar memes itron gant eur vroz velen. He bleo, evel just, a oa deut melen ivez.

Bremañ e reer gwelloc'h. Gwalc'het e vez ar bleo ha kempennet. Neuze e vez lakaet warnañ eun doare kaot, ha war ar c'haot-se e vez skuilhet eur poultr, hag a lufret en deñvalijenn. Se a vo deut mat dreist-holl en teatr pe er sinema, e-lec'h ma ranked betek bremañ chom kuzet keit amzer.



Evit ar bouklou-skouarn, ne vez douget mui bremañ nemet unan hepken. Arabat kredi ez eo eur c'hiz marc'had-mat, rak ar boukl-skouarn a vremañ a zo diou wech hiroc'h, ha diou wech koustusoc'h eget unan a wechall.

Diskouezet eo bet d'in eur plac'h yaouank gant eur boukl-skouarn e platin hag e diamant, hag e kreiz e oa ... eur vontr. Ouspenn ma oa kaer da welout, e oa ivez madelezus evit an dud o deus lezet o montr er gêr. Evel-se ivez, pa 'z eus tud hag a chom re hir o kaozeal ganeoc'h, e c'heller atao trei ar skouarn war-zu enno, d'ober d'ezo kompren ez eo poent diloja.

Mari PENN-AVEL.

# PAJENN AR VUGALE

## Ar Saprenn

## Vadelezus



Ar goañv a oa o tont. An amzer a oa yen-meurbet. Aet e oa al laboused kuit. Ne chome mui nemet unan, a oa torret d'ezañ e askell, ha na c'helle ket nijal.

Mont a reas da c'houlenn sikour digant gwez bras ar c'hoad.

— Lezit ac'hanoun, emezañ, da chom e-touez ho prankou betek an nevez-amzer.

— Nann, nann ! eme ar vezvenn. Trawalc'h am eus da ober o tiwall va brankou diouz ar yenijenn. Kae kuit !

— Nann, nann ! eme an dervenn. Te a zebrfe va mez. Kae kuit !

— Nann, nann ! eme an halegenn. Ne garan ket an estrenien. Kae kuit !

Al labous kaez ne ouie mui petra ober. Met ar saprenn a welas anezañ, hag a lavaras :

— Da belec'h ez ez, labousig ?

— Ne ouzon ket. Ar gwez ne fell ket d'ezo va lezel da vont dindan o brankou, ha n'hellan ket nijal gant va askell a zo torret.

— Deus amañ, eme ar saprenn, ha dibab ar brank a blijio d'it ar gwella.

Al labousig a gavas eun toullig goudor en eur brank teo, hag eno e voe tomm d'ezañ.

Met eun noz, eun avel skournet a c'houezas war deliou ar vezvenn, an dervenn, an halegenn, hag a reas d'ezo koueza.

— Ha lakaat a rin da goueza ivez deliou ar saprenn ? a c'houlennas digant an Aotrou Doue.

— Nann, eme an Aotrou Doue, rak madelezus eo bet e-keñver al labousig.

Hag abaoe an amzer-se e vir ar saprenn he deliou atao.

### Penaos ec'h en em walc'h al logod ?

Gwelout a reer alies ar c'hizier oc'h en em walc'hi.

Met daoust ha gouzout a rit e ra o eñebourien, al logod, kemend-all ?

Mont a reont kalz buanoc'h, avat. Ha da walc'hi o fenn, e reont gant o daou bao a-raok.

Da walc'hi o lost e lakaont anezañ da dremen buan-buan etre o dent.

N'o deus ket da lufra o bleo, rak ne vern pegen diskempenn e vefe, e teu en-dro en e blas drezañ e-unan.

### Kroc'henou-ruz an Amerik

Boas eur da lavarout ne vo ket ken a groc'henou-ruz en Amerik a-barz nemeur. El levriou e veze lennet an dra-se, ha goude se eur bern traou kaer diwar-benn unan eus kaera gouennou tud an douar.

Met setu eur c'helou nevez :

Kresket eo eun tammig o niver abaoe dek vloaz, hervez an enklaskou graet e Stadou-Unanet an Amerik. 346.962 a vefe anezo bremañ, da lavarout eo, 3.610 muioc'h eget dek vloaz 'zo, met 6.000 nebeutoc'h eget ugent vloaz 'zo.

E stad an Oklahoma emaint an niverusa : 120.000 bennak.

### An ilizou bras

E Breiz ez eus ilizou ha n'eo ket mez o gwelout, pa ne vefe nemet iliz-veur Kemper, hini Kastell pe hini Landreger. Eur guchenn vraz a dud a c'hell mont enno. Pell emaint c'hoaz avat war-lerc'h an teir-mañ :

Sant Per Róm eo ar brasa. Frankiz a zo enni da 56.000 den. N'eo ket souezus kennebeut, pa 'z eo Rom kêrbenn an Iliz katolik. En iliz-veur Milano e c'heller lakaat 37.000, hag e Sant Paol, e Rom, 25.000.

Brao eo, neketa ?

### Pehini eo al loen en deus ar muia dent ?

O veva emañ er Meksik hag en Amerik ar C'hreisteiz. Etre 92 ha 100 dant en deus. *Armadillo* a vez graet anezañ er vro. Eus ar ouenn *tatou* eo.

Ar c'hi en deus 42 a zent.

An olifant en deus 20.

An den, heñ, en deus 32.



# A-ZEHOU HAG A-GLEIZ

## Amprevaned mat

An amprevaned a c'hell ober droug, — soñjit en dori-fora ! — met bez' e c'hellont ober vad ivez. Klevit an istor-mañ :

War-dro 150 vloaz 'zo, eun itron, gwreg eur gouarner saoz en Aostrali, a lakaas digas d'ezhi eun nebeut plantennou *kaktus* evit-kaeraat he jardrin. Ar plantennou-se, — a zo kalet-meurbet ha dreinek-kenañ, — en em gavas ken mat dindan heol tomm an Aostrali, ma krogjont da greski, da greski... A-benn ar fin e voe ret dizouara anezo ha stlepel anezo war an teil.

Ma ! Eno ec'h en em gavjont gwelloc'h c'hoaz, ha setu m'en em lakajont da c'holei ar maeziou fro-war-dro, na oant na gounezet na poblet zoken d'ar marc. Tamm-ha-tamm, tamm-ha-tamm ec'h en em skignjont muioc'h-mui. E kement lec'h ma teuc ar c'haktus e veze mouget pep geotenn ha pep plantenn ganto. E 1925 e oa bet gwastet evel-se 300.000 kilometr karrez, da lavarout eo, tost dek gwech Breiz.

Neuze eo e teuas eur soñj kaer d'an dud. Digaset e voe d'an Aostrali eus bro Arc'hantina en Amerik ar C'hreisteiz, 2.700 a amprevaned, eus ar seurt anvet *Cactoblastis Cactorum* gant ar ouizielien.

Den ne oa e gortoz eus ar pezh a c'hoarvezas : en eun nebeut bloaveziou, debret holl e voe ar c'haktus gant an amprevaned nevez, ha deveziou-aral war-lerc'h deveziou-aral restaolet d'ar gouerien.

Emeur o vont da sevel eur monumant d'an amprevaned mat-se, e Queensland, war a skriv ar c'hazetennou.

## Bepred memes tra !

Lenn a reomp war eun niverenn goz eus *Kroaz ar Vretoned*, niverenn ar 16 a viz c'houevrer 1908 :

« E Frañs e vez graet er mare-mañ listri-brezel hag a frailh anezo o-unan, poultr hag a darz pa ne vez ket ret, ha na darz ket, pa vez ret ; graet e vez ivez lezennou, hag eur wech echu er Gambre, ar Sened a rank lavarout :

— Al lezenn-se n'hall ket beza lakaet da gerzout ; graet fall eo. »

Pelloc'h c'hoaz e lennomp :

« Abaoe ma emañ ar wall chañs war listri Frañs, ar Vretoned a erru da veza tapet ha glac'haret gwall alies.

Al lestr-brezel *Jeanne d'Arc* a zo bet koitou tud warnañ gant unan eus ar c'hibelloù da domma dour hag a zo bet straket.


E-touez ar re varo, e welomp ato Bretoned... »

Ha pelloc'h c'hoaz :

« Eur soudard hag a zo nevez lazec er Marok, eur Breton adarre, a skrive d'eur mignon, eun nebeut deiziou a-raok ma voe skoet :

« Eus a-bell, den ne c'hell gouzout petra eo ar Marok. Darn a gav d'ezo n'eus amañ ganimp nemet c'hoarielloù, ha ne gemeront ket ar boan da deurel eur sell war ar c'hazetennou. Pa vo lavaret ar wirionez evel m'emañ amañ ez eus brezel kriz, betek ar maro. »

Ar pezh a oa gwir e 1908, daoust ha n'eo ket ken gwir all e 1932 ?



E bro Japan, ar merc'hed a zesk tenna gant ar fuzuilh (Célon, Paris).

(Kendalc'h ar b. 23)

na ma c'hell, en eur stlepel a-zehou hag a gleiz d'ezañ kement hini a gav war e hent.

Digoret an nor, e wel en oaled eun tan sklaer o flamma...

Sevel a ra e ziouvrec'h etrezek an neñv, hag e kouez a-stok e gorf war ar solier...

Eur medisin a zo klasket. Dont a ra raktal. Mes kavout a ra Nikolaz Paobran maro-mik gant an droug-moug.

\*

\* \*

En deiz war-lerc'h, an nizez hag he fried a zeuas da Vrest da interi o eontr avarisius. Roet e voe d'ezo eur bern paperou : mevel an ostaleri, pa oa aet da c'houeza an tan e kambr an den koz, a oa bet souezet o welout ne dae ket ar moged er-maez dre ar siminal evel diaraok. Planta a reas e fri er siminal, hag o welout eur rollad paper, e tapas krog ennañ evit e denna kuit, da rei hent d'ar moged.

Kement-mañ a dalvezas da c'hodell Ber gwerz eur banne kalet a win koz a-berz an heritourien anaoudek-mat.

C'hoant Doue ha c'hoant den a zo daou.

Hervez, J.C.

(Kendalc'h ar b. 22)

## Ar c'hleñved-mor

Kalz o devoe hor c'henvroiz da c'houzañv e-pad ar goañv. N'eo ket c'hoaz gant ar yenijenn, met ivez gant ar c'hleñved anvet kleñved-mor, a vez taget gantañ ar vartoloded er broiou yen alies, hag a laka anezo da goll o dent, da wanaat spontus ha da vervel. Bez' e oa ivez disfiziañs da gaout diouz an Indianed. Eun Indian eo, avat, a saveteas Karter hag e genseurted, dre ziskouez d'ezo penaos herzel ouz ar c'hleñved-mor, gant deliou eur wezenn anvet *ameda*.

## Maro Karter

Eun trede gwech e tistroas Karter d'ar C'hanada, er bloaz 1541. Met eno, tabut a savas etrezañ hag eur Pikard, Roberval e ano, a oa bet kaset di gant roue Bro-C'hall e-giz gouarner ar vro. Karter a refuzas senti ouz hemañ, hag a zeuas en-dro da Vreiz en e vaner e-kichen Sant-Malo, e-lec'h ma chomas betek e varo.



# FENTIGELLOU

## En tribunal

N'eus ket pell, unan a voe galvet dirak an tribunal.

— Tamallet oc'h, eme ar barner, da veza laeret eur varilhañ win eus a zirak eun ostaleri. Petra hoc'h eus-hu da lavarout evit ho tigarezi ?

— Eur gomzig hepken, aotrou barner : war an ti e oa skrivet e lizerennou bras « *Vin à emporter* », « gwin da gas ganeoc'h ».

## Divinadell

Petra a vrasa dre ma tenner dioutañ ?

— Eun toull.

## Ar vi hag ar vouez

Perig a c'hoanta beza eur c'haner bras. Setu ma klev ez eo mat ar viou da renta sklaeroch ar vouez, da zistanka korzenn ar c'han. War-eeun e red da gaout Fañch koz :

— Tonton Fañch, emezañ, ha gwir eo e laka ar viou ar vouez da veza skiltroch ?

— A dra sur, Perig, rak te 'oar penaos ar yar, dioustu m'he deus dozvet, en em laka da gana.

## Ar paotr a oa hir e eñvor

Eur wech, unan a lavare :

— Evidoun-me, 'm eus soñj mat eus kement tra 'zo tremenet em buhez. Evel-se, er skol em boa atao kalz priziou, dreist-holl ar priz evit deski dindan eñvor.

— Hag ar re all ? eme eun all.

— Ar re all ?... ar re all - Feiz, n'em eus ket a soñj !

## An dibab

Emañ Yann Lontek ha Fañch Teo o tebri merenn asamblez. Daou damm kig a zo war ar plad, unan bihan hag unan bras.

Yann : — Ata, Fañch, stag ganti !

Fañch : — Te a-raok, va mignon.

Ha den ne fell d'ezañ en em servij ar c'henta. A-benn ar fin, Yann Lontek a ra. Dioustu e kemer ar brasa tamm.

Fañch : — Se n'eo ket traou da ober, Yann. En em servij a rez ar c'henta, hag ez a ar jekenn vrasa ganit !

Yann : — Ha ma vijes bet ar c'henta da zibab e-barz ar plad, pehini 'pijes kemeret ?

Fañch : — An tamm bihan, evel just !

Yann : — Mat ! Sell 'ta, ha n'emañ ket ganit emañ ?

(Digaset gant Kerlann).

## Teod ar merc'hed

E peseurt miz e kaoze ar merc'hed an nebeuta ?

— E miz c'houevrer, dre ma n'eus nemet eiz devez war-nugent ennañ.

## Etre daou

Pa reer n'eus forz petra eo ret soñjal e vo kavet eun abeg bennak er pezh a vez graet. Kaout abeg a zo aes, labour mat a zo diaes.

Eun den speredek en em gave eun deiz etre daou c'hoapaer, ha na ehanent ket da damall d'ezañ e labour. Respont a reas d'ezo :

— Aotrounez, fazia a rit. Me ne dout nag eur sod nag eun diod. Mes etre daou emañ avat.

# GWALARN

Kelaouenn vizek

e brezoneg uhel

Rener: Roparz Hemon

Priz: 30 lur ar bloaz (broiou estren: 35 lur)

Chomlec'h:

Journal de Gwalarn, Boite Postale 75, BREST

(C.C. 96.38, Rennes)

# KANNADIG GWALARN

Kazetenn vizek

e brezoneg an holl

Rener: Roparz Hemon

Priz: 10 lur ar bloaz (broiou estren: 15 lur)

Adres:

Journal de Gwalarn, Boite Postale 75, BREST

(C.C. 96.38, Rennes)

NIV. 3. — KERZU 1932

PRIZ : DEK GWENNEG

# KANNADIG GWALARN

Eun Niverenn bep Miz — Ar Pempzek eus ar Miz

## Embannadurioù Gwalarn

1926

J. Kerrien. — AR ROC'H TOULL. — Diviet.

J. M. Syngé. — WAR VARC'H D'AR MOR. — 2 lur 25

1927

Roparz Hemon. — AN AOTROU BIMBOCHET E BREIZ. — Diviet.

T. C. Murray. — NEVEZ-AMZER. — 4 lur.

TONKADUR BUGALE TUIREANN. — 4 lur.

G. Th. Rotman. — PRINSEZIG AN DOUR. — Diviet.

GERIADUR GALLEK-BREZONEK A GORFADUREZ. — Diviet.

1928

Aeschulos. — PROMETHEUS EREET, AR BERSED. — 12 lur.

B. Potter. — PER AR C'HONIKL. — 1 lur.

G. Th. Rotman. — PRINSEZIG EN DEUR. — 5 lur.

H. Andersen. — PLAC'HIG VIHAN AR MOR. — 3 lur 60.  
Roparz Hemon. — GERIADURIG-DOURN BREZONEK-GALLEK. — 22 lur.

Roparz Hemon. — YEZADUR BERR AR BREZONEG. — 3 lur.

AR SIMBOL. — 0 lur 50

1929

Meven Mordiern. — ISTAR AR BED, levrenn I. — 14 lur.  
M. Gourlaouen. — LEVR AL LOENED. — 1 lur 75.

A. Blok. — AR PLAC'H DIANAV. — 4 lur.

G. Th. Rotman. — NIJADENN AN AOTROU SKANVIG. — 5 lur.

A. Brizeug. — TELENN ARVOR, FURNEZ BREIZ. — 6 lur.

Roparz Hemon. — REIZSKRIVADUR AR BREZONEG. — 3 lur.

1930

Meven Mordiern. — ISTAR AR BED, levrenn II. — 10 lur.

MARVAILHOU AR VRETONED. — Diviet.

ENKLASK DIVAR-BENN STAD AR BREZONEK E 1928. — 4 lur.

GERIADURIG ESPERANTEK-BREZONEK. — 4 lur.

Roparz Hemon. — EUN DRO E KEMBRE (Gwalarn 24). — 2 lur 50.

1931

Abeozen. — PEVAR MARVAILH. — 3 lur.

Roparz Hemon. — EUR BREIZAD OC'H ADKAVOUT BREIZ. — 15 lur.

OWEN HA LUNET. — 3 lur.

DIARMUH HA GRAINNE. — 5 lur.

Tanguy Malemanche. — AR BAGANIZ. — 10 lur.

Sei Chonagon. — NOTENNOU AR GOUBENNER. — 3 lur.

Roparz Hemon. — LINA. AN TAN E TI KERNASPREDEN (peziou-c'hoari). — 4 lur.

Boccaccio. — AR MARVAILHER ITALIAT. — 5 lur.

1932

Meavenn. — IWERZON DISHUAL, SKOL S. ENDA. — 4 lur.

X. de Langlais. — KANOU EN NOZ. — 10 lur.

D. K. Kongar. — AR WAZIG. — 3 lur.

Y. Drezen. — AN DOUR EN-DRO D'AN INIZI. — 4 lur.

Meavenn. — PA C'HOUEZ AVEL WALARN. — 5 lur.

Meven Mordiern. — ISTAR AR BED, levrenn III. — 8 lur.

Hoffmann. — AN TASMANT DIMEZET. — 4 lur.

GWELLEDIGEZ MAB KONGLIN. — 4 lur.

Roparz Hemon. — COURS ELEMENTAIRE DE BRETON. — 12 lur.

Roparz Hemon. — AR C'HOAR HENA. — 4 lur. —

Moulez 17, ru d'Algerias, Brest.

Ar Merour : Y. LE DREZEN




NEDELEC

LAOUEN

D'AN HOLL

GRISTENIEN

VAT !



« Arme an Naon » o vont etrezek kêr Washington, er Stadou-Unanet. (Cellon-Paris).



HA BLOAVEZ

MAT

D'AN HOLL

VRETONED

FEAL !



## TAOLENN

KELEIER AR MIZ

◆  
Pez-C'hoari  
AN ETEO NEDELEC

◆  
AR GOURIEN  
ER RUSI

AR PELERINAJOU  
BRUDET:  
PONTMAIN

◆  
DRE AR VRO  
PAJENN AR MERC'HED  
PAJENN AR VUGALE  
HOR BOEST-LIZIRI

Bennoz Doue d'an dud o deus skrivet d'imp da lavarout o deus kavet brao kenta niverenn hor C'hannadig ! Amañ e roomp darn eus al liziri mat hon eus bet, hag a ziskouez hon eus mignoned eun tammig dre holl.

Hor gwella mignon, avat, n'eo ket an hini a gas d'imp gourc'hemennou, met an hini a ro d'imp sikour. Rak « Kannadig Gwalarn » a zo bihanik c'hoaz, hag a rank kreski, ha penaos e kreske hep sikour e lennerien ?

Setu amañ tri dra a c'houlennomp diganeoc'h ober evidomp :

1. Kemer eur c'houmanant-bloaz d'ar C'hannadig, ma n'hoc'h eus ket graet c'hoaz. Dek lur ar bloaz n'eo ket kalz evit kaout eun niverenn digaset bep miz betek ho ti.

2. Diskouez ar C'hannadig d'ho mignoned ha lakaat anezo da brena anezañ pe da goumananti.

3. Mont da welout er bourk pe er parrezioù tro-war-dro, er staliou ma vez gwerzet kazetennou brezonek. Ma n'eo ket « Kannadig Gwalarn » e gwerz er staliou-se, kasit d'imp ano hag adres ar perc'henn. Kaset e vo d'ezañ dioustu eun toulladig Kannadigou da werza.

Soñjit mat : a-raok fin ar bloaz e rank « Kannadig Gwalarn » kaout ouspenn 1.000 koumananter, ha beza e gwerz e pep parrez eus Breiz-Izel ! Hoc'h interest eo, peogwir seul vuioch a goumananterien hag a brenerien a vo kavet, seul vrasoc'h ha kae-roc'h e vo niverennou ar gazetenn.

## Deut mat eo ar C'hannadig !

O paouez kaout ar « C'hannadig » nevez, Brao-tre !

F. VALLEE.

Emaoun o paouez kaout « Kannadig Gwalarn ». An taol-lagad kenta a ra plijadur.

Y. DREZEN.

O paouez kaout « Kannadig Gwalarn ». Mat-dreist ! ha berz a raio sur.

R.Y. KRESTON.

Lennet em eus « Kannadig Gwalarn » gant kalz a blijadur.

Abad E. RENAN.

Lennet em eus ar « C'hannadig ». Plijout a ra d'in.

M. GOURLAOUEN.

## Ar C'hannadig er broiou estren

Eus bro Veljik e teu d'imp al lizer-mañ :

Digouezet eo ganin niverenn genta « Kannadig Gwalarn ». Pe-bez levenez e-touez ar Vreiziz ken niverus amañ. Ne gomzer

mui nemet eus ar « C'hannadig ». Heti a ran d'ar C'hannadig mont d'ober tro ar bed evel ar martolod a gomzer anezañ en niverenn-mañ. Deut mat e vo gant ar Vreiziz skignet dre ar bed holl. Pep miz a gaso d'ezo eun tammig eus aer ar Vroig karek muioc'h c'hoaz pa vezer pell.

Anavezout a ran Breiziz harluet e Madagaskar pe er Brazil. Alies e tigasont d'in istoriou diwar-benn boazioù ar broiou-se.

F.C.

## Ano ar C'hannadig

Va lezit da rei d'eoc'h va soñj, evel m'en deus graet A.P., diwar-benn ano ho gazetenn vat...

Kredi a ran ez eo bet an ano-se dibabet gant kalz a furnez. Daoust ha ne vo ket « Kannadig Gwalarn », ar c'hannad a zigaso da bep oaled breizat kelou mat adginnivelez hor bro, grañt gant ar re o deus savet « Gwalarn » ?

Ouspenn se, ne gomprenan ket perak e vez dismegañset gant A.P. ar c'hazetennouigou parrez, « nebeut diouz an amzer-vremañ dre an diabarz evel dre an diavaez. » Ar c'hazetennouigou parrez a zo talvoudus-meurbet... Skrivet int, peurvuia, e brezoneg, hag a-wechou zoken e brezoneg eus ar gwella. Perak neuze lezel anezo a gostez, pe zoken, dismegañsi anezo ?

Y. ar B.

## Peziou-c'hoari evit ar merc'hed

Lakaat a reomp dirak hol lennerien goulenn eur renerez skol gristen :

Bep bloaz e c'hoariomp eur pezh-c'hoari brezonek evit ar pri-zioù. Ha n'ho pefe ket unan bennak vraso da zigas d'in ?

## Brezoneg ar Vugale

Hol lennerien a oar e vez roet gant « Gwalarn » levriou da vugale ar skolioù. Abaoe pevar bloaz hon eus roet evel-se ouspenn 15.000 a levriou bras ha bihan. Kenderc'hel a reomp d'hen ober, daoust na vez mui kaset d'imp nemeur a arc'hant evit se, ne ouzomp ket perak. Setu amañ eur pennad tennet diouz eul lizer digant ar memes renerez skol :

Dont a ran da lavarout d'eoc'h va anaoudegez vat evit an holl levriou hoc'h eus digaset d'in. Ne oan ket e gortoz kement all evit netra. Trugarekaat eta a ran ac'hanoc'h em ano hag en ano va bugaligoù. Holl, mestrezed ha bugale, o devo soñj ennooc'h en o fedennou.

Resevet em eus ivez gant plijadur « Kannadig Gwalarn » miz here. Brao-kenañ em eus kavet anezañ. Lennet em eus d'am merc'hed bihan « Pajenn ar Vugale. »

## « Ar c'hoar hena »

Na pebez plijadur am eus bet o lenn romantig nevez Roparz Hemon « Ar C'hoar Hena », war niverenn « Gwalarn » miz du ! Setu aze traou a rafe enor da lennegezh n'eus forz pe vro, ha squezet oun o welout ne reer ket muioc'h a vrud en-dro d'ezo. Rak aze ez eus kened ha gwirionez, traou na vez ket kavet alies asamblez en amzer-mañ.

Eur ger, avat, n'eo ket eur rebech ! An istor a bad c'houec'h vloaz. Mat ! er bloavezh kenta e welomp Eliza hag e vuia-karet Herri o vont d'ar sinema-kaoz (evel-se e c'heller marteze lavarout *cinéma parlant*). Ar sinema-se, avat, n'eus nemet tri pe bevar bloaz ma 'z eus anezañ en hor bro. En doare ma echu ar romantig e tro ar bloaz 1935 pe 1936 ! Gouzout a ran n'eo ket kement-se evit sponta aozer *Bimbochet* !

A.G.

## An toull

Gouarnamant Paris en deus kavet e vanke 12 miliard en e c'hodell ! E miz mae, war a lavare, ne vanke nemet 3. Da belec'h 'ta eo aet 9 miliard e c'houec'h miz ?

Ha setu Herriot hag e vignoned o klask stanka an toull : krenna amañ, krenna ahont, digreski pae an dud e karg, kreski an tailhou ! Evel just, den ne fell d'ezañ beza touzet. Gwelloc'h gantañ e vefe touzet e amezeien.

Ne vefe ket diaes kavout ar miliardou a vank ma karfed dispign nebeutoc'h evit an arme, ha sevel nebeutoc'h a vatimañchou brezel (n'eus kaoz er journalioù pemdeziek nemet eus ar batimañchou nevez moret amañ pe ahont).

Gwir, met e pep bro eo ar memes tra. Ha bro ebet ne fell d'ezi dizarma a-raok ar broiou all. Atao an avel a follentez o c'houeza war ar bed !

## Priz an ed

Kenta tra he deus graet Kambr an Deputeed e Paris en eur en em voda a nevez d'ar 25 a viz here eo tabutal diwar-benn stad truezus al labour-douar. Tabutal, avat, a zo eun dra, hag ober eun dra all.

## Mussolini

Setu dek vloaz abaoe m'emañ Mussolini mestr bras an Itali. Dek vloaz 'zo, ar fasisted a gerzas war Rom hag a gemeras penn ar gouarnamant.

En eñvor eus an darvoud bras-se, emañ Mussolini o redek bro en eur ober prezegennoù kaer : diskar ar paemañchou-brezel, lezel an Alamaned da adarma, mirout ouz broiou 'zo da veza re greñv e-keñver ar re all, setu ar pezh a c'houlenn.

« Ar fasisted, emezañ, a labour evit ar peoc'h ! »

## Roosevelt pe Hoover ?

Piou, eus an daou-mañ, a vo prezidant ar Stadou-Unanet ?

Kredi a reer e vo Roosevelt, ha, da heul, echu e vo gant ar « sec'hor », pas sec'hor an amzer, met sec'hor ar c'hourlañchenn. Da lavarout eo, koñje a vo roet da eva gwin ha gwin-ardant evel gwechall.

Lavarout a reer ez eus dija bagou karget a win hag a likeuriou o c'hortoz ar mare da loc'ha evit ar Stadou-Unanet.

## Sened Paris

Senedourien nevez, 111 anezo, a zo bet anvet d'ar 16. Cheñchamant ebet, koulz lavaret.

## An « Aéropostale »

Gwall fin an neb a gompren eun dra bennak en abadenn an « Aéropostale ». Ar polis, minister ar brezel, politikerien hag a bep seurt tud divalo all a zo paket e-barz. Paperioù faos, tud faos, ha breinadur a bep tu ! Da gredi eo e vo mouget an afer, gant aon na vefe re saotret tud uhel eus gouarnamant Paris.

## Trouz e Belfast

E kêr vras Belfast, en hanternoz bro Iwerzon, ez eus kalz a dud dilabour. O veza n'o doa ket, d'o meno, a-walc'h a sikour digant ar gouarnamant, e fellas d'ezo, d'an 11, ober eur manifestasion bras dre ruiou kêr. Se a voe difennet gant ar gouarnamant.

Emgannou taer a voe etre ar vicherourien hag ar bolised. Ar re-mañ a oa ganto fuzuilhou ha revolve-riou. Staliou a voe kemeret gant an dud ha skrapet kement a oa enno. Gweturioù-dre-dan, enno bara ha laez, a voe kemeret ivez ha bruzunet.

An trouz a badas daou zevez. E-pad an noz, ar vicherourien a gleuzas trañcheou hag a savas bardelloù. Petra a reas ar bolised, nemet mont en tiez da denna tud eus o gwele evit lakaat anezo dre heg da zizober ar bardelloù ha da stanka an trañcheou. Darn a labouras evel-se en o dilhad-noz, dindan ar glao.


War-dro 70 den, paotred ha merc'hed, a voe arestet.

## Arme an naon

Bagadou paotred ha merc'hed dilabour, deut eus Bro-Skos hag eus Bro-Saoz, a zo aet betek Londrez war o zreid, da denna evez ar gouarnamant war o stad. « Arme an Naon » a zo bet graet anezo.

D'ar 27 int digouezet er gêrbenn. Hag i d'en em voda en Hyde Park, ar jardrin bras e kreiz kêr, polised a bep tu d'ezo. An traou a voe sioul da genta. Met souden, den ne oar mat perak, e savas trouz, hag ar bolised a sailhas meur a wech war ar paour kaez tud. Darn anezo a voe gloazet ha douget en ospitalioù, darn all kaset d'ar prizon.







Collin-Lucco, unan eus ar re paket en afer an « Aéropostale » (Cellon, Paris).




Ar brinsez Ingrid, eus bro Sued, aet d'ober eun dro e Londrez (da zimezi, a lavarer, gant unan eus mibien roue Bro-Saoz).



E Beljik, Renkin, ar c'henta ministr, en deus ranket mont kuit (Cellon, Paris).



En Alamagn, an Doktor Goebbels, unan eus mignoned Hitler, a gomz d'an « Nazied » (Cellon, Paris).



E krec'h : Roosevelt, anvet Prezidant ar Stadou Unanet. En traoñ : Hoover, en deus bet korbell. A-dreñv : an Ti Gwenn, Palez ar Prezidant (Cellon, Paris).



An Aotrou Herriot, kenta ministr ar Frañs, aet da welout Prezidant Republik Bro-Spagn e Madrid (Cellon, Paris).

## Eur paotr eus a Sant-Malo

Ni Bretoned, n'anavezomp ket a-walc'h an dud vras a zo ganet en hor bro. Pebez levr kaer a c'hellfed da sevel koulskoude gant o istor, eun istor hag a lakafe ac'hanomp da dridal gant al lorc'h hag ar garantez-vro.


Hizio e fell d'in displega d'eoc'h berr-ha-berr buhez unan eus hor brasa kabitened a vor, Jakez Karter, an hini a gavas ar C'hanada.

Ganet e voe er bloaz 1491, e Sant-Malo. Paotred Sant-Malo, evel ouzoc'h, a zo bet a-viskoaz martoloded eus an dibab. Pa lavaromp en deus Karter kavet ar C'hanada, e lavaromp e gwirionez ez eo heñ a zo bet ar c'henta e diabarz ar vro-se, rak pell 'zo e oa ar Vretoned hag ar Vasked kustum da vont da vorua war aochou al Labrador hag an Douar-Nevez.

## Eur gêriadenn Indianed

Teir beaj a reas Jaker Karter d'ar C'hanada. En dro genta, e 1534, ez eas, en aber vras ar stêr Sant-Lorañs, betek al lec'h ma emañ Kebek bremañ. Met ret e voe d'ezañ dont war e giz, abalamour d'ar wall amzer.

Er bloavez goude ez eas adarre gant teir batimant, ha neuze e tizas al lec'h ma emañ bremañ kêr vras Montreal. Bez' e oa eno eur gêriadenn Indianed, gant eur blasenn vras e-kreiz. Pa zigouezas Jakez Karter gant e genseurtered, an holl verc'hed, yaouank ha koz, a deuas er-maez eus o lochennou gant o bugalle da welout an estrañjourien, a oa gwenn o c'hroc'hen, hir o baro, hag a oa gwisket en houarn hervez giz an amzer-se. Biskoaz n'o doa gwelet kemend-all ! Fel-



Eskob nevez Nevers, an Aotrou Flynn, sakret e Paris, en iliz-veur an Itron Varia (Cellon, Paris).

lout a rae d'ezo touch anezo, pa ne ouient ket piou oant, tud pe doueed diskennet eus an Neñv !

## Ar c'habiten medisin !

Ar wazed a deuas goude, hag a azezas tro-war-dro d'ar Vretoned. Ar roue, pe ar penn-bras, a oa klañv, hag a voe kaset dirak Karter astennet war eur c'hroc'hen karo. Aspedi a reas ar c'habiten breton da barea anezañ. Karter a resitas eur pennad eus Aviel Sant Yann, hag ar Basion da c'houde. Neuze eas kuit, o lakaat e soudarded da seni an trompilhou, ar pez a leunias an Indianed kaez a souez.

## Ar butun

E-kichen Montreal eo ivez e welas Karter evit ar wech kenta tud o vutuni. Gouzout a rit ne veze ket anavezet ar butun e Breiz en amzer-se. Ar blantenn-se a zo deut eus an Amerik abaoe. Setu petra a lavar Karter e-unan :

« An Indianed, emezañ, o deus eun doare geot a zastumont bep hañv, hag a lakaont da sec'ha dindan an heol. N'eus nemet ar wazed hag a ra gantañ. Lakaat a reont ar geot-se e-barz eur yalc'hig, a zougont a-istribilh en o c'herc'henn, ha bez' o deus ivez eun tamm maen pe goad kleuzet, damheñvel ouz eur c'houitell. » (Evel-se e komze Karter eus eur c'horn-butun !) « Tana a reont ar geot-se, o lakaat warnañ eur c'hlaouenn veo. Neuze e tennont ar maged e-barz o c'horf, ken na deu er-maez dre o genou hag e fri, evel dre siminal eun ti. »

(da echui, p. 31)



E kostez Brest e veve eun den pinvidik-mor, oajet a dri-ugent vloaz, e ano Nikolaz Paobran. E nizez yaouank, anvet Jozefin Dilavar, hag heñ, setu an tiegez.

An den-se, evit d'ezañ kaout madou, a oa piz, ha skoet, war ar marc'had, gant ar remm. Ret e oa d'an nizez kaout gantañ pasianted eun ael. Evit he digoll eus ar boan a gemere gantañ, e soñje d'ezañ he faea mat en eur lavarout d'ezi alies :

— Goude me, va holl vadou a vezo d'eoc'h, ha neuze e c'hellot ober eun dimezi a zoare.

Evit d'ezañ beza drouklivet, e tebre mat e voued ha yac'h atao. Eun den mat a lavaras da Nikolaz e riskle e nizez da chom bepred plac'h yaouank.

— Te ! te ! emezañ, me ne viran ket outi... ha ma kav unan d'he c'hemerout evit he daoulagad milliour, n'he deus nemet dimezi.

Eun den fur, oc'h anaout he douster, he fasanted, he goulennas da bried. An eured a voe graet en desped d'an eontr koz drouklaouen, ha d'ar gourdrizou a rae d'he disherita. An daou bried a gendalc'he d'en em intent mat, da veva eürus. Mes ar c'hrafer koz a gendalc'he ivez da gaout droug ha kasoni ouz e nizez :

— Biken, emezañ, liard toull n'he devo diganin-me !

Mes nec'het bras en em gave gant e zanvez, o klask gouzout petra d'ober anezo, da biou rei anezo. Ne gare den, na kar nag estren. Tout a oa mat evitañ hag ar re all mat da sellout. Sina a raje anezo d'eun ospital, d'eun iliz bennak, evit ma vije pedet Doue gantañ goude e varo ? O ! an dra-se a oa pell diouz e soñj !

O zestamanti a raje d'an ti-kêr, d'ar gouarnamant ? O ! emezañ, a-walc'h eo bet d'in paea an tailhou e-pad keit amzer. Evit an dra-se, ne rin biken ! Gwelloc'h eo ganin en em rivina !

Ober vad da eur re bennak gant e zanvez, pebez rann-galon evitañ ! Gortozomp : n'en em rivin ket

atao an den a fell d'ezañ... Eur soñj a zeu da Nikolaz, e-kreiz e nec'hamant : ha ma lakfen va holl zanvez war interest, e doare da douch evito, a-hed va buhez, rantou nevez. Er c'hiz-se ne vo nemedoun o profita anezo gwech ebet.

Niveri piz ha piz a ra e zanvez, ha goude beza gwelet emañ e baperou en urz, e laka anezo holl gant evez en eur valizenn, hag heñ en hent war-zu Brest evit en em veñji diouz e nizez.

Erruet e Brest, e wel eun ostaleri. O veza aet en ti, e roer d'ezañ an digemer-mañ :

— An Aotrou a c'hoanta marteze eur gambr evit diskuiza ?

— Ne lavaran ket nann, eme Nikolaz Paobran.

— Eur gambr er c'henta estaj ?

— Re ger eo evidoun-me. Pignat a-walc'h a rafen en eil estaj. Va divesker a zo mat a-walc'h c'hoaz... ha va diouvrec'h ivez (En eur denna e valizenn a-dre daouarn ar mevel prest d'he c'has d'e gambr). Te ! te ! na douchit ket, paotr, ouz va valizenn : traou a zo e-barz hag a c'heller da derri buan a-walc'h !

— Per, eme ar mestr d'ar mevel, diskouezit d'an Aotrou ar gambr niverenn 23.

— Ha neuze, eme Nikolaz, emichañs ar gambr-se a zo enni eun oaled d'ober tan !

— Eun oaled, e miz gouere ? a c'hrozmolas Per.

— Ya, Aotrou, eur gambr eo gant eun oaled, eme ar mestr.

— Mat eo neuze, rak e miz gouere, a-wechou en em gav gwall amzer, gwall varrou-glao arne war gein an dud, pa soñjer an nebeuta.

Eur wech aet er gambr ha serret an nor, e teu da lavarout outañ e-unan :

— N'eus ket da fiziout re e tud an ti-mañ ; (hag e tenn eus e valizenn eun tamm brao a rollad paper) ; a-hend-all, n'eo ket dizañjer dont da Vrest gant kalz arc'hant. Ar filouterien a zo ken stank ha ken ijinus dre amañ ! Gwella 'zo, em eus amañ eur guziadell vat !

Hag o vont betek an oaled, e klenk er siminal e rollad paper.

— Aze, emezañ, e chomo. Den n'hall soñjal mont da glask aze va faperiou keiz.

Laouen evel eur pintig ez a e kêr da gaozeal gant paotred an asurañsou, evit gouzout gant peseurt kompagnunez e c'hello, dizale, ober ar gwella aferiou.

Goude beza bet en holl vureviou, edo o tistrei d'e gambr. Mes eur goumoullenn du-pod a luc'he en oabl, ha souden eur glao puilh a ziroll warnañ. Evel e oa war droad, hervez e gustum, pa en em gavas en ostaleri, ne oa ket eun neudenn sec'h eus e zilhad.


— O ! Aotrou kaez ! na c'houi a zo glebiet, a lavaras en eur voue'hoarzin ar vestrez ouz e welout. Mes kaset em eus Per d'ober tan en ho kambr.

— Tan ! emezañ, gant eur vouez pounner.

Hag evel eur pennfollet e pign d'e gambr, bua-

(da echui, p. 31)





O sevel an « Normandie » e Penhoed-Sant-Nazer (Cellon, Paris).

## DRE ar VRO

### An « Normandie »

Ar sadorn 29 a viz here eo bet moret e Penhoed, e-kichen Sant-Nazer, al lestr-beajourien « Normandie », brasa lestr-beajourien ar bed-holl.

Bez' en deus 313 metr a hirder, 39 metr muioc'h eget al lestr alaman « Bremen », a oa an hira betek-hen. 75.000 tonnenn en deus, tost eun hanter muioc'h eget ar « Majestic », a oa an teva betek-hen, ha n'en deus nemet 56.600 tonnenn. E diz a vo 30 skoulm, tra na ra an « Europa », al lestr buana betek-hen, nemet 28. Kredi a reer e c'hell treiza an Atlantik e nebeut ouspenn pevar devez.

Ma vefe lakaet pevar dour e-giz ar C'hreizker an eil war beg egile, e vankfe c'hoaz 5 metr evit tizout hirder an « Normandie ». Hiroc'h eo eget pont Montroulez (29 metr muioc'h). Bez' en deus 36 metr a ledander. 4.000 den a c'hell mont e-barz. Evit sevel anezañ eo bet ret ober eur c'hal nevez e Penhoed. Hini ebet ne oa hir a-walc'h. Ret eo bet kleuza porz Sant-Nazer evit ma c'hell tremen. En Haor-Nevez ivez, emeur o kleuza dirak ar c'hae, e-lec'h ma vo staget. Hag e New-York ez eus bet graet eur c'hae nevez a-ratoz evitañ.

Moret eo bet an « Normandie » da 14 eur 50, pa oa uhel ar mor. Eur bern tud a oa diredet da welout ar voridigez. Lebrun, prezidant Republik Bro-C'hall, a oa eno gant e itron, ouspenn eun toullad politikerien, deputeed, amiraed, jeneraled, evel ma weler atao pa 'z eus eun dra bennak evel-se.

Binniget e voe al lestr gant person ar barrez. Goude se, an itron Lebrun a dorras warnañ (war al lestr), eur voutailh champagn. Ar vadeziant politik, moarvat !

Kement-se a zo brao-tre. Met an teodou fall a lavar ne oa ket ezomm marteze dispign kement a ar-c'hant evit eur vag, d'an ampoent ma emañ goulo ar c'hefiou hag ar godellou. Rak mar deo an « Normandie », brasa lestr ar bed, bez' ez eo ivez koustusa lestr ar bed : 750.000.000 lur da vihana ! Ha piou a baeo ? — Ma ! labour a vo bet atao evit tud Sant-Nazer !

**T. S. F.** Neb en deus o'hoant prena eur post radio, ne vern a be seurt, ra skrivet d'ar gazetenn, a gaso al lizer.

### Afer Roazon

Ar bolised a zo atao o c'haloupat, atao o klask, o furchal, ha ne gavont netra. Piou en dije kredet ? Betek e ti Gwalarn int deut da c'houlenn diganeomp ha gwelet hor bije penn pe lost eus an tarzer monumañchou !

### Hag e kaner atao !

War-lerc'h ar « Ganaouenn war Sujed Torfed Roazon », savet gant unan eus paotred « Ober », eus Montroulez, setu amañ unan all, « Disfoeltradur Roazon », savet gant ar skrivagner brudet, Tanguy Malmanche. Da gredi eo n'eo ket bet re spontet c'hoaz ar Vretoned gant polised Paris !

### Kannadig miz Kerzu

Kannadig miz kerzu a vo bravoc'h c'hoaz eget hini miz here ha miz du. Evit an Nedeleg, neketa, e ranker ober gwelloc'h eget Roaz !

Bez' e vo ennañ, e-touez traou all, eur pennad brao-kenañ, an hini kenta eus eur rummad pennadou, diwar-benn « Ar Pelerinajou Brudet. »

Bez' e vo eur pennad diwar-benn stad truezus ar gouerien e bro Rusi, dindan ar vistri nevez.

Bez' e vo eur pezig-c'hoari nevez, savet a-ratoz evit beza c'hoariet er patronajou « An Eteo Nedeleg. »

Bez' e vo imajou kaer ha pennadou dudius.

Hastit afo, d'ar 15 a viz kerzu, mont da brena niverenn « Kannadig Gwalarn », pe gwelloc'h c'hoaz : koumanant evit eur bloaz. Dek lur eo hepken, ar gwella marchad eus an holl gazetennou brezonek !

### Skol dre Lizer

Eur skol dre lizer evit deski ar brezoneg a zo graet e Montroulez. Daou rummad a zo : unan evit ar re a oar dija ar brezoneg, hag o deus c'hoant da zeski gwelloc'h, hag unan evit ar re na ouzont ger brezonek ebet. Skrivit, pe lavarit d'ho mignoned skriva da : « Ober », B.P. 25, Montroulez.

Peogwir emaoomp gant « Ober », lavaromp d'ar re, d'an dud yaouank dreist-holl, o deus c'hoant labourat hag ober eun dra bennak talvoudus evit o bro, kas o anoiou ar c'henta ar gwella da renerien ar strollad kalonek-se. N'hellfent ket kavout eun implij gwelloc'h eus o amzer eget o skoazella ar Vretoned a fell d'ezo « adsevel ar brezoneg hag ar sevenadurez vreizek. »



An Ao. Pagnet, a vo koman-dant an « Normandie » (Cellon, Paris).

### LENNIT « GWALARN »

Niverenn miz gwengolo :

**AN TASMANT DIMEZET**  
kontadenn gant Hoffmann

Niverenn miz here :

**GWELEDIGEZ MAB KONGLIN**  
marvailh farsus

Niverenn miz du :

**AR C'HOAR HENA**  
kontadenn gant Roparz Hemon

Pep niverenn (dre ar post) : 16 real

E gwerz e ti « Gwalarn »

**GOURS ELEMENTAIRE DE BRETON**

(dre ar post)..... 12 lur

**GRAMMAIRE BRETONNE**

(dre ar post)..... 3 lur (1 skoed)

**DICTIONNAIRE BRETON-FRANÇAIS**

(dre ar post)..... 22 lur

# AR PATATEZ HAG AN DORIFORA

## Peseurt loen eo an dorifora ?

An dorifora ! daoust peseurt bosenn eo a vez graet ganti an ano spontus-se ? Eur c'hleñved n'eo ket, na zoken unan eus al loened-se eus ar broiou pell a blij d'ezo toulla o fenn d'ar paour kaez morianed evit lipat d'ezo o empenn. Eun amprevan eo : eun doare c'houil, euzus, taer, marnaoniet ha barrek d'hon lakaat holl da vervel gant an naon.

Heñvel eo a-walc'h ouz eur c'houil-dero, d'ezañ eur meudad bennak a hed. Aes eo da anavezout dre m'en deus war e zaou wisk-askell pemp linenn du a-dreuz d'e gein war pep hini. E miz mae ez a pep parez da zozvi he viou a verniadou ruz-orañjez dindan deliou glas ar patatez. Eun devez bennak e teu anezo preñved, hag eus ar preñved, a-benn teir sizun, puspennou damruz. Aet da guz dindan douar e teu ar remañ er-maez, o stumm c'houil ganto, eur pemzek devez bennak war-lerc'h. Ha kerkent e krogont da zozvi dalc'hmat, ha dalc'hmat da zebri deliou patatez.

## Eus pelec'h eo deut ?

Dianav-kaer e oa gwechall en Europ. Deut eo d'imp asamblez gant eur bern traou eus an Amerik. Eno eo e voe taolet pled outañ evit ar wech kenta, eur c'hant vloaz bennak a zo. Patatez a oa er stad Colorado. Dont a reas an dorifora, ha nebeut amzer goude, ne voe patatezenn ebet ken. Kalz muioc'h a amprevaned, avat, a oa. Hag en eur zebri patatez penn-da-benn e krogjont gant o hent war-zu ar sav-heol.

E 1874 eo en em gavjont e New-York ha Philadelphia, dare da argadi an Europ. Adalek 1879 e voe difennet digas en Europ eus an Amerik ar plantennou a ya da voued gant an dorifora : patatez, alberjez, tomatez, hag all. Koulskoude, gant marc'hadourez all e teuas a-benn da dreiza ar mor bras hag ec'h erruas en Alamagn, e Bro-Saoz, en Holland. Eno avat e voe graet e stal d'ezañ dioustu. Troet, distroet ha drastet a-bez pep tachenn en doa graet e annez enni, mont a reas buan da get er broiou-se. E Bro-C'hall, avat, ez eas gwelloc'h an traou gantañ.

## An dorifora e Bro-C'hall

War-dro 1920 eo e tigouezas e porz Bourdel. Gal-laoued ar c'horn-se a zo gwelloc'h ganto ar gwini eget ar patatez. Re varc'had-mat e teu di patatez Breiz evit koll poan d'o gounit. A-hend-all n'o deus ket moc'h a-walc'h evit debri ar plusk.

Bourdeliz eta ne rejont van ebet o welout an dorifora o tebri eur paour kaez patatezenn bennak. En he flas e lakajont gwini. Dre se an dorifora, den o soursial outañ, a gemeras e amzer, a lartaas, a zozvas, hag a nebeudigou a astennas e dachenn en-dro da Vourdel. A-benn ar fin e c'hoarvezas e departamant ar Creuse. Patatez e-leiz a zo eno, hag an dud da hopal.

Galvet e voe tud dindan ar gouarnamant, goui-

zieien, hag all, hag e teujont eus Paris da sellout ouz an dorifora o tebri deliou patatez. Goude beza gwelet mat e kemerjont o hent en-dro da Paris, evit mont da guzulia. Kuzul a zo bepred, ha bepred emañ an amprevan o tebri avalou-douar. Aloubet en deus tregont departamant, hag an dekvedenn pe ouspenn eus an douarou o rei patatez. Ar re wella zoken, re Vreiz, a vo argadennet kent pell, peogwir n'eus kael ebet etre douarou Breiz ha re Vro-C'hall.

## Penaos e kresk

E gwir, n'heller ket bremañ herzel outañ. Re vuan emañ o kreski an niver anezañ. Dozvi a ra pep parez dre deir gwech bep bloaz, ha bep gwech e teu etre 1500 ha 2000 doriforaig eus ar viou. Mervel a ra unan bennak anezo. Koulskoude a-benn miz du eo deut diwar pep parez war-dro 10.000 amprevan. Spontus, n'eo ket 'ta ? Ha debri a ra an amprevaned ! A-walc'h ez eus gant 200 parez evit drasta eun devez-arat a-bez. Lezirek int, avat, hag hep skoazell ne 'z eont ket pell da zozvi, nemet douget e vefent, pe gant an avel, pe gant an dour, pe gant kirri. Setu penaos-int deut betek doriou Breiz, en-dro da Naoned, da Erne. Setu perak e vo debret gantañ a-raok pell hon avalou-douar.

## Ar c'holl evidomp

Deut e vo neuze en hor bro mare an orpimant-gwenn, ar soufr, ar c'houevr, hag all. Ret e vo labeza dibaouez ar parkeier glas gant a bep seurt loustoni kontammus. Ha c'hoaz ma ne vez ket debret a-bez hor gwella trevadenn, an hanter moarvat a yelo da get dre gaer pe dre heg.

Eur c'holl bras e vo evit hor bro.

Eur c'holl bras eo a-benn bremañ. Betek-hen, diouz Sant-Malo, Sant-Brieg, Lanuon, Montroulez, Rosgo, Lotudi, e veze kaset bep bloaz da Vro-Saoz ouspenn 180.000 tonnellad patatez, o talvezout eun 200 milion lur bennak. Adalek warlene eo bet serret d'imp doriou Bro-Saoz, gant aon na zigasfe hor paour kaez avalou-douar ar vosen en enezenn wenn. Setu perak ne dalvezont ket nemeur ar boan d'o gounit er bloaz-mañ. Gwaz a se evidomp.

Gwell a se evit ar Frañsizen. Debri a reont evit nebeut a arc'hant patatez n'o deus ket bet ar boan d'o hada. Gwell a se c'hoaz evito dre m'emañ e Bro-C'hall an uzinou bras oc'h aoza (n'eo ket evit netra) ar *bouillie cuprique* hag al louzou a bep seurt a vo ret-mat d'imp prena diganto.

A-hend-all, gouzout a rit, Breiziz, ar ganaouenn :


Evit ar moc'h patatez Breiz,

Evit o zud 'vo plusk e-leiz.


An hini goz, goz, goz...

Klevout a reot anezi meur a wech c'hoaz, hag en ho pro zoken. Treut, avat, e teuo da veza ar moc'h e Breiz.

F. TORRAVAL.



An Aotrou Azana, ministr ar brezel e Bro-Spagn, o tremen dirak ar soudarded (Cellon, Paris.)



Penaos e vo an « Normandie » pa vo echu (Cellon, Paris.)

# PAJENN AR MERC'HED

## AN TI

### An daol

Tud a zo deut da zebri en ho ti ha setu ma 'z eo bet saotret taol lufret ho sal-debri ! Gwin kouezet eus eur voutailh pe gafe pe me 'oar. An daol a oa ker brao ! Ma ! Kemerit eur stouv bennak ha frotit an daol gantañ. Ma ne da ket kuit ar saotrenn, devit ar stouv eun tammig ha frotit adarre. Naetañ goude. Setu ho taol brao ha lufus evel gwechall.

Ha peogwir emamp gant an traou saotret, chomomp ganto.

Ha gouzout a rit penaos ober pa vez dilhadou gwenn saotret gant liou du ?

Lakait anezo en eur pod laez-ribod e-pad eun eur pe war-dro. Frotit mat ha gwalc'hit gwelloc'h. Aet kuit al liou du.

Evel just, pa vez fresk al liou du war an dilhadou, aesoc'h eo gwalc'hi anezo dioustu.

Pa gouez boutailh liou du ho mab war an daol, n'hoc'h eus nemet gwalc'hi gant dour tomm, pe, ma ne da ket kuit al liou du, gant gwinegr ez aio kuit, sur.

## AR GEGIN

### Ar moru

Diaes a-walc'h eo disalla ar moru. Setu amañ eun doare da ober hag a zo aesoc'h koulskoude. Gwalc'hit ar moru hag hel lakait da boaza gant dour yen *sallet* (ret eo-salla, ya !). Pa vez poazet, hel lakait en eur skudellad dour klouar e-pad eun hanter eur. Disallet e vo ar moru.

### An ognon

N'eo ket plijus dibluska ognon, neketa ? Ma ! ne ouelot ket ma lakait anezo en dour bero e-pad pemp munutenn ha ma taolit anezo e-barz dour yen goude. Dibluskit anezo en eur o zenna eus an dour yen.

### An te

An dud a oar mat ober eur banne kafe dre amañ. Met ne ouzont ket alies ober eur banne te, avat ! An te graet mat a zo mat koulskoude. Setu amañ eun nebeut traou da nompas ankounac'haet pa reer eur banne te.

1. Ar pod-te a zo eur pod-te hag arabat eo ober kafe na tra ebet ennañ. Ne die morse beza gwalc'het. Taolit hepken eur banne dour bero e-barz evit tenna an te er-maez bep gwech ma hoc'h eus graet te.

2. Eul loaiad (loa vihan) te a zo a-walc'h evit diou dasenn.

3. An dour a die beza bero-bero p'hen taoler war an te.

4. Pa lakaer laez e-barz an te n'eus ket ezomm tomm al laez. Hel lakait da genta e-barz an dasenn, a-raok an te.

5. Arabat eva re a de ! N'eo ket mat evit an nervennoù, dreist-holl pa vez kreñv. Hag ez eer buan war dreutaat ivez pa ever re a de.



Ar c'hiz diweza evit ar bleo eo ar poultr lugernus. Betek-hen, pa 'z ae eur vaouez da dremen an abardaez er-maez, e veze livet he bleo ar memes liou evel he broz. Gwelet em eus en deiz all eun itron gwisket e ruz gant eur pennad-bleo ruz-tan. Eur sizun goude em eus gwelet ar memes itron gant eur vroz velen. He bleo, evel just, a oa deut melen ivez.

Bremañ e reer gwelloc'h. Gwalc'het e vez ar bleo ha kempennet. Neuze e vez lakaet warnañ eun doare kaot, ha war ar c'haot-se e vez skuilhet eur poultr, hag a lufus en deñvalijenn. Se a vo deut mat dreist-holl en teatr pe er sinema, e-lec'h ma ranked betek bremañ chom kuzet keit amzer.



Evit ar bouklou-skouarn, ne vez douget mui bremañ nemet unan hepken. Arabat kredi ez eo eur c'hiz marc'had-mat, rak ar boukl-skouarn a vremañ a zo diou wech hiroc'h, ha diou wech koustusoc'h eget unan a wechall.

Diskouezet eo bet d'in eur plac'h yaouank gant eur boukl-skouarn e platin hag e diamant, hag e kreiz e oa ... eur vontr. Ouspenn ma oa kaer da welout, e oa ivez madelezus evit an dud o deus lezet o montr er gêr. Evel-se ivez, pa 'z eus tud hag a chom re hir o kaozeal ganeoc'h, e c'heller atao trei ar skouarn war-zu enno, d'ober d'ezo kompren ez eo poent diloja. Mari PENN-AVEL.

# PAJENN AR VUGALE

## Ar Saprenn

## Vadelezus



Ar goañv a oa o tont. An amzer a oa yen-meurbet. Aet e oa al laboused kuit. Ne chome mui nemet unan, a oa torret d'ezañ e askell, ha na c'helle ket nijal.

Mont a reas da c'houlenn sikour digant gwez bras ar c'hoad.

— Lezit ac'hanoun, emezañ, da chom e-touez ho prankou betek an nevez-amzer.

— Nann, nann ! eme ar vezvenn. Trawalc'h am eus da ober o tiwall va brankou diouz ar yenijenn. Kae kuit !

— Nann, nann ! eme an dervenn. Te a zebrfe va mez. Kae kuit !

— Nann, nann ! eme an halegenn. Ne garan ket an estrenien. Kae kuit !

Al labous kaez ne ouie mui petra ober. Met ar saprenn a welas anezañ, hag a lavaras :

— Da belec'h ez ez, labousig ?

— Ne ouzon ket. Ar gwez ne fell ket d'ezo va lezel da vont dindan o brankou, ha n'hellan ket nijal gant va askell a zo torret.

— Deus amañ, eme ar saprenn, ha dibab ar brank a blijio d'it ar gwella.

Al labousig a gavas eun toullig goudor en eur brank teo, hag eno e voe tomm d'ezañ.

Met eun noz, eun avel skournet a c'houezas war deliou ar vezvenn, an dervenn, an halegenn, hag a reas d'ezo koueza.

— Ha lakaat a rin da goueza ivez deliou ar saprenn ? a c'houlennas digant an Aotrou Doue.

— Nann, eme an Aotrou Doue, rak madelezus eo bet e-keñver al labousig.

Hag abaoe an amzer-se e vir ar saprenn he deliou atao.

### Penaos ec'h en em walc'h al logod ?

Gwelout a reer alies ar c'hizier oc'h en em walc'hi.

Met daoust ha gouzout a rit e ra o eñebourien, al logod, kemend-all ?

Mont a reont kalz buanoc'h, avat. Ha da walc'hi o fenn, e reont gant o daou biao a-raok.

Da walc'hi o lost e lakaont anezañ da dremen buan-buan etre o dent.

N'o deus ket da lufus o bleo, rak ne vern pegen diskempenn e vefe, e teu en-dro en e blas drezañ e-unan.

### Kroc'henou-ruz an Amerik

Boas eur da lavarout ne vo ket ken a groc'henou-ruz en Amerik a-barz nemeur. El levriou e veze lennet an dra-se, ha goude se eur bern traou kaer diwar-benn unan eus kaera gouennoù tud an douar.

Met setu eur c'helou nevez :

Kresket eo eun tammig o niver abaoe dek vloaz, hervez an enklaskou graet e Stadou-Unanet an Amerik. 346.962 a vefe anezo bremañ, da lavarout eo, 3.610 muioc'h eget dek vloaz 'zo, met 6.000 nebeutoc'h eget ugent vloaz 'zo.

E stad an Oklahoma emaint an niverusa : 120.000 bennak.

### An ilizou bras

E Breiz ez eus ilizou ha n'eo ket mez o gwelout, pa ne vefe nemet iliz-veur Kemper, hini Kastell pe hini Landreger. Eur guchenn vras a dud a c'hell mont enno. Pell emaint c'hoaz avat war-lerc'h an teir-mañ :

Sant Per Róm eo ar brasa. Frankiz a zo enni da 56.000 den. N'eo ket souezus kennebeut, pa 'z eo Rom kêrbenn an Iliz katolik. En iliz-veur Milano e c'heller lakaat 37.000, hag e Sant Paol, e Rom, 25.000.

Brao eo, neketa ?

### Pehini eo al loen en deus ar muia dent ?

O veva emañ er Meksik hag en Amerik ar C'hreisteiz. Etre 92 ha 100 dant en deus. *Armadillo* a vez graet anezañ er vro. Eus ar ouenn *tatou* eo.

Ar c'hi en deus 42 a zent.

An olifant en deus 20.

An den, heñ, en deus 32.



# A-ZEHOU HAG A-GLEIZ

## Amprevaned mat

An amprevaned a c'hell ober droug, — soñjit en dori-fora ! — met bez' e c'hellont ober vad ivez. Klevit an istor-mañ :

War-dro 150 vloaz 'zo, eun itron, gwreg eur gouarner saoz en Aostrali, a lakaas digas d'ezhi eun nebeut plantennou *kaktus* evit kaeraat he jardrin. Ar plantennou-se, — a zo kalet-meurbet ha dreinek-kenañ, — en em gavas ken mat dindan heol tomm an Aostrali, ma krogjont da greski, da greski... A-benn ar fin e voe ret dizouara anezo ha stlepel anezo war an teil.

Ma ! Eno ec'h en em gavjont gwelloc'h c'hoaz, ha setu m'en em lakajont da c'holei ar maeziou tro-war-dro, na oant na gounezet na poblet zoken d'ar marc. Tamm-ha-tamm, tamm-ha-tamm ec'h en em skignjont muioc'h-mui. E kement lec'h ma teuc ar c'haktus e veze mouget pep geotenn ha pep plantenn ganto. E 1925 e oa bet gwastet evel-se 300.000 kilometr karrez, da lavarout eo, tost dek gwech Breiz.

Neuze eo e teuas eur soñj kaer d'an dud. Digaset e voe d'an Aostrali eus bro Arc'hantina en Amerik ar C'hreisteiz, 2.700 a amprevaned, eus ar seurt anvet *Cactoblastis Cactorum* gant ar ouizieien.

Den ne oa e gortoz eus ar pezh a c'hoarvezas : en eun nebeut bloaveziou, debret-holl e voe ar c'haktus gant an amprevaned nevez, ha deveziou-arat war-lerc'h deveziou-arat restalet d'ar gouerien.

Emeur o vont da sevel eur monumant d'an amprevaned mat-se, e Queensland, war a skriv ar c'hazetennou.

## Bepred memes tra !

Lenn a reomp war eun niverenn goz eus *Kroaz ar Vretoned*, niverenn ar 16 a viz c'houevrer 1908 :

« E Frañs e vez graet er mare-mañ listri-brezel hag a frailh anezo o-unan, poultr hag a darz pa ne vez ket ret, ha na darz ket, pa vez ret ; graet e vez ivez lezennou, hag eur wech echu er Gambri, ar Sened a rank lavarout :

— Al lezenn-se n'hall ket beza lakaet da gerzout ; graet fall eo. »

Pelloc'h c'hoaz e lennomp :

« Abaoe ma emañ ar wall chañs war listri Frañs, ar Vretoned a erru da veza tapet ha glac'haret gwall alies.

Al lestr-brezel *Jeanne d'Arc* a zo bet kofitout tud warnañ gant unan eus ar c'hibelloù da domma dour hag a zo bet straket.


E-touez ar re varo, e welomp aao Bretoned... »

Ha pelloc'h c'hoaz :

« Eur soudard hag a zo nevez lazec er Marok, eur Breton adarre, a skrive d'eur mignon, eun nebeut deiziou ar-raok ma voe skoet :

« Eus a-bell, den ne c'hell gouzout petra eo ar Marok. Darn a gav d'ezo n'eus amañ ganimp nemet c'hoarielloù, ha ne gemeront ket ar boan da deurel eur sell war ar c'hazetennou. Pa vo lavaret ar wirionez evel m'emañ amañ ez eus brezel kriz, betek ar maro. »

Ar pezh a oa gwir e 1908, daoust ha n'eo ket ken gwir all e 1932 ?



E bro Japan, ar merc'hed a zesk tenna gant ar fuzuilh (Célon, Paris).

(Kendalc'h ar b. 23)

na ma c'hell, en eur stlepel a-zehou hag a gleiz d'ezañ kement hini a gav war e hent.

Digoret an nor, e wel en oaled eun tan sklaer o flamma...

Sevel a ra e ziouvrec'h etrezek an neñv, hag e kouez a-stok e gorf war ar solier...

Eur medisin a zo klasket. Dont a ra raktal. Mes kavout a ra Nikolaz Paobran maro-mik gant an droug-moug.

\*  
\* \*

En deiz war-lerc'h, an nizez hag he fried a zeuas da Vrest da interi o eontr avarisius. Roet e voe d'ezo eur bern paperou : mevel an ostaleri, pa oa aet da c'houeza an tan e kambr an den koz, a oa bet souezet o welout ne dae ket ar moged er-maez dre ar siminal evel diaraok. Planta a reas e fri er siminal, hag o welout eur rollad paper, e tapas krog ennañ evit e denna kuit, da rei hent d'ar moged.

Kement-mañ a dalvezas da c'hodell Ber gwerz eur banne kalet a win koz a-berz an heritourien anaoudek-mat.

C'hoant Doue ha c'hoant den a zo daou.

Hervez, J.C.

(Kendalc'h ar b. 22)

## Ar c'hleñved-mor

Kalz o devoe hor c'henvroiz da c'houzañv e-pad ar goañv. N'eo ket c'hoaz gant ar yenijenn, met ivez gant ar c'hleñved anvet kleñved-mor, a vez taget gantañ ar vartoloded er broiou yen alies, hag a laka anezo da goll o dent, da wanaat spontus ha da vervel. Bez' e oa ivez disfiziañs da gaout diouz an Indianed. Eun Indian eo, avat, a saveteas Karter hag e genseurte, dre ziskouez d'ezo penaos herzel ouz ar c'hleñved-mor, gant deliou eur wezenn anvet *ameda*.

## Maro Karter

Eun trede gwech e tistroas Karter d'ar C'hanada, er bloaz 1541. Met eno, tabut a savas etrezañ hag eur Pikard, Roberval e ano, a oa bet kaset di gant roue Bro-C'hall e-giz gouarner ar vro. Karter a refuzas senti ouz hemañ, hag a deuas en-dro da Vreiz en e vaner e-kichen Sant-Malo, e-lec'h ma chomas betek e varo.



# FENTIGELLOU

## En tribunal

N'eus ket pell, unan a voe galvet dirak an tribunal.  
— Tamallet oc'h, eme ar barner, da veza laeret eur varilhañ win eus a zirak eun ostaleri. Petra hoc'h eus-hu da lavarout evit ho tigarezi ?  
— Eur gomzig hepken, aotrou barner : war an ti e oa skrivet e lizerennou bras « *Vin à emporter* », « gwin da gas ganeoc'h ».

## Divinadell

Petra a vrasa dre ma tenner dioutañ ?  
— Eun toull.

## Ar vi hag ar vouez

Perig a c'hoanta beza eur c'haner bras. Setu ma klev ez eo mat ar viou da renta sklaeroch ar vouez, da zistanka korzenn ar c'han. War-eeun e red da gaout Fañch koz :  
— Tonton Fañch, emezañ, ha gwir eo e laka ar viou ar vouez da veza skiltroch ?  
— A dra sur, Perig, rak te 'oar penaos ar yar, dioustu m'he deus dozvet, en em laka da gana.

## Ar paotr a oa hir e eñvor

Eur wech, unan a lavare :  
— Evidoun-me, m'eus soñj mat eus kement tra 'zo tremenet em buhez. Evel-se, er skol em boa atao kalz priziou, dreist-holl ar priz evit deski dindan eñvor.  
— Hag ar re all ? eme eun all.  
— Ar re all ?... ar re all - Feiz, n'em eus ket a soñj !

## An dibab

Emañ Yann Lontek ha Fañch Teo o tebri merenn asamblez. Daou damm kig a zo war ar plad, unan bihan hag unan bras.  
Yann : — Ata, Fañch, stag ganti !  
Fañch : — Te a-raok, va mignon.  
Ha den ne fell d'ezañ en em servij ar c'henta. A-benn ar fin, Yann Lontek a ra. Dioustu e kemer ar brasa tamm.  
Fañch : — Se n'eo ket traou da ober, Yann. En em servij a rez ar c'henta, hag ez a ar jekenn vrasa ganit !  
Yann : — Ha ma vijes bet ar c'henta da zibab e-barz ar plad, pehini 'pijes kemeret ?  
Fañch : — An tamm bihan, evel just !  
Yann : — Mat ! Sell 'ta, ha n'emañ ket ganit emañ ?  
(Digaset gant Kerlann).

## Teod ar merc'hed

E peseurt miz e kaoze ar merc'hed an nebeuta ?  
— E miz c'houevrer, dre ma n'eus nemet eiz devez war-nugent ennañ.

## Etre daou

Pa reer n'eus forz petra eo ret soñjal e vo kavet eun abeg bennak er pezh a vez graet. Kaout abeg a zo aes, labour mat a zo diaes.  
Eun den speredek en em gave eun deiz etre daou c'hoapaer, ha na ehanent ket da damall d'ezañ e labour. Respont a reas d'ezo :  
— Aotrounez, fazia a rit. Me ne dout nag eur sod nag eun diod. Mes etre daou emañ avat.



# G WALARN

Kelaouenn vizek

e brezoneg uhel

Rener: Roparz Hemon

Priz: 30 lur ar bloaz (broiou estren: 35 lur)

Chomlec'h:

Journal de Gwalarn, Boîte Postale 75, BREST

(C.C. 96.38, Rennes)

# KANNADIG GWALARN

Kazetenn vizek

e brezoneg an holl

Rener: Roparz Hemon

Priz: 10 lur ar bloaz (broiou estren: 15 lur)

Adres:

Journal de Gwalarn, Boîte Postale 75, BREST

(C.C. 96.38, Rennes)

NIV. 4. — GENVER 1933

PRIZ : DEK GWENNEG

# KANNADIG GWALARN

Eun Niverenn bep Miz — Ar Pemzek eus ar Miz

## Embannadurioù Gwalarn

1926

J. Kerrien. — AR ROC'H TOULL. — Diviet.  
J. M. Synge. — WAR VARCH D'AR MOR. — 2 lur 25

1927

Roparz Hemon. — AN AOTROU BIMBOCHET E BREIZ. — Diviet.  
T. C. Murray. — NEVEZ-AMZER. — 4 lur.  
TONKADUR BUGALE TUIREANN. — 4 lur.  
G. Th. Rotman. — PRINSEZIG AN DOUR. — Diviet.  
GERIADUR GALLEK-BREZONEK A GORFADUREZ. — Diviet.

1928

Aeschulos. — PROMETHEUS EREET, AR BERSÉD. — 12 lur.  
B. Potter. — PER AR CHONIKL. — 1 lur.  
G. Th. Rotman. — PRINSEZIG EN DEUR. — 5 lur.  
H. Andersen. — PLAC'HIG VIHAN AR MOR. — 3 lur 60.  
Roparz Hemon. — GERIADURIG-DOURN BREZONEK-GALLEK. — 22 lur.  
Roparz Hemon. — YEZADUR BERR AR BREZONEG. — 3 lur.  
AR SIMBOL. — 0 lur 50

1929

Meven Mordiern. — ISTOR AR BED, levrenn I. — 14 lur.  
M. Gourlaouen. — LEVR AL LOENED. — 1 lur 75.  
A. Blok. — AR PLAC'H DIANAV. — 4 lur.  
G. Th. Rotman. — NIJADENN AN AOTROU SKANVIG. — 5 lur.  
A. Brizeug. — TELENN ARVOR, FURNEZ BREIZ. — 6 lur.  
Roparz Hemon. — REIZSKRIVADUR AR BREZONEG. — 3 lur.

1930

Meven Mordiern. — ISTOR AR BED, levrenn II. — 10 lur.  
MARVAILHOU AR VRETONED. — Diviet.  
ENKLASK DIWAR-BENN STAD AR BREZONEK E 1928. — 4 lur.  
GERIADURIG ESPERANTEK-BREZONEK. — 4 lur.  
Roparz Hemon. — EUN DRO E KEMBRE (Gwalarn 24). — 2 lur 50.

1931


Abeozen. — PEVAR MARVAILH. — 3 lur.  
Roparz Hemon. — EUR BREIZAD OC'H ADKAVOUT BREIZ. — 15 lur.  
OWEN HA LUNET. — 3 lur.  
DIARMOID HA GRAINNE. — 5 lur.  
Tanguy Malemanche. — AR BAGANIZ. — 10 lur.  
Sei Chonagon. — NOTENNOU AR GOUBENNER. — 3 lur.  
Roparz Hemon. — LINA. AN TAN E TI KERNASPREDEN (peziou-c'hoari). — 4 lur.  
Boccaccio. — AR MARVAILHER ITALIAT. — 5 lur.

1932

Meavenn. — IWERZON DISHUAL, SKOL S. ENDA. — 4 lur.  
X. de Langlais. — KANOU EN NOZ. — 10 lur.  
D. K. Kongar. — AR WAZIG. — 3 lur.  
Y. Drezen. — AN DOUR EN-DRO D'AN INIZI. — 4 lur.  
Meavenn. — PA C'HOUEZ AVEL WALARN. — 5 lur.  
Meven Mordiern. — ISTOR AR BED, levrenn III. — 8 lur.  
Hoffmann. — AN TASMANT DIMEZET. — 4 lur.  
GWELEDIGEZ MAB KONGLIN. — 4 lur.  
Roparz Hemon. — COURS ELEMENTAIRE DE BRETON. — 12 lur.  
Roparz Hemon. — AR C'HOAR HENA. — 4 lur. —

Moulez 17, ru d'Algesiras, Brest.

Ar Merour : Y. LE DREZEN



Ar brezel etre ar Chin ha Bro-Japan : Soudarded ar Chin o tremen dre ruiou Pekin, war-nes mont d'en em ganna. — Cellon Paris.

## TAOLENN

KELEIER AR MIZ

◆  
Kontadenn  
AR MIGNON

◆  
AR PELERINAJOU BRUDET

◆  
KENDALC'H AN DUD A VOR

AR RADIO E BREIZ

◆  
DRE AR VRO  
PAJENN AR MERC'HED  
PAJENN AR VUGALE

A-ZEHOU HAG A-GLEIZ

FENTIGELLOU

HCR BOEST-LIZIRI

# HOR BOEST-LIZIRI

Ma karfemp moula amañ an holl lizerou mat a zeu d'imp, n'eo ket eur bajenn, met an hanter eus KANNADIG GWALARN a vefe ret. Ar pezh a ra d'imp ar vrasa plijadur eo gwelout penaos e teu al lizerou-se eus a bep seurt tud, paour ha pinvidik, koz ha yaouank, hag eus pep korn eus ar vro, koulz lavaret, eus pep korn eus ar bed.

An dra-se a ziskouez e oa ezomm eus eur gaze-tenn e-giz hor C'HANNADIG. Evel ma skriv Kenan Kongar :

« Na pebez plijadur evidomp kaout, goude gortoz ket amzer, ar c'hannadig-mañ, graet evit plijout, n'eo ket evit kentelia na kelenn. Setu aze an nevezinti vras : eun dra bennak disheñvel, dre ar gor dia-barz, a zo bet graet diouz kement a oa betek-hen. »

KANNADIG GWALARN a zo bihanik c'hoaz, avat, ha ne c'hell ket ober kement en deus c'hoant da ober. Evit ma kresko, evit ma tizo buan an niver a 1.000 koumananter a zo ret d'ezañ evit beva, e ranko hor mignoned labourat, evel ma ra darn anezo, o soñjal e vo trec'h hor C'hannadig trec'h hor yez karet, ar brezoneg.

Setu amañ ar pezh a c'houlennomp diganeoc'h, lennerien ger, dre garantez evit hor bro vihan :

1. Diskouez KANNADIG GWALARN d'ho mignoned, ha lakaat anezo da gemer eur c'houmanant-bloaz.

2. Lakaat KANNADIG GWALARN e gwerz en ho parrez, pe da vihana kas d'imp ano an den a werz ar c'hazetennou mat.

Eun tammig labour eta, hag hep dale e vo hor C'hannadig kazetenn vroadel ar Vretoned, e Breiz hag er-maez eus Breiz ivez !

## EUR C'HELOU MAT

Niverenn ar C'HANNADIG, prenet en eur stal, ne goust mui nemet dek gwenneg.

Arabat kredi koulskoude e vo koll gant ar re a bae dek lur eur c'houmanant.

Hiviziken, an neb a gaso priz e goumanant da GANNADIG GWALARN, en devo ar gwir da zibab evel « prim » unan eus al levriou da heul :

LEVR AL LOENED, gant Marc'harid Gourlaouen. TELENN ARVOR, FURNEZ BREIZ, gant Brizeug.

YEZADUR BERR AR BREZONEG, gant Roparz Hemon.

DISTAGADUR AR BREZONEG, gant Roparz Hemon.

REIZSKRIVADUR AR BREZONEG, gant Roparz Hemon.

## Lizer eur Vretonez vihan

*Doe ha Breiz*

*Poullan, 24 a viz kerzu 1932*

Aotrou Rener,

Me a zo eur plac'hig vihan eus skol gristen Poullan, dibabet etouez va c'hamaradezed evit reketañ d'eoc'h eur Bloavezh mat hag ho trugarekaat eus ar vadelez hoc'h eus bet da zigas d'omp kement a levriou brao hag eur pezh-c'hoari evit bravaat nozvez Nedeleg.

Nag a blijadur hon eus-ni bet o lenn « Nijadenn an Ao. Skañvig ». Mall bras a vez ganeomp gwelout ar mercher o tont, rak an devez-se eo devez al lennadeg brezoneg. Desket hon eus ennañ leun a c'heriou nevez. Betek bremañ, ni a lavare « *eun otomobil, eun aeroplan, eur moteur* » Hiviziken e c'hellimp lavarout e brezoneg mat : « *eur c'harr-dre-dan, eur c'harr-nij, eur c'heflusker* ».

Eun dra all hon eus c'hoaz da c'houlenn ganeoc'h. Marteze e kavot ac'hanomp eun tammig « gourmant ». Mes, lavaret hoc'h eus d'omp skriva d'eoc'h hep aon, rak *Kannadig Gwalarn* a zo hor mignon bras. Ha ne c'hellfec'h ket ober diwezatoch eur pezh-c'hoari farsus evit ar prizioù, rak tud Poullan a blij d'ezo kalz c'hoarzin.

Evit diskouez d'eoc'h hon anaoudegez vat, omp en em glevet etrezomp evit kemerout daou goumanant nevez d'ho Kannadig.

Bloavezh mat, yec'hed, prosperite,  
Hag ar baradoz e fin ho puhez.

Natali GOURLAOUEN  
evit bugale skol gristen Poullan

## Oberou GWALARN hag ar vugale

*A-hend-all, renerez skol gristen Poullan he deus bet ar vadelez da gas d'imp al linennou da heul :*

Resevet em eus gant eur blijadur nevez niverenn miz kerzu ar C'hannadig. Trugarekaat a ran ac'hanoc'h da vezañ respontet ker buan d'ar goulenn am boa graet d'eoc'h d'ar-bihan ar peziou-c'hoari evit ar merc'hed bihan. « *An Eteo Nedeleg* » a zo tre eus doare bugale hor skol. Aes eo da lenn, ha brao da c'hoari. En em gavet mat eo evit laouenaat gouelioù Nedeleg.

*Pajenn ar Vugale* avat ne vo lennet nemet disadorn, rak istor Jopig en em gav mat tre evit an devez-se.

Ho levr « *Nijadenn an Aotrou Skañvig* » a zo dudi va bugale vihan. Skeudennet eo ker brao ma ne skuiz ket an daoulagad o sellout outañ. Evit lakaat ar blijadur da badout pelloc'h ne lezan al levr etre daouarn ar vugale nemet e-pad al lennadeg...

Evit echui e reketañ d'eoc'h eur Bloavezh mat. Ra blij gant Doue rei d'eoc'h eur vuhez hir hag eürus evit gellout labourat c'hoaz e-pad pell amzer evit brasa gloar hor bro garet Breiz-Izel.

## Karantez ar brezoneg

*Nag a dud a gar ar brezoneg ! Bemdez hon eus testeniou nevez eus an dra-se. Unan eus kenta labourioù KANNADIG GWALARN a vo lakaat an holl dud-se d'en em anavezout etrezo, da c'houzout, da nebeuta, n'int ket o-unan. Setu amañ eul lizerig o tont eus Karanteg :*

*(da genderc'hel, p. 51)*

# KELEIER AR MIZ

## Froudennoù Marianna

Petra a soñfec'h eus eun den, a vankfe arc'hant da unan all, hag a nac'hfe paea anezañ, evit presta arc'hant damc'houde da eun trede ? Lavarout a rafec'h ez eo eul laer pe eun diskiant, pe an daou asamblez.

Ma ! Setu ar pezh he deus graet Marianna. Komprenit eun dra bennak ma c'hellit :

Roet he doa he sinadur evit paea 500 milion a luriou d'ar Stadou Unanet d'ar 15 a viz kerzu. Herriot, he c'henta ministr, a oa prest a-walc'h da baea. Met Kambr an Deputeed a lakaas harz. Dre 402 a vouezioù a-enep 187, e voe kaset Herriot da sutal. Setu unan all, Paol Boncour, anvet kenta ministr en e lec'h. Ha petra a ginnigas hemañ ? Presta 300 a luriou d'an Aotrich, ar pezh a voe digemeret dioustu gant ar Gambr, dre 352 a vouezioù a-enep 188 !

An Amerikaned o deus en em gannet a-du gant Bro-C'hall e-pad ar Brezel Bras, hag an Aotrichianed a-enep. Met Marianna a zo berr hec'h eñvor pa gar !

## An « daouzekvedenn da c'hortoz »

Pa n'emañ ket prest roll an dispignou hag ar gounidou evit ar bloaz da zont, emañ ar c'hiz e Bro-C'hall vota ar pezh an anver « eun daouzekvedenn da c'hortoz », da lavarout eo, eur roll bihan graet evit eur miz hepken. Setu ar pezh a zo bet graet e Paris evit miz genver 1933. An doare-se da ober a goust ker peurliesha. Met an Deputeed hag ar Senedourien o deus amzer, peogwir n'eo ket eus o yalc'h e teu an arc'hant.

## Ar re a bae hag ar re na baeont ket

E-touez ar broioù a vanke arc'hant d'ar Stadou Unanet, ar re-mañ o deus paeet : Bro-Saoz, Tchec'ho-Slovakia, an Itali. Ar re-mañ n'o deus ket paeet : Bro-C'hall, ar Veljik, ar Bologn.

Arabat kredi ez eus broioù onest ha broioù dizonest : pep unan he deus graet hervez ma kave d'ezi e oa he gounid.

## An Inizi Filipinas

An Inizi Filipinas, du-hont er Mor Habask, en tu gevret eus ar Chin, a zo bet kemeret digant ar Spagn er bloaz mil eiz kant triouec'h ha pevar-

ugent, gant ar Stadou Unanet. Adalek an amzer-se, ne ra tud ar vro-se nemet goulenn o frankiz, evit beva hervez o c'hoant evel ar poblou all. Setu m'eo bet roet ar frankiz-se d'ezo gant Kambr ha Sened ar Stadou Unanet. Ar prezidant a lakay harz, war a greder.

## Persia ha Bro-Saoz

E bro Bersia ez eus e-leiz a eien petrol. Ar Saozon o deus lakaet a bell 'zo o c'hraban warno, evel m'o deus lakaet o c'hraban war veur a dra all. Setu ma fell d'ar Bersed kaout ar petrol-se evito o-unan. Ar prosez a dle beza barnet e Jenev gant Kevredigez ar Broioù.

## Eun tammig dre holl

En Alamagn, nebeutoc'h a drouz er miz-mañ. — Er Stadou-Unanet, n'emañ ket torret c'hoaz al lezenn a-enep an evajou kreñv : mankout a rae pemp mouez evit se. — Er Sav-Heol, tabut adarre etre ar Chin ha bro Japan.

*(kendalc'h ar b. 50)*

Dre va breur em eus anavezet ho kelaouenn nevez *Kannadig Gwalarn*. Brao-meurbet em eus kavet anezi. Koumananti a ran evit eur bloaz....

Skigna ha diskouez a rin anezi ar muia ma c'hellin, hag emichañs em ho kavet eul lenner nevez bennak d'eoc'h a-raok Nedeleg.

Ra vezo eta karet ho Kannadig ker koant gant an holl Vreiziz hag anavezet e pep korn ar bed.

S. MERRET.

*An Dimezell Merret he deus graet gwelloc'h eget skriva : kavet he deus e gwirionez lennerien nevez. Ra vezo trugarekaet en ano Breiz.*

## Skeudennou devot e brezoneg, mar plij !

*Eul lenner eus an Aljeri a skriv d'imp :*

Ar veleien e Breiz a c'hell ober kalz evit mirout hor yez, ha n'eus evel prizioù katekiz da vare ar pask kenta nemet skeudennou, warno frazennou devot e galleg. Ha ne gav ket deoc'h e vefe aes a-walc'h gwerza seurt *skeudennou devot gant eur skrid brezoneg warno ?*


— E. B.

*D'hon arzourien yaouank a Vreiz da respont.*

*(da genderc'hel, p. 63)*



Roue Bro-Danmark aet d'ober eun dro e Londrez.




Brasa teatr ar bed-holl, lec'h ennañ da 6.200 den, nevez savet e New-York.



Cheron, ministr nevez ar Yalc'h e Paris (skeudennet gant Bray).



Roue Bro-Sued hag e gerent er gouel graet evit rei ar pris Nobel. — Cellon, Paris.



Mussolini o prezida eur gouel graet e Littoria, ar gêr nevez savet war eur dachenn e-lec'h ne oa nemet geuniou a-raok, hag e-lec'h 'ma varve an dud gant terzienn ar paludou. — Cellon, Paris.



Da heul eur gwall zarvoud c'hoarvezet e mengleuziou-glaou Mewequa, en Illinois (Stadou Unanet) 54 den a zo bet laz. — Cellon, Paris.



# KENDALC'H AN DUD A VOR

## Ar c'hendalc'h kenta

D'ar 27 ha d'an 28 a viz du 1932 e voe dalc'het e Kemper er skolaj Sant Erwan, kenta kendalc'h hon tud a vor.

Eus pep korn eus Breiz e oa diredet kannaded : eus Konk-Gall, Sant-Malo, Sant-Servan, Pempoul, Pleraneg, Landeda, Gwitalmeze, Molenez, Brest, Douarnenez, Treboul, Enez Sun, Lechiagad, Ar Gelveneg, Enez Tudi, Lotudi, Konk-Kerne, An Oriant, Gavr, Porz-Loeiz, Rianteg, Groe, An Intel, Kiberen, hag all.

Eno e oa ivez a bep seurt tud a vor : pesketaerien vihan, kabitened ha martoloded ar pesketaerez bras, rouederien, riblierien-aochou ha rederien-vor, sardinetaerien, tounetaerien, legestretaerien, trouc'herien-vezin, ouspenn paramanterien, kouraterien, perc'hennaed uzinou, marc'hadourien besked, hag all.

Evif ar wech kenta, tud a vor hor bro a oa bodet evit en em zifenn o-unan hag asamblez. E-lec'h labourat pep hini diouz e du, o deus en em unanet, evit lakaat erfin da dalvezout al lavarenn goz : « Unvaniez a ra Nerz ».

## Gouarnamant Paris a refuz kemer perz

Daou eus ministred Paris, hini ar Verdeadurez-Kenwerz hag hini al Labour, a oa bet pedet d'ar c'hendalc'h. Respontet o deus n'hellent ket dont, ha refuzet o deus zoken kas unan bennak en o lec'h.

Renerien ha Merourien an Enskrivadurez-Vor o deus respontet memes tra.

Ar C'hallaoued, hag a oa boas betek bremañ da welout ar Vretoned atao o senti hag o plega o glin dirazo, a gav trenk ar soubenn pa welont ar Vretoned o sevel o fonn !

Ma ! ar c'hendalc'h a zo bet graet hep ar re-se, hag ar gendalc'hidi o deus bet an enor hag ar blijadur da welout en o zouez daou eskob breizat : An Ao. Duparc, eskob Kemper, hag an Ao. Trehiou, eskob Gwened.

## Ar Vretoned a zo an niverusa war ar mor

N'hellomp ket displega kement tra a zo bet lavaret er c'hendalc'h. Ne lavarimp eta nebeut an traou pouezusa.

42.000 a besketaerien a zo Bretoned, tra n'eus nemet eun 30.000 bennak a C'hallaoued oc'h ober ar vicher-se.

23.000 a Vretoned a zo martoloded war al listri-kenwerz, e-kichen eun 40.000 bennak a C'hallaoued.

Hep konta 27.000 eus hor paotred war listri-brezel Bro-C'hall, e-kichen 32.000 a C'hallaoued.

Pa soñjer pegen bihan eo Breiz e-skoaz Bro-C'hall, e weler penaos ez eo hor bro a ro ar muia a vorerien. Martoloded Vreiz a vez kavet e pep lec'h : e Boulogn, e Diep, e Fekamp, e Rochel, e Bourdel, e Sant-Yann-Luz, en hanternoz an Afrik, ha lavaromp dioustu, war holl aochou ha war holl vorioù ar bed.

## An dilabour hag ar rivin

Etre 6.000 hag 8.000 eus hor martoloded a genwerz a zo dilabour.

Moruetaerien Sant-Malo, a zo, koulz lavaret, rivinet.

N'eus mui nemet 2.000 anezo, e-lec'h 5.000 a-raok ar brezel. A-boan ma c'hounezont etre daou vil ha pemp mil lur ar bloaz, ha ne gavont ken a labour e-pad ar goañv.

Konk-Gall, brudet evit e istr gwechall, a zo rivinet-krenn abaoe 1921.

War aochou an hanternoz, ar besketaerien n'int ken evit gounit ar bara.

Trouc'herien-vezin aochou Bro-Leon o deus poan o werza ar bezin. Ar bezin-se a dalv dreist-holl da ober ioda, hag an ioda graet er broioù estren a goust gwelloc'h-marc'had eget an hini graet gant bezin Breiz.

Ar re a zo o micher paka ligistri, etre Rosgo ha Konk-Leon, o deus kollet an hanter eus o gounid.

An holl a oar e pe stad truezus en em gav pesketaerien aochou Bro-Gerne, re Zouarnenez hag all, abalamour da rivin an uzinou konserv.

Pesketaerien aochou ar c'hreisteiz, re Konk-Kerne, Groe hag An Oriant, ar re a bak founed dreist-holl, n'eo ket gwelloc'h o stad kennebeut.

N'eus nemet war-dro Sant-Nazer hag Ar Groazig ma c'hell ar besketaerien c'hoaz gwerza aes a-walc'h o fesked.

## Hon tud a vor a zo dilezet gant gouarnamant Paris

Gouarnamant Paris a chom dizeblant ouz reuzeudigez hor moraerien. An arc'hant votet evit sikour ar verdeadurez a gouez e yalc'h ar c'hompagnuneziou bras, pe a vez implijet da wellaat porziou bras Bro-C'hall.

Ar c'hefiou-kredit savet evit ar vorerien n'int ket pinvidik a-walc'h ha ne deont ket mat en-dro. N'eus ket bet graet evit ar vorerien ar pez a zo bet graet evit ar c'hounideien-douar.

Ar gouarnamant erfin a daol evez ouz pep tra a-raok teurel evez ouz traou ha micherioù ar mor. Eur vro a vorerien evel Breiz a zo renet gant eur vro a « zouarerien » evel Bro-C'hall.

## Ar pez a zo da ober

Ar Vretoned ne c'hellont, evit traou ar mor evel evit an traou all, konta nemet warno o-unan. Setu amañ eta ar pez a zo d'ober :

1. En em unani bepred muioc'h, etre tud ar memes micher hag etre an holl vicherioù a vor.
  2. Ober bep bloaz eur c'hendalc'h eus martoloded Vreiz.
  3. Kaout atao eur c'homite pe strollad, ennañ kannaded eus an holl vicherioù a vor, evit labourat a-hed ar bloaz.
  4. Sevel bep bloaz eur pennad-studi diwar-benn stad ar vartoloded, ha displega da heul ar pez a zo da ober.
  5. Kas ar pennad-studi-se d'ar gouarnamant, d'an deputeed ha d'ar c'hazetennoù.
  6. Poueza war ar gouarnamant hag an deputeed evit ma vo graet lezennoù ha reolennoù a-du gant ar vartoloded.
- Chañs vat d'hor martoloded eta, ha ra vo bravoc'h c'hoaz o eil kendalc'h !

# - AR MIGNON -



— Eur gwenneg, aotrou, eur gwenneg nemetken, me ho ped ! Ma oufec'h pebez naon am eus, pebez riou am eus, ha penaos emañ goullo ha doanuis va c'halon !

An den a leñve, e zent o stlaka, ha gant e zaelou ez ae kuit ar peurest eus e nerz. Abaoe ar mintin, oc'h astenn e oa e vizied gwenn krenus, o pedi (o ! hep gwall fizians...) aluzen an dremenieren. Mes an ugentvet kantved n'eo ket largentezus : n'en deus ket amzer !

Daoust hag ez eo eun huñvre ? Setu eur pez en e zourn : eur mell hini : eiz real. O Doue, ne fell ket d'ezañ kredi... Sellout a ra adarre : gwir eo ! Gellout a raio, erfin, debri eun tamm !

Ha buan da brena eun tamm bara, da c'houlenn eur banne kafe. Leñva a ra war e vara, o tialana, o c'hoarzin dre e zaelou, evel eun den diskiant.

En e gichen, eur c'hi a zo deut d'azeza, gleb-teil, krenus, eur c'hi paour, hep mestr, hep ti, hep mignoned, hep goudor. Heñ ivez a asped en e yez an hini a zo o vont da ober e genta merenn, abaoe ken pell 'zo !

— O den ! sell ouzin : evelout ez oun. Ha me ivez am eus naon, me ivez am eus riou, me ivez va faour kalon ki a zo goullo ha trist... O te, a oar, siouaz ! petra eo ar baourentez, ro d'in eun tamm eus ar bara-se, en ano Doue !

## PELERINAJOU KENTA AR GRISTENIEN

Ar pelerinajoù kenta a voe graet war Bez Hor Salver. An ebestel, an diskibien, ar Werc'hez, ar maouezed santel, ha, da gredi eo, kalz eus tud Jeruzalem, a yae da bedi war ar Bez-chomet goullo war-lerc'h deiz ar Bignidigez d'an Neñv.

En trivet kantved hag er pevarvet dreist-holl, kristenien eus a bep bro, paotred ha merc'hed, a yae da bardona e kement lec'h a Balestina meneget en Aviel, adalek kraou Betleem betek ar Menez Kalvar.

E kêr Rom, war vogerioù ar C'hatakombou, e weler c'hoaz enskrivadurioù graet gant pardonerien eus amzerioù kenta ar Gristeniez : pedennoù, soñjezonou devot, hag all. Ar bardonerien, hervez ma kreder, a bede dirak imajoù ar Sent, livet war dammou gwer alaouret pe daolennou graet gant meinigoù a bep liou. Kavout a reer c'hoaz e-leiz eus an imajoù-se.

Pa greskas ar Gristeniez dre holl vroioù an Europ, e kreskas ivez niver ar pelerinajoù. An dud a yae peurliesha da bedi war bez eur Sant pe eur Merzer, pe en eul lec'h bennak ma veze miret e relegoù. Gwech ivez ez aent da enori eur skeudenn vuzudus eus ar Werc'hez.

Ar bardonerien, hag a oa peorien alies, a yeve diwar aluzennoù war o hent. A-wechou e kouezent klañv ; a-wechou e varvent zoken. Hogen en amzerioù-se, pa oa birvidikoc'h ar feiz eget en hon deizioù, sur e oant da gavout unan bennak da gaout truez outo. Ar manatioù a veze digor-bras d'ezo, hag eno e kavent boued ha lojeiz evit netra.

Ar baourentez a lak ar c'hrouadurioù da dostaat an eil d'egile. An den en deus komprenet — o ya ! komprenet en deus... Perak e sell outañ ar c'hi-se evel-se gant e faour kaez daoulagad bras ken trist ? O nag eur sell !

— Va faour ki, va faour mignon ki, sell : an tammig bara-se, n'em eus ken nemet an dra-se hizio ! Goude se, ret e vo d'in adarre krena dindan ar glao yen, e-pad pet devez, Doue a oar ! Nann, nann, ne c'hellan ket hen ranna ganit, ne c'hellan ket !

Hag e zaelou a ruih adarre. N'en deus mui nerz-kalon evit debri, bremañ, dirak ar sell-se, ken spontus gant e guñvelez trist. Eun dra bennak a lavar d'ezañ en e greiz n'eo ket mat debri dirak ar paour loen...

Dal ! Kemer an hanter, ha Doue d'hon diwallo !

Hag er straed yen, kerzout a ra, eun tammig daoublegetoc'h, eun tammig krenusoc'h, gant ar c'hi d'e heul... Mes e ene a zo skañvoc'h, e galon tommoc'h — rak e gouelec'h an engroez, kavet en deus eur mignon.

YANN H. L.

# DRE ar VRO



## Oc'h ober goap d'ar Vretoned adarre

N'eus ket a baourentez a-walc'h, emichañs, en hor porziou-mor hag e-touez hor martoloded. Setu gouarnamant Paris o paouez c'hoari eun dro fall adarre da borz Sant-Nazer: al listri bras a gase betek bremañ tud ha marc'hadourez ac'hano da Greisteiz ha da Greiz an Amerik a loc'ho hiviziken eus an Haor-Nevez!

Betek pegeit e vo Breiz evel-se kaset tamm-ha-tamm d'ar maro?

## Ar Finister a oar en em-zifenn

Kompagnunez an oto-kirri S.A.T.O.S., hag a zo renet gant estrenien, a felle d'ezi beza hec'h-unan-penn er Finister. Perc'henned an oto-kirri all a vije bet difennet outo kas ken ar veajourien.

Kuzul-meur Kemper en deus lakaet harz, a drugarez Doue. Piou a dle beza ar vistri e Breiz, ma n'eo ket ar Vretoned?

## « Breizadig »

« Breizadig » a zo eur gazetenn vihan graet a-ratoz evit ar vugale.

Ar pezh a vez kavet e-barz a zo merket war ar genta pajenn, dioustu goude an ano:

Eun tamm katekiz — eun tamm istor Breiz — eur werz pe eur son — eur c'honkour gant priziou — eun istor fentus — eur c'helou bennak, diouz m'en em gavo, hag all.

Ha kement-se evit 4 real hepken dre ar post, moulet dek gwech ar bloaz!

Netra d'ober nemet kas e ano, e chomaj ha 4 real d'an Ao. Clec'h, person « Coadout, par Guingamp, Côtes-du-Nord ».

Ar gazetennig, hag a zo brao-kenañ da welout, a zo skrivet e brezoneg an holl, en doare ma c'hell beza lennet e pep lec'h.

Eur gazetenn all o labourat evit Doue hag ar vro hag ar brezoneg karet!

## Ar vistri-skol lik hag ar brezoneg

Abaoe m'emañ hon eskibien a Vreiz a-du krenn gant yez ar vro, e weler muioc'h-mui ar vistri hag ar mestrezed o kentelia ar brezoneg er skoliou kristen.

Karantez ar brezoneg he deus en em silet ivez e

kalon ar vistri hag ar mestrezed lik e meur a gornad. Eun dra hag a ziskouez ez eus eun dra bennak cheñchet e Breiz.

War gazetenn ar vistri lik « Ar Skol Dieub », niverenn an 18 a viz kerzu diweza, e kaver eur pennad, sinet « Mestr-Skol-Bihan », diwar-benn « Kellennadurez Yez ar C'havell ». Perak, a lavar ar skrivagner, ne vez ket graet skol e Breiz e brezoneg, evel ma vez graet skol e yez ar vro e kalz broiou bihan all?

A-hend-all, setu eur c'helou hag a deu d'imp eus bro Dreger:

Adalek miz genver 1933 e vo moulet eur gazetenn nevez, anvet « Ar Falz », graet gant mistri-skol lik evit mad ar brezoneg er skoliou. An neb en deus c'hoant da lenn ar gazetenn-se, ra gaso priz ar c'houmanant (10 lur ar bloaz) d'ar merour, an Ao. Yann Sohier, mestr-skol e « Plourivo, Côtes-du-Nord. »

Ar pezh a blij d'imp dreist-holl en holl draou-se eo gwelout penaos ar Vretoned, e-lec'h « goulenn » evel a-raok, a grog evit mat da « ober o-unan ».

## « Ober »

Niverenn diweza « Ober » a dalv ar boan beza lennet gant an holl dud a gar Breiz hag ar brezoneg. Bez' e teu, a lavar, kalzik a dud er skol dre lizer izel, hogen ne deu ket a-walc'h er skol dre lizer uhel. Nag a vrezonegerien, koulskoude, o defe ezomm da zeski skriva o yez hervez ar reolennoù!

Taolit evez eo chenchet ar chomaj. Skriva hiviziken da: « OBER », R. Delaporte, Boest-Post 28, Roazon.

## Lenn a reomp

Eur gazetenn nevez, anvet « Chronique Bretonne », a zo bet savet gant Bretoned Paris, ar re a zo o chom en-dro d'ar gêr vras, diouz tu ar c'huz-heol. Daoust m'eo skrivet kazi holl e galleg, e kavomp en niverenn 2 daou bennad e brezoneg, hag e brezoneg c'houek-meurbet: « Al lennegezh henvrezonek », ha « D'ar vrezonegerien... ha d'ar re all ».

Buhez hir eta d'ar gazetenn-se, ha ra gresko enni lod ar brezoneg!

Moulet e vez eun niverenn bep miz. Priz ar c'houmanant-bloaz eo daou skoed. Skriva d'ar rener, 10, rue de la Glacière, La Garenne (C.C. 931-34, Paris).



## SKOL DRE LIZER

evit deski ar brezoneg

Skriva da:

**OBER**

R. Delaporte. Boest-Post 28, Roazon

An holl levriou brezonek

a vez kavet e:

**TI BREIZ**

dalc'het gant an dimezell Torcol

11, rue d'Algésiras, Brest

Kasit ho labouriou moulerez,  
kartennou, embannou, levriou, kazetennoù

da ober en

**Imprimerie Commerciale et Administrative**

17, rue d'Algésiras, Brest

Al labour gwella d'ar priziou izela

E gwerz e ti « Gwalarn »

**GOURS ELEMENTAIRE DE BRETON**

(dre ar post)..... 12 lur

**GRAMMAIRE BRETONNE**

(dre ar post)..... 3 lur (1 skoed)

**DICTIONNAIRE BRETON-FRANÇAIS**

(dre ar post)..... 22 lur



**Perak ez eo fall**

Breiz a zo unan eus ar broiou emañ enno ar radio (pe skingomzerez evit an dud a oar ar brezoneg) en e vantrusa stad.

A-hed an arvor e kement porz ez eus eun ardivink-skigna, pe zaou pe dri, diouz ret. Tost outo war vor, gant an hanter da nebeuta eus al listri e vez ardivinkou all. Hag an eil o respont egile, noz-deiz, e vezont o ragachi, o latenni hag o sklokal, didrouz, dreist dour ha douar. Pe-bez flabouz pa daper krog er selaouer !

« En eur bipial, en eur c'hrakat,  
En eur viaoual, 'n eur c'houtellat,  
'N eur ragailhat, 'n eur c'houirinat,  
En eur harzal, eur eur hudal,  
En eur yudal, en eur youc'hal... »

an holl loened a vez klevet o safari, a bell hag a dost, gant peb a vouez kreñv pe voan, skiltr pe vound, o terri d'imp hon diskouarn. Dudi bras a rank beza moarvat evit ar martolod gedour oc'h ober e zibab a-douez an holl c'harmou-se. Evit tud eveldomp, avat, eun tammig muzik pe c'hoaz eun tamm kelou diwar-benn ar bed, kaset en eur yez aes ha fraez, a vefe kalz gwelloc'h ganeomp. E gwir, dont a reer a-benn dre hir aked ha kalz ampartiz ha dapout etre barradou aroueziou Morse, eur bommig bennak a vuzik.

Piou hennez ? Klevet e vez a-wechou a-bell mouez eun den koz, raouliet, e tie beza gantañ lunedou bras ha baro hir, o tezrevell, trist ha dizesper, eur gaozeadenn (kollet ganti lost ha penn) a-berz Bureo etrevroadel al labour. A-wechou all e vez mouez eur piac'hig yaouank mistr ha melegañ, o konta d'imp pegen marc'had-mat e teu da veza an traou prenet en ti-mañ-ti. Bep an amzer eur violoñs o stourm ouz cholori al loened, ha setu...

Piou hennez ? Ma ! hennez, va faotr, eo moarvat ardivink Roazon. Eur paour kaez ardivink graet ar sakrifis anezañ gant ar P.T.T. evit ar Vretoned kaez. Ha ne vefe ket mat a-walc'h evidomp ? Klevet e vez e kêr Roazon a-bez hag eun tammig tro-dro ousspenn. Ma 'z eus cholori bras e lec'h all o herzel outañ da veza klevet, piou eo a zo kaoz ? N'eus den na netra da damall, neketa, nemet ar bed didruez ma vevomp ennañ, hag ivez hon diskouarn vlizidik.

**Kelou brao !**

Hogen arabat d'imp klemm. Gwall zister dra eo skignerez Roazon, gwir eo. Anzav a reer er bureviou eo re zister, zoken evit ar Vretoned a zo ac'hanomp. Emeur o sevel mennad eun ardivink bras, a vo savet a-ratoz kaer evidoc'h, paotred ho tiskouarn gizidik : eun ardivink a zoare, d'ezañ eun nerz dreist hag eur vouez ar foeltr, barrek da vouzara martoloded ar bed holl betek ar penn pella. Pep hini d'e dro !

**Thourie ?**

E pelec'h emañ da veza savet ? Amañ avat e sav tabut. Beza 'zo bet ano da genta eus Thourie e departamant *Ille-et-Vilaine*. Ar Frañsizien a gav d'ezo moarvat e vefe aesoc'h d'ezo lakaat evez ma chomfe ar skignerez tostoc'h da Vro-C'hall. Hogen meur a rebech a zo da ober da d-Thourie :

1. Ker-kenañ an douarou.
2. Diaes pourvezi nerz elektrik a-walc'h evit eur skignerez a 200 kilowat, a zo c'hoant da sevel.

3. Ret lakaat 30 pe 40 kilometrad orjalennou-kas evit staga ar skignerez ouz kambr ar mikrofon (*scnewvret* e brezoneg), a chomfe e Roazon.

4. Evidomp-ni Breiziz, bez' emañ Thourie er penn pella eus Breiz, hag aesoc'h e vefe selaou anezañ e Paris eget e Brest.

**Gwerledan**

Abalamour d'ar siou-se e teuas tud da soñjal en eul lec'h all. Ar re-mañ a gave d'ezo e oa reisoc'h lakaat e-kreiz Breiz eur skignerez savet evit ar Vretoned. Sellet o deus eta war-zu kreiz ar vro. Hag eno end-eeun o deus kavet ar brava lec'h da seveni o mennad : Gwerledan.

Eno emeur o paouez echui brasa fardell a zo bet biskoaz e Breiz, unan eus ar c'haera zoken er bed-holl. Diskarg ar fardell-se a ro an nerz d'eur vilin barrek da rei elektrisite da Vreiz a-bez. Ha setu :

Etre Loudieg ha Poñdi, e-kreiz ar vro, emañ Marc'had-mat e teu an elektrisite, kemeret er vilin end-eeun hep ezomm ebet d'he c'has da bell. Marc'had-mat-kenañ eo an douarou, anezo dreist-holl lanneier kazi didud. N'eo ket diaesoc'h lakaat orjalennou-kas ar mikrofon etre Roazon ha Gwerledan eget etre Roazon ha Thourie. Kreski a c'hellfec'h, forz pegement, nerz ar skignerez en amzer da zont dre ma vo kavet founnus an elektrisite tro war-dro. Kompagnunez Werledan he deus prometet rei an dekdevenn eus nerz elektrik ar vilin evit ar priz a goust d'ezi.


**Evit piou e vo graet ar radio ?**

Thourie pe Gwerledan ?  
N'eo ket d'eomp-ni da ober an dibab. Ha n'eo ket diganeomp-ni, selaouerien, e vo goulennet biken netra nemet arc'hant.


A-hend-all, evidomp-ni, Bretoned a Vreiz, n'eo ket aze emañ an dalc'h. Koutz e Thourie, e Gwerledan evel e Roazon, ar skignerez-se, paeet gant hon arc'hant, n'eo tamm ebet evidomp eo e vo savet.

Savet e vo gant gouarnamant Bro-C'hall evit gouarnamant Bro-C'hall. N'eo ket avat evitañ da selaou, hogen evitañ da rei d'imp da selaou pezh a gavo mat. Eun doare librentez, striz a-walc'h evit gwir, a chom gant ar c'hazetennou, d'ezo o faper, o zi, o arc'hant, o zud hag o stumm. Bez' e c'hell pep hini kavout eur gazetenn gouest da zisplega e venoziou. Amañ, avat, e vo pep tra, danvez, arc'hant ha tud, d'ar gouarnamant. Ne vo skignet gant hon ardivink nemet ar pezh a blijjo d'ezañ, hag ar pezh a blij da c'houarnamant Bro-C'hall n'eo ket atao ar pezh a blij d'ar Vretoned, neketa ? Rei a raio d'imp da selaou an doare trouz a ra berz gant ar C'hallaoued, muzik ar C'hallaoued, peziou-c'hoari ar C'hallaoued, hag ar « gaozeadenn a-berz bureo etrevroadel al labour », evidomp da gemer kalon. Mar domp fur a-walc'h, ha ma teu c'hoant d'ezo da ober plijadur d'imp, e c'hellimp klevout, da zeiz Nedeleg, pe da zeiz kenta ar bloaz, eur ganaouenn bennak e brezoneg, — e brezoneg, va faotr !!! A-hed ar bloaz, avat, ne vo netra nemet galleg diwar-benn traou gall. Hag ar brezoneg ? Netra, a lavaran d'it, netra : boued ar chas.

Evelato, bez' ez eus chas hag a oar difenn o boued pa vez d'ezo.  
Erwan TORRAVAL.



En Alamagn, eun treñ elektrik nevez a redas eus Berlin betek Hamburg e 142 munutenn. — Cellon, Paris.



Eur c'harr-nij dre lien nevez savet en Alamagn. — Cellon, Paris.



# PAJENN AR MERC'HED



1-a a viz genver 1933

Hizio oun bet o hada perlez dirak ar moc'h.

Evit ober enor d'am c'herent, a oa bet pedet da gemer « an te » en hon ti, em boa klasket ober evel ma reer e tiez an dud a zoare.

N'em boa lakaet toubier ebet war daol vras hor sal-debri: nann, dirak plas pep unan em boa lakaet eun doare rondellig vroudet, gant dantelez tro-war-dro.

Neuze, e-kichen ar rondellig, eur servietennig pleget kempenn.

War ar rondellig eun dasenn vihan hag eun asiedig evit ar c'houignou.

E-kichen, eul loa vihan, eur gontell vihan, hag eur fourchettez vihan.

Da echui tout, em boa lakaet bleuniou e-kreiz an daol.

Me a gave d'in e oa brao-kenañ, ha va c'hi Kiki a gave ivez.

Siouaz, va zud kaez !

Va zintin Anna a c'houlennas perak hor boa rannet hon toubier e tammou:

— Re a doullou a oa e-barz, moarvat, emezi, hag en amzeriou-mañ, gant ar *crise*, n'eo ket brao prena toubierou nevez !

Va zintin Eleonor a lavaras ne gare ket an te.

— Me zo deut da gaout va banne rouzig, emezi. Mirit ho te hag ho tizan evit ar re glañv.

Va zonton Fil a c'houlennas da be vare e vije digaset ar gwerennou, pa ne wele hini ebet war an daol. Ret e voe rei gwerennou hag eur banne rom d'an holl, gant eun tamm sukr evit ar merc'hed hag ar vugale.

Va zonton Paol a fellas d'ezañ gouzout perak e oa bet lakaet fourchetteziou:

— Daoust hag e vo kig da zebri ? emezañ.

(An holl a grogas gant o bizied er c'houignou. Foei !)

Va niz Loulig a skuilhas e dasad war an daol, ha va nizez Vovon a blegas he loa e daou.

Evit va c'henderv Biel, ne lavarinn ket petra a reas. Met eur servietenn n'eo ket eur vouchouer evelato !

Ne voe nemet Kiki a ouezas en em zerc'hel de-reat.

It da glask deski d'an dud beva goude se !

Mari PENN-AVEL.

## AN TI

### Ar botou ler

Alies e teuer d'ar gêr gant botou ler glebiet-holl. Evit o sec'hi, arabat o lakaat e-kichen an tan ! Lakait kazetennou koz pe eur bouchadig kerc'h enno. Sec'h e vezint ken pell, pleg ebet warno, ar pezh a c'hoarvez p'o lakaer da sec'hi e-kichen an tan.

### Al laou-dar

Bez' ez eus kalz laou-dar en tiez a-wechou, ha n'eo ket aes o lakaat er-maez. Esaeit lakaat e kornioù an ti avalou-douar teo. Grit eun toull enno evit ma c'hello al laou-dar mont e-barz, hag ez aint, rak karout a reont kalz an avalou-douar. Sellit ouz hoc'h avalou-douar pep mintin.

### Sardined hag all

Pa z it da brena eur voest sardined pe eur voest-konserv ben-nak, sellit piz ouz ar voest. Mar deo kroumm war-du an diavaez ar c'hosteziou a dlefe beza plat, na gemerit ket, rak neuze ar pezh a zo e-barz a zo brein.

### Traou broudet

N'hoc'h eus ket ezomm kas ar broudereziou livet da veza dilouzet e kêr. Lakait diou loaiañ vihan a eoul-terebantin (anvet *essence de térébenthine* e galleg) e-barz eur sailhad dour klouar, ha gwalc'hit ar broudereziou gant an dour-se.

## HOR YEC'HED

### Ar boan-benn


*A-wechou e paker poan-benn o chom en eur gambr gloz. Neuze n'eus nemet mont er-maez da aveli ho penn eur pennadig. Vad a ra lakaat dourn ijen-skourn war an tal. Eun dra hag a zo mat-tre eo frola tammou sitron war an tal. Ar boan-benn a ya kuit kazimant dioustu.*

### Ar boan-dent

*M'hoc'h eus poan-dent ha ma ne c'hellit ket mont dioustu da di an tenner-dent, kit da brena eur pakad alun digant an apotiker, ha lakait eur meudad war an dant brein. Ar boan a baseo eun tammig da nebeuta, ha ne vreino ket muioc'h ne vern penaos.*

# PAJENN AR VUGALE

## AN DAOU UREUR



Eur roue en doa daou vab. Pa voe deut war an oad, ne ouie ket pehini a vije roue war e lerc'h na pehini a lakaje ar bobl eürus.

Eun deiz e c'hallas anezo hag e lavaras d'ezo:

— Emaoc'h o vont da veaji dre ar vro penn-da-benn ha da weladenni ar bobl. Setu amañ servijerien evit mont ganeoc'h ha pourveziou evit ho peaj. Ne zeuit ket en-dro amañ ken n'ho pezo kaset da benn ho kefridi.

Hag an daou vreur ha kemer penn an hent gant o servijerien.

Ar breur hena, hag a oa truezek ha madelezes, a rannas e bourveziou etre an holl beorien ma tigeuzas ganto, kement ma voent dizale aet da hesk. Neuze hep gouzout kalz petra da ober e chomas e-barz eur c'hoad da ehana eur pennad.

Setu ma klevas a-greiz-holl eur vouez o lavarout:

— Piou eo an hini a zo deut da strafuilha peoc'h ar c'hoad ?

Hag an den yaouank da respont:

— Me eo, hag a zo skuiz-divi ha du gant an naon, dre m'em eus rannet va holl bourveziou etre peorien ar c'horn-douar-mañ. N'em eus ket graet implij anezo evidoun va-unan, hogen evit ar beorien, ar re marnaoniet, an estrenien.

Ha neuze ar vouez da respont:

— Kae betek ar roc'h vras a welez ahont ha kemer kement a gavi eno, hogen lez ar gwenan.

An den yaouank a yeas betek ar garreg. Kavout a reas eno kalz a vel eus ar gwella, ma kavas adarre nerz a-walc'h da genderc'hel gant e hent.

Ar breur yaouanka, nebeutoc'h a galon vat d'ezañ eget d'e vreur, a zalc'has an holl bourveziou en doa evitañ hag e servijerien. Met tamm-

ha-tamm e voent debret a-benn ma erruas er c'hoad ma oa bet e vreur en e raok.

Hag e klevas ar vouez o lavarout:

— Piou eo an hini a deu da strafuilha peoc'h ar c'hoad ?

Hag heñ da respont:

— Me eo, skuiz-divi ha du gant an naon dre m'eo aet da hesk va fourveziou. O dalc'het piz em boa koulskoude evidoun ha va servijerien hep rei netra da zen all ebet.

Ha neuze ar vouez ha kenderc'hel :

— Kae betek ar roc'h vras a welez ahont, ha kemer, n'eo ket ar mel, met ar gwenan yaouank.

Ar breur yaouanka a yeas betek ar garreg. Eno ne oa ken a vel, avat, hag ar gwenan ne dalvezent mui netra, en doare ma ne gavas ket an nerz, heñ hag e servijerien, da vont betek penn e hent.

Padal ar breur hena a deuas yac'h ha sart endro d'ar gêr: d'ezañ e teuas madou e dad, ha roue e voe war e lerc'h.

Hervez troidigez ABEOZEN.

## FENTIGELLOU

### Ar morian

Tatouig a deu d'ar gêr eus ar skol, e gajer kailharet holl gant al liou du.

— Mamm, emezañ, n'eo ket dre va faot eo. Em c'hichen, er skol, ez eus eur Morian du-du. E zaouarn eo a zo aet war va c'haier.

### Divinadell

Ha n'hoc'h eus gwelët morse unan o riñsa daou graou en eur c'hrogad ?

— Eo, eur c'hoz mic'hieg o sec'ha e fri gant e vizied.

# A-ZEHOU HAG A-GLEIZ

## Bro al laeron

Daoust hag an ano-se a vo ret ober eus Bro-Saoz ?

Ar c'hazetennou saoznek n'eus meneg warno bep mintin nemet eus laeroñsiou a bep seurt : en tiez, er staliou, er c'hèriou ha war ar maez, e-pad an noz hag e-pad an deiz.

Tud dilabour eo o deus kavet an doare-se da veva diwar goust o c'henvroiz.

Ar re a ruilh e gweturioù-dre-dan eo o deus dreist-holl da ziwall.

Setu amañ unan eus troioù al laeron :

Emaoc'h o vont gant eur wetur-dre-dan, pa welit eur vaouez paour o heja he diouvec'h d'eoc'h e-kichen eur wetur friket pe eilpenmet war bord an hent. Chom a rit a-sav evit he sikour. Raktal eus a-dreñv ar wetur, pe eus a-dreñv eur c'hleuz, e tifoup daou pe dri hailhon, revolverioù ganto, hag a sailh warnoc'h d'ho laerez pe zoken d'ho laza.

Abalamour da se, an darn vuia eus ar vlenierien otoioù a dremen buan pa welont n'eus forz petra evel-se war an hent.

## Ar peroked en tribunal

E Bro-Saoz n'eus ket ar gwir da werza gwin ha likeurioù evel ma karer, na d'an eur ma karer.

Setu ma voe kaset dirak an tribunal en deiz all eun den a oa tamallet d'ezañ beza gwerzet gwin-ardant en e di.

Ar bolised, hag a oa kuzet a-dreñv eur voger, a lavare o doa klevet traou evel-hen :

— Serrit an nor. Diwallit rak ar bolised.

— Me am eus daou skoed. Ro d'in eur voutailh, Fañch. (Fañch a oa ano an den tamallet).

Goude se ar bolised o doa klevet trouz peziou-mouneiz war eun daol, hag an trouz graet gant boutailhou stoket an eil ouz eben.

Petra reas an den tamallet nemet kas gantañ e beroked d'an tribunal. Eno, dirak ar varnerien, an alvokaded hag an holl dud, al labous a adlavaras kement a oa bet klevet gant ar bolised, hag a reas trouz boutailhou ha peziou-mouneiz. Ober a reas ouspenn : trouz eur gontell o skei war eur plad, trouz eur benveg da c'houeza pneu eur marc'h-houarn, trouz eun nor o tigeri, hag all.

Tra ma edo prezidant an tribunal o kaozeal e lavaras :

— Ata, genaoueg !  
Lezet e voe an den da vont kuit hep kastiz.

## Diwallit ouz ar spern-du

An holl a oar ez eo poanius-tre tapout eun draen spern-du. Dañjerus bras eo ivez, ha kalz tud a varv e berr amzer diwar goust eun taol draen spern-du. Tud a zo hag a lavar e lakafe ar paged ar c'houiled a dapont a-ispilh ouz eun draen spern-du evit o debri aesoc'h. Hag ar c'houiled brein eo a vefe ar poazon. N'ouzon ket ha gwir eo pe n'eo ket, mes drein ar spern-du n'eo ket brao c'hoari ganto. Diwallit eta pa 'z eot da irina.

Drein ar speziad, avat, er c'hontrol, a vefe mat da doulla ar goriou, dizañjer. Tud 'zo hag a lavar an dra-se, da vihana.

## Sklerijenn ar preñv-lugernus

Ne dalv ket ar boan d'imp lavarout, emichiañs, petra eo ar preñved-lugernus. Anavezet int gant an holl, ha pep unan ac'hanoc'h en deus gwelet anezo o c'houlaoui a-hed an hentou e-pad an nozveziou-hañv.

Eun Amerikan en deus kontet eur pennad 'zo pegement a sklerijenn a roe eur preñv-lugernus, hag en deus kavet an niver-mañ : 0,0144 lumen (evel-se eo e konter ar sklerijenn) dre santimetr-karrez. Eul lamp elektrik boutin a ro 500 lumen dre santimetr-karrez.

Evel ma welit, n'eo ket bras ar sklerijenn a daol eur seurt preñv. Met paotred an Amerik a gar konta, hag hemañ en deus kavet kement-mañ : ma vefe goloet eur c'helc'h a 2 m. ledander gant preñved-lugernus, e rafe se eur goulou o talvezout 29 boujenn, eun tammig muioc'h eget al lamp elektrik bihana a anavezit.

Grit an amprou m'hoc'h eus amzer da goll o klask preñved.



**1.000.000 !**

**EUR MILION**

**A DUD**

**A GOMZ BREZONEG !**

**HOGEN**

**PET A OAR**

**LENN BREZONEG ?**

**EVIT DESKI D'EZO**

**LAKAIT ANEZO**

**DA LENN « KANNADIG GWALARN »**

<b>Daou romant bihan hag a raio d'eoc'h plijadur :</b>	
<b>AR C'HOAR HENA</b> .....	<b>4 lur</b>
<b>AL LAER AVEL</b> .....	<b>4 lur</b>
<b>o-daou gant Roparz Hemon</b>	
<b>(e gwerz e ti Gwalarn)</b>	

# KONKOUR ar VUGALE

(kendalc'h ar b. 51)

## Diwar-benn « Gwalarn »

Eus an Itali e skriver d'imp kement-mañ :

Emaouñ oc'h echui lenn niverenn diweza *Gwalarn*, hag ar galv a rit enni evit ar *C'hannadig*.

Daoust ma 'z eo yalc'h eur studier plat a-walc'h e kasan d'eoc'h eur c'houmanant...

...Ra gresko eta ar *C'hannadig*, ha ma rank beza ar bloaz 1933 bloaz stourm ar *C'hannadig*, ra vezo gounezet ar stourm-se.

Ra gresko ivez *Gwalarn* e-unan ! Rak bez' ez eus c'hoaz e Breiz re a dud yaouank ha n'int ket « dihunet » abalamour ma ne anavezont ket ar benveg dispar-se ; kaout a rafent ennañ ar gwir « hent war-zu Breiz », evel m'em eus e gavet va-unan.

Savet ez-vihan e galleg, abred' oun bet troet ouz an traou breizek, ar yez, an istor. Met ar pezh a gaven e-giz lennegezh, vrezonek ne oa ket evit va hoala, — Pebez c'houez ar c'hoz war lennegezh Vreiz a-raok *Gwalarn* !

En diwez eta em eus anavezet *Gwalarn*. Ennañ em eus kavet dremm eur Vreiz nevez ha beo. Tamm-ha-tamm, dre brederia war ho menozioù, oun bet gounezet d'ezañ. Ha labouret em eus neuze da zeski gwelloc'h ar yez.

A. P.

*Kloerdi Gall, Roma.*

## Aliou eur moraer

Da echui gant ar « Voest-Liziri »-mañ, e roomp lost en e bez unan eus al liziri gwella a zo digouezet ganimp biskoaz :

Bourz, ar 16 kerzu 1932

N'oun nemetken eur moraer war eul lestr eus ar « P.T.T. », harluet atao evel an 60 a Vreiziz all war 70 den eus ar bourz, en Haor-Nevez, porz-stag ! ! ! pa vez echu al labour. Eno e pourmenan va glac'har, va melkoni, en eur welout ar vuhez nerzus eus an holl vicherioù, hag en eur soñjal dreist-holl e peseurt tristedigezh iskis e chom Breiz e pep domani eus al labour.

Daoust hag ez eus nemetken lann ha drein, douar krin e Breiz, evel ma lavar kazi holl an dud ha pezh a ro da gredi al levriou boutin ?


Daoust hag ar Vretoned n'int ket gouest da ober eun dra bennek hep ar sklerijenn eus Bro-C'hall ?

Nann, ne gredan ket ar c'helaouennou, al levriou-se, boutin. Nann, ne vin ket gounezet gant ar gredenn-se hizio, abalamour m'em eus lennet levriou gouiziegezh diwar-benn douar Breiz hag ar bobl vreizat. Pep den glan eus ar bobl-se, dispar, a zo labourus betek ar penn, karantezus, ha mar deus bremañ eun niver bennek o deus dislivet ar ouenn, n'int ket an niver brasa. Met poent eo koulskoude dihuna ! ha ret eo mont bepred pelloc'h war an hent a zo dirazomp...

Evit deski d'eoc'h emañ va c'halon gant pep hini a skiant-val, a skiant-prenet, eus an holl Vretoned pe memes eus a lec'h all, a zifenn start ar yez, em eus arnodet skriva d'eoc'h e brezoneg. N'ouzon ket kalz ken e gomz, hag e skriva buan nebeutoc'h c'hoaz, pa 'z eo gwir n'em boa biskoaz e zesket. Betek unnek vloaz, ken buan ha ma oan e-maez eus ar skol, ar brezoneg a oa neuze va yez. Met da c'houde, deuet da chom e Brest, e-mesk tud c'hallekaet pe kazi, evit kaout dishualded gant va skolaer ha va c'heñved ivez, em eus kollet anezañ eun tammig muioc'h bemdez. Met bremañ, penaos gouzout mat e lenn hag e skriva, keit hag e vin war eul lestr, hizio tost pe bell eus ar vro, bepred tu pe du, harluet ? Penaos beza evel-se en eur stagell kendalc'het-mat gant va skol, evit kaouñ atao ar youl, an nerz-youl da vont a-raok gant kazi ar mousc'hoarz, betek penn ? Koulskoude e karfen ivez hada blaz ar brezoneg en-dro d'in.

Mar goufen en deus gallet al lizer-mañ beza degemeret mat ganeoc'h, daoust d'an dro roet d'ezañ ha d'ar faziou, neuze em befe tizet va c'henta pal.

J. M.



Skrivit da heul ano brezonek an traou a welit war ar skeudenn :

- 1 .....
- 2 .....
- 3 .....
- 4 .....
- 5 .....
- 6 .....
- 7 .....
- 8 .....
- 9 .....

Neuze skrivit :

- Hoc'h ano .....
- Hoc'h oad .....
- Ho chomaj .....

Neuze distagit an tamm paper-mañ ha kasit anezañ, a-raok ar c'henta a viz c'houevrer 1933, da : Rener KANNADIG GWALARN, Boite Postale 75, Brest.

(Na ankounac'hait ket lakaat eun timbr dek gwenneg war ho lizer).

10 poent a vo roet evit pep ger skrivet difazi, ar pezh a ra 90 poent, ha 10 poent ouspenn evit ar skritur hag an doare ma vo kempennet al lizer, ar pezh a ra 100 poent.

Setu amañ ar prizioù : Priz kenta : DEK LUR

Eil priz : UGENT REAL

Trede priz : Eul levr kaer.

D'al labour eta, bugale. Roll ar prizioù a vo merket war niverenn KANNADIG GWALARN miz c'houevrer.

# G WALARN

Kelaouenn vizek

e brezoneg uhel

Rener: Roparz Hemon

Priz: 30 lur ar bloaz (broiou estren: 35 lur)

Chomlec'h:

Journal de Gwalarn, Boite Postale 75, BREST

(C.G. 96.38, Rennes)

# KANNADIG GWALARN

Kazetenn vizek

e brezoneg an holl


Rener: Roparz Hemon

Priz: 10 lur ar bloaz (broiou estren: 15 lur)

Adres:

Journal de Gwalarn, Boite Postale 75, BREST

(C.G. 96.38, Rennes)



Da veza prest hep dale, unan eus ar brava levriou moulet biskoaz e brezoneg, leun a skeudennou kaer-dreist:

## EUR BREIZAD ER C'HANADA

Ne vo moulet nemet 300 niverenn. Prenit ho niverenn dioustu e ti Gwalarn. Kaset e vo d'eo'h kerkent ha ma vo prest.

Prix: 15 lur (da veza paet en a-raok).


NIV. 5 — C'HOUEVRER 1933



PRIZ : DEK GWENNEG

# KANNADIG GWALARN

Eun Niverenn bep Miz — Ar Pemzek eus ar Miz



A-raok ar votadeg vras e Dublin — Cellon, Paris.



## TAOLENN

KELEIER AR MIZ



Kontadenn  
LAOUIC



EUR BREIZAD  
ER C'HANADA

AR GAVERIEN-DOUR



DRE AR VRO  
PAJENN AR VUGALE  
A-ZEHOU HAC A-GLEIZ

FENTIGELLOU  
HOR BOEST-LIZIRI



# HOR BOEST-LIZIRI

Tamm-ha-tamm, tamm-ha-tamm, emañ niver lenne-rien ha koumananterien KANNADIG GWALARN o kreski. Hizio e Bro-Dreger, warc'hoaz e Bro-Gerne, en deiz war-lerc'h e Breiz-Uhel, gwelout a reomp o tont war-zû ennomp tud a bep seurt hag a bep ead.

Ret d'imp hen anzav : kreski a ra niver hol lenne-rien buanoc'h e-touez an dud desket eget e-touez an dud dizesk, buanoc'h e-touez an dud pinvidik eget e-touez an dud paour, buanoc'h e-touez ar vourc'hizien eget e-touez ar gouerien.

N'eo ket diaes kompren petra a zo kaoz a gement-se ; an dud uhel a gar hag a oar lenn ar brezoneg ; an dud izel ne ouzont ket ha ne garont ket lenn ar brezoneg.

Setu perak, ma 'z eus eun dra ret da ober e Breiz, ez eo deski d'an holl lenn o yez.

Penaos hen ober, setu ar goulenn a reomp d'hol lenne-rien.

Da genta holl, avat, lavaromp berr-ha-berr ar pezh a vez graet betek-hen :

1. Bez' ez eus ar skoliou, a vez desket enno lenn ar brezoneg d'ar vugale. Eul labour santel a reont, ha GWALARN a zo prest atao d'o sikour gwella ma c'hall.

2. Bez' ez eus ar c'hazetennou : Gwalarn, Kannadig Gwalarn, Feiz ha Breiz, Breiz, Ar Vuhez Kristen, Dihunamb, Breizadig, hag ar C'hannadigou moulet er parrezioù.

3. Bez' ez eus « OBER », hag e skoliou dre lizer, dreist-holl e skol dre lizer nevez, a zo meneg anezi amañ war ar bajenn « Dre ar Vro ». Eur skol all heñvel a zo savet gant « Dihunamb ».

4. Bez' ez eus, amañ hag ahont, tud, o-unan-penn peurliesia, hag a glask lakaat an dud da lenn brezoneg.

Lavaromp dioustu : labour vat ebet ne vo graet, ma n'eus ket eul liamm etre ar pevar rummad-se, ma ne vez ket anavezet gant an eil ar pezh a ra egile.

Evit se end-eeun hon eus savet KANNADIG GWALARN. Amañ e vo selaouet ali pep unan, meneget labour pep unan, ne vern pegen dister e vefe. Bez' e tle KANNADIG GWALARN beza al « liamm » etre an holl Vretoned, ouspenn beza an hini gaera hag an hini blijadurusa da lenn eus ar c'hazetennou breizek. Stourm ha stourm a raimp diehan evit tizout ar pal-se.

## Deski lenn dre ar c'han

E broiou 'zo, ar c'han a zo bet implijet kalz da skoazella ar yez. Dre zeski kana e brezoneg e tesker ivez d'an dud lenn brezoneg. Netra gwelloc'h eget al levrioù hag ar sonioù moulet war baperennou distag a werzer er pardonioù.

J. L.

## Skritelloù e brezoneg

*Eus an hevelep lizer, e tennomp ar pennad all-mañ :*

Bez' ez eus kazetennou e brezoneg, bez' ez eus levrioù ivez. Met, ne vezont ket lennet, na gwelet zoken gant an holl. Lakaomp e vefe skrivet e brezoneg an holl skritelloù a zo war ar mogerioù, skrivet e brezoneg ivez anioù ar stalioù, daoust ha ne vefe ket a-walc'h da zeski d'an holl dud lenn o yez ? N'eo ket alies e we'er traou merket e brezoneg war ar mein-bez er vered. Ha zoken en ilizoù, n'eus ket a-walc'h a vrezoneg.

En deiz all, o tremen dre eur barrez ma vez graet ar c'hatekiz enni e brezoneg hag e galleg, setu ar pezh a welis :

Stag ouz eur piler, en iliz, e oa merket eurioù ar c'hatekiz. Eurioù ar c'hatekiz gallek a oa skrivet e galleg, ar pezh a zo mat marteze. Met ar c'hatekiz gallek a oa merket da genta, hag ar c'hatekiz brezoneg da heul. Daoust ha ne dle ket koulskoude ar c'hatekiz brezonek tremen a-raok, hag ar c'hatekiz gallek da c'houde. Ma 'z eus bugale gaez ha na ouzont ket yez o bro, gwaz a se d'ezo. Bez' e rankont avat beza lakaet er renk izela, er renk mezus. Hag ar vugale a zeski o c'hatekiz e brezoneg a rank beza lakaet er renk uhela, er renk a enor.

J. L.

## Courc'hemennoù

Spi am eus da gavout adarre eun nebeut koumananterien nevez da GANNADIG GWALARN. Eur blijadur eo evidoun skoa zia ar gwella ma c'hellan ho labour kaer.

M. L.

Bravoc'h-brava e kavan ho kazetennig. Kendalc'hit, kendalc'hit, da vont war-raok.

E. D.

Brao e kavan ar C'HANNADIG, ha mall am eus d'en em gaout d'ar pemzek eus ar miz. Pell emañ ar c'helaouennou all war e lerc'h.

G. J.

Ar C'HANNADIG a zo plijus-meurbet ha gwall yilzin e vo al lenne-rien n'hen kavint ket d'o soñj.

Y. R.

## Ar brezoneg er skoliou

*Eul leanez a Vro-Dreger a skriv d'imp :*


Ho trugarekaat a ran a greiz kalon evit al levrioù hoc'h eus kaset amañ. O ingalet em eus dioustu d'hor skoliadezed ha d'hor plached yaouank.

Betek-hen omp deut a-benn da virout ar brezoneg er c'hatekiz...

Klask a ran ivez, bep gwech ma 'z eus gouel, lakaat c'hoari brezoneg. N'eo ket aes hen ober atao, avat, rak tenn eo kavout peziou-c'hoari, monologou, hag all, e brezoneg, ha gwall skañv eo hor yalc'h er skoliou...

Emaomp e soñj ober eun eil gouel (an hini diweza eus ar bloavezh skol) da vare Pask... Daoust hag e teurvezo ganeoc'h hor skoazella adarre ?

# KELEIER AR MIZ



Ar c'habined Hitler (hemañ azezet e kreiz) — Cellon, Paris.

## Ar bloavezh santel

En eul lizer eus ar 6 a viz genver, Hon Tad Santei ar Pab a c'houlenn digant an holl gristenien kemer perz el lidou bras a vo graet e Rom er bloaz-mañ da geñver naontekvet kantved Pasion Hor Salver.

## En Iwerzon

Da heul ar votadeg vras a zo bet graet er vro-se da envel eun « Dail » pe Gambr an Deputeed nevez, aet eo an trec'h gant De Valera. 77 depute a-du gantañ a zo bet anvet war 153, hag e-touez ar re n'int ket krenn eus e du, bez' ez eus 9 hag a voto, sur a walc'h evitañ. Petra emañ De Valera o vont da ober bremañ ? War a greder, klask a raio unani ar vro da vat (soñj hoc'h eus emañ c'hoaz eur rann eus Iwerzon, bro Ulad, e dalc'h ar Saozon), hag adaoza an emgleo etre Iwerzon ha Bro-Saoz, en doare da rei muioc'h a frankiz d'e vro.

## E Bro-C'hall

Atao kudenn ar Yalc'h. Penaos stanka an toull peogwir den ebet ne fell d'ezañ paea. Klask a reer digreski pae mevelien ar gouarnamant, hag e lava ront : nann ! Klask a reer lakaat kontribusionou nevez, ha kreski ar c'hontribusionou koz, hag an dud a lavar : nann ! Minister Paol Boncour a zo kouezet war-lerc'h minister Herriot. Da fin ar miz, ar prezidant en doa karget Daladier da sevel ar minister nevez.

## En Alamagn

Hitler a zo bet anvet da Gañseller ! Setu aze ar c'helou bras a lakaas an Alamagn a-bez hag ar bed-holl da dridal d'an 30 a viz genver, pas atao avat gant al levnezh. Piou eo an Hitler-se ? Ganet eo en Aotrich, 43 bloaz 'zo. Bez' e voe micherour en e yaouankiz. Eun dek vloaz 'zo pe war-dro, ez eas e Bavaria. Eno ez eas e-barz eur strollad politik bihan, anvet strollad an nasionalisted-sosialisted. Buan e teuas da veza penn ar strollad-se, hag a greskas en eun doare souezus, eus eur c'hant bennak a izili betek seiz milion. E vrud a zeuas da Hitler dreist-holl abalamour d'an doare brao ma oar kaozeal pa vez bodadegou politik. Ma ! setu bremañ Hitler, goude beza bet e prizon, unan eus mistri an Alamagn.


## Ar Chin hag ar Japan

Ar brezel, — rak eur gwir vrezel eo, — a bad atao etre ar Chin hag ar Japan. Japaniz n'eo ket bet a-walc'h d'ezo kemer Mandchouria, ret eo d'ezo bremañ mont pelloc'h, betek e-kreiz ar Chin, er rannvro anvet Jehol, tost a-walc'h da Bekin.


Broiou an Europ, war a lavar, a garfe herzel. Met ne c'hellont ober netra a-enep bro Japan, a zo bremañ unan eus kenta broiou ar bed, dre niver an dud (90 milion) kenkoulz ha dre c'halloud an armou.



*Ar minister Daladier, e Paris — Cellon, Paris.*



*Trouz a zo bet e Barselona gant an anarchisted. Setu amañ soudarded war c'hed dirak eur c'hazarn. — Cellon, Paris.*




*En Alamagn, ar Prezidant Hindenburg, ar Marechal Mackensen, an Ao. von Neurath, an Ao. von Papen, hag ar C'hronprinz, o selaou eur brezegenn graet gant an Ao. von Schleicher. — Cellon, Paris.*



*E Bulgaria, eun ofis kanet en iliz-veur Sofia, da geñver ganedigez eur verc'h d'ar roue Boris. — Cellon, Paris.*





*Maskl-koroll  
(koad kizellet gant Indianed  
gwalarn Amerika).*

## EUR BREIZAD er C'HANADA

Hep dale pell bremañ e teuo er-maez eus ar wask eul levr, seurt n'eus ket bet kalz e brezoneg betek-hen : eun dastumad lizerou skrivet gant unan eus hor c'henvroiz harluet er C'hanada, hag o komz eus doareou ar vro-se hag ar vuhez a rener enni.

Setu amañ eun nebeut linennou tennet eus an « Ali d'al lenner » :


« E-pad an 19-vet hag e penn an 20-vet kantved, kalz a Vrezoned a zo aet da ober o annez da vat er broiou tremor, Amerika, Afrika, Okeania. Stankoc'h c'hoaz eo ar Vrezoned a zo bet galvet dre zleadou o c'harg da ober chomadou hir er broiou-se evel misionerien, medisined pe ofiserien a vor. Hini ebet anezo avat n'en deus lezet, en eul levr



*Indianed eus Stêr ar C'hallaoued  
(skeudenn tennet eus « Eur Breizad er C'hanada »)*

skrivet e brezoneg reiz, danevell e weladennoù, e zeskadennou hag e skiantprenadennoù. Setu perak em eus goulennet digant an Ao. Fransez Vallee ende-vout ar valedez da drei e brezoneg pënnadou eus al lizerou kaset d'in e-pad ar bloavezioù 1921-1923 gant eur Breiz-Uhelad aet ez vihan da chom er C'hanada. Eun den speredek ha desket e oa an Ao. F.L. T. Donroe, hag, ouspenn, eur Breizad eus ar gwella, leun a garantez ouz e vammvro Vreiz hag ouz ar yez anezi, ar brezoneg. Meur a gentel a zo da denna eus e lizerou evit ar re a gar prederia war ar pezh a lennont. Dont a ra gantañ a-zivout ar C'hanada traou a ve aner o c'hask el levriou skrivet gant ar veajourien eus Europa n'o deus graet nemet tremen dre an Dominion, traou ha na gar ket Kanadiz o-unan komz anezo ha diskulia d'an estren. Troidigez an Ao. Vallee a zo eur prenestr ouspenn digoret d'ar vrezonegerien war ar bed... »

Al levr a vo moulet war baper lufur ha kaer, leun a skeudennoù e-giz ar re a weler amañ. Ne vo embannet nemet 300 niverenn. Neb en deus c'hoant d'e gaout a dle rakprena dioustu. Priz : 15 lur (da veza kaset da GWALARN en a-raok).



*Ran hag Ebn  
(koad kizellet gant Indianed  
gwalarn Amerika).*



*Stêr Vontreal  
(skeudenn tennet eus « Eur Breizad er C'hanada »)*



# DRE ar VRO

## Bodadeg al labourerien-douar

D'an 29 a viz genver ez eus bet e Kemper bodadeg vras labourerien-douar departamant Penn-ar-Bed, savet gant Unvaniez ar Sindikajou evit klask lakaat gouarnamant Paris da selaou klemmou ar gouerien vretien.

Ugent mil a wazed, koz ha yaouank, a ziredas mintin abred eus pevar c'horn an departamant. Pep parrez he doa kaset he strollad gant eur skritell da verka eus pelec'h e oa deut. Er c'hoc'hu eo e voe graet ar vodadeg.

Prezegennou an Aotrounez Guebriant, Belbeoc'h ha Leroy Ladurie a voe selaouet gant evez bras, ha da heul e voe votet « Urz an Deiz », da zisplega perak e oa deut al labourerien-douar e Kemper, ha petra a c'houlennet digant ar gouarnamant.

Eur brosesion vras a voe graet da c'houde dre ruiou kêr.

Ra gendalc'ho hol labourerien-douar ! Ret eo garmi uhel evit beza selaouet. Ar Vretoned o deus pleget o c'hein re alies en amzer dremenet. D'ezo da sevel o fenn hag o mouez ar muia hag an alies a ma c'hellont bremañ !

## Niverenn Gwalarn miz c'houevrer

E-touez an dud ouziek a ra enor da Vreiz e rankomp menegi er renk kenta an Ao. Abeozen. Seul vrasoc'h enor a dle beza rentet d'ezañ ma skriv e labouriou e brezoneg, e-lec'h ober evel re all, e galleg. E vrud a chomo da viken e-touez ar Vretoned, pa vo ankounac'haet da vat brud ar re all.

Abeozen, en niverenn-mañ eus « Gwalarn » a ro d'imp « Yezadur Berr ar C'hembraeg », yez Bretoned Breiz-Veur, yez hor c'hendirvi tra-mor. Betek-hen, neb a felle d'ezañ deski brezoneg Breiz-Veur a ranke prena levriou savet e saozneg, levriou fetis hag aozet digempenn peurlies. Pebez kemm gant al levrig-mañ, ken sklaer ha ken plijus d'al lagad. Mar-deo heuliet, evel ma tle beza, gant eul levr, ennañ skridou kembraek e-keñver skridou brezonek, n'hor bezo ezomm ken da c'houzout ar saozneg evit deski ar yez-se, ken heñvel ouz hon hini, ha ken talvoudus d'ar re a fell d'ezo anaout mat ar brezoneg.

(Menegomp ez eus dija eul levrig priziüs-meurbet, « Geriou Kembraek ha Brezonek » an Ao. Vallée).

An niverenn-mañ eus « Gwalarn » a zo diou wech tevoc'h eget an niverennou ordinal. Eur prof kaer eo

hon eus graet d'hol lennerien, rak n'hon eus bet netra digant den evit moula an niverenn-se, ha ker en deus koustet d'imp.

## Brezoneg ar Vugale

An holl a anavez bremañ petra eo « Brezoneg ar Vugale », an oberenn savet gant « Gwalarn » evit rei levriou brezonek d'ar vugale. Ouspenn 15.000 a levriou bras ha bihan a zo bet roet evel-se e-pad ar pevar bloavezh tremenet, hag o deus digaset levnez d'ar vugale e pep lec'h.

Betek-hen e veze moulet taolenn « Brezoneg ar Vugale » war « Gwalarn ». Hiviziken e vo moulet war hor C'hannadig.

Setu amañ ar gont eta abaoe ar 15 a viz du 1932 :  
Levriou kaset : Enez Sun : 30 l. — Poullan : 37 l. 50. — Plougernevel : 77 l. 50. — Plouneve-Kintin : 117 l. 50 — Ave (Beljik) : 26 l. — en holl : 288 l. 50.

Profou : an Ao. Badoual : 10 l. — An Ao. Renan : 5 l. — An Ao. Ar Menn : 5 l. — An It. Ferrer : 25 l. — Dom Du Chauchix : 20 l. — An Dim. Chevillotte : 50 l. — An It. Cardona : 15 l. — An Ao. Abeozen : 5 l. — An Ao. Bricler : 10 l. — An Ao. Gueguen : 48 l. — An Ao. Ezel : 20 l. — en holl : 213 l.

Chom a rae er c'hef, d'an 31 a viz genver : 375 l. 80.

## Profou evit ar C'hannadig

Keit ha n'en devo ket hor C'hannadig ar mil koumananter en deus goulennet, poan en devo o vev. Setu perak n'heller ket ober prof kaeroc'h d'ezañ eget kavout evitañ eur c'houmananter nevez. Piou n'en deus ket, e-touez e anaoudegeziou, unan bennak hag a lennfe KANNADIG GWALARN gant plijadur, ma vefe goulennet gantañ ?

O c'hortoz, bennoz Doue d'ar re a gas arc'hant d'ar C'hannadig, evit sikour anezañ da greski ha da ober vad.

Setu amañ ar profou hon eus bet adalek ar 15 a viz du :

Mona Sohier : 10 l. — An Ao. Badoual : 10 l.

## Istor Breiz

Setu peurlouet eul levrig a oa ezomm anezañ pell 'zo : « Istor Breiz » an Ao. Poisson, lakaet e brezoneg gant Gournadec'h.

Graet eo evit ar skoliou, e brezoneg reiz ha flour gant ar gerioù diaesa displeget e galleg evit skoazia ar vistri-skol. Marc'had-mat eo, ha ne welomp ket petra a vefe da damall d'ezañ, nemet ar gartenn, p. 101, hag a zo... e galleg !!! N'eo ket hepken evit ar vugale e vo talvoudus, met ivez evit an holl Vretoned o deus c'hoant da lenn en o yez eun istor bihan eus o bro.

Kas ar goulennoù hag an arc'hant d'an Ao. Clec'h, merour ar gazetenn « Breiz », « Coadout, par Guingamp » (CC. 48.82 Roazon).

Priz eul levr : 20 real, dre ar post, kuit a frejou kas.

Priz dre bemp : 16 real, hag ar frejou kas.

Priz evit ar skoliou (goulennoù graet gant Renerien pe Renerezed ar skoliou) : 1 skoed, hag ar frejou kas. Bez' e c'heller ivez skriva, evit al levriou prenet a-hiniennou (hep diskont) d'an Dimezell Torcol, « Ti Breiz », 11, rue d'Algésiras, Brest.

## Nevezinti vat d'ar Vretoned !

A-benn bremañ, an holl Vretoned o deus klevet ano eus BREURIEZ OBER, ar strollad tud yaouank-se, savet evit brasa mad Breiz hag ar brezoneg.

Betek-hen, OBER a rae skol dre lizer d'ar re ne ouient tamm brezoneg ebet.

Eur bern tud a zo, avat, o c'houzout komz e brezoneg, hep gouzout skriva en o yez.

PERAK N'HEN DESKFENT KET ?

OBER en deus savet evito (hag evit ar re o deus echu gant ar skol izel) eur skol dre lizer nevez.

Diwar an deiz kenta a viz c'houevrer 1933 e kroger ganti.

Hastit buan lakaat hoc'h ano en eur skriva da : OBER, Boîte Postale 28, Rennes.

## Aet ar maout gant ar brezoneg !

Lenn a reomp war « Breiz » :

« An holl vrezonegerien a vo eul levnez dispar enno o lenn ar c'helou-mañ : en eur genstrivadeg, eur c'honkour, etre ar skridou gallek, provañsek. italianek, brezonek ha spagnolek, eo aet ar maout gant hor mignon yaouank, an Ao. 'n Abad Per Bourdelles, ha gant ar brezoneg ! »

Gwella gourc'hemennou « Gwalarn » d'ar skriva-gner yaouank.

## Kasit d'imp kelou, mar plij

Arabat tamall d'imp pa ne gomzomp ket eus levriou pe gazetennou na vezont ket kaset d'imp gant an embannerien. Klevout a reomp, da skouer, e vefe bet advoulet « La langue bretonne en 40 leçons », gant an Ao. Vallée. Eus geriadur bras an Ao. Vallée ez omp hep kelou ivez, abaoe ma oa digouezet d'al lizerenn E. Ar memes tra a lavaromp eus ar strolladoù hag ar c'hevredigeziou na gasont d'imp paper ebet.

## Ar Falz

« Ar Falz », dastumadenn vizek ar vistri-skol laik mignoned d'ar brezoneg, a zo deut er-maez ar genta niverenn anezi, hag e talv mat ar boan beza lennet ha skoazellet. Skriva d'an Ao. Sohier, mestri-skol, Plourivo (10 lur ar bloaz — CC. 13-346, Roazon).

## SKOL DRE LIZER

evit deski ar brezoneg

Skriva da :

OBER

R. Delaporte. Boest-Post 28, Roazon

An holl levriou brezonek

a vez kavet e :

TI BREIZ

dalc'het gant an dimezell Torcol

11, rue d'Algésiras, Brest

Kasit ho labouriou moulerez,  
kartennou, embannou, levriou, kazetennou  
da ober en

Imprimerie Commerciale et Administrative

17, rue d'Algésiras, Brest

Al labour gwella d'ar priziou izela

# AR GAVERIEN-DOUR

## D kavout dour gant eur walenn

Eur wech an amzer e vez klevez ano eus an dra iskis-mañ : kavout dour gant eur walenn. Lakaomp hoc'h eus c'hoant da gleuza eur puñs war ho touar, met ne ouzoc'h ket da vat e pe lec'h e kavot dour. Mont a rit da gaout eun den anvet *kaver-dour* pe *eiener*. Hemañ a deu, gantañ eur walenn forc'hek, graet e koad-kelvez peurlies. Kregi a ra gant e zaou zourn en daou viz eus ar walenn, ha pourmen a ra evel-se war an dachenn. Ar walenn, da genta, ne finv tamm. Met soudenn, ec'h en em laka da drei war-zu an douar. N'eus mui nemet toulla. Er plas-se ez eus dour.

N'eo ket dour hepken a vez kavet a-wechou, met ivez metalou : kouevr, houarn, pe c'hoaz teñzoriou kuzet.

## Eur vicher goz

Ma reer muioc'h-mui implij eus an dra-se, arabat kredi ez eo eun dra nevez. Beleien ar Romaned, a-raok amzer Hor Salver, a ouie dija ober gant ar walenn, a raent e koad-kelvez pe e koad-haleg. Er c'houezek-vev kantved, e veze kavet dour ha metalou en doare-se, en Alamagn hag e Bro-Saoz, da skouer en darn-se eus Bro-Saoz anvet Kerne-Veur, e-lec'h ma komze an dud brezoneg evelomp gwechall, hag e-lec'h ma oa men-gleuziou staen brudet.

## Penaos diskleria an dra-se ?

Kalz tud ouizieki o deus klasket diskleria an dra-se. Met ret eo anzav n'int ket deut a-benn. A-raok pep tra, ar pezh a zo souezus eo an dra-mañ : n'eo ket n'eus forz piou a c'hell mont da bourmen en eur park gant eur walenn koad-kelvez ha kavout dour pe teñzoriou. Kaer a vo ober, ne finv ket ar walenn ma n'eo ket gant eun *eiener* emañ. Piou a zo *eiener* eta ? Tud ganet evel-se Marteze c'houi, hep gouzout d'ec'h. Lod a lavar ivez e c'heller deski ar vicher gant eun *eiener*, a-wechou.

An darn vuia eus ar ouizieien o deus studiet ar gudenn-se a lavar en deus an tredan (pe elektrisite) eun dra bennak da ober emañ. Pa vez goloet daouarn eun *eiener* gant seiz pe kaoutchoug, pe n'eus forz pe-tra a vir ouz an elektrisite da dremen, ne finv ket ar walenn, — evit ar wech kenta, da vihana, rak tamm-ha-tamm e teu da finva evel a-raok.

## Ar pezh a lavar ar re na gredont ket

Tud all 'zo hag a lavar n'eo kement-se nemet diotachou. Rak :

1) Ez eus kalz dour dindan an douar, ha ne vern e pe lec'h, ma toullit, ez oc'h hanter sur da gavout dour. Evel-se n'eus ket ezomm a walenn.

2) An *eienerien* a fazi alies. Nag a dud o deus kollet arc'hant o toulla en eul lec'h a oa bet merket gant eun *eiener*, ha n'o deus kavet netra.

## Ar manac'h italian ha teñzor an « Ejipt »

Echuomp gant eun istor farsus.

Klevet hoc'h eus komz eun an *Ejipt*, ar vatimant-se a oa aet d'ar strad dirak Brest, enni eun teñzor bras hag a oa da c'houarnamant Bro-Saoz. Eun vag italian, an *Artiglio*, a voe kaset da besketa an teñzor. Da genta, kaer a oa furchal, ne gaved netra. A-benn ar fin e voe galvet eur manac'h italian, brudet-bras evel *eiener* en e vro. Dont a reas war ar vag, e walenn gañtan evel just, ha setu ar vag en he hent. Pa dremenje a-zioc'h al lec'h ma edo an teñzor, e tleje ar walenn en em zifreta. Ar vartoloded eo, avat, en em zifretas e-pad meur a zevez, met en aner. Ar walenn ne finvas ket, hag ar paour kaez manac'h, — eun den mat-kenañ, a lavarer, hag a oa karet gant an holl, — a rankas distrei d'e gouent, kouezet e veud, — pe e walenn mar kirit gwelloc'h, — en e zourn.

E gwerz e ti « Gwalarn »

### COURS ELEMENTAIRE DE BRETON


(dre ar post)..... 12 lur

### GRAMMAIRE BRETONNE


(dre ar post)..... 3 lur (1 skoed)

### DICTIONNAIRE BRETON-FRANÇAIS

(dre ar post)..... 22 lur



An dournataer a vro Guba, Tunero, o trec'hi Thil, champion ar bed. — Cellon, Paris.



Eun devez bennak goude, Tunero a drec'he e Paris an dournataer marsilhat Nitram. — Cellon, Paris.

C'houec'h vloaz war-nugent eo Laouig, ha war a lavar an teodou fall e vank eun dra bennak dindan e damm boned kramennek. Mes an teodou fall, c'houi a oar... Mevel eo en eun tiegez e Penc'hran e-kichenik Landerne.

N'eo ket bet e Brest abaoe e ugent vloaz. Kredit neuze e oa eun tamm mat a fouge ennañ pa lavaras e vestr d'ezañ en dije kofje da dremen eun nebeut deveziou e Brest da geñver Foar-Vikael. Pedet e oa gant eur voereb en doa da vont d'he zi e Rekourañs. Kouezet mat e oa : eur botou koad pagan a vanke dres da Laouig evit mont d'an oferenn e-pad ar goañv. Marteze zoken ez eo marc'hadmatoc'h ar boteier-koad e Brest...

Laouig en doa mignoned koz, bet gwechall trouc'herien-vuzug eveltañ, aet bremañ da chom e kêr, da Vrest. Unan anezo a oa martolod e bourz an *Duquesne*, egile a oa mevel en eur c'hovell eus ar Ru Vras, hag an trede a oa blenier karr-tan eur stal-zilhad. Ha setu o anoioù : Fañchig, Ban hag Herri.

Pedi a rejont ivez, evel just, o c'hamalad da zont d'o gwelout. Prometet o doa zoken dont da c'hortoz anezañ d'ar gar.

Met eur soñj all a oa en o spered.

Evel ma c'hellit kredi, e oa eun tamm mat a lorc'h e Laouig o vont da gemer an treñ eiz eur noz e gar Landerne. Ne ankounac'haas ket kennebeut trei e ti ar barver en eur vont e-biou e-doare ma vije bet eun dudi da welout... ma ne vije ket bet ken pafalek.

C'hoant kousket a deuas buan d'ezañ en treñ. Dihunet-krenn e voe gant an dud o tiskenn.

Setu neuze eur c'hoari all, avat. Laouig na gave ket ken e vilhed. Kemeret en doa unan koulskoude ha paeel zoken pemzek real evitañ. An dud a ziskenne unan dre unan, hag edo Laouig atao o tarlasket. E pelec'h edo ar bilhed ? Daoust ha sorset e vije bet ? Pe laeret gant eur re zaouarn skañv e pad m'edo moredet ? Gwir e oa marteze, e Kerc'horr du-hont e oa pignet eur vandenn hailhoned ha n'oa tres mat ebet ganto. Daoust ha n'eo ket int o defe graet an taol ? Ha Laouig a furche hag a zifurche muioc'h-mui, a zistroñse e c'hodellou hag a c'houllie betek e doun e gasketenn, e-lec'h ma oa boazet da lakaat e chikad butun.

Eun taol-luc'hed avat. En e zourn edo e vilhed gant Laouig, hag heñ ouz e glask e pep lec'h.

Dal a unan, va Laouig !

Hag heñ er-maez goude m'en doa taolet paotr ar bilhedou eur gwall luchadenn outañ.

En em gavet war ar straed edo e soñj gwelout eno Ban, Fañchig hag Herri, gant o dremmou laouen hag o c'hoarzedennou.

Ne welas den avat nemet paotred an ostaleriou gant o c'hirri o c'hortoz tud ha na zeuent ket, ha dougerien-sammou gant o goulenñ peurbadus.

— « Bagages, M'sieur ? »

— Nann ! a soñje Laouig, n'em eus netra da zougen, na c'hoant da veza douget. Met e pelec'h eo trôet va mignoned ? Hag evel ma ne wele den e chomas eur pennad da c'henaoui ouz ar porz a genwerz, helmoet war ar gloued wenn. Gouleier ar porz, ha re ar bagou war ar mor a zaskrene er vrumenn.

— Asa ! eme Laouig, petra e choman-me da ober amañ ? Gwella am eus da ober eo klask penn hent Rekourañs pa ne welan liou ebet eus va c'hanfarded. Kavout a rin emichañs hep troidellat re straed an Eien, gant va zintin Mari-Jan hag he c'hrampouez c'houek ! Hag heñ ha mont.

En em gavet pelloc'hik, e penn ar straed a ziskenn da Borstrein e welas eun den o tont dirazañ, ha daou all a ziboukas a-douez ar gwez.

Ne oa den all ebet eno d'ar mare.

An den, souchet mat en eur vantell deo, a c'houlennas ouz Laouig :

— Ac'hanta, den yaouank, daoust ha tan a zo ganeoc'h ?

— Tan ?

— Ya, tan !

Laouig na seblante ket entent gwall vat.

— Ya, tan, pe mar kerez, alumetez da rei d'in da dana va sigaretenn.

— N'em eus ket !

An den a dufas d'an douar.

— Ac'h ! an den-mañ a zo diot-ran !

Tostaet e oa an daou all, hag e komzent goustad :

— Ret ober e stal outañ.

— Den ebet ?

— Piou 'ouezo !

Ar paour kaez Laou a glevas. Ar bleo a savas a-bik war e benn, horjella a reas e dreid dindanañ, gwelout a reas ar gouleier o trei, o trei, ha linenn houarn an tram o steredenni.

Ne oa mui nemet eur soñj en e benn : « Ret eo d'in mont kuit ; anez da se oun « foutu » !

Mont kuit. Met da belec'h ? Ne ouie ket. Ne rae forz sur. Daoust ha ne gavfe ket atao e Rekourañs e d'ntin Mari-Jan ma oa ken mat ar c'hrampouez en he zi.

Laouig ne vennas ket marc'hata, hag heñ d'an daoulamm ruz etrezek ar Porstrein ken na denne tan diouz e seuliou.

An dri den a reas an neuz da c'haloupat eur pennad war e lerc'h.

Goudeze e tirolljont da c'hoarzin.

Evit trouc'ha berroc'h, Laouig a gemeras dre douez ar gwez. Hag evel just eourtas unan bennak, hag e vloñsas e dal... Hag e taoulamme atao.

E galon ivez a zaoulamme hag e kredas d'ezañ e oa trouz kammedou an tri den o c'haloupat war e lerc'h, evit e laza a daoliou kontell — gwelet en doa ar gontell o skedi en o mañch. E traoñ skalierou bras ar C'hours

(da genderc'hel p. 77)

## An Tri Gaz Bihan



Bez' e oa eur wech tri gaz bihan, du evel ar glaou, d'ezo eun tamig fri ruz-roz ha daoulagad glas-brao.

Eun abardaez goañv, e-lec'h chom e korn an oaled gant o mamm, e fellas d'ezo mont er-maez, daoust ma oa bet difennet outo kement-se. E-pad ma edo o mamm moredet war eur gador, e kuitajont ar gegin, didrouz kaer.

Er-maez e oa teñval anezi, hag an erc'h o koueza. munut, munut, a lede goustadik war an douar eur gaer a vantell gwenn-kann. A-benn eur pennad amzer an tri gazig du, goloet-holl gant an erc'h, a oa deut da veza tri gazig gwenn koant.

Revet e oant avat betek beg o mourrou, hag e tenjont, lostek-holl, en-dro d'ar gêr.

Pa glevas ar vamm an tri bihan o viaoual er-maez, ez eas da sellout dre eur faout en nor. Hogen ne welas nemet tri gazig gwenn ha n'anavezaz ket he re vihan.

Serr e chomas an nor, hag an tri gaz bihan a vanas eno e-doug an noz penn-da-benn, o krena gant an anoued ha reuzeudik-bras.

Ober a rejont o soñj da selaou hiviziken, gant evez, o mamm, hag e gwir, a-c'houdevez e voent dalc'hmat sentus.

Hervez skrid ABEOZEN.

## FENTIGELLOU

### Itron ha matez

An itron :

— Mar kirit, Lusi, ez an da sikour ac'hanoc'h.

Ar vatez :

— Nann, bennoz Doue d'eoc'h, itron. Hizio em eus re da ober, ha n'em eus ket amzer da goll.

### E ti ar medisin

Daou baotrig a zo deut da di ar medisin. Lakaet e vezont da c'hortoz e-kichen eun itron.

An itron (da unan eus an daou baotrig) :

— Peseurt droug ac'h eus, va mignon bihan ?

Ar paotrig :

— Lonket em eus eur pezh dek gwenneg !

An itron (da egile) :

— Ha te, va faotrig ?

Egile :

— Ar pezh dek gwenneg a zo d'in, ha deut oun da gaout anezañ en-dro !

### An den gouzied hag ar morian

An den gouzied :

— Me 'zo sur e tleit kaout gwad tud wenn en ho kwazied.

Ar morian :

— O ya, va zad-koz en deus debret kement anezo !

(Kendalc'h ar b. 76)

Dajot e voe gwelet gant eur polis. Ar polis, spontet, a hopas :

— Petra 'zo ?

Hag evel ma n'en doa respont ebet, e sutellas gant holl nerz e alan hag e redas... warlerc'h al laer. War ar c'hae ec'h en em gavas Laouig e-mesk ar barrikenadou gwin. Ne ouie ket e-pelec'h trei pa lammas war fri eur paour kaez den a oa eno a-zevri-kaer, war greiz e gein e-touez ar barrikennoù, o toulla unan evit kaout an evaj madelezus.

Ar paour kaez den, evel just, ne chomas ket da glask e rest, hag e tistagas gant Laouig, en eur c'hrozmolat, eun taol-troad en e gof.

Laouig a gouezas war greiz e gein... er mor.

Eno eo bet pesketet ha kaset dirak ar c'homiser.

Labezet e ziihad brava.

En deiz warlerc'h e welas Herri ha Ban, Fañchig n'en doa ket a bermision. O klevout Laouig o konta d'ezo e istor e c'hoarzent goustadik.

Emichañs e ouient eun dra bennak...

— Bremañ evelato, Laouig, e kemeri eur banne diwar hor c'houst !

D. K. KONGAR.



# A-ZEHOU HAG A-GLEIZ

## Darvoudou mor

Bagou ar C'hallaoued n'o devez ket nemeur a chañs abaoe eur pennad.

Ar *Paul Lecat*, ar *Paris*, an *Asia*, al *Lamartine*, ar *Georges Philippar*, ar *Prométhée*, ha da echui, an *Atlantique*, a zo bet kollet an eil war-lerc'h eben.

Ar pezh a zo ar rannalonusa evidomp eo gwelout penaos bep gwech e vez kollet buhezioù Bretoned.

## E koadou bras an Amerik

Eur C'hembread yaouank, an Ao. Llewellyn Williams, a zo bet oc'h ober eur veaj hir e kreiz Amerika ar c'hreisteiz. Ne oa gantañ nemet tri Indian. Ret e voe d'ezo trouc'ha o hent gant kontilli dre ar strouez hag ar c'hoadou. E-pad eur pennad n'o devoe netra da zebri nemet kig marmouzien (hag a vez kavet mat-tre gant an Indianed).


An Ao. Williams a gavas cur bagad Indianed hag a oa akuit-meurbet da barea ar gouliou... gant merien. Bez' ez eus er vro-se eun doare merien bras hag a zo kreñv-kenañ o javedou. Pa vez glazet unan bennak, e vez tostaet da genta an daou du d'ar gouli. Neuze e vez lakaet ar merien da gregi start en daou du-se gant o javedou. Eur wech trouc'het kuit korfou al loened, ar pennou a gendalc'h da starda kalet e-giz klochedou houarn.

En eur bagad all, anvet bagad ar Yahuad, ar merc'hed eo a zo kreñvoc'h hag ampartoc'h eget ar baotred, hag a ra al lezenn d'ezo. An dra-se ne vir ket outo da garout ar ficherez, evel ar merc'hed all e pep korn eus ar bed. Liva a reont o bizaj ha rodella a reont o bleo.

## Ar gevvidenn en horolaj

Gouizieien eus an Amerik a zo bet o studia piz doareou eur gevvidenn, a oa bet paket e-barz eun horolaj, etre ar gorre hag ar werenn.

N'he doa netra da zebri, ha koulskoude ne varve ket. (Bez' ez eus eur gredenn e-touez ar bobl, penaos ne c'hell ket eur gevvidenn mervel gant an naon).



An tan er mordreizer « Atlantique »  
(gwelet gant Kreston)

Met ar souezusa-holl eo an dra-mañ: bep gwech ma teu nadozioù an horolaj da dostaat an eil ouz eben, e klask al loenig staga anezo dre wea en-dro d'ezo eun neudenn. Evel just, n'eo ket kreñv a-walc'h an neudenn, hag an nadozioù en em zistag ken aes ha ma ne vije netra. Koulskoude al loenig ne goll ket kalon...

Daoust ha n'emañ ket kalz tud evel al loenig-se? Kaer o devez c'houita, atao ez ad'hreont heñvel, hep en em c'houlenn perak e c'houtont, ha daoust ha ne vije ket gwell en em gemer en eun doare all.

## Lamp ar maro

Ne c'hellfed ket lavarout a-walc'h d'an dud ez eus dañjer o c'hoari gant ar goulou elektrik. A bep seurt gwall zarvoudou a c'hoarvez bep bloaz evel-se.

Eur plac'hig vihan en deiz all a oa oc'h en em walc'hi en eur gibell. He c'hoar, nebeut kosoc'h egeti, a fellas d'ezhi lakaat eul lamp elektrik war elun e-barz an dour, da welout peseurt sklerijenn a raje. Kerkent ha ma stokas ar c'helc'h metal a zalc'he al lamp ouz an dour, ar buge-lig a oa e-barz ar gibell a voe lazec'h krenn, gant ar red elektrik, hag a dremen aes-kenañ, evel ouzoc'h, e-lec'h ma 'z eus dour pe leizded.

## O welout « traou » war ar mor

Klevet hoc'h eus komz moarvat eus ar pezh a anver « *touellwel* ».

Tud, e-kreiz an dezert pe e-kreiz ar mor, a wel en diabell a bep seurt traou: tiez, gwez, ilizou, hag all. An holl draou-se n'eus ket anezo el lec'h ma o gweler: graet int gant hannou an heol o c'hoari a-zioc'h an tonnou pe an traez; diskouez a reont, distummet peurliesha, traou a zo e gwirionez a bell bras.

Ma, setu amañ ar pezh a welas martoloded eul lestr e miz genver 1933, en eun tu bennak e-kichen an Aostrali: Douar a bep tu.

Dour o koueza eus krec'h tevennou uhel-spontus. Touriou-tan heñvel ouz tiez tregont estaj. Bagou o lammat war ar gwagennoù.



DA LENN « KANNADIG GWALARN »

1.000.000 !

EUR MILION  
A DUD

A GOMZ BREZONEG !

HOGEN

PET A OAR

LENN BREZONEG ?

EVIT DESKI D'EZO

LAKAIT ANEZO

## DISKOUEZADEG VRAS CHICAGO

1833 : e-kreiz Stadou-Unanet an Amerik, e oa eur bourk a netra.

1933 : er memes lec'h, e sav unan eus ar c'hêrioù brasa, — ar pevare, — eur ar bed holl.

Evit diskouez al labour bras graet e-pad kant vloaz, e vo digoret eun ekspozision pe diskouezadeg vras, d'ar c'henta a vezeven 1933.

Hervez kustum an Amerikaned, ne vo ket graet an traou dre hanter. Setu tri bloaz abaoe ma labourer da aoza an ekspozision-se, a vo hep mar ar brasa a zo bet graet biskoaz.

Savet e vo war eun dachenn a 260 hektar (520 devez-arat), tost a-walc'h ouz kreiz kêr. En em astenn a raio war 5 kilometr hanter, a-hed riblou al lenn anvet *Lenn Michigan*, hag ouspenn, e-barz al lenn-se ez eus bet graet, — lavarout mat a reomp, graet, — eun enezenn a 40 hektar (80 devez-arat), e-lec'h ne oa a-raok evel just nemet dour.

Er bloaz 1893 e oa bet graet dija eun ekspozision e Chicago, en enor eus kadivigez an Amerik gant Kristof Kolomb, pevar c'hantved a-raok. Mes eun dra dister e oa e-skoaz hemañ, a zo graet evit an holl vroioù.

Diskouezet e vo ennañ tout an invañsionou bras graet gant an den: petra int bet en amzer dremenet, petra int bremañ, ha petra e vezint en amzer-da-zont. Ar gouerien, da skouer, a c'hello gwelout kement tra nevez, kement benveg ha kement mekanik nevez a vez implijet er c'hounidigez-douar, pe evit ober amann, fourmaj, hag all.

E-kichen an traou a sell ouz ar micherioù hag ar goñvers, e vo kavet traou a sell ouz an istor: templou bras evel ar re a voe gwelet en Ekspozision Kolonial Paris e 1931. Unan eus brasa savadurioù an ekspozision a vo *Ti ar Skiañchou*, a vo en e greiz eur porz, plas ennañ evit dek mil a dud.

Esper o deus an Amerikaned da c'hounit arc'hant gant o ekspozision, da wellaat koñvers o bro, hag evel-se da zigreski niver an dud dilabour. Ma teuont a benn, gwell a se !

## KONKOUR AR VUGALE

Setu amañ roll ar prizioù gounezet evit konkour miz genver:

PRIZ KENTA: Eliza Sergent, Poullan.

EIL PRIZ: Mari Canevet, Poullan.

TREDE PRIZ: Tereza Claquin, Poullan, ha Fañch Elies, Sant-Brieg.

Setu amañ ar poentou bet: 96, 95 ha 94.

Ha bremañ, arabat d'ar vugale n'o deus ket bet a briz ar wech-mañ koll kalon. Eur c'honkour all a vo ar miz a zeu !



Da genver ar pezh a-berzh ar c'helenner Picard, eur gouign a zo bet kinniget d'ezañ e New-York, graet e stumm e aerlestr brudet — Cellon, Paris.



# GWALARN

Kelaouenn vizek

e brezoneg uhel

Rener: Roparz Hemon

Priz: 30 lur ar bloaz (broiou estren: 35 lur)

Chomlec'h:

Journal de Gwalarn, Boite Postale 75, BREST

(C.G. 96.38, Rennes)

# KANNADIG GWALARN

Kazetenn vizek

e brezoneg an holl

Rener: Roparz Hemon

Priz: 10 lur ar bloaz (broiou estren: 15 lur)

Adres:

Journal de Gwalarn, Boite Postale 75, BREST

(C.G. 96.38, Rennes)

## Embannadurioù Gwalarn

1926

J. Kerrien. — AR ROC'H TOULL. — Diviet.

J. M. Syngé. — WAR VARC'H D'AR MOR. — 2 lur 25

1927

Roparz Hemon. — AN AOTROU BIMBOCHET E BREIZ. — Diviet.

T. C. Murray. — NEVEZ-AMZER. — 4 lur.

TONKADUR BUGALE TUIREANN. — 4 lur.

G. Th. Rotman. — PRINSEZIG AN DOUR. — Diviet.

GERIADUR GALLEK-BREZONEK A GORFADUREZ. — Diviet.

1928

Aeschulos. — PROMETHEUS EREET, AR BERSED. — 12 lur.

B. Potter. — PER AR C'HONIKL. — 1 lur.

G. Th. Rotman. — PRINSEZIG EN DEUR. — 5 lur.

H. Andersen. — PLAC'HIG VIHAN AR MOR. — 3 lur 60.

Roparz Hemon. — GERIADURIG-DOURN BREZONEK-GALLEK. — 22 lur.

Roparz Hemon. — YEZADUR BERR AR BREZONEG. — 3 lur.

AR SIMBOL. — 0 lur 50

1929

Meven Mordiern. — ISTAR AR BED, levrenn I. — 14 lur.

M. Gourlaouen. — LEVR AL LOENED. — 1 lur 75.

A. Blok. — AR PLAC'H DIANAV. — 4 lur.

G. Th. Rotman. — NIJADENN AN AOTROU SKANVIG. — 5 lur.

A. Brizeug. — TELENN ARVOR, FURNEZ BREIZ. — 6 lur.

Roparz Hemon. — REIZSKRIVADUR AR BREZONEG. — 3 lur.

## Embannadurioù Gwalarn

1930

Meven Mordiern. — ISTAR AR BED, levrenn II. — 10 lur.

MARVAILHOU AR VRETONED. — Diviet.

ENKLASK DIVAR-BENN STAD AR BREZONEK E 1928. — 4 lur.

GERIADURIG ESPERANTEK-BREZONEK. — 4 lur.

Roparz Hemon. — EUN DRO E KEMBRE (Gwalarn 24). — 2 lur 50.

1931

Abeozen. — PEVAR MARVAILH. — 3 lur.

Roparz Hemon. — EUR BREIZAD OC'H ADKAVOUT BREIZ. — 15 lur.

OWEN HA LUNET. — 3 lur.

DIARMUID HA GRAINNE. — 5 lur.

Tanguy Malemanche. — AR BAGANIZ. — 10 lur.

Sei Chonagon. — NOTENNOU AR GOUBENNER. — 3 lur.

Roparz Hemon. — LINA. AN TAN E TI KERNASPREDEN (peziou-c'hoari). — 4 lur.

1932

Meavenn. — IWERZON DISHUAL, SKOL S. ENDA. — 4 lur.

X. de Langlais. — KANOU EN NOZ. — 10 lur.

D. K. Kongar. — AR WAZIG. — 3 lur.

Y. Drezen. — AN DOUR EN-DRO D'AN INIZI. — 4 lur.

Meavenn. — PA-C'HOUEZ AVEL WALARN. — 5 lur.

Meven Mordiern. — ISTAR AR BED, levrenn III. — 8 lur.

Hoffmann. — AN TASMANT DIMEZET. — 4 lur.

GWELEDIGEZ MAB KONGLIN. — 4 lur.

Roparz Hemon. — COURS ELEMENTAIRE DE BRETON. — 12 lur.

Roparz Hemon. — AR C'HOAR HENA. — 4 lur. —

KEMBREIZ GWECHALL HA BREMAN. — 4 lur.

KEMBREIZ GWECHALL HA BREMAN. — 4 lur. —

1933

Roparz Hemon. — AL LAER AVEL. — 4 lur.

Abeozen. — YEZADUR BERR AR C'HEMBRAEG. — 8 lur.

# KANNADIG

NIV. 6 — MEURZ 1933

PRIZ : DEK GWENNEG



# GWALARN



# GERIOU-KROAZ

1	2	3		4	5	6	7
8			9				
10		11				12	
13		14			15		
	16			17		18	
19			20		21		22
23	24		25			26	
27		28			29		
30				31			

A-led :

A-sounn :

- |                                 |                             |
|---------------------------------|-----------------------------|
| 1. ano-verb.                    | 1. muioc'h eget eur person. |
| 4. eus an diabarz.              | 2. ard.                     |
| 8. liamm.                       | 3. rannig-nac'ha.           |
| 9. bevenh.                      | 4. loen bras.               |
| 10. mab.                        | 5. betek eno.               |
| 11. erru war an oad.            | 6. renk.                    |
| 12. eo.                         | 7. kontrol plijadur.        |
| 13. eul labous a...             | 9. da staga eur vag.        |
| 16. kemer !                     | 14. marc'h pe azen.         |
| 17. a gaver e pep ti.           | 15. kontrol kleuz.          |
| 21. da c'hlanan eun dourenn.    | 18. ruze.                   |
| 23. aio.                        | 19. lakaat greun en douar.  |
| 25. loenig enebour d'ar c'haz.  | 20. lestr.                  |
| 26. loen-ti.                    | 22. da ober eur roched.     |
| 27. yez Danmark.                | 24. labous-porz.            |
| 29. ar pezh a vanker d'eun all. | 25. a rank beza.            |
| 30. labourat gant an alar.      | 28. rannig-nac'ha.          |
| 31. da sevel eur voger.         | 29. araogenn.               |

An holl levriou brezonek

a vez kavet e:

**TI BREIZ**

dalc'het gant an dimezell Torcol

11, rue d'Algésiras, Brest

# A-ZEHOU hag A-GLEIZ

## An aerouant ruz

Trouz a oa bet warlene e Kembre (« Pei d'Gal ») abalamour da vanniell ar vro, a zo skeudennet war-nañ eun aerouant (« dragoñ ») ruz.

Da zeiz ar gouel broadel (« fet nasional »), paotred o doa diframmet banniell ar Saozon, a oa o c'hournijal war lein eur c'hastell, ha lakaet en e lec'h banniell Kembre.

Petra o deus graet ar Saozon ?

N'int ket ken sod hag ar C'hallaoued, na gavont morse netra gwelloc'h nemet difenn, difenn, difenn kement tra a zisplij d'ezo.

Emaint o paouez rei urz ma vo lakaet hiviziken banniell an aerouant ruz e-kichen o banniell war gastellou ar vro !

## Ath Luain

An holl Vretoned a zo ganto binviou skingomzerez (« radio ») a c'hell bremañ klevout aes-meurbet kaslec'h (« post emeteur ») nevez Iverzon, digoret en Ath Luain d'ar 6 a viz c'houevrer diweza. Ar wagenad (« loñgeur d'ond ») eo 413 metrad, hag ar gallowd 60 kilowat, ar pezh a ra m'eo Ath Luain unan eus kreñva kaslec'hioù Europa.

Lavaromp ar wirionez. Ne glever o tont eus Ath Luain, koulz lavaret, netra nemet saozneg, hag ar sonerez a zo pell diouz kaout talvoudegez an hini a glever o tont eus kaslec'hioù Breiz-Veur (« Grañd Breutagn »). War wellaat ez aio marteze gant an amzer.

## Ar c'hannad hep bro

E Bukarest, kênbenn Roumania, ez eus eur c'hannad (« añbasadeur ») hep bro: e Zreistelez (« Ekse-lañs ») ar C'hont Poklevski-Koziell, bet anvet kannad-gant an tsar Nikolaz II. Triouec'h vloaz 'zo, e oa ar C'hont unan eus galloudusa kannadourien (« diplomat ») ar bed holl. Heñ eo dreist-holl a droas Roumania a-du gant ar Re Unanet e-pad ar Brezel Bras. Nikolaz II a zo maro, beli (« puisañs ») an tsared aet da get, ha koulskoude ar C'hont a chom, peogwir, emezañ, n'en deus bet lizer ebet digant e c'houarnamant da lavarout ne oa mui kannad. Emañ er vrasa paourentez, koulz lavarout e-unan-penn en e gannad-di (« añbasad ») hanter ziskaret, a weler c'hoaz war ar gael anezañ eun erer (« egl ») koz, andamez (« añblem ») Impalaeriez Rusia gwechall, staget gwall zistart gant eun tamm orjalenn (« fil deu metal »).

## Ar mestr-skol houarn

Er Stadou-Unanet, en Ironwood, Michigan, ez eus bet graet eur mestr-skol en houarn.

Ne vez ket implijet da ober skol (an dra-se a zeuio ivez), hogen da lakaat ar skolidi (« ekolie ») da dremen arnodennou (« ekzameñ »).

(da genderc'hel p. 83)

# KELEIER AR MIZ

## Neunkirchen

Eur gwall zarvoud (« aksidañ ») spontus a zo c'hoarvezet d'ar gwener 17 a viz c'houevrer e Neunkirchen, e bro ar Saar. Eur c'hloc'h aezenn-leski (« gazometr »), d'ezañ 150.000 metrad-diñs (« metr-kub »), a zo tarzet, o tistruja an tiez tro-war-dro, o laza ouspenn 80 a dud, hag o c'hloaza re all a gantadou.

Eun druez eo gwelout penaos kelaouennou (« journo »), en Alamagn evel e Bro-C'hall, hag e Breiz ivez, siouaz, o deus kemeret tro da ober politikerezh brein diwar reuzeudigezh pobl ar Saar.

## Ar Sav-Heol pella

Darvoudou a bouez war-dro Mandchouria, ha brezel evit mat etre bro Japan ha bro Sina (« Chin »).

Japaniz o deus lakaet en o fenn lakaat o c'hraban war ar rannvro eus Sina, er biz da b-Pekin, anvet Jehol. A bep seurt digarez a gavont evit se, evel ma ra atao ar broiou bras pa fell d'ezo ober eun taol fall bennak.

Ar wech-mañ, avat, ez eus eun dra nevez : tamallet eo bet bro Japan e Jenev gant ar broiou all, izili eus Kevredigezh ar Broadou (« Sosiete de Nasioñ »). Da gredi eo ne ra ket bro Japan nemeur a forz eus an tamall-se.

Bro-Saoz he deus difennet gwerza hiviziken armou ha pourveziou-brezel da vro Japan koulz ha da vro Sina.

## Aostria

Armou a oa bet kaset da Aostria (« Otrich ») eus Italia. Bro-C'hall ha Bro-Saoz, hag a sell ouz Aostria eun tammig evel ma vefe eur vatez d'ezo, o deus lakaet harz. Ha setu tabut adarre, hag aon na vefe adsavet an emgleo evel a-raok Brezel 1914, Alamagn-Aostria-Hungaria-Italia.

## Eur vicher fall

Roosevelt, nevez anvet Prezidant er Stadou-Unanet, a zo bet tennet outañ c'houec'h tenn pistolenn-dro (« revolver »), e Miami, Florida, gant eun Italian, Zangara e ano. Ne voe ket tizet, hogen c'houec'h den a voe gloazet, en o zouez Tony Cermak, maer Chikago. Zangara, hag a zo eun tammig direnket e benn, a zo bet barnet d'ar prizon evit 80 vloaz !

## Trubuilhou Marianna

Atao ar yalc'h c'houllo. Marianna a garfe kemer digant hemañ, digant hennez, ha den ne fell d'ezañ leuskel eur gwenneg da vont ganti ! Ret-mat e vo da unan bennak, a-benn ar fin, paea koulskoude evit sotoniou Marianna.

## En Alamagn

Krog ha sach-bleo dalc'hmat etre an Nazied, paotred Hitler, hag ar Gomunisted. D'ar 27 a c'houevrer, ar Reichstag, palez ar Parlamant, a zo bet devet e Berlin, gant Komunisted (war a lavar an Nazied).

Da heul ar votadegoù, d'ar 5 a viz meurzh, ez eo deut an trec'h gant paotred Hitler, hag a ra o mistri er vro.

(kendalc'h ar b. 82)

Setu penaos e vez graet :

Goulennoù a vez savet dre skrid, hag an emstrierien (« kandida »), evit respont, a ra toullou en eun tamm kartoñs. An tammou kartoñs a vez lakaet neuze e-barz ar mestr-skol (a labour gant an tredan — « elektrisite »), hag a verk war eun dremm (« kadrañ ») ar poentou gounezet.

## Evit tomma an daouarn

Evit tomma an daouarn e-pad ar goañv, n'eus netra par, a lavarer, d'eur batatezenn boaz nevez tenet eus an dour bero.

## Kera aneval Londrez

An takin eo.


Petra eo eun « takin » ?

Eul loen souezus, eun dra bennak etre eur c'havr hag eun antilopenn, hag a gaver e-kreiz menezioù gouez an Tibet, en Azia.

An hini a weler e liorz-broela (« jardeñ d'aklimatasioñ ») Londrez a dalv war-dro daou c'hant mil lur, da lavarout eo kement ha daou-ugent pe hanter-kant leon.



# AR MIZ BREZONEG



## Kanenn Hini Langenau

O kaout al levrig-mañ em eus tridet gant ar blijadur : da genta, o lenn e brezoneg eul labour a lennegez uhel, ha d'an eil, o welout pegen koant e oa moulet, gant lizerennou kaer hag eur golo mistr-kenañ.

An holl o deus klevet ano ar skrivagner alaman Rainer Maria Rilke. Ne ouzon ket, avat, ha barrek eo an holl da dañva e skridou iskis ha leun a velkoni. Trugarez da Olier Mordrel, ne vern penaos, da veza pinvidikaet hol lennegez gant eun awen dianav d'ezi betek-hen.

Strivet en deus Olier Mordrel da astenn en e droidigez gallusteriou (« possibilite ») ar yez dre implij geriou nevez ha troiou-lavar divoas. Ha mat en deus graet. Arabat koulskoude ez afe ar strivadennou-se betek terri reolennoù eeuna ar yezadurez (« grammer »).

Evit d'al levr beza moulet kaer, kaeroc'h c'hoaz e vije bet hep ar faziou-mouleraz a zo chomet e-barz.

Emañ, war a glevomp, Olier Mordrel oc'h aoza eul levr nevez, anvet « Skridou ».

Priz al levr : 10 lur (tost peurwerzet ; ne chom nemet eun 30 bennak). Skriva da O. Mordrel, 11, rue de Locronan, Kemper.

## Kañvou

Daou skrivagner brezonek a zo maro nevez 'zo, an Ao. Abad Madeg, hag an Ao. Erwan Berthou.

An hini kenta anezo en deus graet levriou a relijion, hag egile en deus savet barzonegou, kontadennoù, hag all.

Bez' e oant o-daou eus ar skol goz, skol ar skrivagnerien a gave d'ezo ne oa ket ezomm studia piz ar yez evit skriva. Daoust m'eo dister talvoudegez lennegel (« literer ») an darn vuia eus o oberou, ne vint ket ankounac'haet, peogwir o deus karet Breiz, peogwir o deus karet ar brezoneg.

## « Breiz »

War ar gazetenn « Breiz », niverenn ar 26 a c'houevrer, ez eus meneg c'hoaz eus Gallaoued hag a ra goap d'ar Vretoned. Ar wech-mañ eo beleien, ar re a embann eur gazetenn c'hallek, anvet « Liziri

Breuriezh ar Vugaleaj Santel », pe e galleg « Anal deu la Señt Añfañs ». Eno e tismegañser eur Breizad, eur paour kaez diskiant, dizesk hag amboubal, hag a vez graet ar gentel d'ezañ gant eur Parizian, eur Marsilhad hag eur paotr a vro Japan !

Ar souezusa-holl, avat, eo ar pezh a lavar ar gazetenn « Breiz » da heul : « Gwella respont d'ober eo c'hoaz rei muioc'h-mui d'ar Señt Añfañs » (peogwir, evel ouzoc'h, ez eo Breiz a ro ar muia d'an oberenn-se).

Ma ! bez' ez eus oberou katolik a-walc'h hag a c'heller rei arc'hant d'ezo. Ar pezh a lavaromp-ni eo : roit d'ar re o deus doujañs evit ar Vretoned ; ha kasit da sutal ar re a ra goap ac'hanoc'h, evit deski d'ezo beva !

## « Ober »

Ma 'z eus e Breiz eun oberenn hag a dalv ar boan beza harpet, ha brudet, ez eo oberenn an dud yaouank kalonek hag a ra skol dre lizer d'o c'henvroiz evit deski d'ezo lenn ha skriva ar brezoneg, hag a embann ar gazetennig « Ober ».

Niverenn diweza ar gazetennig-se, niverenn ar 15 a c'houevrer, a zo dudius-kenañ. Lennet hon eus enni gant plijadur, e-touez traou all, eur pennad kaer savet gant Kerlann, hag a garfemp embann en he hed ma vije lec'h a-walc'h evit se amañ. Komz a ra Kerlann eus an emzao yaouankiz e broiou an Hanternoz, hag e kinnig ober e Breiz an hevelep tra.

Ma n'avezit ket « Ober », skrivit dioustu d'ar merour : Boest-Post 28, e Roazon.

## Levr-deski F. Vallée

Piou a lavaro ar vad en deus graet levr an Aotrou F. Vallée, « La Langue Bretonne en 40 Leçons » ? Eur mouladur nevez, kresket ha gwellaet, a zo o paouez beza embannet. Emañ e gwerz e ti an Dim. Torcol, Ti Breiz, 11, rue d'Algésiras, Brest — Priz : 12 lur.

## Helynt y Pibydd

Hor c'heneil mat Geraint Dyfnallt Owen en deus troet e kembraeg (« galoua ») darn eus brava marvailhou-pobl Breiz, dindan an ano a « Helynt y Pibydd », da lavarout eo, « Trubuilhou ar Soner ». Setu amañ eta eul liamm muioc'h etre Breiz ha Kembre (« Pei d'Gal »). Priz al levr eo 10 lur, hag emañ e gwerz e Ti Breiz, Brest.

## Nevezinti vat

E Paris ez eus savet eur gevredigez nevez. « KAV », pe Kenvreuriezh ar Viniouerien eo anvet. He fal a zo mirout ha skigna ar c'hiz da implijout ar benvegou sonerezh (« enstrumañ d'muzik ») keltiek e-touez ar Vretoned. Dre zeski son d'hec'h izili ha dre o skoazella da brena benvegou, e kaso « KAV » he mennad da benn. Niverus e teu ar genvroiz daveti a bep korn a Vreiz hag a Vro-C'hall.

## Donezonou

Profou evit ar C'hannadig : Amprevanoniour : 10 l. — Llygadlas : 10 l. — en holl : 20 lur.

Profou evit Brezoneg ar Vugale : An It. Andreeff : 80 l. — An Ao. R. Aodig : 12 l. — Paotr Roazon : 10 l. — Dalc'homp start : 10 l. — en holl : 112 l. — Chom a ra er c'hef : 487 l. 80.

Trugarez !

E gwerz e ti « Gwalarn »

DICTIONNAIRE BRETON-FRANÇAIS

(dre ar post)..... 22 lur

COURS ELEMENTAIRE DE BRETON

(dre ar post)..... 3 lur (1 skoed)

GRAMMAIRE BRETONNE

(dre ar post)..... 12 lur

# AR C'HLASKER-DOUR

Da heul ar pennad embannet war niverenn diweza ar C'hannadig, e roomp ar pennad plijadurus-mañ, gant hor c'henlabourer mat Erwan Torralval, war an hevelep danvez:

Graet e vez anezo « soursie » e galleg. Tud iskis a oar a bep seurt traou diwar-benn ar bed dindan douar ; tud hag a oar dizolei ar stêriou kuz e tor ar menezioù, ar gwazennadou glaou, houarn pe aour dindan ar pradou glas, ar c'hleñvedou end-eeun e korf an den. Bez' ez eus bet zoken unan bennak ampart a-walc'h da gavout dour e-kreiz eur stank, hag arc'hant e godellou e gempredidi.

Bet oun o welout unan anezo, an aotrou 'n abad V... N'ouzon mat perak an darn vuia anezo a zo beleien. Hemañ, brud bras d'ezañ betek en Amerika, a oar dizolei ne vern petra hep mont war an dachenn.

Kaset e vez d'ezañ kartenn ar vro ; ober a ra e labour warni gant e venveg, hag e kas anezi en-dro gant kroaziu merket warni : amañ dour, pe aour, pe c'hlaou, pe ... loen plantet, diouz m'emañ an traou.

P'en em gavis gantañ ne oa ket, evel ma kav d'eoc'h marteze, o pourmen eur forc'hig kelvez a-us d'e liorz da welout ha sevel a rae an had. Bez' e oa, diouz boaz ar veleien, o lenn e vreviel en disheol. Eun den hegarat, seven ha lart.

— Ma ! emezañ, ha c'houi a gave d'eoc'h e oa heñvel klaskerien-dour bremañ ouz hudstrilhourien (« alchemist ») gwechall, gant o bonedou beg-lemm hag o broziou steredennaouet ? N'int ket, va faotr, n'int ket ; tud evel d'oc'h, netra ken. Gouzout a reont avat traou ha n'ouzoc'h ket, pa n'int ket bet desket d'eoc'h. Hogen, ma fell d'eoc'h kentelia e viot ken barrek ha ne vern piou a-raok pell. Sellit 'ta !

Hag e sachas diouz e c'hodell eur gelastrennig verr-veur, heñvel a-walc'h ouz eur walenn-besketa, d'ez daou-ugent santimetr bennak ; war an dournell eur ganellad neud gant eun dournikell, an neudenn o heulia an troad hag o tremen en eur c'hran e penn ar walenn ; ouz an neudenn, a-istribilh, eur maen, eur maen bennak heñvel-tre ouz ar re a ya da zidacha ar botou-koad, pe ouz ar re a ya da vugale gant ar gantonierien.

— Amañ, dindan hon treid, emezañ, ez eus dour. Sellit kentoc'h.

Derc'hel a rae en e zourn dehou ar walennig ; gant e zourn kleiz e krogas da drei an dournikell.

Hag ar maen da ziskenn, goustad, e penn an neudenn.

O c'hortoz e oan n'ouzon dare petra, o welout diskulia ken diboell dirak eur paour kaez den diouizieker misteriou du an traou kuz. Hag e c'hoarvezas...

Ar maen a grogas da horjella, evel hejet gant an avel, lentek da genta, o kemer lañs avat dre ma tiskenne muioc'h-mui, ar beleg atao o trei an dournikell.

— Amañ, emezañ en eur baouez, emañ ar « poent ». Amañ an dour.

Hag o plega doujus warni, e welis eur varrennig c'hlas merket war an neudenn o tizout beg ar walenn.

— Emañ al luskell en e vrasa, sellit. Kendalc'homp.

Hag o tiskenn adarre etrezek an douar, ar maen, bep ma 'z ae, a golle e lañs, ken na chomas a-sav.

— Gwelet hoc'h eus, eme an aotrou beleg, daoulagad lintrus d'ezañ o para warnoun. Amañ 'z eus dour.

Krin ha kras e oa grouan an alez dindan hon treid. Hogen, bez' e oamp e miz eost, ha bez' e c'helle beza dour dindan. N'oan ket o vont da dabutal war ar poent-se, betek gouzout ha lavaret e vefe d'in toulla eur puñs evit gwelout.

Goulenn a ris hepken penaos e ouie e oa dour ha neket gwin.

— Ma ! emezañ, aes-kenañ. Pa vez gwin a vez, e vez hiroc'h, pe verroc'h diouz an den, an neudenn dibunet. Setu penaos e ran, pa fell d'in aoza eur benveg nevez. Mont a ran gantañ a-us d'eur feunteun pe d'eur bailhad dour. Hag e tibunan an neudenn. Pa vez ar brañselladur en e vrasa e verkan war an neudenn eur varrennig c'hlas. Pa dremenin a-us d'an dour, ne vern pelec'h, dibunet an neudenn ganin betek ar varrennig, e krogo ar maen da horjella. Ha diouz nerz, herr hag aliester an horjelladuriou e c'hellin gouzout pegen doun emañ an dour diouz ar gorre, pegen ledan naoz ar stêr dindan douar, ha pet litrad a gas ar red anezi en eur vunutenn. Aes, neketa. Barrek a-walc'h oc'h da ober kemend-all. Hogen, mar deo aour pe c'hlaou a glaskit, gwelloc'h lakaat eun tammig aour pe eun tammig glaou e-lec'h d'eoc'h da genta klask ha merka ar « poentou » war an neudenn gant pep a liou evit an danveziou a glaskit. Arabat d'eoc'h kredi e c'hellot ober gant benveg eur c'hlas all. Ret da bep hini aoza eur benveg dioutañ e-unan. Rak amañ n'eo ket an dra a

(da genderc'hel, p. 92).

# EUR VAOUEZ VAT

Kement-se a c'hoarvezas peogwir an ispiserez, — a oa en deiz-se, moarvat, soñjezonou all en he fenn, — a reas eur fazi bras.

Kas a reas d'an dimezell Mari Klec'h ar pakad a oa bet gourc'hemennet evit an dimezell Mari Doz. Ar pevarzek a viz eost e oa.

An dimezell Mari Klec'h a zigoras ar pakad nevez degaset d'ezhi gant merc'h an ispiserez. Kavout a reas kartenn he nizez hag en eur sac'hig koant madigou chokollad, eus ar re a zo traou kalet e-barz, a ranker kaout dent start evit o zrouc'ha.

An dimezell Mari Klec'h n'he doa ket a zent. Lavaret he doa a viskoaz ne gare ket ar chokollad. Bez' e oa eur plac'h yaouank koz hanter-kant vloaz Pinvidik.

Mari Doz a gavas madigou sukr blot en he fakad. Hogen se ne sell ket ouzimp.

Div eur goude, pa zeuas nizez an dimezell Mari Klec'h, eun torkad bleuniou gwenn en he dourn, da welout he moereb, kaer he devoe sacha war ar c'hloc'h, den ne zigoras.

An dimezell Mari, kuzet a-dreñv stalaf ar gegin, a welas he nizez o pellaat, hag a stardas he muzellou etre he javedou dizent.

Ne oa ket ar wech kenta he doa an dimezell Mari da glemm eus he nizez.

Morse ne oa traou brasoc'h eget an dra-mañ. Netra evidoc'h marteze. Hogen kalz evit eur vaouez n'he doa netra d'ober eus ar mintin, betek an noz, hag eus an noz betek ar mintin, nemet soñjal ha soñjal ha trei en he fenn eur bernig menoziou bihan, atao an hevelep re, hag a yae bepred war drenkaat gant an oad.

Ar wech-mañ e oa re.

Deski a raje d'he nizez !

An nizez a oa dimezet, eürus-meurbet gant he fried hag he daou vugel, eur mab hag eur verc'h.

Pa welas penaos e oa troet he moereb, ne glaskas ket kompren, nag en em zigarezi.

Deiz ar bloaz a dremenas, hag an nizez a chomas pell diouz dor an dimezell Mari.

Ar verc'h hena, he filhorez, a reas he fask kenta e mezeven goude. Ha ne voe kaset na lizer, na skeudenn, na netra d'ar voereb.

Evel-se e-pad tri bloaz. Pep unan diouz he zu.

Ha setu ma varvas pried an nizez eun deiz.

Ar voereb a zeredas da di an hini maro. Beilha a reas eun noz. Kerzout a reas e-kichen he nizez, e-doug an douaridigez.

Ha goude, echu. Dor an ti a vanas serret evel a-raok.

Da zeiz kalanna e teuas eul lizer digant an nizez, eul lizerig kaez, mezek, truezus. Heti a rae d'he moereb ar bloavez mat, hag ar vugale ivez, ha komz a raent alies anezi, ha gouzout a rae pegen fall e oant bet holl en he c'heñver, ha pegen madeleuz e oa, ha keuz o doa d'ar pez o doa graet, ha bec'h o doa o veva, ha ne chome mann eus arc'hant he fried, ha kavet he doa eur plas da vont en tiez da glask gwerza gwrierezed, ha ne c'houneze ket a-walc'h, ha ret e vije tenna ar vugale eus ar skol, hag e poke d'he moereb gant anaoudegez-vat ha karantez. Kement-se a oa skrivet en eun doare diampart, hag en dije torret kalon ne vern piou, — nemet an dimezell Mari.

E oa e-kichen an tan o lenn al lizer. Kregi a reas er pinseteziou, hag e lakaas ar follenn da rosta, goustadik.

E-pad seiz vloaz, ne zeuas ken a gelou eus an nizez.

An dimezell Mari a glevas koulskoude penaos e oa bremañ e Naoned hec'h-unan-penn : ar mab a oa aet da soudard a-raok e amzer, ha lazet e oa bet e Maroko. Evit ar verc'h, ne dalveze mui ar boan komz anezi.

Eun deiz, e teuas eul lizer adarre. An nizez a oa klañv-bras hag a c'houlenne skoazell. Re bell he doa gortozet da vont da di ar medisin, ha chomet e oa toc'hor da heul eun oberatadur.

An dimezell Mari ne zevas ket al lizer en dro-mañ. Hogen e regi a reas, ar pez a zo tost heñvel. En doare ma varvas an nizez daou viz goude.

Neuze, an dimezell Mari a brenas dilhad kañv, hag a lakaas korf he nizez da zont en-dro eus Naoned, da veza douaret e kao-bez an tiegez.

Bep bloaz e vez paeet ganti eun oferenn evit repoza an ene. Hag hañv-goañv ez eus bleuniou kaer war ar bez, hag ez a an dimezell Mari da bedi warnañ bep sul, goude ar gousperou.

ROPARZ HEMON.

## Eun darvoud souezus

E miz c'houevrer 1933 e c'hoarvezas unan eus ar souezusa darvoudou (« evenmañ ») a zo bet biskoaz en istor ar verdeadurez a vrezel. Eul lestr-reder (« krouazeur »), unan eus kaera listri-brezel Bro-Holland, ar « Zeven Provincien », — da lavarout eo, ar « Seiz Rannvro », — a voe laeret gant ar vartoloded a oa war ar bourz (« bor ») anezañ.

## Ar gouel-noz torret

D'ar sadorn 4 a c'houevrer e oa eur gouel-noz en Olek Leh, eur porz-mor en hanternoz enezenn Sumatra. Er gouel-se e c'helled gwelout c'houezek ofiser eus al lestr-reder ar « Zeven Provincien », a oa neuze war al lenn-vor (« rad »). Ganto e oa ivez P. Eikenboom, ar c'homandant.

Edo ar gouel en e vrava, pa zegouezas a-daoltrumm eun ofiser, gleb-teil, hag a gonte eun istor hag a c'helled a-boan kredi.

Martoloded al lestr, emezañ, an darn vrasa anezo paotred eus Inizi ar Sond, o doa en em savet a-enep an dek ofiser a oa chomet war ar bourz. Aet e oant kuit gant al lestr, mouget warnañ an holl c'houleier. Heñ hepken a oa deut a-benn d'en em stlepel en dour, da neuial betek eur vag-dre-dan (« kano otomobil »), da ha zont d'an douar da gas kelou.

Raktal e voe torret ar gouel kaer. Ha setu ar c'homandant hag e ofiserien o pignat prim-ha-prim war eul lestr all, an « Aldebaran », da redek war-lerc'h al lestr-reder.

## Ar redadenn

Perak o doa en em savet ar vartoloded ?

Peogwir e oa bet krennet o fae, ha peogwir e oant bet atizet gant blenierien (« meuneur »), darn komunistred (hervez ar c'hazetennou), ha darn emrenerien (« otonomist »), tud hag a fell d'ezo adc'hounit o frankiz evit Inizi ar Sond, gwasket abaoe kantvedou gant Bro-Holland.

Kredi a rae an ofiserien ne vije ket gouest an emzaverien (« revolte ») da verdei dre voriou roc'hellek ar strollad-inizi. Koulskoude, ar « Zeven Provincien » a rede mat ha buan, buanoc'h eget an « Aldebaran ».

A-berz ministred Bro-Holland e voe roet urz da gas listri herrek (« rapid ») war-lerc'h al lestr-reder.

Difennet e voe dreist-holl klask en em glevout gant an dispac'herien.

Birvi a rae ar vro a-bez. Tud an inizi a oa a-du hag a-galon gant ar vartoloded emzavet. Ar pezh na vire ket ouz ar renerien, — maered, kargidi (« foñksioner ») hag all, — da bellskriva (« telegrafie ») da Vro-Holland, en eur doui e oant sujidi leal d'He Meurded (« Sa Majeste ») Wilhelmina.

D'ar 5 a c'houevrer, e kaser daou lestr-splujer (« sou-mareñ ») hag eun diskenner-tarzerzed (« mouieur deu min ») war-lerc'h ar « Zeven Provincien », na ra mui nemet eiz skoulm, e-lec'h pemzek a rae en derc'hent.

D'ar 6 e kaser listri-reder bras, e-giz ar « Java » hag ar « Gouden Leeuw ».

Ar « Zeven Provincien » a ya goustad. Hogen al listri all a ya goustad ivez. N'eus ket a vall da gaout. Abred pe ziwezat e vo paket an dispac'herien.

## An trouz en Holland

En Holland, avat, ez eus mesk ha trabas. A bep seurt brudou a red. Lavaret e vez penaos komandant ar « Zeven Provincien » a oa bet degemennet d'ezañ gant poliserien e vije en em savet e vartoloded. Ha n'en doa graet van ebet (Torret eo bet abaoe eus e garg). Konta a reer zoken penaos e oa eur plac'h dindan... Met kement-se n'eo nemet teoda-dou.

Hollandiz, kroget ar spont enno, a c'houlenn ma vo kastizet start an dispac'herien. Hag ar gouarnamant a lavar e vint !

## An emzaskor (« kapitulasiñ »)


D'an 10 a c'houevrer, emañ ar « Zeven Provincien » dirak striz-mor ar Sond, listri-brezel tro-wardro d'ezañ.

Kaer a zo bet goulenn digant an emzaverien en em zaskori (« seu rañdr »), respontet o deus « nann » gant goaperez. O gwelout a reer war bourz al lestr-reder o trei ar c'hanoliou etrezek ar re a zo war o lerc'h.

Da eiz eur hanter e c'houlenner diganto, evit ar wech diweza, en em rei. « Nann », a respontont adarre.

Neuze e weler, e-giz sparfelled bras, peder dour-nijerez (« idravioñ ») o sevel en oabl. An holl a zo troet o sellou war-du ar « Zeven Provincien ».

(da genderc'hel, p. 92)



## Beaj-vor Ross (1841)

Niverus e voe ar voraerien a glaskas hent penn-ahel ar c'hreisteiz (« pol sud »). En o zouez mene-gomp ar Saozon Cook ha Weddel, ar Rusiad Bellinghausen, ar Gall Dumont d'Urville, an Amerikan Wilkes. Ne deas ket, avat, an darn vuia anezo en tu-hont d'an 70-vet derez led (« deugre deu latitud »). Koulskoude e tizas Weddel ar 74-vet derez led kreisteiz (« meridional »).

Er bloavez 1841, an Erebus hag an Terror, daou lestr (« navir ») ar Saoz Ross, o vont etrezek ar c'hreisteiz, en em gav gant ar skourn e-kichen ar c'helc'h pennaheñ (« serkleu poler »). N'eus anezañ, avat, nemet skournennou (« glasoiñ ») bihan o c'holei ar mor. En diabell, war-du ar c'hreisteiz, an oabl teñval a verk ez eus ahont eur mor diskourn. Kenderc'hel a ra Ross gant e veaj, hep harz ebet, betek an 78-vet derez led. En em gavout a ra eno gant eur voger skourn uhel ha serz. Merdei a ra a-hed ar gael (« barier ») se e-pad pemp kant kilometrad hep kavout eun digor war-du ar c'hreisteiz, nag eul lec'h ma c'hellfe douara. Dirak an aod-skourn-se e chom souezet-mik ar vartoloded. An tornaod, tro ha tro lenkr (« lis ») pe trouc'het gant faoutennou

diniver, a gouez a-souñ er mor. A-wechou ivez ez eo toulllet gant keviou (« kavern ») ken doun ha ken bras ma c'hellfe an Erebus hag an Terror mont e-barz. Kaset eo eur martolod betek penn ar wern vras, da welout petra a zo a-dreñv ar voger-se. An tornaod, avat, a zo uheloc'h eget ar wern. En eul lec'h, koulskoude, ez a war ziskenn, ha diamen (a-bell), war-du ar c'hreisteiz, e wel eur gompezenn-erc'h (« plen deu nej ») divent (« immañs »). Da greski c'hoaz souez an dud-se, a zo ar re genta da zont eno, da lakaat an arvest (« spektakl ») da veza iskisoc'h c'hoaz, e tarz diouz ar menezioù skournet a weler en diabell eur menez-tan (« volkañ »), a zo o tivogedi hag o ruzia ar c'houmoul a dremen a-us d'ezañ (a-zioutañ).

Eur gavadenn gaer e oa hounnez ! Gwir hent penn-ahel kreisteiz an douar a oa bet kavet.

## Scott e douarou skournet ar c'hreisteiz (1902-1903)

Er bloavez 1902, ar Saozon a gemer adarre an hent kavet gant Ross. Scott hag e vartoloded, e bourz (« a bor ») al lestr Discovery, a chom e-pad tri bloavez en douarou skournet da wladenni (« vizite ») « Kael Ross ». Kavout a reont er sav-heol Douar Edward VII. Tra ma chom tud e bourz an Discovery d'ober arnodennou skiant (« eksperiañs siañtifik »), Scott a ya war-raok, war ar « gael ». O heulia ar menezioù en tu-hont d'an Douar Viktoria, e tiz, gant kalz a boan, an 82-vet derez led. Er bloaz goude e pign gant skournredennou (« glasie ») an Douar Viktoria, hag e tiz da dri mil metrad uhel-der eur gompezenn-skourn divent heñvel ouz skournwisk (« kalot glasier ») ar Groenland.

Ar penn-ahel a c'helle beza tizet ! Diskouezet en doa Scott penaos ober da vont betek ennañ. Ne oa nemet tri mil kilometrad da ober war droad e-pad hañv ar penn-ahel, da lavarout eo, eus miz du betek miz c'houevrer. Ret e oa ober pemp kilometrad warnugent bep devez, ha ne oa ket dic'hallus (dibosupl) an dra-se.

## Shackleton war-nes tizout ar penn-ahel (1908).

Er bloavez 1907, Shackleton, unan eus kenseurted Scott, a gemenn d'ar bed e raio kement a vezo en e c'halloud da dizout penn-ahel ar c'hreisteiz.

(da genderc'hel, p. 95)



# RICHARD WAGNER

Setu hanter-kant vloaz abaoe ma varvas Richard Wagner. En e vro c'henidik hag e lec'h all, emeur oc'h ober goueliou hag oc'h embann pennadou-skrid en e enor. Evitañ da veza kollet kalz eus e vrud, abaoe derou ar c'hantved-mañ, sellet e vez atao evel unan eus brasa sonourien (« muzisieñ ») ar bed. Evit meiza (« sezir ») pegen brudet e chom c'hoaz, n'eus nemet konta, da skouer, pegement eus e oberou a vez skignet bemnoz gant ar skinarouezlec'hiou (« post deu te-es-ef »). Ha bez' ez eus eun den desket war an douar ha n'en deus ket klevet eun dra bennak gant Wagner ?

## Ar vugaleaj

Ganet e voe Wagner d'an 22 a viz mae 1813, e Leipzig, an navet bugel eus e diegez (« famiy »). E dad, hag a oa implijet er gêrreiz (« polis »), a varvas nebeut miziou goude e c'hanedigez. E 1815, e vamm a addimezas gant eur mignon d'he c'henta pried, Ludwig Geyer, hag heñ eo a savas ar vugale, hag a voe eur gwir dad d'ezo.

Geyer, a oa c'hoarier (« akteur ») diouz e vicher, a gavas eun implij e c'hoariva (« teatr ») Dresden, hag eno eo e kreskas ar paotrig Wagner.

Dedennet e voe a-vihanik gant ar sonerez (« muzik »). Penaos ober, avat, evit deski ? N'en doa ket a arc'hant, hag e gerent a oa a-enep. Dont a reas a-benn koulskoude da gaout eun nebeut kenteliou, e kuz, hag a voe gwall nec'het evit paea.

## Ar studier

War-dro 1830, Wagner a oa studier e Skol-Veur Leipzig. Eur mare a strafuilh politikel e oa, hag ar studierien yaouank, dre Europa a-bez, a oa a-du gant ar menozioù nevez, menozioù ar frankiz pe an dispac'h. Bez' e voe Wagner e-touez paotred ruz an amzer-se. Daoust d'an amzer a gollas gant ar politikerezh, neuze eo e savas e oberou kenta, — nebeut anavezet hizio, — en o zouez eur pezh-sonerez en enor da vro Bolonia.

## An dienez

Beaji a reas. Labourat a reas e-giz blenier laz-seni (« chef d'orkestr »). Sevel a reas c'hoariganou (« opera »), ar re-se ankounac'haet ivez.

E Magdeburg, e wel eur c'hoarier, Minna Pla-

ner, hag e kouez e karantez ganti. Dimezi a reont e 1836, e Koenisberg.

Ne voent ket eürus. Diaes e oa beva gant Minna, ha diaesoc'h marteze beva gant Wagner. Minna, avat, a oa eur vaouez a benn gouest da zerc'hel eun ti, ha talvoudus e voe d'ezañ kaout anezi en e gichen.

Rak e-pad eun nebeut bloaveziou, e rankas Wagner bale bro, dianav ha diarc'hant, e Londrez da genta, ha goude e Paris, o skei ouz dor hemañ pe ouz dor henhont, o klask gounit ar bara.

E-doug an amzer-se e krog da sevel ar c'hoariganou o deus graet e vrud.

## Dresden

E 1842, emañ e Dresden. Eno e voe c'hoarier « Rienzi ». Hag ar c'hoarigan-se, disheñvel-bras diouz kement a dlee ober da heul, a voe deut-mat spontus.

N'heller ket lavarout an hevelep tra eus an daou c'hoarigan a zeuas goude, « Al Lestr-Nij Hollandat » ha « Tannhäuser », ar re genta evelato eus e c'hoariganou bras. Ne voent ket komprenet gant an dud.

Eun doare sonerez, eun doare c'hoarigan nevez a oa ganet ! Ret e oa gortoz eta !

Kavet en doa Wagner eur garg vat evel mestr ar chapel e Lez bro Saks. Setu avat 1848 o tont, hag an dispac'h en Europa adarre. Adarre emañ Wagner e-mesk ar re ruz. E 1849 emañ paket en eun abadenn fall, hag e rank tec'hout dindan eun ano faos.

E-pad daouzek vloaz en doa da gantren eur wech c'hoaz er-maez eus e vro.

## An harlu

Chom a ra Wagner e Bro-C'hall da genta, ha neuze e Zurich. Savet en deus « Lohengrin ». E geneil (« ami ») mat, ar sonaozour (« koñpoziteur ») ha pianoour bras Liszt, a laka an oberenn nevez da veza c'hoarier. Hag en dro-mañ ez eo ar berz (« sukse »), a skign e ano dre ar bed.

E Zurich, — ma tlee chom dek vloavezh, — e sav Wagner an darn vuia eus e oberou : tamm eus ar rummad c'hoariganou anvet « Gwalenn an Niebelungen », « Tristan hag Isilt » hag « Ar Bennganourien ».

Labourat start a ra. Hogen netra d'ober evit kavout eur rener-c'hoariva a asantfe c'hoari e c'hoariganou. E 1864, emañ Wagner e barr ar baourentez ha tost dic'hoanag (« dezespere »).

(da genderc'hel, p. 95)

# Pardon bras ar mor e Sant-Malo

## DINDAN AR GLAO

Bep bloaz, kent kuitaat ar vro da vont du-hont war uhelennou an Douar-Nevez, da besketa ar moru, pesketaerien Sant-Malo a ra eur gouel kaer, hag eur bern tud a zired di, dreist-holl pa vez kaer an amzer. Ar pardon bras-se a zo anvet pardon ar mor, pe c'hoaz pardon an Douar-Nevez.

Tud o doa lavaret d'in : it du-hont, traou kaer a zo da welout, ha c'houi a gonto goude se da lennerien « Kannadig Gwalarn » ar pezh ho pezo gwelet.

Abret edo ar pardon er bloaz-mañ : d'ar 26 a viz c'houevrer, e-pad eur reuziad amzer fall ouspenn, tri pe bevar devez a oa edo ar glao oc'h ober diehan, ha diouz an treñ ne weled nemet douarou beuzet a bep tu, prajeier goloet gant an dour. Ne oa nemet ar c'hleuzioù hag ar gwez o verka ne oa ket eur stêr a bep tu. Eun druez.

Daoust ha kollet e vije adarre ar pardon en abeg d'ar glao ? Diouz ar mintin e oa sklaeraet eun tam-mig an amzer, ha p'en em gavjomp e Sant-Malo da nav eur hanter, an heol a ziskoueze zoken e fri dre wask ar c'houmoul. Siouaz ! a-raok unnek eur edo ar glao oc'h ober adarre ; evit an deiz !

## SANT-MALO.

Sant-Malo a zo eur gêr goz. En eur welout anezi e kredfec'h gwelout eur c'hreñvlec'h bennak, kelc'hiet evel ma 'z eo a bep tu gant mogerioù uhel, — hag eur c'hreñvlec'h eo bet e gwirionez e-pad pell amzer. Savet eo bet en eun enezenn, bremañ staget ouz an douar. An diouer a frankiz emichañs eo a redias an dud da sevel ar gêr souezus-se gant ruiou striz-striz, riboulou kentoc'h.

Sant-Malo a zo bet atao brudet kaer en istor hor bro. Diouz Sant-Malo eo genidik Jakez Karter, anavezet mat gant lennerien « Kannadig Gwalarn » ; heñ eo a gavas an Douar-Nevez hag a ergerzas ar C'hannada. Rei a reas d'ar vro-se an ano a « VREIZ-NEVEZ » evit derc'hel soñj eus e vro c'henidik. Diwezatoc'h eo bet brudet kaer « korserien » Sant-Malo, int a sailhe dizamant war ar bagou estren hag a zegase anezò d'ar porz gant o c'hargamant. An holl a anavez ano Porkon a Varbinez hag hini Surkoul. Ar gêr a c'hounezas evel-se pinvidigeziou bras. Anat eo ar binvidigez-se pa weler an tiez bras kaer a zo troet ouz an aod.

Bremañ, martoloded Sant-Malo ha re ar gêr dosta, Sant-Servan, a vez o pesketa, en Douar-Nevez dreist holl. E-pad pell amzer o deus gounezet mat o buhez gant ar vicher-se. Bremañ, siouaz, eo disheñvel ar stal ganto. Ne gaver mui a werz d'ar pesked hag ar vartoloded kaez ne c'hounezont mui o zamm kreun. Ha kalz bagou o deus ranket dizarmi.

## AR PARDON.

Er bloaz-mañ pardon ar mor a vije bet kaeroc'h c'hoaz ma vije bet an amzer a-zoare. An ao. Mignen, arc'heskob Roazon a oa e penn ar gouel. Da zek eur e c'halve ar c'hleier an dud da vont da selaou an oferenn-bred en iliz-veur, unan eus kosa ha kaera ilizou Breiz, — eun eskob a oa gwechall e Sant-Malo evel ma oa e Kastell-Paol hag e Landreger ; abaoe an Dispac'h, avat, n'eus bet hini ebet. — Leun-chouk e oa an iliz, ha kalz tud a rankas selaou an oferenn en o sav. An ao. Mignen a reas eur brezegennig kaer d'ar vartoloded a oa eno. Diskouez a reas ar fiziañs a dle ar vartoloded kaout e Doue, o gwarez hag o frealz, p'emaint aet kuit evit pemp pe c'houec'h miz, marteze evit chom hep dont en-dro. Rak poanius hag arvarus eo micher ar pesketaer en Douar-Nevez.

## O VINNIGA AR MOR.

Eur wech echu an oferenn-bred ez eas ar brosesion dre Ruiou kêr betek war ar mogerioù bras a zo dirak ar mor. Eno el lec'h anvet « an Holland » — a zalc'h soñj emichañs eus an amzer ma rae tud Sant-Malo kenwerz gant an Hollandiz, — troet ouz ar mor Bras, an ao. Mignen a vinnigas ar mor hag a lavaras eun « De Profundis » evit ar re varo. Ne badas ket pell al lidou, gant pebez kalon avat e voe pedet eno dirak ar mor-se a ro boued d'an dud, a zougo ar vartoloded e-pad an hañv a-bez, ha ma 'z eus beziet enañ kement anezo ivez siouaz.

## O VINNIGA AL LISTRI.

Goude-se e tiskennas ar brosesion betek ar porz evit binniga al listri-pesketa. Ar bagou goude ar mor, evel ma vez graet bep bloaz. Daoust d'an amzer fall e oant bet fichet eus ar c'haera, ha renket e oant holl aze a-hed ar c'hae, eun daou-ugent bennak anezo. An ao. Mignen hag ar veleien all a bignas en

(da genderc'hel, p. 94)

## SKOL DRE LIZER

evit deski ar brezoneg

Skriva da:

OBER

R. Delaporte. Boest-Post 28, Roazon

(kendalc'h ar b. 86)

ra al labour, an den an hini eo. Ha gant pep den pep a stumm labour.

N'ouzon ket, emezañ, perak e krog ar maen da luskella ; ne oar den kennebeut perak e sav lost ar forc'hig kelvez etre daouarn klaskerien 'zo. Ar forc'hig (ar forc'h pennboell, a lavare unan gwechall e Tredrez) a zo ken aes all ober ganti. N'ouzer ket avat gant petra a gejer ganti, dre n'he deus nemet eun doare hepken da sevel he lost, koulz gant dour ha gant mein glas. Gant ar walenn, eur wech graet ar merkou war an neudenn, e c'hellit kavout ne vern petra ha gouzout petra eo. Gant kalz aked ha studi e c'hellit zoken gouzout ha klañv pe yac'h e vez eun den, dre ma tro ar maen war an tu dehou pe gleiz. Hag o pourmen ho penveg a-us d'e izili, an eil war-lerc'h egile, e kavot pehini an hini klañv. Skoazell vras d'eoc'h mar doc'h medisn. Ma n'eus ac'hanoc'h nemet eur paour kaez labourer-douar, gwelloc'h a se c'hoaz ; barrek e viot da c'houzout ha mat eo an had hoc'h eus prenet, pe ha prest eo ar vuoc'h da hala. Grit ganti hag e welot.

Mat an ali, a dra sur. Hogen n'em eus ket kredet c'hoaz ober dioutañ, gant aon rak an diaoul. Piou a raio ?

Erwan TORRAVAL.

### An niver trizek

An itron (d'eur plac'h deut d'en em ginnig evel matez) :

— En ti-mañ 'z eus trizek bugel.

Ar plac'h :

— Trizek bugel !

— An itron :

— Arabat d'eoc'h kaout aon. Pevarzek a vo hep dale !

## Rakprenit EUR BREIZAD er C'HANADA

Priz: 15 lur

moulet war baper kaer

gant e-leiz a skeudennou

(kendalc'h ar b. 88)

Unan eus an dournijerezed a dremen a-zioc'h al lestr-reder. Diskenn a ra eun tammig. Eun dra bennak a gouez, hag a sank en dour. Eun dra bennak a gouez adarre.

Ar wech-mañ e tarz eur pikol flamm eus ar bourz...

Daouzek munutenn goude, ec'h en em zaskor an emzaverien.

### Hag echu eo ?

Triouec'h den lazet, pemp-war-nugent gloazet.

Ar vartoloded hollandat a oa war bourz al lestr-reder, — ha zoken an isofiserien (« souz-ofisie »), — o doa en em savet evel ar re all.

An ofiserien chomet war al lestr ne oa bet graet droug ebet d'ezo.

Hag e talc'h al liziri da zont d'ar rouanez Wilhelmina, o toui n'he deus en Inizi ar Sond nemet sujidi leal.

Hogen petra a soñj e doun he c'halon ar bobl niverus he deus labourer ha poaniet keit-all, ha gouzañvet evit pinvidikaat Bro-Holland ?

# PAJENN AR VUGALE

## ar Yarig Ruz



Edo ar yarig ruz o skraba er porz, pa gavas eur c'hreunenn winiz.

— Piou a yelo da hada ar winizenn-mañ ? emezi.

— N'eo ket me, eme ar c'hilhog-Indez (« defñ-doñ »).

— Na me, eme an houad (« kanar »).

— Ac'hanta, eme ar yarig ruz, me eo a yelo !

Hag hi da hada ar winizenn.

Pa voe dare an ed, e lavaras-hi :

— Piou a yelo da gas ar greun-mañ d'ar vilin ?

— N'eo ket me, eme ar c'hilhog-Indez.

— Na me, eme an houad.

— Ac'hanta, eme ar yarig ruz, me eo hen kaso.

Hag e kasas ar greun d'ar vilin.

Pa voe malet ar gwiniz, e lavaras ar yarig :

— Piou a raio bara gant ar bleud-mañ ?

— N'eo ket me, eme ar c'hilhog-Indez.

— Na me, eme an houad.

— Me a ray eta, eme ar yarig ruz. Hag e reas bara gant ar bleud.

Pa voe poaz ar bara, e lavaras ar yarig :

— Piou a zo o vont da zebri ar bara-mañ ?

— Me, eme ar c'hilhog-Indez.

— Me, eme an houad.

— Ne deo ket c'houi, eme ar yarig ruz. Me ha va re vihan eo hen debro. Keut ! keut ! Deuit, va bihanigou !

Displeget gant ABEOZEN.

## FENTIGELLOU

### Eur fur a vedisin

Ar medisn :

— Ho pried, itron, a rank diskuiza. Setu amañ eul louzou da gousket.

Ar wreg :

— Ha pegoulz e tle kemer al louzou-se ?

Ar medisn :

— N'eo ket evitañ. Evidoc'h eo al louzou !

### N'eo ket echu

Fantig a zo aet d'ar skol evit ar wech kenta. He mamm a c'houlenn outi :

— Desket ec'h eus kalz traou ?

Fantig :

— N'em eus ket. Ar vestrez he deus lavaret e vije ret d'in dont adarre.

## Kenstrivadeg ar Vugale

Setu amañ eur genstrivadeg (« koñkour ») nevez evit ar vugale; Bez' ez eo ar wech-mañ eur gudenn niveroniezh (« problem d'arismetik ») :

### KUDENN

Bez' ez eus 70 lur da ranna etre Gwilhou, Yann ha Per.

Gwilhou a rank kaout diou wech muioc'h eget Yann, ha peder gwech muioc'h eget Per.

Pegement en devo pep unan ?

Ar vugale a ranko skriva o ano, o oad hag o chomlec'h (« adres »).

Neuze e rankint skriva ar pezh o deus kavet. Muioc'h a boentou a vo roet d'ar re a skrivo an diskoulm (« solusioñ ») e brezoneg en e hed.

Ar respontou a dleo en em gavout gant rener « Gwalarn », Boite Postale, 75, Brest, a-raok ar c'henta a viz ebrel.

Priz kenta: 10 lur hag eul levr kaer.

Eil priz: 5 lur hag eul levr kaer.

Trede priz: eul levr kaer.

D'al labour eta, bugale !

(kendaic'h ar b. 91)

### PREST DA VONT EN HENT.

Echu ar pardon. Kempennet eo al listri, hag ar bagou bihan, ar re a dalv d'ar besketaerien da stigma o linennou ahont, hag anvet ganto « doris » a weler o sec'ha a-vernion, nevez-livet. E-pad miz meur, pa vo ar mor a-du, ez aio kuit ar vartoloded evit eur bloaveziad all.

Prest int.

D. K. KONGAR.

eur vagig-dre-dan hag a dremenat goustad dirak al listri en eur vinniga pep hini anezo. Eur wech graet tro ar porz gantañ e oa kreisteiz hanter.

Goude lein ez eas da vinniga er memes doare bagou ar porz tosta : Sant-Servan.



An tan e ti ar Reichstag. — Cellon, Paris.



**1.000.000 !**  
**EUR MILION**  
**A DUD**  
**A GOMZ BREZONEG !**  
**HOGEN**  
**PET A OAR**  
**LENN BREZONEG ?**  
**EVIT DESKI D'EZO**  
**LAKAIT ANEZO**  
**DA LENN « KANNADIG GWALARN »**

(kendalc'h ar b. 89)

Soñj Shackleton a oa mont gant e lestr e pleg-mor ar Balumed (« balen »), a zo kant hanter-kant kilometrad tostoc'h eget pep poent all eus ar « gael », hag ac'hano loc'ha war-du ar penn-ahel. Skournet eo, avat, ha ret eo d'ezañ dont en-dro da Enez Ross.

D'an 29 a viz here 1908, Shackleton hag e dri c'henseurt a ya kuit etrezek ar penn-ahel gant pevar marc'hig (« pone ») ha peder zranell (« treno ») ; 91 deveziad bevañs a zo ganto. D'ar 26 a viz du e tremenont en tu-hont d'al led (« latitud ») tizet gant Scott, hogen, d'an tri a viz kerzu, er 84-vet derez led, e tegouezont dirak menezioù a stank d'ezo an hent. Diaes eo skeuliata (« eskalade ») anezo. Ret eo d'ezo laza tri marc'hig skuiz-divi, ha nebeut goude e kouez ar pevarvet en eun toull hag e steuz (steuzia : « disparetr ») ennañ. Eur gwall goll eo hennez evit Shackleton hag e geneiled (« koñpagnonñ »). Hiviziken e vo ret da bep unan anezo stleja eur samm a gant kiloiad. An diaesterioù a ya war greski da bep kammed. Heñvel eo ar skourneg (« chañ deu glas ») Beardmore ouz eur mor fuloret skournet a-daol-trümm. Faoutou ha toullou diniver a gavont war o hent, ha ret eo d'ezo trei-distrei da gavout eur pont-erc'h d'o zreiza. Meur a wech e torr ar pontou bresk (« frajil ») se dindan o fouez, hag

eur burzud eo na vezont ket koundounet (« añglouti »). Ar gwall amzerioù a vir outo da vont war-raok, an droug-menez a grög enno, ar yenijenn a ya da dregont derez dindan o-gwan (« zero »), hag a skourn o zreid hag o daouarn.

Erfin, spi ebet ganto da vont betek ar penn-ahel, en eur strivadenn (« efor ») diweza ez eont da blanta banniel Bro-Saoz e 88 derez 22 vunutenn led kreisteiz. Mont war o c'hiz a reont goude, hep beza sur da gaout bevañs a-walc'h da dizout o lestr. Eur wech adarre ez eo bet trec'het an Den gant an Natur !

(da genderc'hel),

EREL KERLALBAN.

(kendalc'h ar b. 90)

### Loeiz II

Saveteet e voe dre eur gwir vuzud. Edo o ren e Bavaria eur roue damziskiant, hogen unan a gare ar sonerez hag a ouezas kompren Wagner. Rei a reas d'ezañ e skoazell, evel na voe roet biskoaz d'eun arzour (« artist ») gant roue ebet.

Loeiz II a reas muioc'h eget lakaat peziou Wagner da veza c'hoariet. Sevel a reas d'ezañ eur c'hoariva, e Bayreuth, graet a-ratoz evit e oberou. Digoret e voe e 1875, gant « Gwalenn an Niebelungen », da lavarout eo : « Aour ar Roen », « Ar Valkirienn », « Siegfried » hag « Amheol an Doueed ».

### Ar maro

E 1877, Wagner a skriv e oberenn diweza, « Parsifal », tennet eus ar marvailhoù keltiek koz. Taget eo gant ar c'hleñved, hag e varv e Venezia, d'an 13 a viz c'houevrer 1883.

**Kasit ho labourioù mouler, kartennou, embannou, levrioù, kazetennou da ober en**  
**Imprimerie Commerciale et Administrative**  
**17, rue d'Algésiras, Brest**  
**Al labour gwella d'ar prizioù izela**



# GWALARN

Kelaouenn vizek

Rener: Roparz Hemon

Priz: 30 lur ar bloaz (broiou estren: 35 lur)

Chomlec'h:

Journal de Gwalarn, Boite Postale 75, BREST

(C.G. 96.38, Rennes)

# KANNADIG GWALARN

Kazetenn vizek

Rener: Roparz Hemon

Priz: 10 lur ar bloaz (broiou estren: 15 lur)

Adres:

Journal de Gwalarn, Boite Postale 75, BREST

(C.G. 96.38, Rennes)

NIV. 7 — EBREL 1933

PRIZ : PEVAR REAL

# KANNADIG GWALARN

Eun Niverenn bep Miz — Ar Pemzek eus ar Miz

## TAOLENN

◆  
KELEIER AR MIZ

◆  
Kontadenn  
EUR VAQUEZ VAT

◆  
AR C'HLASKER-DOUR  
AR « ZEVEN PROVINGIEN »  
RICHARD WAGNER  
PENAOE E VOE KAVET  
PENN-AHEL-BED  
AR C'HREISTEIZ  
PARDON SANT-MALO

◆  
AR MIZ BREZONEK  
PAJENN AR VUGALE  
A-ZEHOU HAG A-GLEIZ  
FENTIGELLOU

BIBLIOTHEQUE  
QUIMPER  
DIOCESAINE

KELEIER  
AR MIZ

◆  
AR MIZ  
BREZONEK

◆  
FINOC'H  
— FINA

◆  
PLEG-  
MOR  
ALONG

KOMZIT BREZONEG D'IN, MAMMIG!



BARZED  
YAOUANK  
BREIZ

◆  
SAMUEL  
PEPYS

◆  
PAJENN  
AR  
VUGALE

◆  
A-GLEIZ  
HAG  
A-ZEHOU

# GERIOU-KROAZ

# A-GLEIZ hag A-ZEHOU

1	2	3		4	5	6	7
8			9				
10		11				12	
13	14			15			
	16			17		18	
19			20		21		22
23	24		25			26	
27		28			29		
30				31			

## Eun eskob nevez

Eun eskob nevez a zo bet anvet, e-lec'h ne oa bet eskob ebet a-raok, e trevadenn (« koloni ») c'hall Gwiana. Eur Breizad eo, eus Kastellin, an Aotrou Courtay. E-pad pemp bloaz war-nugent eo bet o labourat er broiou pell. Sakret eo bet eskob e Kemper.

An darn eus Gwiana a zo dindan Bro-C'hall a zo bras a-walc'h, brasoc'h eget Bro-Skos. N'eus nemet war-dro eur seizvedenn a zo bet difraostet. Ar peurrest a zo dindan koadou bras, ha n'eo poblet nemet gant eun nebeud Indianed. Fall vrudet eo Gwiana abalamour d'an dorfedourien a vez kaset di gant ar C'hallaoued.

Eun darn all eus Gwiana a zo perc'hennet gant Bro-Saoz hag eun darn all c'hoaz gant Bro-Holland. Ar Saozon hag an Hollandiz a zo deut a-benn da ober eno traou a-zoare, ha pinvidik-meurbet eo an tachennou a zo d'ezo. N'eus nemet ar C'hallaoued, evel atao, n'int bet gouest da ober netra a vad, nemet kas an dizurz hag al leziregez, evel ma reont e pep lec'h.

An eskob nevez en deus lavaret e felle d'ezañ beva e-giz an dud paour a vo tro-war-dro d'ezañ. Pa voe komzet outañ eus ar risklou bras a zo da gavout eno, e respontas :

— N'eus korn ebet war an douar hag a vefe dilezet gant Doue.

## Evit al listri

Pelec'h emañ an amzer ma veze ret souba eur gorden en dour evit gourhedi, da lavarout eo, muzulia dounder ar mor ?

Ober a reer bremañ gant an tredan (« elektrisite ») kalz buanoc'h ha kalz gwelloc'h ivez, ha savet e vez evit se ijinnou (mekanikou) nevez, pep unan gwelloc'h eget an hini a-raok.

An hini diweza, graet e Bro-Saoz, n'eus evit ober ganti nemet poueza war eun nozelenn (boutoun). Rei a ra d'eoc'h dioustu dounder ar mor, ne vern pegen fall eo an amzer, hag hep ma vefe ezomm da zigreski tiz al lestr. Merka a ra ouspenn penaos emañ goueled ar mor, blot pe galet.

Pa soñjer e vez kollet an hanter eus ar bagou dre steki ouz ar goueled, e komprener pegen talvoudus eo beza barrek da vuzulia an dounder buan ha ken alies ha ma karer.

(da genderc'hel p. 111)

# KELEIER AR MIZ

## E Breiz

Disul 19 a viz meurzh, tud Roazon a oa en em vodet evit lavarout ne felle mui d'ezo paea an tailhou nevez, lakaet hep ehan war o' choug gant gouarnamant Paris. Ar prefed hag ar maer ne felle ket d'ezo-e vije graet ar vodadenn hag a c'halvas tost da vil archer diouz Bro-C'hall. E pep korn e weled diouto, fuzuilhau ha sabrinier ganto. Evel gwechall en amzer ar roueed ez eus c'hoant lakaat ar Vretoned da baea dispignou ar C'hallaoued. Ne fell ket d'imp, avat, paea evit ar re all.

## E Bro-Saoz

N'eus bet kaoz e Bro-Saoz nemet eus prosez eun ofiser yaouank, al letanant Baillie-Stewart, tamallet da veza gwerzet paperou d'an Alamaned. Mesket gant istor ar paperou e oa istor eur verc'h. Digarez eta d'ar c'hazetennou saoz, — al lousa war an douar, — da rei d'o lennerien e-leiz eus ar pezh a garont.

Emañ gouarnamant Bro-Saoz o klask rei eun diazez nevez da renadurez Bro-Indez, gant eur Parlamant savet diwar skouer Parlamant Bro-Saoz. An darn vrasa eus ar Saozon a zo a-enep, o lavarout n'eo ket d'ar poent m'emañ ar renerez dre Parlamant o koueza eun tammig dre-holl ma tleer rei anezañ d'eur bobl ken niverus ha ken dizek.

## En Alamagn

Kemmou bras a zo deut en Alamagn da heul done-digez an Nazied e penn ar gouarnamant.

Kenta tra o deus graet paotred Hitler eo klask kas da get an holl strolladou politikel enebourien d'ezo. Ar Gouarnamant hag ar Sozialisted a zo bet torret o c'hevredigeziou, difennet o c'hazetennou, prizoniet o renerien. An tu politikel kreiz, da lavarout eo, ar Katoliked, a zo bet ret d'ezañ plega, pe e vije c'hoar-vezet gantañ kemend-all. Betek ouz paotred Hugenberg, — paotred an tu dehou, — ec'h en em gemer an Nazied, c'hoant d'ezo da ren o-unan-penn ha da ober pezh a garont.

Ar Reichstag, bodet e Potsdam, en Iliz ar Gwar-nizon, a zo douaret enni ar roueed Frederig-Gwilherm I ha Frederig Veur, en deus graet pezh a blijed da Hitler. N'oa eno nemet eun darn eus ar gannaded. Ar re all a oa e prizon.

An Nazied o deus en em droet dreist-holl ouz ar Yuzevien. Ar re-mañ a zo bet gwallgaset e meur a lec'h. Ar varnerien, ar vreutaerien (alvokaded) yuzevo

a zo bet torret diouz o c'harg, ha difennet eo bet prena e staliou ar Yuzevien. Yuzevien ar bed-holl a zo savet a-enep an Alamaned hag a lavar e raint droug d'ezo kement ha ma c'hellint.

D'ar c'henta a viz ebrel ez eus bet eur gouel bras e porz-brezel Wilhelmshaven. Lakaet e voe e servij al lestr-reder « Deutschland » ha douret al lestr-reder « Amiral Scheer », a zo breur d'ezañ. Bez' ez eo evel dasorc'hidigez (rezureksion) merdeadurez-vrezel an Alamaned. Dre holl e weled o c'hournijal banniel koz an Impalaered, du, gwenn ha ruz, e-kichen banniel an hevoud (kroaz he brec'hiou pleget), a zo arouez (merk) an Nazied.

## Mac Donald-Mussolini

Mussolini en deus pedet Mac Donald, kenta ministr ar Saozon, da vont d'e welout e Roma d'an 19 a viz meurzh. War a lavarer, e klask Mussolini sevel eun emgleo etre ar pevar galloud bras e kuz-heol Europa, Bro-Saoz, Bro-C'hall, Italia, Alamagn, da adaoza an traou. Ne ouzer dare, avat, ar pezh a raio Bro-C'hall, a rank soñjal eun tamm en he c'henseurtezed, Polonia, Tchec'ho-Slovakia, Roumania ha Yougo-Slavia.

## E Rusia

C'houec'h ijinour saoz a zo bet arestet gant gouarnamant Moskov, war zigarez o dije distrujet traou ha spiet war ar volcheviked. Tenn an darempredou etre Rusia ha Bro-Saoz diwar se.

## Er Stadoù-Unanet

Diaes ar c'henwerz e bro an dollarou. Gwasa maread evit an arc'hant. O c'hortoz, emeur o vont da aotrea gwerzidigez ar bier, ar pezh a roio kalon d'an dud marteze.

## Er Sav-Heol pella

Bro-Sina a zo trec'het gant Bro-Japan. Emañ ar rannvro Jehol a-bez e dalc'h Japaniz.

D'ar 27 a viz meurzh, Bro-Japan he deus roet da c'houzout ne felle mui d'ezi beza ezel eus Kevredigez ar Broadou, goude beza bet tamallet gant ar Gevredigez-se. Hervez ar reolennoù, ne c'hello mont kuit nemet a-benn daou vloaz.

Daoust hag e ranko neuze Japaniz diskregi diouz Inizi ar Mor Habask, bet fiziet enno gant Kevredigez Jenev ? Lavarout a reont nann, pe e vo ret diframma an inizi-se diouto dre an armou.

## A-led : A-sounn :

- |                            |                          |
|----------------------------|--------------------------|
| 1. pa vez kurun.           | 1. labourat douar.       |
| 4. pa c'hortozer.          | 2. diskenn-priz.         |
| 8. pesk.                   | 3. rannig-nac'ha.        |
| 9. da vlaza ar boued.      | 4. da serri eur gambr.   |
| 10. mab.                   | 5. ger-mell.             |
| 11. da ober botou.         | 6. bevenn.               |
| 12. eo.                    | 7. roet d'an dud vrudet. |
| 13. a-zioc'h an daoulagad. | 9. heskinerez.           |
| 16. gwaz pe vaouez.        | 14. muzul hirder.        |
| 17. e-lec'h ma vevomp.     | 15. pennad-bale.         |
| 21. en eur.                | 18. ejened.              |
| 23. a oa o vont.           | 19. a ever bep mintin.   |
| 25. darn eur frazenn.      | 20. frouez an dervenn.   |
| 26. stagell.               | 22. kaout eul leue.      |
| 27. distruj.               | 24. graet gant an alar.  |
| 29. a gaver en neñv.       | 25. labous-preiz.        |
| 30. d'imp da vont.         | 28. e-barz va.           |
| 31. ano plac'h.            | 29. ger-mell.            |

## Diskoulm kudenn miz meurzh :

dont — adre  
ere — erien  
ab — koz — zo  
nij — r — b — e  
dal — dor  
h — o — b — sil  
ay — raz — ki  
daneg — die  
arat — maen

# AR MIZ BREZONEK

## « Kanou en Deiz »

Setu aze ano niverenn « Gwalarn » miz ebrel : eun dastumad barzonegou berr, ha da heul eur pennad diwar-benn Iwerzon, gant ar skrivagnerez anavezet, Fant R. Meavenn.

Plijout a raio ar barzonegou-se d'an holl dud a gar an traou eeun hag an traou nevez war eun dro. Graet int, a gredan, an darn vuia' anezo, evit ar vugale, ha, war an dachenn-se, n'eus netra bravoc'h, betek-hen, e brezoneg egeto. Spi am eus ec'h en em gavo mistri-skol speredek hag a lakaio ar re vihan da zeski dindan eñvor « An Delien Varo », « Ti ar Valafenn » pe « Huñvre ar Golvan ha va Hini ». Talvezout a reont kant gwech ar sotoniou gallek a vez desket re alies d'ezo.

Ar pennad, « Penaos emañ ar bed gant an Iwerzoneg ? », a zesko d'ar Vretoned meur a dra dianav d'ezo. Gwelout a raint dreist-holl n'emañ ket Iwerzon paradoz ar Gelted, evit pezh a sell ar yez da vihana.

E gwerz e ti « Gwalarn ». Priz : 16 real.

## « Iwerzon gwelet gant eur Vretonez »

Al levrig-mañ, savet gant Brug ar Menez Du (an Itron Jenovefa a Sant-Per), ha lakaet e brezoneg gant Dir-na-Dor, a zo ken dudius da lenn ha m'eo dudius da welout, hag heñ leun a skeudennou kaer.

Dediet eo d'an Aotrounez Duparc, Serrand ha Trehiou, eskibien Breiz-Izel ha difennourien ar brezoneg.

Kavout a reer ennañ da genta eun « Taol-lagad war Iwerzon gwechall ha bremañ ». Er pennad-se e konter berr-ha-berr istor an Enezenn C'hlas, bepred feal d'ar feiz katolik, dindan yeo ar Saozon koulz hag en amzer an Dieubidigez.

En eil pennad e tipleger d'imp' doare « Kendalc'h-Meur ar Sakramant », dalc'het e Bla-Klia (Dublin) e miz mezeven warlene. Lenn a reomp evel-se : an degemer graet d'ar c'hardinal Lauri, kannad ar Pab ; digoradur ar C'hendalc'h ; eur gaozeadenn gant ar vicherourien ; ar gouel e Phoenix-Park (gouel ar baotred, ar merc'hed hag ar vugale, hag an devez bras, d'ar sul 26, p'en em gavas, a lavarer, eur milion hanter a dud dastumet).

Setu amañ eul levrig marc'had-mat da brena ha da skigna e pep lec'h.

E gwerz e ti « Gwalarn » (gwerzet, dre vadelez an oberourez, evit ar C'hannadig). Priz : 8 real.

## « An Diou Zremm »

Niverenn da zont « Gwalarn » a vo eur pezh-c'hoari, savet gant X. de Langlais, « An Diou Zremm ». Skeudennaouet eo bet gant an oberour.

Komz a raimp hiroc'h diwar e benn e niverenn miz mae. Ar wech-mañ e fell d'imp lavarout hepken e vo tennet eus al labour-se eun nebeut niverennou war baper kaer.

Evit kaout an niverennou-se, e ranker skriva, n'eo ket da « Walarn », hogen d'an Ao. X. de Langlais, Kohanno, Surzur (par Vannes).

Tennet e vo 10 niverenn war baper Holland (priz : 25 lur) ha 25 niverenn war baper Rives (priz : 15 lur).

## « Ar Falz »

Degouezet eo ganin niverennou 2 ha 3 « Ar Falz », kazetenn vizek ar vistri-skol lik a-du gant kelennadurez ar brezoneg. Pennadou mat-tre a zo enno, dreist-holl ar pennadou anvet « Eurvez ar Brezoneg », da lavarout eo, poelladennou (deveriou) brezonek da ober e-pad ar skol.

Skriva d'an Ao. Yann Sohier, merour « Ar Falz », Plourivo (Kont-red 13-346, Roazon). Koumanant-bloaz : 10 lur.

## Ar vistri lik hag ar brezoneg

Emañ krog-mat ar vistri-skol lik da ober eun dra bennak evit hor yez. E-kichen « Ar Falz », e welomp « L'Ekol Emañsipe » (Ar Skol Dishualet) o voula pennadou sinet « Ar Mestr-Skol Bihan », enno traou leun a boell hag a skiant-vat. Biken ne vo lavaret a-walc'h ne c'hello ar bobl vreizat mont war-raok, nemet pa vo roet er skoliou ar gelennadurez e brezoneg, hag e brezoneg hepken. Ar galleg eo a zalc'h hor pobl pleget izel en deñvalijenn.

## Kannadig Gourin

War Gannadig-Parrez Gourin, niverenn meurzebr, e lennomp eur pennad e brezoneg, « Gwechall hag Hizio », skrivet ken c'houek ma karfemp gwelout ar gazetenn a-bez skrivet evel-se.

## Gouel ar C'helc'hiou Keltiek e Roazon

An Aotrou hag an Itron Regnier, hag o deus graet kement evit ar brezoneg e Paris, a gendalc'h da labourat gant gred abaoe m'emaint e Roazon. D'ar sul 19 a viz meur, o deus bodet Kelc'hiou Keltiek Nao-

(da genderc'hel p. 101)

# Eus an Europ d'an Amerik en eun hanter-zevez !

## Buanoc'h-buana bepred !

Emeur atao o klask an doare da vont buanoc'h-buana. Klevout a reomp bemdez komz eus kirri-dredan pe kirri-nij, hag a ra tri c'hant, pevar c'hant kilometr an eur. Kement-se, avat, n'eo netra, e-kichen ar pezh emeur o klask ober bremañ : mont ken buan ma ne gemero ket ouspenn eun hanter-zevez ober ar veaj eus an Europ d'an Amerik (ar bagou bras, evel ousoc'h, a gemer pemp pe c'houec'h devez evit ober an treiz).

## Evit mont buan dre an aer

Aezet e vefe mont buan-buan, panevet an aer hag a laka harz. Gouzout a rit hoc'h-unan pegen diaes eo redek gant an avel a-benn : seul vuanoc'h e klaskit mont, seul vuioch e harz an aer ousoc'h.

Setu amañ eta petra o deus soñjet ijinourien 'zo :

Ha ma savfe eur c'harr-nij uhel-meurbet en oabl ? Eno e vez tano an aer, ken tano ma harz kalz nebeutoc'h eget en trañ. Neuze avat e c'hellfed mont buan !

## Avel ebet, ha stered e-pad an deiz

Ouspenn, pa bigner uhel a-walc'h en oabl, n'eus mui a goabr, n'eus mui a avel. Ken sklaer e vez atao

(kendalc'h ar b. 100)

ned, Roazon ha Paris, ha graet eur gouel bras, a c'hellfed da envel « Gouel ar Ganiri Geltiek ». Hor gwella gourc'hemennoù d'an holl Vretoned vat o deus renet pe gemeret perz er gouel kaer-se.

## Brezoneg ar Vugale

Profou : An Ao. H. ar Menn : 20 l. — An Ao. ar Floc'h : 5 l. — An Ao. R. Peltier : 11 l. — en holl : 36 lur.

Levriou kaset : Sant-Tegoneg : 130 lur.

Trugarez d'ar vadoberourien. Chom a ra er c'haf : 393 l. 80.

## Profou evit « Kannadig »

An Ao. J. Ollivier : 20 l. — An Ao. P. Le Roux : 33 l. — en holl : 53 lur. Trugarez.

ma c'heller gwelout ar stered lugernusa, zoken e-pad an deiz. Netra aesoc'h eta eget ober hent, o levia diouz ar stered, evel ma ra eur vag pa vez sklaer an amzer.

## Ya, met ar yenijenn, hag an aer tano ?

Seul vuioch e saver en oabl, avat, seul vuioch e kresk ar yenijenn. Pa vezer war-dro pemzek kilometrad diouz an douar, — ha betek an uhelder-se e vo ret pignat, — e tiskenn ar yenijenn betek 50 dindan zero ! Ouspenn se, ken tano eo an aer ma n'heller ket tenna e alan. Penaos ober neuze ?

An dud a vo e-barz ar c'harr-nij a vo en eun doare boest serret, kreñv-meurbet, pe gentoc'h e diou voest, rak doubl e vo ar c'hosteziou. War ar voest-se e vo prenestrou graet en eun doare gwer na chom ket ar c'houez warnañ. Evel-se e vo gwelet pep tra a dremenno er-maez.

## Pakadou da genta, beajourien goude

Kalz brasoc'h e vo ar c'harr-nij-se eget eur c'harr-nij ordinal. Ma c'hell mont en-dro, implijet e vo da genta da zougen al liziri hag ar pakadou. War-lerc'h se, moarvat, e teuo tro ar veajourien.



AN AOTER, E PHENIX-PARK  
skeudenn tennet eus al levr :  
« Iwerzon gwelet gant eur Vretonez »



Oc'h arat edo Herve Gwivarc'h koz, e varo gwennerc'h. Eur gazeg a oa gantañ, damdost ken koz hag heñ.

Kalet e oa an douar. Koantig ar gazeg a oa tomm d'ezi. Alies e chome-hi a-sav, kaer en doa Herve huchal warni :

— Diaoulez a goz kazeg, eme Herve Gwivarc'h, aet skuiz ha droug ennañ pelloc'h, ma ne sachez ket gwelloc'h, bremaik e vezi roet da Wilhou.

Gwilhou a oa ar bleiz, e zaoulagad ruz, e zent hir. Gwech e veze mignon bras ha gwechou all enebour touet ar paotr fin, Alanig al louarn, hervez ma tegoueze. O kantren e vezont o-daou en-dro da Geras-trobel alies. Meur a wech e oant bet oc'h ober troiou e krevier hag e kludou ar gêr-se, ha gwall soñjet e oant tro-war-dro.

\*  
\* \*

Ne oa ket echu mat e gomz gant Herve Gwivarc'h ma edo Gwilhou war ar c'hleuz, mall warnañ o tont davet ar c'hoziad :

— Klevet em eus ac'hanout, Herve, ha setu-me. Kontant oun da gas da gazeg ganin.

— Ha ! ma, eme an hini koz, o krafat kostez e benn, savet keuz gantañ d'e gomzou. Gortoz eun tammig. Lez ac'hanoun da echui al labour-mañ a-raok. Kerz er park nevez aze, kuit d'it da sponta va c'hezeg. E koulz ez kalvin !

Hag Herve Gwivarc'h a gendalc'has gant e labour, nec'het a-walc'h e benn.

\*  
\* \*

Alanig al louarn n'edo ket pell ac'hano hag en doa klevet pep tra. Dont a reas da gaout Herve d'e dro.

— Ne roi ket da gazeg da Wilhou emichañs, a lavaras Alan.

— Ret eo d'in he rei bremañ, pa 'm eus lavaret.

— Ba, ba ! mar kerez, ec'h en em glevimp. Petra a roi d'in evit kas Gwilhou diwar da dro ?

— Feiz avat !... Bez' em eus eur yar gant eun torad laboused bihan. O rei a rin d'it ma c'hellez va dizober eus Gwilhou !

— Graet eo an afer, eme Alanig, laouen an tamm anezañ, o vont d'ar piltrotig etrezek ar park nevez da glask ar bleiz, e geneil.

\*  
\* \*

— Ac'han ! a lavaras Gwilhou o welout Alanig o

tont, graet em eus-me eun afer vat avat, paotr ! Herve Gwivarc'h a roio e gazeg koz d'in emberr.

— Ranna a ri ganin ? eme Alanig.

— N'ouzon ket... Ne vezez ket dereat em c'heñver atao.

— Allo ! deus, a lavaras al louarn o friankal, deomp da c'hoari lammat dreist ar puñs koz-mañ. Muioc'h a naon hor bo goude. Sell, lamm da genta, peogwir eo an hira da c'har !...

Mont pell a reas ar bleiz da gemerout tiz, rak ar puñs a oa ledan. Setu-heñ o tont, herr warnañ... ha ploup... plouf !... aiou... hou... hou. Kouezet Gwilhou er puñs ! Dres p'edo oc'h ober e lamm, e krogas Alanig en e lost, hag o tiskregi ker-kent, e kollas Gwilhou e diz, ha koueza !

Alanig a zirollas da c'hoarzin ma ouie ober, ha yao d'an daoulamm da gavout ar c'hoziad, a oa o tistaga e gazeg.

\*  
\* \*

— Setu amañ Gwilhou e strad ar puñs. E pelec'h emañ da yer, Herve Gwivarc'h ? Hast buan, naon am eus.

Er marchosi emaint. Gortoz ma 'z an d'o lakaat en eur sac'h da zegas d'it, kuit d'ezo da glask tec'hout.

\*  
\* \*

Eur pennadig goude, edo Herve goz o tistrei, eur sac'h gantañ ouz e gein :

— Deus tost, Alanig. Aon am eus na c'helli ket o faka holl, rak kalz ez int.

— Petra ?... che !... c'houez ar chas a zo gant ar sac'h-se !

— Sur avat ! peogwir e vez ar giez o kousket warnañ.

— Ahañ ! n'eo ket hi a zo e-barz, da vihana ?


— Aonik a zo ac'hanout, pa lavaran d'it n'emañ ket ! Deus tostoc'h ma tigorin ar sac'h !

Alanig a dosta goustad hag eveziek. Digoret eo ar sac'h... ha ker-kent, rouf !... ar giez a zo lammet er-maez hag a dreuz war al louarn.

\*  
\* \*

Eun emgann spontus a savas eno. An douar hag ar bleo a nije a bep tu. Pelloc'h evelato e c'hellas Alanig tapout hed e c'har ha redek ac'hano evel eun tenn, broudet gant ar boan hag an enkreuz. Gwallgaset

(da genderc'hel p. 103)



Er Sav-Heol Pella :

## Pleg-Mor Along

### Ar pleg-mor

E doun pleg-mor an Tong-King, etre Hai-Fong ha Pak-Hoi eo emañ baeou Along ha Fai-Tsi-Long. An hini koanta eo hini Along. En em ledi a ra a-hed kant kilometrad war bemp-war-nugent a lec'hed. Karget eo a inizi a vil vern, inizi meneziek diazezet war al lec'hid, a lavarfed, kleuzet tro-war-dro a-rez an dour, ha serz goude se dre uhelaat. Heñvel a-walc'h int ouz reier Primel pe Berniou-Piz gourenez Kraoñ, nemet kalz brasoc'h hag uheloc'h. Lod o deus tost da c'houec'h kant metrad a uhelder. Lod all, evel kelc'henn an « Naered-Dour », a zo eur gwir vae e-kreiz ar c'herreg. D'ar gourlen e c'heller ober an dro hep kavout riboul nag hent ebet. Ret gedal an daere evit mont e-barz. Neuze e tizolo eur c'heo hir ha striz. Heñ treuzet, e kaver c'hoaz eul lennig sklaer hag

(kendalc'h ar b. 102)

e oa bet koulskoude. Sanket he doa ar giez he dent hir, doun en e c'houzoug, en e gosteziou hag en e vorzedou. Bremañ e oa kounnaret ruz Alanig ouz Herve Gwivarc'h, ouz Gwilhou, outañ e-unan hag ouz pep tra.

— An dro fall-mañ a dalvezin ar c'henta ma c'hellin, ne ran forz da biou, a soñje Alanig, o lipat e c'houliou en e zouareñ.

L. HERJEAN hag H. AR MENN.

eur c'heo all, a-raok en em gavout gant al lenn vras kelc'hiek (ront). Eno, eur waz-dour a red dizamant. Uheloc'h, eur stankenn-dour, e-lec'h ma teu al loened da eva e peoc'h. Sioul ar bed. Trouz ebet.


An amzer, ar mor hag an doureier moarvat o deus roet d'ar c'herreg ha d'an inizi stummou iskis alies, e doare loened, kestell ha touriou, mein-hir pe gantoloriou.

Diaes-kenañ krapa outo peurliesha. Unan bennak a zo karget eus traoñ a vrouskeadou stank, a ra d'ezo evel eur gouriz glas kaer a wez palmez, troell hag all, kemmesket ha diwanet etre ar c'herreg lemm.

Da ziwall a zo beza mezvet gant c'houez kreñv ar plantennou hag ar wrez a zo dindano. Ouspenn, ar merien ruz hag ar fubu garo a zeu da heskina an den hanter wisket. War lein ar meneziou begek-se, ar vein pa stoker enno a ra eun trouz sklaer ha sklintin evel porselen. Kaer-meurbet ar gwel ac'hano. Talvezout a ra ar boan.

Eur bern loened gouez a vev aze : marmouzien divorfil ha laboused-mor dreist-holl, kirvi ha bualed, a zeu ivez war neuñv eus an eil enezenn d'eben. Tra eston, nebeut a naered pe get. Eur gwenva (paradoz) evit hemolc'herien (chaseourien).

Roet ez eus bet anioiu loened d'ar c'herreg. Alies int heñvel-mik, evel : an erer, an heizez, an touseg, an aerouant, ar velc'houedenn, al logodenn, an dourgi, hag all. Anioiu traou ha tud ivez : ar Bouddha (doue ar vro), an arc'h, ar vrugenn.



Anoioù Bretoned: Treiz Ar C'hoedig, Kanol-Vor Kersant. Eur beg-douar a zoug ivez ano Santez Anna.

Pleg-mor Along a zo eur goudor mat d'al listri bras. Eoriet mat, int dibreder kaer da c'hedal ma vo habaskaet ar mor ha pellaet an « Tifon », an avel-dro.

Diaes e vez beva eno, avat. Ha koulskoude, ar pesketaer a vro Tong-King, gant e dud, a dremen e vuhez e-touez ar c'herreg-se, war ar « sampan », e vagig.

#### Taolenn eun tiad pesketaerien

An tad, doujet meurbet gant izili an tiegez (familh) hag an amezeien, a zo gourvezet o vutuni, moredet. Eur vlevenn bennak ouz e elgez (groñj), rouez ar baro. Eun tog kolo e stumm eur vrinikenn war e benn.

Ar merc'hed, o dent livet e du, a zo dalc'hmat o chaokat « betel ». Ar vamm, pe ar vamm-goz, a ro da zena d'eur bugel (ar re-mañ ne vezont ket dizonet kent o daou pe dri bloaz). Ar vugale gosa a ginnig pesked fritet treantet gant eur vazig bambouz, pe emaint o roeñvat en o sav hag o lakaat ar vag da gerzout.

Treid ledan gant bizied berr o deus. N'eo ket souez, atao diarc'hen (divotou) nemet pa 'z eont e kêr, da Hongay, bro ar glaou war c'horre an douar. Neuze e valeont o ruzata gant « stlakerezed », soliou koad, eul lerenn a-dreuz evit o sevel eus douar gant ar bizied.

Ar re yaouanka, noaz-puilh, a c'hoari gant ar c'hiblevk pe ar marmouz goapaer.

Eur c'hilhog, eur yar gant he zorad re vihan. Eur pemoc'hig du-pod. Holl a-gevret (asamblez). Diwar bouez eul las, o souba er mor, eun houad en eur gaoued bambouz.

A bep seurt traou a gaver er « sampan » toennet a

golo riz kenblezet : ar wern, ar roeñvou, ar ouel e kanab kokos plañsonet, ar c'heuneud-tan, a zo renket er c'hostezioù war beulioù koad forc'hek. El lec'h a enor, en eur c'horn dindan an doenn, emañ aoterig alaouret ar Gourdad, brechin ezañs o tivogedi goustadik dirak. Pa 'z aer tre, dereat eo stoui dirazi. Eur bigorn-kon da gornboud. Eun doenn-vaot-vor evel pezel da zizec'ha strad ar vag. Gwele-skourr ar bugel bihana a-istribilh ouz toenn. Setu arrebeuri an ti-war-neuñv.

Evel listri, n'eus nemet eur pezh chaodouroun da boaza riz, skudilli, bizier koad evit debri, toukennou evit derc'hel dour fresk ha pezelioù pri poazet da lakaat holen, ha traouigoù all da vlaza ar predou.

Ar penn-araog, speurennet kloz en diabarz, gant toullou war ziavaez da leuskel an dour-mor da sila a-dreuz. Eno, pep rummad pesked en o ferz o-unan, a chom atao fresk-beo evel-se. Eur c'havell miret eus ar c'henta eo.

Evit preda, an Tong-Kingad n'eo ket figus. Azezet war e seulioù, an diadreñv ken izel hep steki an douar (tra dic'hallus d'imp-ni), en eur skudellig pri e kemmesk pri, glazer hag eur bannac'h dour « Nguokman », brudet er vro da gaout blaz mat, eun doare hilienn tennet eus pesked 'zo, c'houez ar brein gantañ. Neuze, ar skudell harp er muzelloù, a vez goullonderet prim gant diou vazig, betek ma vez leun ar genou. Ne gar ket nemeur ar bara, pe n'eo ket boazet outañ marteze.

Pa zeu an noz, ar vag a vez staget ouz karreg eur c'heo bennak, pe er sec'h war draez eun aod gwenn.

O veva a zeiz da zeiz, ar geiz en em gav eürus.

Eur pesketaer ijinus eo. Staga a ra eur gidell vras ouz adwern-araok e lestrig. Hen gwinta a ra er mor,

o heulia ar pesked evel-se betek eun toull-sac'h bennak dirak eur garreg. Gant eur bouezadenn war droad ar gidell er vag, ha palanket eus ar wern, e sav ar pesked lugernus.

A-wechou all, en aber eur stêr, e laka peulioù en o sav hag a linenn el lec'hid, rouedou outo. Gant kerdin war eur vilin e vezont savet pa zeu red an dour da gemma gant ar mare-mor. Betek pell er mor ec'h eor bambouzennoù hir en hevelep doare. D'al lestr bras diwall beza luziet.

#### Gouelioù

Ar bloaz nevez, graet e derou c'houevrer, a zo anvet gouel an « Tet ». Pardon bras ar vro eo. Neuze ar pep brasa eus ar « sampan »-ioù a sav betek kêr Hai-Fong. O bagou a zeu stank a-hed ar c'hae, staget ouz peulioù bambouz el lec'hid. Ar vugale a bren fuzeennou kartoñs ha poultr da strakal. Trouz ha cholori neuze. An holl a zo laouen. Eur c'hoari all d'ar baotred eo hini ar bolotenn. Da redek skañv ha da


lammat uhel, da drei penn evit penn, n'eus ket o far. Europiz a goll ganto alies. D'an dremenerien ha d'ar gerent, an tieg a ginnig an dourig-te hag ar bastellenn « betel » gant e hetou a vloavez mat. Ar merc'hed, e-lec'h golei o fenn gant al lienenn du, a rann o bleo dre greiz da veza rodellet goude se e tro o fenn evel eur gurunenn. Dreist o bragou ledan, eur gouriz seiz liesliou a zeu da skoulma war-raok, ar pennoù anezañ o vranzellat er bale.

Da gloza ar gouelioù, an Tad beleg a zeu en eur « sampan » evit binniga an holl en o bag. E-leiz a zo kristenien katolik. Eur groaz koad a vez lakaet a-zioc'h pep toenn.

Binniget traouigoù santel, an Tad a loc'h, saludet gant chapeledou strakerezed.

Da noz, kluchet en-dro d'eur goulou, e tibuner pedennoù hir betek dialanat, paterioù kanet kentoc'h, distaget sklaer er yez vroadel, dispar. E-keñver se, e gwir, eo didon ar rozera kent gousperou en hon ilizou-ni.

R...



# ❖ BARZED YAOUANK BREIZ ❖

## Eur skol nevez

Emañ o sevel en hor bro eur skol nevez a varzoniez, pe gentoc'h, — ma ne garer ket ar ger « skol », — eur rummad barzed yaouank, disheñvel diouz ar varzed gwechall, hag heñvel a-walc'h etrezo, — daoust ma c'hell displeijout da veur a unan marteze beza lakaet a-gevret gant ar re all.

## A-raok 1914

A-walc'h a zo bet lavaret diwar-benn paourentez barzoniez Vreiz a-raok mil nao c'hant pevarzek. « Ar varzoniez », a lavar Alan Brenn en eur skrid chomet diembann, « a zo bet ken dister a-raok ar Brezel ma ne ouzer tamm ebet penaos komz anezi. N'o deus gouezet hor barzed sevel netra start, netra nevez. Danvez o oberou a vez atao boutin ha divlaz, hag ar stumm n'eo nemet stumm ar gwerzennou gallek. N'eus nemet pa glaskont liva gizioù o c'horn-bro ha buhez pemdeziek ar maeziou ma c'heller lenn o barzonegou gant plijadur. Setu perak, eus an holl werzennou savet e brezoneg e bloaveziou kenta ar c'hantved-mañ, ar re dalvoudusa, d'am meno, eo ar re-se. »

## Bleimor

En diwez e voe ganet eur barz e Breiz, Bleimor. Lazet e voe er Brezel Bras, hag e levr, « War an Daoulin », a voe moulet goude e varo. Meulet eo bet Bleimor, a-wechou eun tammig a-dreuz. Tud o deus lavaret hag a gred start ez eo unan eus brasa barzed an douar, ar pez n'eo ket gwir. Hogen ar brud a zo savet en-dro da ano Bleimor en deus graet vad d'ar brezoneg. Ouspenn se, bet eo Bleimor ar c'henta da zilezel an doare gallek da varzonia. Evel-se, diskouezet en deus eun tamm an hent d'ar varzed a hizio, — daoust ma chom, dre e venoziou ha danvez e skridou, pell-bras diouz an amzer-mañ.

## Ar rummad yaouank

Hor barzed yaouank a zo desketoc'h, — kalz desketoc'h alies, — eget ar varzed gwechall. Lennet o deus labouriou ar varzed koz ha nevez, n'eo ket hepken a Vro-C'hall, hogen eun tammig a bep bro.

Studiet o deus ar brezoneg, alies muioc'h el levriou eget diwar c'henou ar bobl, ha skriva a reont ar yez unvan, hep teurel nemeur a bled ouz ar rannyezou.

Ne skrivont ket kalz. Ar barz a wechall, a veze boas

da sevel gwerzennou a gilometradou, ne vez mui nemeur gwelet en hon touez, Doue ra vo meulet ! N'hon eus barz yaouank ebet, a gredan, en deus embannet peadra da ober en holl kant pajenn.

En em zishualet o deus diouz ar stumm gall, hag e gwir diouz pep reolenn, da heulia dudi o skouarn pe o faltazi.

Klask a reont displega ar pez a zo en o c'halon, dizolei d'ar goulou traou nevez-flamm. Ha ma ne dizont ket hen ober atao, ar striv a chom da vihana, — hag a ro d'an hini distera eus o barzonegou eun dalvoudigez dibar.

## Yan-Eozen Jarl

Hemañ en deus savet teir barzoneg, hag a zo tavet, — spi am eus n'eo ket da viken. Ne oant ket mat. Hogen nevez e oant d'ar mare ma voent moulet, e mil nao c'hant pemp-war-nugent. Balbouzat a rae ar barz. Gouzout a rae, da vihana, ar pez a felle d'ezañ. Lakaat a reas da skiltra, e brezoneg, eur sonerez nevez :

« An noz 'zo hir  
D'ar sellou teñval,  
Klemmus o bir

Gant glac'har du ha dall.  
D'an tal a wask rec'h foll  
An hiraez lemm ha fall,

An eur a stroll  
Bleñ ruz e zaerou,  
En noz a roll. »

## Jakez Riou

Ha neuze ez eus Jakez Riou, anavezet evel marvailher ivez. Nebeut a draou a zo bet biskoaz savet e brezoneg da zont tost d'e « Introibo », hag a gaver ennañ, displeget en doare kaera, ar pez a zo evel diskan hor barzed yaouank, krizder ar stourm war an douar, hag ar spi en eur bed gwelloc'h hag uheloc'h, eur bed a c'hellomp damwelout avat :

« Bemdez avat, ha bemnoz e vezo distrujet  
hor c'hozni douarel hag al levezonou aner.  
Hor yaouankiz hepken a vezo aotreet  
da dostaat ouz an aoter.  
Bemdez e pellaomp diouz traonienn ar gortoz,  
war-du annez an hoal-vat.  
Ha bemdez ha bemnoz  
ez a hor yaouankiz war yaouankaat. »

## Youen Drezen

Tostoc'h eo barzoniez Drezen ouz an douar marteze, hag aesoc'h da gompren, pa 'z eo troet muioc'h etrezek an diavaez eget etrezek an diabarz. Digoret eo e zaoulagad hag e ziouskouarn, hag e « Gan da Gornog » a zo kement a liou er gwerzennou anezañ ha ma 'z eus er skeudennou savet gant Kreston da vont ganto :

« Kornog !  
Sinadurez an andoniou lirin ha boull,  
Hesonerez an dour sklintin o piltrotat,  
'Touez ar c'helvez, war ziribin ar runiou glas !

Grougous sioul ar gudon e goudor an elo,  
Hag, ez-drumm o strakal er mintiniou gleb-gliz,  
Garm an hemolc'h ha pimperlamm mirc'hed Keltia ! »

## G.B. Kerverziou

Setu amañ unan hag en deus ar brud da veza unan eus barzed « diaesa » Breiz. Klasket en deus muioc'h eget ar re all marteze, n'eo ket evel ma lavar :

« Disteurel ha bruzuna ar skramm a lorc'h »,

Hogen « disteurel ha bruzuna » skramm ar yez, da ober ganti eur benveg gwelloc'h da heulia kamm-droiou e spered. Oberou e-giz « An Diri-Servij » n'int ket graet a dra sur da veza ken anavezet ha Son ar Pilhaouer. Neb a gemer ar boan d'o studia, avat, n'en devo ket kollet e amzer.

## X. de Langlais

E-touez hor barzed yaouank, ez eo Xavier de Langlais, a gredan, an hini anavezeta, abaoe ma voe moulet e levr kaer, « Kanou en Noz ». Ar pez a skriv, — ha gwir eo kement-se ivez eus e bez-c'hoari, « An Diou Zremm », — a zo ennañ eun doare melkoni a blij meurbet da galon ar Vretoned. Eun doare eeun en deus ospenn da zisplega trivliadou, a-wechou doun-kenañ, ha donezonet-dreist eo da rei d'e werzennou ar pouez hag ar muzul a zo ret. Pet Breizad n'en deus ket desket dre eñvor al linennou-mañ :

« P'eo ret d'an had  
Noz yen an douar,  
D'an eost gwenn  
Pok ar falz lemm,  
D'an ed melen  
Rod'ar vilin,  
D'ar bleud gwenn-erc'h  
C'houervder ar goell,

Ha d'an toaz kriz  
Tan kriz ar forn,

A-barz d'an ed  
Maga ar bed,

O va Breur karet,  
Penaos ne ve Ret  
Garmi ha Leñva  
A-barz frealzi. »

## D.K. Kongar

Barzoniez Kenan Kongar a zo tristidigez enni ivez, hogen disheñvel eo diouz barzoniez de Langlais. Kreñvoc'h ar youl ennañ da stourm ouz an tonkadur (planedenn). En e werzennou e klever a-wechou an hekleo gourel-se, re zibaot betek-hen (Ar pez a zisplij d'in ar muia en oberou barzed Breiz, hag e Bleimor dreist-holl, eo an « gnagnouzer » peurbadus) :

« Nann ! — Ne glemmin mui, ne c'harmin mui, ne leñvin mui a-hed an hent.

Mont a rin,  
Sounn va fenn,  
Kroaziet va divrec'h,  
'N eur stlakal va seuliou ouz ar vein.  
Mont a rin,  
Dilavar ha mut.  
Mont a rin,  
Va-unan.  
Trec'hi 'rin,  
Va-unan. »

## Fant R. Meavenn

An eeuna, ar yac'hausa, ha marteze ivez ar gourela, e-touez oberou hor barzed, avat, eo oberou eur varzez, Fant R. Meavenn. Ne gredan ket e tremen kalz amzer o kempenn he barzonegou bihan. Hogen petra 'vern, pa 'z int mat da froma ac'hanomp ? Al levrig « Kanou en Deiz » a zo muioc'h a varzoniez ennañ, — a varzoniez wirion, a lavaran, — eget e kement a zo bet skrivet e brezoneg a-raok 1914. Hag evidoun-me, ne skuizin ket buan o lenn traou e-giz « An Tan », pe « Daoulagad va Mamm ». Hag i kardarn, an oberou-se a zo ivez beuzet er c'houervoni hag en hiraez, melkoni unan na welo biken, am eus aon,

« War an tan, ar yod,  
Er-maez, an avel,  
Hag an eürusted  
E-barz an ti soul. »

ROPARZ HEMON.



# SAMUEL PEPYS (1663-1704)

## Eun den ankounac'haet

Er bloaz 1677 e voe moulet e Bro-Saoz eul levr anvet « Istor Portugal pe Danevell an Trubuilhou c'hoarvezet e Lez Portugal er bloaveziou 1667 ha 1668 ». E 1690 e voe moulet eul levr all, « Danevellou diwar-benn Merdeadurez Roueel Bro-Saoz ». Ar skrivagner a oa Samuel Pepys e ano, hag e oa neuze sekretour e Renerez ar Verdeadurez Vrezel. Ganet e oa bet e 1633, — tri c'hant vloaz a zo bremañ. Pinvidik e oa, desket ha speredek. E-pad bloaveziou hir e oa bet o labourat e gopr ar gouarnamant. Anavezet e oa evel eun den a zoare, ha doujet gant an holl.

Mervel a reas e 1704. Diwar neuze e kouezas tamm-ha-tamm an deñvalijenn war e ano. E penn kenta an naontekvet kantved, e oa pell 'zo ankounac'haet gant an holl.

## Eur gavadenn

Ha setu, a-greiz-holl, e ano o tont da veza brudet, unan eus ar re vrudeta zoken e lennegezh e vro.

Petra a oa c'hoarvezet ?

Lezet en doa Pepys war e lerc'h eur bern bras a levriou, a oa bet dastumet e lenndi (« bibliotek ») « Magdalen College », e Cambridge. E-touez al levriou-se e oa eur pikol hini, skrivet gant an dourn penn-da-benn, nann avat gant lizerennou, hogen en eun doare berrskrivadur (« stenografi ») dianav.

Meur a zen en doa lakaet e fri el levr-se, ha serret anezañ adarre, hep kompren petra a oa e-barz. Evel-se betek an deiz ma teuas eun den barrekoc'h eget ar re all, hag a zeuas a-benn, war-bouez studia ha furchal, da gavout alc'houez ar skritur kevrinus (misterius).

Er bloaz 1825 e voe embannet « Eñvorennou Samuel Pepys », al levr souezusa biskoaz savet gant den.

## « Eñvorennou » kuz

E-pad war-dro nao bloaz, eus miz genver 1659 (1660 hervez hon doare-bremañ da gonta) betek miz mae 1669, e skrivas Pepys bemdez dre ar munud kement tra a oa c'hoarvezet gantañ, kement tra en doa gwelet, kement tra en doa klevet, kement tra en doa graet, hep ankounac'haet netra.

Perak e reas an dra-se ?

N'eo ket evit an amzer-da-zont, a dra sur. An eñvorennou-se ne oant ket graet da veza diskouezet d'ar re all, peogwir en doa ijinet Pepys an doare iskis-

se da skriva a-ratoz, o lakaat evez zoken, gant aon da veza diskuliet, da skriva an traoù kuzeta, n'eo ket e saozneg, hogen e yezou all, dianav d'e dud ha d'e servijerien.

Anat eo, d'an neb en deus o lennet, e talc'he e eñvorennou evit e blijadur.

## Talvoudegezh an « Eñvorennou »

N'heller ket lavarout pegen prizius eo al labour-se evit neb a fell d'ezañ kaout sklerijenn diwar-benn istor Bro-Saoz ha doareoù ar Saozon en amzer-se, amzer ar roue Charlez II. Komz a ra Pepys eus pep tra : eus ar Stad, eus Londrez, eus ar maeziou, eus buhez an holl, adalek an uhelidi (noblañsou) betek ar beorien. Penaos e oa gwisket an dud, petra a zebrent, penaos e oa aozet an tiez, priz an holl draoù, a gaver e-kichen taolennou eus kurunidigezh ar Roue pe brederennou diwar-benn ar politikerezh.

## Melezhour an ene

Hogen, ar pezh a sell ouz buhez Pepys e-unan a zo c'hoaz talvoudusoc'h evit an neb a glask kompren penaos eo graet ene eun den. Setu aze unan, hag a oa e sell e genvroiz eun den leal, dereat hag enorus, hag a oa e gwirionezh dizonest, gadal ha divalo. Peadra ez eus da skrija o lenn ar pezh a skriv diwar e benn e-unan, diwar-benn e laeroñsiou, e drubardereziou hag e droiou fall a bep seurt, — ha c'hoaz, n'eo bet embannet biskoaz an « Eñvorennou » en o fezh, ha ne vint biken, war a lavar ar re o deus studiet an dournskrid (« manuskri »), pa n'heller ket moula seurt traoù.

Hag ar souezusa-holl eo penaos, daoust da se, pa lenner labour Pepys, n'heller ket mirout da garout anezañ. Ne vern pegen fall e oa evel den, lakaet en doa en e levr e holl galon, — en doare ma tiz ar skrid-se, savet evit eun den hepken, kalon al lennerien gwelloc'h eget ar skridou savet da veza lennet gant an holl.

## Ar c'homzou diweza

Enkrezus-meurbet eo, e gwir, lenn diweza linennou al levr. O kredi e oa o vont da goll ar gweled, e skrjv Pepys evel-hen :

« 31 a viz mae 1669. — Savet abred, ha bet e-pad ar mintinvez penn-da-benn gant W. Hower, o sellout ouz va c'hontou, hag o skriva anezo, evit aoza va beaj d'ar broiou en tu all d'ar mor, rak en abeg da

(da genderc'hel p. 110)

# PAJENN AR VUGALE

## AR C'HARR-NEZA



Janed a oa merc'h-vihan d'eur baourez koz. Eun nozvez, e-pad an hañv, m'edont o-diou en o gwele, Janed a oa divorfil. Al loar o para a sklerijenne ar gambr a-bez.

En eun taol, en eur welout karr-neza he mamm-goz, e teuas e penn Janed eur c'haer a venoz :

— Paour kaez mamm-goz, emezi outi hec'h-unan, a-hed an deiz emañ daoubleget war he c'harr-neza, o neza kanab da ober hivizou d'in. Mar kasan he labour a-raok, na pebez stad a vo enni pa savo !

Ha Janed prim er-maez eus he gwele, ha dont sioulik betek ar c'harr-neza. Dizale e kasas ar rod endro. Hogen gant gwigour ar c'harr-neza, setu mamm-goz dihunet :

— Va Doue ! emezi, ar c'harr-neza o vont endro e-unan !... Petra a welan ! Te eo, Janedig ! Daoust hag o-huñvreal emaut ?

— Nann da ! mamm-goz, divorfil oun. C'hoant am boa da neza evit ho tivec'hia.

— Merc'hig kaez, eme ar vamm-goz ouz he c'hemer etre he divrec'h d'he lakaat endro er gwele bihan, c'hoant az poa d'ober ervat. Eur galonig vat a blac'hig out. N'ec'h eus ket avat kaset nemeur va labour a-raok. Sed emañ va neñd kaez gwall luziet !

Hervez ANDERSEN,  
displeget gant ABOZEN.

An holl levriou brezonek  
a vez kavet e :

TI BREIZ

dalc'het gant an dimezell Torcol

11, rue d'Algésiras, Brest

## SINDBAD

ar

## MARTOLOD

Istor Sindbad ar Martolod a zo displeget el levr kaer hollyrudet, « An Nozveziou Arabiat ». Lakaet eo bet amañ e brezoneg eeun-meurbet, ha spi hon eus e plijo d'an holl, ha dreist-holl d'ar vugale.

## RAKLAVAR

E kêr v-Bagdad e oa eun den gwechall, Sindbad ar Simiad (1) e ano. Paour-meurbet e oa. Evit gounit e vuhez, e touge sammou war e benn.

Eun deiz ma oa tomm an amzer, e oa o tougen eur samm pounner. Skuiz e oa, hag ar c'houez a ziruilhe war e gorf ha war e zremm (2).

Tremen a reas dirak dor eur marc'hadour. Eno e oa bet skubet ha douret an douar. Gwelout a reas eur bank ledan. Hag heñ da lakaat e samm war ar bank, evit diskuiza en eur alanat an aer fresk.

E-pad ma oa o tiskuiza, e klevas trouz e-barz an ti : sonerez (3) benvegou flour-meurbet ha moueziou laouen o kana hag o tisplega barzonegou (4). Bez' e oa ivez laboused o richana : koulmed, eostiged, mouile'hi, ha kalz a re all ouspenn.

Ken plijet e voe Sindbad ma ne voe ket evit mirout da dreuzi an nor. En em gavout a reas en eul liorz (5) vras leun a vleuniou, enni flec'h (6), sklaved du ha mevelien a bep seurt, evel ma weler e tiez ar

Roueed hag an dud vras. Hag e teuas betek e fri, douget gant an avel, c'houez a bep doare traou mat da eva ha da zebri.

Hag heñ da sevel e zaoulagad etrezek an Neñv, o lavarout :

— Gloar d'it-te, Aotrou Doue, Allâ (6) hollc'hal-loudek, Krouer ar Bed ! Rei a rez da vadou d'ar re a blij d'it, tra ma chom ar re all en doan hag er baourentez.

Ha war se e kanas eur son en enor da Alla.

Echu gantañ kana, e oa o vont da gemer e samm en-dro evit kenderc'hel gant e hent, pa zeuas eur mevel etrezek ennañ, en eur lavarout :

— Deus da gaout va mestr. C'hoant en deus da gomz ganit.

Ar simiad kaez en dije karet mont kuit. Hogen ar mevel a grogas en e zourn. Kas a reas Sindbad dre saliou kaer leun a dud. Er sal diweza, azezet war eur gador uhel, e oa eun den mentek, liou ar furnez war e zremm. Ouz e welout, Sindbad a voe leun a zoujañs. Stoui a reas dirazañ en eur boket d'an douar. Ha neuze e chomas, izel e benn, hep ranna eur ger.

Mestr an ti, avat, a lavaras d'ezañ tostaat hag azeza en e gichen. Komz a reas outañ gant madelez. A bep seurt traou lipous a voe degaset dirak Sindbad, hag a zebras anezo kement ha ma c'hellas, o lavarout :

— Binniget ra vo Alla evit ar pezh en deus roet d'in !

P'en devoe echu gant e bred, ha gwalc'het e zaouarn, mestr an ti a c'houlennas outañ :

— Bremañ, lavar d'in, m'az ped, da ano ha peseurt micher ac'h eus.

— Aotrou, Sindbad ar Simiad eo va ano, ha da c'houarnit va buhez, e tougan sammou war va fenn.

Mestr an ti a vouse'hoarzas neuze hag a lavaras :

— Da ano, simiad, eo ivez va hini. Me a zo Sindbad ar Martolod. Klevet em eus ar ganaouenn ac'h eus kanet dirak va dor, hag e fell d'in he c'hlevout adarre.

Ar simiad a savas ar ruz d'e zioujod ha d'e dal.

— Penaos, emezañ, e c'hellfe kanaouennou eun den dister ha diseven eveldoun didui eun den pinvidik ha desket eveldoc'h ?

— Arabat d'it kaout mez, eme mestr an ti. Diwar vremañ ez out va breur. Kan d'in ar ganaouenn. Plijout a ra d'in.

Ar simiad a ganas e ganaouenn, hag e ostiz neuze a lavaras :

— Bremañ, simiad, emaoun o vont da gonta d'it va istor. Klevout a ri kement tra a zo c'hoarvezet ganin, ha penaos em eus dastumet an holl binvidigeziou a welez amañ. Seiz beaj am eus graet. Hag ez

int holl burzudus. Kement a zo c'hoarvezet a ranke c'hoarvezout, avat. N'eus tu ebet evit an den da dec'hout diouz ar pezh a zo skrivet !

(da genderc'hel)

Gerioù : 1. simiad : douger-sammou. — 2. dremm : fas, bizaj. — 3. sonerez : muzik. — 4. barzoneg : « poezi ». — 5. liorz : jardrin. — 6. Alla : doue Mahometiz.

**Kasit ho labouriou moulerez,  
kartennou, embannou, levriou, kazetennou  
da ober en  
Imprimerie Commerciale et Administrative  
17, rue d'Algésiras, Brest  
Al labour gwella d'ar prizioù izela**

(kendalc'h ar b. 108)

stad fall va daoulagad ha d'am leziregez, e-pad bloaz pe zaou, chomet oun war-lerc'h, en doare m'int diaes-kenañ da ober bremañ hag eur gwall drubuilh d'am spered. Hogen hizio oun aet a-raok kalz ganto. En em gavet adarre gant Dug York, e White Hall, diwar-benn an hevelep kefridi ha dec'h, ha boulc'het-mat eo al labour. Ha neuze, galvet gant va gwreg, aet d'al Liorz-Veur, a-gevret (asamblez) gant Mary Batelier hag eun denjentil a vro Holland, mignon d'ezi. Ac'hano da « Benn ar Bed », eun davarn e-kichen al Liorz-Veur. Ha bet plijadur eno, ha deut diwezat d'ar gêr.

« Hag evel-se emañ echu ar pezh na gredan ket e vin barrek morse da ober ken gant va daoulagad pa zalc'hin va eñvorennoù. N'hellan mui hen ober, goude beza hen graet ken pell ma wastan va daoulagad hogos kement gwech ma krogan en eur bluenn. Hag en abeg da se, ne vern petra a c'hoarvezo, e rankan paouez. Ober a ran va meno eta da lakaat va servijerien hiviziken d'hen derc'hel evidoun, er skitur hir boutin (ordinal), ha ret e vo d'in lakaat hepken ar pezh a c'hell beza anavezet ganto ha gant an holl. Pe, ma 'z eus eun dra bennak, e rankan klask mirout eur riblenn em levr, evit lakaat, e lec'h pe lec'h, eun notenn e berrskrivadur gant va dourn.

« Hag e tibaban eta diwar vremañ an doare-se da ober, hag a zo koulz evidoun hag en em welout e-barz ar bez. Ha da vont etrezek ar bez-se, hag etrezek an holl drubuilhou a rankin gouzañv pa vin dall, Doue madelezus da rei d'in e skoazell ! »

(kendalc'h ar b. 98)

### Petra a lavar al loened

Abaoe ma c'heller enskriva war bandennou (filmou) an holl drouziou, e c'heller keñveria piz mouez mab-den gant mouez al loened.

Evel just n'heller ket merka gant lizerennou ar pezh a lavaront, hogen setu amañ da vihana ar pezh a zeu an tosta d'ar garmou a reont.

Eun dañvad a lavar « ma-a », ha tamm ebet « be-e » evel ma kreder (loen ebet, — nemet eur peroked moarvat, — n'eo barrek da zistaga « b »).

Eur c'hi a lavar « wowo », en eur veska, avat, ar « w » gant an « o ».

Eun tigr, — piou en dije kredet ? — a lavar : « wouf-wouf ».

Eur bleizbroc'h (« hyène » e galleg) a lavar : « haf-haf ».

Eur wennili a lavar « wita ».

### Raned

E Brazil ez eus eun doare raned souezus. Bez' e c'hellont koeñvi o c'horf e-giz eur baloñs, ha neuze e tigoront bras o genou hag e reont garmou skiltr evel ma ra a-wechou ar moc'h. Ober a reer « raned kornek » anezo, ha darn o deus betek c'houezek santimetrad a hirder.

A-wechou ez eont en eul lec'h gleb, hag eno e sankont en douar, en doare ma ne weler mui netra anezo nemet o daoulagad dispourbellet o c'hedal eur preiz, da lavarout eo eur ran all, pe eun touseg, pe eul labous, pe eul loenig bennak.

Brasa raned an douar a gaver en Inizi Salomon, er Mor Habask. War-dro ugent santimetrad a hirder o deus, hag e klever anezo war-hed ouspenn eur c'hilometrad.

Raned ar C'hanada a c'hell ober lammou a dri metrad a hirder, ha tremen dreist eur c'hleuz a bemp troatad a uhelder. Maget ha lardet e vezont evit beza debret.

Petra lavarout avat eus « raned-nijerezed » Java, a c'hell astenn o faoiou e-giz eskell da dremen eus eur wezenn d'eben ?

### O vaga laboused gant nijerezed

Nijerezed (« avioñ ») a zo bet kaset gant gouarnant ar C'hanada da skigna boued war an douar evit al laboused gouez, gwazi hag houidi.

Kalz a laboused a zo bet saveteet evel-se, hag a oa tost da vervel gant an naon. Hogen perak, a lavarit,

eo bet ret maga al laboused-se er bloaz-mañ, eun dra na voe ket ret ober er bloaziu a-raok ?

Setu amañ perak :

Boued al laboused a oa eun doare geot, a greske gwechall en aberiou ar stêriou hag a-hed aod ar mor, hag a zo aet kuit a-greiz-holl. Kredi a reer eo bet distrujet gant eur c'hleñved bennak pe gant loenedigou fall.

### Petra eo an hollved ?

An dud ouziek n'en em glevont ket kalz diwar-benn petra eo an hollved (pe ar bed-holl), ha bep bloaz e welomp unan bennak anezo o tisplega d'imp eun nevezinti bennak.

Emañ an hollved, a lavare n'eus ket pell eun den gouziek a Vro-Saoz, e-giz eur baloñs a vije bet koeñvet e-pad hir amzer, hag a vije tarzset en diwez. Da lavarout eo, emañ ar strolladou-stered (an Douar, evel ouzoc'h, a zo stag ouz ar strollad-stered anvet Hent Sant Jalm) o pellaat buan-buan an eil diouz egile : etre 10.000 ha 25.000 kilometrad bep eilenn (« seugoñd »). Ar goulou ne c'hell mui ober tro an hollved. Emañ e-giz eur reder hag a vefe ar pal o pellaat dioutañ buanoc'h eget ma c'hell redek.

## FENTIGELLOU

### Lavaret re brim

— Gwelet em eus ho pried dec'h. Met n'en deus ket gwelet ac'hanoun.

— Ya, lavaret en deus d'in.

### Eun abeg mat

— Ne gav ket d'in e tle eur vaouez mont en eun ti-debri hec'h-unan-penn.

— Ha perak 'ta ?

— Peogwir neuze e rank paea.

### Trouz an amezeien

— An amezeien n'o deus graet dec'h nemet skei ouz ar voger betek hanternoz.

— N'ho'eus ket gallet kousket neuze ?

— O ! ne oan ket em gwele. O c'hoari piano e oan.



# G WALARN

Kelaouenn vizek

Rener: Roparz Hemon

Priz: 30 lur ar bloaz (broiou estren: 35 lur)

Chomlec'h:

Journal de Gwalarn, Boite Postale 75, BREST

(C.C. 96.38, Rennes)

# KANNADIG GWALARN

Kazetenn vizek

Rener: Roparz Hemon

Priz: 10 lur ar bloaz (broiou estren: 15 lur)

Adres:

Journal de Gwalarn, Boite Postale 75, BREST

(C.C. 96.38, Rennes)

## D'HOL LENNERIEN

Hol lennerien o devo gwelet pebez poan a gemeromp da rei d'ezo eur gazetenn graet a zoare. Mont a ra « Kannadig Gwalarn » atao war wellaat, hag e c'hellomp lavarout ez eo bremañ, dre zavez e bennadou, par da ne vern pe gazetenn skrivet eveltañ evit an holl.

Ret eo d'imp anzav, avat, ne deo ket aet er miziou tremen niver ar c'houmanantou war greski evel m'hor bije karet. Koll arc'hant a reomp hep miz, hag evit kenderc'hel e rankomp dastum hon holl nerz-kalon, o soñjal en amzer-da-zont hor bro, hag er Vretoned a zeuio war hoi lerc'h, ha na bardonfent ket d'imp mar kollfemp fiziañs bremañ.

Evit dispign nebeutoc'h, hon eus ranket bihanaat niver ar skeudennou. Rankout a raomp hep dale uhe-laot priz ar c'houmanant-bloaz, ma ne zeu ket hol lennerien da skoazella ac'hanomp.

Evit bruda hor c'hazetenn, graet hon eus kement tra a c'hellemp ober. Couzout a reomp, avat, n'eus netra par d'ar brud a vez graet dre c'henou, er boda-degou pe e-touez mignoned.

Emañ an hañv o tont, hag an amzer gaer. Tro o devo hol lennerien er miziou-mañ da bourmen ha da vont d'ar gouelioù a vo graet er pevar c'horn eus ar vro. O fedi a reomp da soñjal en hor c'hazetenn eun tammig. Ar pez a vez graet evit kevredigeziou ha kazetennou all, perak ne vije ket graet evit « Gwalarn » hag e « Kannadig » ? Eur ger eur wech an amzer a c'hell ober eur mad dispar !

An holl dud a anavez « Gwalarn » a oar e c'heller kaout fiziañs ennañ. Karout a rafemp lavarout e c'hellomp kaout fiziañs en hon holl lennerien. Ar pez a vir ouz ar brezoneg da sevel buanoc'h n'eo ket fal-lagriez e enebourien. Bez' ez eo kentoc'h, siouaz, le-ziregez e vignoned.

## Kenstrivadeg ar Vugale

Ar wech-mañ ez eus bet teir gwech muioc'h a respontou eget ar wech a-raok. Ha ma 'z eus lod hag a zo fall, bez' ez eus lod ivez hag a zo mat-kenañ. 40 poent a zo bet roet evit ar gudenn, 40 poent evit ar brezoneg, hag 20 poent evit ar skritur, ar pez a ra en holl 100 poent.

Setu amañ anioù ar re o deus gounezet:

PRIZ KENTA: Eliza Sergent, Poullan: 88 poent.

EIL PRIZ: Deneza Perhirin, Poullan: 87 poent.

TREDE PRIZ: Aline Le Brun, Poullan: 86 poent.

Solange Sergent, Poullan: 86 poent.

Setu amañ anioù ar vugale o deus bet muioc'h eget an hanter eus ar poentou (d'ar re-se e vo kaset eul levr bihan):

Loeiz Piron, La Rochelle: 82 poent.

Ceistine Levenez, Poullan: 78 poent.

Yann-Loeiz Manac'h, Laniliz: 67 poent.

Janed Mazeas, Sant-Divi: 64 poent.

Yann-Loeiz Uguen, Laniliz: 64 poent.

Eur genstrivadeg all a vo graet er miz a zeu !

### Rakprenit

## Eur Breizad er C'hanada

Priz: 15 lur

moulet war baper kaer  
gant e-leiz a skeudennou

Moulerez 17, ru d'Algeras, Brest

Ar Merour: Y. DRÉZEN.

NIV. 8 — MAE 1933

PRIZ : PEVAR REAL

# KANNADIG GWALARN

Eun Niverenn bep Miz — Ar Pemzek eus ar Miz



MOGER VRAS

BRO-SINA

KELEIER

AR MIZ

EUN DRO

E

HOLLYWOOD

PLADENNOU

BREZONEK



A-GLEIZ

HAG

A-ZEHOU

PENN-AHEL-BED

AR C'HREISTEIZ

PENAOB

DESKI LENN

BREZONEG

SINDBAD

AR

MARTOLOD

Lammdourioù (Traonienn Yoho)  
skeudenn tennet eus al levr  
EUR BREIZAD ER C'HANADA



## D'HOL LENNERIEN

Moula « Kannadig Gwalarn » a goust d'imp diou wech muioc'h eget na c'hounezomp.

Komzet hon eus eus kreski priz ar c'houmanant. Hogen tud hag a anavez mat an traou a lavar d'imp e vefe difur er mare-mañ.

Ne vefe eta nemet eun dra d'ober : krenna ar gaze-tenn eus an hanter.

A-raok ober an dra-se, avat, e fell d'imp esaea eun dra bennak all : embann eur stagadenn c'hallek d'ar « C'hannadig ».

Ma c'hellomp en doare-se gounit koumananterien ha mignoned nevez, marteze e c'hellimp kenderc'hel a-benn eur pennad evel a-raok.

Pell 'zo, a-hend-all, e oamp e soñj sevel ar stagadenn c'hallek-se.

Gwelout a reomp, tro-war-dro d'imp, an holl gaze-tennou hag an holl emzavioù, e Breiz hag e pep bro vihan, oc'h ober gant yez eur vro vras da lakaat an dud da c'houzout petra int ha petra a reont.

Sot a-walc'h omp bet da gredi ec'h en em gavje tud, eun deiz bennak, da lavarout ar wirionez diwar-benn « Gwalarn » hag e oberou. E-lec'h-se, lavaret e vije emañ kentoc'h ar c'hazetennou oc'h ober an tav war-nomp, darn dre ziouziegezh ha darn, moarvat, dre warizi. Peogwir ne gavomp den ebet evit diskleria ar pezh hon eus graet hag ar pezh a reomp, hen ober a raimp hon-unan.

Hor stagadenn c'hallek, koulskoude, ne vo ket evi-domp hepken. Komz a raimp warni eus kement tra a dalvoudegezh a vez graet evit ar brezoneg. Kaset e vo d'ar c'hazetennou, n'eo ket hepken e Breiz, hogen ivez er broioù bras hag er broioù bihan. Oc'h ober se, ne reomp nemet heulia skouer ar Flamanked, ar Serbed, ar Boloniz, ar Catalaniz hag all.

Moulet e vo ar stagadenn en doare ma vo aes da zistaga diouz peurrest ar gazetenn. Pedit hag aspedi a reomp hol lennerien d'he rei da lenn d'o anaoudegeziou, dreist-holl ar re a zo o vransellat etre ar brezoneg hag ar galleg, hag a vefe a-du ganimp ma oufent pebez labour kaer a vez graet e yez ar vro.

Tamallet neb a garo ! Ne vo ket lavaret n'hon eus ket klasket pep tra evit savetei ha skigna ar brezoneg.

### SKOL DRE LIZER

evit deski ar brezoneg

Skriva da :

**OBER**

**R. DELAPORTE, Boest-Post 28  
Roazon**

## MOGER VRAS BRO-SINA

Eur vogez a zaou vil kilometrad

Moger vras Bro-Sina (Chin) a zo anezi eur pikol savadur, peogwir eo ouspenn daou vil kilometrad hed. En em astenn a ra adalek harzou Mandchouria betek war-dro ar stêr Bers. Savet e voe evit diwall broioù Sina, pinvidik ha poblet-stank, diouz ar poblou gouez, rederien-vro, e-giz an Hiong-Nou, ar Vongoled hag an Durked, o devoa drastet ar vro meur a wech a-raok.

War lein ar menezioù

Trouc'ha a ra ar vogez zoken a-dreuz ar menezioù, o pignat war o lein, hag o tiskenn en traoniennou.

Anat eo ne oa ket hepken eur vogez. Bez' e oa kentoc'h eun difenn kreñv-meurbet. En he hed a-bez, pe dost, ez eus anezi diou vogez, gant eun hent etrezo. A lec'h da lec'h, da greñvaat anezi, ez eus bet savet tourioù uhel, kelc'hiek (ront) pe garrezek.

E lec'hioù 'zo eo daougementet ar vogez, d'ez eun ober tro eun draonienn, a c'hellje ober eun hent evit an alouberien (« añvaiseur »).

Mogeriou all heñvel

Setu hag a zo heñvel a-walc'h ouz ar vogez vras a savas ar Romaned e Bro-Skos eus an eil mor d'egile, ha war an Douar-Bras eus ar stêr Danao (« Danub ») d'ar stêr Roen (« Reñ »). Savet e voe ar mogeriou-se d'an hevelep koulz hag hini Sina (war-dro amzer Jezuz-Krist), ha graet e voent evelti da servij da zifenn ha da hent-brezel, da gas ar soudarded d'al lec'hioù taget gant an estren.

ERWAN TORRAVAL.

An holl levrioù brezonek

a vez kavet e :

**TI BREIZ**

dalc'het gant an dimezell Torcol

11, rue d'Algésiras, Brest

## KELEIER AR MIZ

Ar Bloavez Santel

Ar Bloavez Santel a zo lidet en eñvor eus maro Hor Salver, c'hoarvezet ez eus dres naontek kantved. Digoret eo bet gant Hon Tad Santel ar Pab d'ar sadorn, derc'hent Sul ar Bleunioù.

D'ar Sul Fask ez eus bet gouelioù kaer en iliz Sant Per Roma. Ar Pab, tro-war-dro d'ezañ e veleien uhel hag e soudarded, a voe douget en iliz war eur gador alaouret.

Eun 40.000 den bennak, en o zouez pirc'hirined deut eus kement korn eus ar bed, a oa o sellout.

Kerkent ha ma voe gwelet an Tad Santel, e savas eur youc'hadeg vras : « Viva il Papa ! » (Bebet ar Pab !).

Eur brosesion a dremenas dre an iliz, enni ar Warded Helvetiat, d'ezo gwiskamantou liou orañjez, ruz ha glas. Da heul e teue menec'h, gwisket evel er Grenn-Amzer (« mouaien-aj »). kardialed e moug (« pourpr »), kambrelaned e du, eskibien e gwenn. En-dro d'ar Pab e oa ar pevar C'hleze Flamm, douget gant gwarded. Evit kloza e teue an Uhelwarded, d'ezo tonegoù ruz-gwad. A-hed an hent e oa archerien, ar vaionetez ganto ouz beg ar fuzuilh.

Goude kanet an oferenn, e pignas Pi XI betek balkon Sant Per, hag eno e roas ar vinnigadenn abostol d'eun 200.000 bennak a dud.

Prosez an ijinourien saoz

Ar c'houec'h ijinour saoz bet arestet e bro Rusia a zo bet barnet e Moskov. Tamallet e oa d'ezo beza distrujet benvegou a oant e karg anezo, ha beza spiet war ijinerez (« eñdustri ») ar Rusianed. Daou hepken a zo bet kondaonet, ha c'hoaz d'eun nebeut mizioù prizon.

E Bro-Saoz, avat, ez eus bet trouz spontus. Gouarnamant Londrez en deus lakaet an « embargo » war an holl varc'hadouezioù o tont eus Rusia.

Petra a zo dindan kement-se, n'eus ket kalz a dud a oar.

E Washington

Emañ an dollar o koueza, o koueza. En doare-se,

e kav d'an Amerikaned e c'hellint adsevel o c'henwerz, a zo gwall glañv.

Ramsay Macdonald, evit Breiz-Veur, hag Herriot, evit Bro-C'hall, a zo bet o weladenni ar prezidant Roosevelt, da gomz gantañ, moarvat, diwar-benn politikerezh ar bed-holl. An daou aotrou-se a zo deut en-dro, laouen-meurbet, war a lavaront, evel atao.

N'eus ket da gredi e teuo kalz a vad eus an holl gaozeadennou-se. Eur veaj muioc'h, ha netra ken.

En Alamagn

'Emañ Hitler o paouez echui en eun devez al labour bouc'het gwechall gant Bismarck, ar pezh n'en doa kredet ober gouarnamant ebet en Alamagn abaoe : peurunvanidigezh ar vro. Diwar vremañ, an Alamagn, rannet betek-hen e nouspet bro vihan, a vo kreizennet (santralizet) kement ha Bro-C'hall, da skouer.

D'an 20 a ebrel e voe lidet dre ar vro a-bez 44-vet deiz-ha-bloaz ganedigezh Hitler. Emañ ar mestr bras, hag ober a ra al lezenn d'an holl, en diavaez da vihana. An holl gazetennou a zo dindanañ hag a gan e veuleudioù.

An Everest

Traou pouezusoc'h : nijerien saoz, ganto benvegou a bep seurt, a zo deut a-benn da nijal a-zioc'h uhela menez an Douar, ar menez Everest, en Himalaia (8.840 m.).

E Spagn

Trouz a zo atao gant ar Gomunisted e bro Spagn, dreist-holl e Katalonia. Tra m'emañ an holl vroioù all o trei war ar gwenn, e seblant bro Spagn trei war ar ruz.

Er Sav-Heol

Soudarded bro Japan a zo tremenet en tu kreisteiz da Voger Vras bro Sina. Eun darvoud a bouez en istor ar Sav-Heol.

# EUN DRO E HOLLYWOOD

Ne vezomp mui souezet gant netra. Er finvskeudenndi (1), pa welomp war ar skramm tud o lammat eus lein eun tour d'an douar hag o sevel adarre, pe eur c'harr-nij o tremen dindan bolz eur pont pe o treuzi eur voger, e lavaromp :

— Eun doare o deus da ober an dra-se. Evel just, n'eus netra e gwirionez. Micher ar finvskeudenner eo.

Koulskoude, a-wechou ez eus eun tamm gwirionez er skeudennou-se. Ouspenn eur wech eo c'hoarvezet d'eur c'hoarier beza lazet pe wall c'hlozet tra ma vezed o trei filmou.

## Eur film nevez

Plijadur a raio d'hol lennerien marteze gouzout penaos eo bet tennet unan eus filmou bras ar bloaz-mañ e Hollywood, kêrbenn ar finvskeudennerez.

Ano ar film eo « King Kong ». An danvez anezañ a zo eur romant savet gant Edgar Wallace, eur skrivagner brudet-tre e Bro-Saoz hag er Stadou-Unanet.

War eun enezenn, dianav betek neuze, e-kreiz ar Mor Habask, emañ o vevañ loened seurt na weler mui pell 'zo e rannou all an douar, loened eus mare ar ragistor, anoiou spontus d'ezo, e-giz an « askellvizeg », ar « glazard-meur », an « olifant-hirvlevek », hag all. En o zouez ez eus eur pikol marmouz, d'ezañ ugent metrad a uhelder. Al loen-se a zo paket ha kaset d'ar Stadou-Unanet. Eno e kav an tu da dec'hout. A-benn ar fin e weler anezañ oc'h ober e reuz e New-York, pintet war beg uhela an « Empire State Building », eur plac'h oc'h en em zifreta en e zourn, tra m'emañ eur bagad kirri-nij o c'hournijal a-zioc'h e benn hag o lezel bombezennoù da goueza warnañ.

Evel ma welit, diotachou penn-da-benn. Hogen n'eo ket atao an diotachou a zispilij ar muia. En tu-hont da se, ar film n'eo ket ken nevez-se. Darn eus va lennerien o devo soñj marteze da veza gwelet, en amzer ar film mut, eun dra anvet « Ar Bed Kollet », hag a oa damheñvel an danvez anezañ ouz danvez « King Kong ». Ne vern. Ar pezh a dalv ar boan gouzout eo penaos eo bet graet ar film gant ijinourien Hollywood.

## Ar marmouz

Ar skeudennou eus New-York a zo gwirion, hag ar c'hirri-nij ivez a zo kirri-nij gwirion. A bep seurt troiou luc'hskeudennerez (2) eus ar sebezusa a zo bet implijet koulskoude, eus penn kenta ar film betek ar penn diweza. Ar marmouz a zo eur pikol merc'hodenn

goad. E zremm (3) he deus seiz troatad (eun troatad a dalv war-dro tregont santimetrad) a hirder, e fri en deus daou droatad, hag e c'henou, pa c'hoarz, a c'hell en em astenn war c'houec'h troatad. Pep dant-lagad en deus pemp santimetrad war-nugent a hirder, ha pep lagad hevelep tra. Hirder pep brec'h eo tost eiz metrad, hag hirder pep gar pemp metrad. Tro ar bruched eo ugent metrad. Graet eo bet gant eun den a zo war eun dro eun arzour hag eur studier war an henloenoniezh (4).

## Eul labour hir

Al loened all a zo bet graet en hevelep doare, hervez ar skoueriou a gaver er Mirdiou Naturouriezh (5). Daouzek den a zo bet o labourat warno e-pad bloaz.

An hira labour, avat, eo bet al labour tennaskeudennou. Netra nemet evit luc'hskeudenna ar stourm etre ar marmouz hag eul loen all, eo bet ret kemer seiz sizun. E-lec'h mont buan-buan evel ma reer pa vez filmet tud o finval, e rankjod tenna ar skeudennou unan-hag-unan, amzer da gemma eun tammig lec'hiadur al loened etre diou skeudenn. A-boan ma teuer a-benn da ober c'houec'h metrad film bemdez en doare-se.

## Oc'h ober an trouz

Evit « soniaoua » ar film, da lavarout eo, evit merka warnañ an trouz a dle mont gant ar skeudennou, e voe eun abadenn all.

Penaos, da skouer, ober mouez ar marmouz ? Dastumet e voe diwar eur bladenn sonskriverez (6) garmou graet gant marmouzien gwirion, hogen dastumet a-gil ha goustad-goustad. An holl a oar petra c'hoarvez pa c'hoarier eur bladenn goustad : ar soniou a zeu da veza boud-meurbet. Hag ar re o deus klevet eur bladenn c'hoarier dre stiaga gant ar penn diweza e-lec'h ar penn kenta a oar ivez pegen souezus ez eo.

Da ober garmou al loened all, e voe mesket garmou leoned, leonparded, hag all. Fuc'hadennou ar glazard askellek a voe graet gant « vox humana » eun ograou koz.

## Burzudou al luc'hskeudennerez

Gwall ampart o deus ranket beza an ijinourien evit luc'hskeudenna lodou 'zo eus ar film, e-giz pa weler ar plac'h douget eus eur wezenn d'eben e dourn ar marmouz. Neuze e vez « aozet » ar skeudenn, dre

# PLADENNOU BREZONEK

Ar sonskriverez (fonograf) a zo eur benveg ma c'heller lakaat da drei warni a bep seurt sonerez, hervez c'hoant an den. Betek-hen, avat, n'oa ket kalz a bladennou (diskou) brezonek, hag an neb a blij d'ezañ klevout eun hekleo eus yez ha kanennou e vro ne gave ket kalz a dra war rollou-pladennou ar varc'hadourien, dreist-holl m'en deus eur sonskriverez gant nadoziou, evel ma vezont graet holl bremañ.

Emañ kompagnunez ar « Gramophone » o paouez embann, war-dro miz kerzu diweza, eur stagadenn vreizat, enni 24 a bladennou, engravet evel just evit beza gwerzet dreist-holl e Breiz.

Eus ar pladennou-se, an hini genta, « Pardon ar Folgoad » (K. 6685), a blij war eun dro d'an hañvourien a fell d'ezo derc'hel eun eñvor a bouez eus ar vro m'o deus tremenet enni deiziou diskuiz, ha d'ar Vretoned divroet. D'ar re all, avat, e c'hell plijout kemend-all.

Meur a rumm a c'heller diforc'h er peurrest eus ar pladennou :

I. Da genta, ar c'hanennou liesvouez. Ar re-mañ a zo bet kempennet evit al lazou-kana gant an Aotrounez Mayet, Dantec ha Buleon, anavezet mat evit o labour war sonerez Breiz gant an neb en deus darempredet kendalc'hiou ar Bleun-Brug.

Laz-kana Sant Kaourintin Kemper a gan : 1) « Iliz-Veur Kemper » (e galleg) ha « Loeizaig » (K. 6696) ; 2) « O Kalon Sakr » hag « Adoromp holl » (K. 6697).

Laz-kana Sant Varzin Brest a ro d'imp : 1) « Bro Goz va Zadou » ha « Silvestrig » (K. 6701) ; 2) « Adoromp holl » ha « Klemvan » (K. 6702).

Ar maout, avat, a chom gant laz-kana Sant-Yann-Brevele e Bro Wened : 1) « Frañsez ar Vilin Avel » hag « An Diou C'havr » (K. 6698) ; 2) « Diouz Tor ar Motennou » hag « Eur Volennad Sistr en Dourn » (K. 6699) ; 3) « Ar Bleun Brug », « Ar Vinorez » ha « Kenavo » (K. 6700).

II. En eil rumm e renkan ar pladennou, warno kanennou anavezet a-benn bremañ, kalz pe nebeut.

voula, da skouer, diou skeudenn an eil war eben. Aes eo kompren pegen ker e tle kosta eur film graet evel-se, ha penaos ne c'hell beza graet nemet gant kevredigeziou (7) pinvidik, hag en eul lec'h eus an douar hepken.

(1) sinema. — (2) fotografi. — (3) fas, bizaj. — (4) skiant al loened a veve gwechall. — (5) « muze d'istour naturel ». — (6) fonograf. — (7) sosieteoù.

Dindan ano F. Gourvil-e kaver diou bladenn : 1) unan e galleg ; 2) « Gwreg al Lonker » hag « Ar Pilhaouer » (K. 6691). An eil, d'am meno, a zo an hini wella.

Cueff a ro d'imp e bladenn wella, a gredan, gant « Gwreg Roue Aldivalloc'h » hag « Ar Botaouer » (K. 6688). An eil pladenn a zo e galleg.

An Nestour a gan e rannyez Wened peder son : 1) « Miliner an Ignol » ha « Sonenn Vartoloded C'hroe » (K. 6689) ; 2) « Va Zi-Plouz » ha « Klemmou Maouez al Lonker » (K. 6690).

III. Er rumm-mañ e renkan ar pladennou, warno kanaouennou a vremañ kanet gant Moal ha Stephan, eilet gant eun akordeoñs : 1) « Diwallit, Paotred » ha « C'hoant he doa mont da Baris » (K. 6693) ; 2) « Diwallit, Merc'hed » ha « Merc'hed Breiz-Izel » (K. 6694) ; 3) « An Dorifora » ha « Na zimezit ket d'an Arc'hant » (K. 6695). Ne blijint ket marteze d'an dud vlizidik, Koulskoude, eur blijadur vras am eus ouz o selaou, daoust d'o sonerez beza eus n'eus forz pelec'h moarvat. Breizek-rik e teu da veza war muzellou ar ganerien, hag e tiskouez ar re-mañ, ouspenn, ne deo ket aet da hesk gouenn ar saverien kanaouennou pobl.

An Itron Bars a gan ivez, eilet gant eun akordeoñs, diou ganaouenn, kosoc'h, a gredan, eget ar c'houec'h meneget a-raok : 1) « Son Job al Lonker » ha « Son ar Martolod Yaouank » (K. 6686). An tikedennou, er bladenn am eus, a zo bet lakaet an eil evit eben. An tu kenta a zo dreist. An eil a zo disteroc'h, dreist-holl ar c'homzou.

IV. E fin ar stagadenn ez eus c'houec'h pladenn binou ha bombard (K. 6703, 6704, 6705, 6706, 6707, 6708). Brao an toniou peurliesha, hogen d'am meno, rust doare-c'hoari ar sonerien. Plijout a raio ar pladennou-se evelato da galz a dud.

V. Pladennou all gant Cueff a zo c'hoaz e gwerz e ti « Gramophone » : 1) « Bro Goz va Zadou » ha « Dalc'h Soñj » (K. 5478) ; 2) « Kousk, Breiz-Izel » ha « Matilin an Dall » (K. 5610).

E ti « Odeon » e c'heller menegi diou all gant an hevelep kaner : 1) « Er Gêrig Wenn traoñ ar Menez » hag « Ar Pilhaouer » (250.072) ; 2) « An Hader » hag eur ganaouenn c'hallek (250.069).

E ti « Pathé » ez eus c'hoaz diou bladenn all gant Cueff hag a vefe, war am eus klevet, eus ar re wella : 1) (X. 93058) ; 2) (X. 93057). N'em eus ket selaouet an diou-se betek bremañ.

ABEOZEN.

## 25.000 metrad a-zioc'h an douar

An dud ouizieq a vez en amzeriou-mañ o studia muioc'h-mui ar pezh a dremen uhel-uhel en oabl, hag evit se e klaskont atao tizout uheloc'h. An holl a oar ar pezh en deus graet ar c'helenner Piccard, hag heñ pignet en eun aerlestr betek 16.000 metrad. Eun den gouizieq all, ar c'helenner Regener, a zo deut a-benn, e miz east 1932, da ober muzulioù betek 25.000 metrad a uhelder. N'eo ket pignet, heñ avat, ken uhel-se. Hogen graet en deus aerlistri skañv-kenañ, enno binvioù hag a c'hell merka drezo o-unan kement a zo ezomm da c'houzout. Ar pezh a glasker muzulia dreist-holl eo ar skinou (bannou) anvet « uhelskinou », hag a red dibaoez dre ar bed etre ar stered hag ar planedennou.

## Eur c'hraou a zoare

Brasa kraou Europa a zo bet savet e Bro-Saoz.

Lec'h a zo ennañ evit 288 buoc'h.

Graet eo e stumm eun ti hir-meurbet.

Ar saoud a zo war eur planchod kaoutchoug, gant alezioù ha kaniou simant e-kreiz.

A bep seurt ijinennou (mekanikou) a zo en ti, ken evit derc'hel an traou kemprenn hag e-ratre, ken evit dilouza al laez hag ober an amann.

## O werza dour

E Breiz e kaver dour kement ha ma karer, hag alies ez eus anezañ muioc'h eget ma karer.

E broioù 'zo, avat, e ranker mont pell da gerc'hat dour, ha setu perak ez eus er broioù-se eur vicher dianav en hon touez : marc'hadour dour.

E bro Indez, da skouer, e vez douget an dour e pikolioù tammou ler war gein ejened, ha gwerzet evel-se a zor da zor.

## Bugale Gembre hag ar peoc'h

Bep bloaz, e miz mae, e vez kaset a-berz bugale bro Gembre eur c'halvadenn da vugale ar bed holl evit ar peoc'h. Er bloaz-mañ e vo kaset d'ar sul 18, ha setu-hi amañ e brezoneg :

« Paotred ha merc'hed bihan holl vroioù ar bed, emamp-ni, bugale Gembre, eur wech adarre o saludi ac'hanoc'h da geñver Deiz ar Youl Vat.

« En nevez-amzer-mañ eus 1933, ez eus war an Douar milionou a vugale a zo gwalleürus, peogwir emañ o zadou hag o breudeur dilabour. Ne ouzomp ket perak e rank beza kement a dristidigez en eur bed a zo ken kaer, ha kement a zinez en eur bed a zo ken pinvidik.

« Kredi a reomp ne zeufe ket kement-se ma vefe an holl vroadou ma 'z omp stag outo o veva hag o labourat en eil gant eben evel izili eun hevelep tiegez (familh), o kaout fiziañs an eil en eben, hag oc'h ober o mad a-gevret (asamblez) eus holl binvidigezioù an Douar. Kredi a reomp ivez e c'hellomp gant hor soñjou ober eun dra bennak da zegas ar spered-se d'ar bed.

« Evel-se, en em unanomp, ar milionou a zo ac'hanomp, da Zeiz ar Youl Vat, en eur soñj bras a beoc'h, peoc'h etre ar poblou ha peoc'h etre ar broioù. Gant ar feiz-se a c'hell finval ar menezioù e vo kemmet ar bed dre hor spered. »

Ar vugale a garo a c'hello kas eur respont, e brezoneg, d'ar chomlec'h-mañ (evit 6 real timbrou a ranker lakaat war ar golo) :

Cyngor Cymreig Undeb Cynghrair y Cenhedloedd, Cardiff.

## Menezioù skournek e kreiz Afrika

Ne vezer ket souezet pa weler erc'h ha skournek war menezioù uhel Europa, zoken e-pad an hañv.

Ha gouzout a rit, avat, ez eus menezioù e kreiz Afrika, e tro ar c'heheder (« ekuateur »), hag a vez bepred goloet a skournek ivez ?

An hini a gomzas anezo ar c'henta eo ar Gresian Ptolemaus, hag a rae anezo « Menezioù al Loar ». Kavet e voent gant ar beajour bras Stanley, en naontekvet hantved, etre al lenn Alberz hag al lenn Edouard. Sevel a reont betek 5.000 metrad a-zioc'h ar mor, hag anvet e vezont bremañ ar menezioù « Ruvenzori ».

Diaes int da welout, hag i kuzet peurliesha el latar. Diaesoc'h c'hoaz int da dizout, abalamour d'ar c'hoadou stank didreuzus a gresk tro-war-dro d'ezo.

An hini a bignas warno ar c'henta eo Dug an Abruzou, e 1906. Mont a reas diouz tu ar sav-heol. E 1932, eur bagad Beljed, en o fenn ar c'hont de Grunne, a bignas diouz tu ar c'huz-heol. Bez' e oant holl tud ouizieq, pe tud boas da grapa gant ar menezioù, ha studioù a bep seurt a rejont diwar-benn an douar, ar boblañs, al loened, ar plant, hag all. Betek 3.000 metrad a uhelder e kaver tud, morianed hag a ya en noaz. Etre 3.000 ha 4.000 metrad, n'eus nemet koadou ha brouskoadou iskis. Uheloc'h eget 4.000 metrad, lavaret e vefe emeur war an Alpoù, nemet doare ar skournek a zo disheñvel.

# L'INFORMATEUR BRETON

Supplément à « *Kannaig Gwalarn* ». — Mai 1933

## - A propos d'une pièce de Théâtre -

Dans l'œuvre de rénovation totale de la littérature bretonne entreprise par « *Gwalarn* », le théâtre n'a pas été négligé. On se rappelle les traductions publiées il y a quelques années de pièces des pays celtiques d'Outre-Manche. On se rappelle surtout la belle œuvre de Tanguy Malemanche, « *Les Païens* » et les drames de Roparz Hemon, « *Lina* », « *Un homme de Rien* », « *Le Feu à Kernaspreden* ».

Dieu sait si la tâche est difficile. Le théâtre paysan breton n'a pas su se dégager du répertoire des scènes de patronage, où toutes sortes d'entraves arrêtent son développement. Le théâtre urbain, — celui auquel conviendraient les œuvres publiées par « *Gwalarn* », — n'existe pas, faute de public suffisamment éduqué dans les villes. C'est pourquoi les pièces de nos jeunes écrivains, tout en étant conçues pour être jouées, ne sont que lues par la petite élite qui suit la production littéraire bretonne.

« *Les Deux Visages* », la pièce publiée ce mois-ci par Xavier de Langlais, est un exemple de cet état de choses, encourageant et navrant à la fois.

Encourageant, parce que la littérature dramatique bretonne vient de s'enrichir d'une belle œuvre. Navrant, parce que cette « chose de beauté » passera, comme tant d'autres, presque inaperçue, alors que des médiocrités écrites en français continueront à représenter, aux yeux du public cultivé, la production littéraire de chez nous.

L'action de la pièce se déroule dans « la grande salle sombre d'une ferme », qu'on aime à se représenter quelque part sur les landes des environs de Vannes, dans le pays de l'écrivain. Une mère et son fils convalescent. Il a été blessé dans un incendie. Maintenant,

il est guéri, mais il reste à jamais défiguré. Aujourd'hui il se lève pour la première fois. Il craint de rencontrer ses anciens compagnons. Il craint surtout de retrouver Rozen, sa fiancée, qu'il ne veut plus maintenant épouser. Il veut voir son nouveau visage. La mère a caché le miroir. Il sort pour se regarder dans le puits.

Une voisine entre en coup de vent. Elle vient prendre des nouvelles. Elle en apporte d'autres. Rozen, la fiancée, est malade elle aussi, rongée par la tuberculose, et ne guérira pas.

Malo, le fils, revient. La mère emmène la voisine, dont la présence le rend malheureux.

Et voici Rozen, qui s'est traînée jusqu'à la maison. Elle veut toujours épouser Malo. Doucement, il cherche à lui faire comprendre qu'il n'a pas besoin de sa pitié. La mère interrompt brusquement la conversation, éloigne Rozen, et dit crûment à son fils la vérité.

Quand Rozen revient, la détermination de Malo est prise. Ils s'épouseront, et les deux pauvres visages se rapprochent comme autrefois.

Infiniment originale, cette pièce rappelle un peu, par sa construction et son dialogue, la manière de Synge et en général du premier répertoire de l'Abbey Theatre. Les personnages parlent simplement, et cependant, chacune de leurs phrases exprime quelque poésie. On y retrouve l'amertume un peu étrange qui frappe tous ceux qui ont regardé les dessins ou lu les poèmes de Xavier de Langlais. Et tout cela fait une œuvre qui a beaucoup de chances de durer.

Détail curieux : le dialogue est en pur dialecte vannetais, simplement transcrit en orthographe courante. Nouvelle preuve de la souplesse de la langue unifiée.



# CHRONIQUE DU MOIS

## « Les Deux Visages »

On lira par ailleurs l'étude consacrée à la belle pièce de théâtre de Xavier de Langlais, « An Diou Zremm » (Les Deux Visages), qui forme le numéro de mai de la revue « Gwalarn ». Chaque numéro de « Gwalarn », comme on sait, comprend une œuvre complète, ou du moins un ensemble d'œuvres du même auteur.

Nous ajouterons seulement que « Les Deux Visages » paraît avec trois gravures sur bois exécutées par l'auteur lui-même. Le prix de l'édition ordinaire est de 5 francs. Il existe un tirage à part très restreint : 8 exemplaires sur Hollande (prix : 25 francs) et 24 exemplaires sur Rives (prix : 15 francs). Pour ce tirage à part, s'adresser directement à M. Xavier de Langlais, Kohanno, Surzur, par Vannes.

## « Kannadig Gwalarn »

En outre des rubriques habituelles, signalons dans le numéro de mai : la fin de l'Histoire de la Découverte du Pôle Sud, par Erel Keralban. — Un Tour à Hollywood (comment fut filmé le nouveau film « King Kong »). — Un compte rendu, par Abeozen, des nouveaux disques bretons publiés par « Gramophone ». — Un article des plus intéressants sur la manière d'enseigner à lire le breton aux bretonnants, et particulièrement aux enfants. — Un article sur les récents perfectionnements de la photographie. — Pour les enfants, la suite des aventures de « Sindbad le Marin », écrites dans une langue très simple à leur usage. — Un article, tout à fait d'actualité, sur la Grande Muraille de Chine.

« Kannadig Gwalarn » est à la fois la plus intéressante, la plus moderne et la plus facile à lire des revues bretonnes. C'est en outre la moins chère. Tous les amis du breton doivent se faire un devoir de s'y abonner (dix francs par an !) et de la répandre dans tous les milieux bretonnants, en Bretagne et ailleurs.

## « Un Breton au Canada »

Le grand événement littéraire du mois est la publication du livre tant attendu : « Eur Breizad er C'hana-Canada » (Un Breton au Canada).

Ce livre est important à plusieurs points de vue. D'abord, par le sujet. C'est un recueil de lettres écrites en 1921-23 par un Breton établi au Canada depuis son enfance. « F.L.T. Donroe », dit la préface, « était un homme intelligent et instruit, et de plus un excellent Breton, plein d'amour pour sa patrie, la Bretagne, et pour sa langue, le breton. Ceux qui aiment à réfléchir à ce qu'ils lisent trouveront dans ses lettres plus d'un enseignement. Il fournit sur le Canada des détails qu'il serait vain de chercher dans les livres écrits par des voyageurs européens qui n'ont fait que passer par le Dominion, des détails dont les Canadiens eux-mêmes n'aiment pas à parler et qu'ils ne se soucient pas de révéler aux étrangers. »

Ensuite, la traduction est l'œuvre de F. Vallée, et ceci suffit à faire comprendre quelle en est la valeur linguistique. Aucun étudiant sérieux de la langue bretonne ne pourrait se passer de cet ouvrage.

Le livre, imprimé sur beau papier, est abondamment illustré de photographies, dont la plupart sont inédites.

Il est publié par « Gwalarn ». Prix franco : 15 francs.

## « Le Breton des Enfants »

On sait que « Gwalarn » a fondé une œuvre destinée à répandre les livres bretons parmi les enfants. Tout instituteur, tout prêtre ou même toute personne de bonne volonté qui en fait la demande, reçoit un certain nombre d'ouvrages spécialement édités pour la jeunesse. Des milliers de livres et de brochures ont été ainsi distribués. La caisse de l'œuvre est alimentée par les dons des amis du breton.

Hélas, depuis quelque temps, les dons se font fort rares, et la caisse étant en grand danger de se vider complètement, « Gwalarn » a dû restreindre un peu ses envois. Cependant, que l'on continue à nous adresser des demandes. Nous nous efforcerons de les satisfaire.

Le mois dernier, nous avons adressé pour 140 francs de livres à l'école libre de Pleyben.

Nous avons reçu comme don 50 francs de M. Mens. Qu'il en soit remercié au nom des enfants de Bretagne.

Il reste en caisse : 303 fr. 80.

# PERIODIQUES et OUVRAGES BRETONS

On peut se procurer tous les ouvrages ci-dessous mentionnés en écrivant à l'Administrateur de la revue « Gwalarn », Boîte Postale 75, Brest. Ils sont payables d'avance. Prière de verser le montant de la commande autant que possible au compte de chèques postaux 96-38, Rennes. Les envois se font franco. Il est recommandé, pour être rapidement servi, de nous adresser directement les commandes.

## 1. — Périodiques

**GWALARN**, revue littéraire mensuelle. Abonnement annuel : 30 francs.

Tous les meilleurs écrivains bretons d'aujourd'hui collaborent à « Gwalarn », qui est la revue littéraire du niveau le plus élevé publiée, non seulement en Bretagne, mais dans tous les pays celtiques. Elle est lue par l'élite intellectuelle de Bretagne, et suivie avec intérêt par les celtisants du monde entier. Elle a renoué la littérature bretonne dans tous les domaines, et la collection de ses numéros, depuis 1925, représente tout ce qui existe de plus précieux en langue bretonne.

**KANNADIG GWALARN**, revue mensuelle d'éducation populaire. Abonnement annuel : 10 francs.

Instruire le peuple breton dans sa langue, tel est le but que se propose « Kannadig Gwalarn ». Ses articles, attrayants et variés, traitent de tous les sujets : actualité, sciences, voyages, littérature, musique, histoire, curiosités, etc... Une partie de chaque numéro est consacrée aux enfants. « Kannadig Gwalarn » convient à tous. Il intéresse les gens instruits comme les ignorants. Pour ceux qui étudient la langue bretonne, il constitue le « manuel de lecture » idéal, car sa langue, simple et courante à la fois, ne présente aucune difficulté.

## 2. — Ouvrages pour l'étude du breton

**COURS ELEMENTAIRE DE BRETON**, par Roparz Hemon. — Prix : 12 francs.

Manuel simple et pratique, dont le succès ne cesse d'augmenter. On peut se le procurer, soit complet, soit en deux volumes : premier volume, prix : 3 francs. — second volume, prix : 9 francs.

**PRECIS DE GRAMMAIRE BRETONNE**, par Roparz Hemon. — Prix : 3 francs.

Petit ouvrage bilingue, où tout l'essentiel de la grammaire bretonne est exposé. Il est en usage partout où l'on enseigne le breton.

**LA PRONONCIATION DU BRETON**, par Roparz Hemon. — Prix : 3 francs.

Cet ouvrage est le complément du précédent. Sous une forme claire et accessible à tous, il expose les principes essentiels de la phonétique bretonne.

**L'ORTHOGRAPHE BRETONNE**, par Roparz Hemon. — Prix : 3 francs.

Troisième ouvrage de la série. Il résume l'histoire de l'orthographe bretonne et montre comment s'est établie l'orthographe unifiée actuelle.

**PETIT DICTIONNAIRE PRATIQUE BRETON-FRANÇAIS**, par Roparz Hemon. — Prix : 22 francs.

Le seul dictionnaire moderne, bien imprimé et contenant tout le

vocabulaire courant. Tout y a été disposé pour faciliter la recherche et éviter la gêne causée par les mutations.

## 3. — Contes et nouvelles

**AN DOUR EN-DRO D'AN INIZI** (L'Eau autour des Iles), par Y. Drezen. — Prix : 4 francs.

**PA C'HOUEZ AVEL WALARN** (Quand souffle le Noroît), recueil de nouvelles, par Fant R. Meavenn. — Prix : 5 francs.

**PEVAR MARVAILH** (Quatre Contes), récits de guerre, par Abeozen. — Prix : 3 francs.

**AR C'HOAR HENA** (La Sœur Aînée), par Roparz Hemon. — Prix : 4 francs.

**AL LAER AVEL** (Le Voleur de Vent), par Roparz Hemon. — Prix : 4 francs.

**AR WAZIG** (Le Ruisseau), par D.K. Kongar. — Prix : 3 francs.

## 4. — Poésie

**KANOU EN NOZ** (Chants dans la Nuit), illustré de bois par l'auteur, par Xavier de Langlais. — Prix : 10 francs.

**KANOU EN DEIZ** (Chants dans le Jour), suivi d'une étude sur la situation de la langue irlandaise, par Fant R. Meavenn. — Prix : 4 francs.

**TELENN ARVOR ; FURNEZ BREIZ** (La Harpe d'Arvor ; La Sagesse bretonne), par Auguste Brizeux. — Prix : 6 francs.

## 5. — Théâtre

**AR BAGANIZ** (Les Pâiens), drame de Tanguy Malemanche. — Prix : 10 francs.

**LINA ; AN TAN E TI KERNASPRENEN** (Lina ; Le Feu à Kernaspreden), par Roparz Hemon. — Prix : 4 francs.

A propos de ces deux ouvrages, le grand poète gallois T. Gwynn Jones nous écrit :

« *Ar Baganiz* interested me greatly. It is indeed a remarkable drama, with an immense background and profound psychological value. Although you say that *An Tan e Ti Kernaspreden* and *Lina* are not *gwir beziou-c'hoari*, but rather *danskeudou peziou-c'hoari*, I am deeply sensible myself of their excellence, their admirable compression and their fidelity as pictures of human existence ».

**AN DIOU ZREMM** (Les Deux Visages), par Xavier de Langlais. — Prix : 5 francs.

## 6. — Histoire et Voyages

**ISTOR AR BED** (Histoire du Monde), par Meven Mordiern. Vol. I : 14 francs. — Vol. II : 10 francs. — Vol. III : 8 francs.

Cet ouvrage considérable, le plus important travail scientifique entrepris jusqu'ici en breton, continuera à être publié régulièrement à raison d'un tome par an. Le premier volume contient les généralités. Le second volume traite des débuts de la préhistoire. Le troisième volume étudie l'époque néolithique en Europe.

**EUN DRO E KEMBRE** (Un Tour au Pays de Galles), par Roparz Hemon. — Prix 2 fr. 50.

**IWERZON DISHUAL ; SKOL S. ENDA** (L'Irlande libre ; l'Ecole St-Enda), par Fant R. Meavenn. — Prix : 4 francs.

**KEMBREIZ GWECHALL HA BREMAN** (Les Gallois d'autrefois et d'aujourd'hui), fragments traduits par F. Vallée. — Prix : 4 francs.

**EUR BREIZAD ER C'HANADA** (Un Breton au Canada), lettres de F.L.T. Donroe, traduites par F. Vallée, et illustrées de nombreuses photographies. — Prix : 15 francs.

## 7. — Linguistique

**YEZADUR BERR AR C'HEMBRAEG** (Précis de Grammaire Galloise), par Abeozen. — Prix : 8 francs.

**ENKLASK DIWAR-BENN STAD AR BREZONEG E 1928** (Enquête sur l'état de la langue bretonne en 1928). — Prix : 4 francs.

## 8. — Critique

**EUR BREIZAD OC'H ADKAVOUT BREIZ** (Un Breton retrouve la Bretagne), par Roparz Hemon. — Prix : 15 francs.

Ouvrage fondamental sur les origines du mouvement de « Gwalarn ».

## 9. — Littérature celtique

**OWEN HA LUNET** (Owen et Lunet), traduit du gallois par Abeozen. — Prix : 3 francs.

**TONKADUR BUGALE TUIREANN** (Le Sort des Enfants de Tuireann), récit irlandais adapté par Roparz Hemon. — Prix : 4 francs.

**DIARMUID HA GRAINNE** (Diarmuid et Grainne), récit irlandais adapté par Roparz Hemon. — Prix : 5 francs.

**GWELEDIGEZ MAB KONGLIN** (La Vision de Mab Konglin), récit irlandais adapté par Roparz Hemon. — Prix : 4 francs.

**SKRAPADEG SAOUD KOUALNGE** (L'Enlèvement des vaches de Koualnge), récit irlandais adapté par Roparz Hemon (quatrième chapitre) — Prix : 3 francs.

« Gwalarn » a entrepris la publication méthodique en breton des œuvres principales de l'ancienne littérature celtique, galloise et irlandaise. D'autres œuvres ont paru dans les divers numéros de la revue.

## 10. — Traductions

**NEVEZ-AMZER** (Printemps), pièce de théâtre traduite de l'anglais de T.C. Murray. — Prix : 4 francs.

**PROMETHEUS EREET ; AR BERSÉD** (Prométhée Enchaîné ; Les Perses), traduits d'Eschyle par Y Drezen et illustrés de bois de Creston et de Robin. — Prix : 12 francs.

**AR PLAC'H DIANAV** (La Femme Inconnue), traduit de l'écrivain russe A. Blok. — Prix : 4 francs.

**NOTENNOU AR GOUBENNER** (Les Notes de l'Oreiller), d'après l'écrivain japonais du Moyen-Age, Sei Chonagon. — Prix : 3 francs.

**AN TASMANT DIMEZET** (Le Spectre Fiancé), adapté de l'allemand de Hoffmann, par Alan Brenn. — Prix : 4 francs.

**EUN HIR A GOUSK pe RIP VAN WINKLE**, traduit de l'anglais de W. Irving, par Erel Kerallban. — Prix : 4 francs.

## 11. — Ouvrages pour l'Enfance

**PER AR C'HONIKL** (Pierre Lapin), par B. Potter, illustré. — Prix : 1 franc.

**PLAC'HIG VIHAN AR MOR** (La Petite Sirène), par Andersen, illustré par Loïk. Prix : 3 francs 60.

**LEVR AL LOENED** (Le Livre des Animaux), par M. Gourlaouen, illustré. — Prix : 1 franc 75.

**NIJADENN AN AOTROU SKANVIG** (La Randonnée aérienne de M. Skañvig), par G.Th. Rotman, illustré par l'auteur, traduit par Y. Drezen. — Prix : 5 francs.

Note. — La liste précédente ne contient pas les ouvrages épuisés et ne mentionne pas les nombreuses œuvres de tout genre éparses dans les divers numéros de « Gwalarn ». Elle ne donne donc qu'une faible idée de l'activité de la revue depuis sa création en 1925.

**Apprenez le breton**

**par correspondance**

en suivant les cours de

**OBER**

**Boîte Postale 28, Rennes**

# Penaos e voe kavet Penn-ahel-bed ar C'hreisteiz (kendalc'h)

## Gounezerien ar penn-ahel. — Amundsen 1911-1912.

Pa voe distro Shackleton, Bro-Saoz a reas he menoz kas tud all da c'hounit ar penn-ahel. Pep tra a roe da gredi ez aje an trec'h gant ar Saozon : n'oa da vont nemet kant hanter-kant kilometrad pelloc'h eget Shackleton, ha kas muioc'h a vevañs.

D'ar c'houlz-se e felle d'an Norvegiad Amundsen tizout penn-ahel ar c'hreisteiz. Aoza a reas an traou e kuz, ha pa voe prest e lavaras e oa o vont kuit etrezek penn-ahel an hanternoz, hag eus enez Madeira e skoas etrezek Kael Ross.

Eur c'hevezer (« koñkurañ ») a bouez e oa. Deut e oa a-benn, e bourz ar Gjoa, eur weletenn a 47 tonnell, da vont eus ar Mor Atlantek d'ar Mor Habask, dre heulia aod hanternoz Amerika. Kavet en doa evel-se « Hent-Mor ar Gwalarn », klasket en aner abaoe pevar c'hant vloaz.

Eoria a reas e pleg-mor ar Balumed, ma kav ennañ ar mor diskourn. Eno eo e sav e annez-goañv (« kartie d'iver »). D'an 9 a viz c'houevrer 1911, e sko e lestr, ar « Fram », etrezek an hanternoz, o tilezel Amundsen hag eiz den war e lerc'h. Kregi a reont dioustu gant o labour. O fal a zo ar penn-ahel, hag ar penn-ahel hepken. A-raok ar goañv e savont a-hed an hent, a lec'h da lec'h, betek an 82-vet derez led, dastumlec'hiou-bevañs, a vezo talvoudus d'ezo war o distro.

D'an 19 a viz here 1911, ez a kuit bagad bihan Amundsen etrezek ar c'hreisteiz, — en holl pemp den ha peder zranell stlejet gant 48 ki. Da bep derez e vez savet eun dastumlec'h-bevañs, ha merket an hent gant berniou erc'h. An amzer a zo brao a-walc'h. D'ar 16 a viz du ez erru Amundsen hag e vagad e-harz ar menezioù. C'houec'h ki hepken a zo bet kollet. D'an 20, e kamp an Norvegiz da dri mil metr uhelder. Lazet eo 24 c'hi, didalvoud hiviziken, ha gant teir zranell, triouec'h ki ha tri-ugent deveziad-bevañs, e krogont adarre gant o hent. Barradou-erc'h hag eur skourneg diaes, ma reont anezañ « skourneg an Diaoul », o laka war-lerc'h betek an 88-vet derez. Goude e teu an amzer hag an hent da veza brao adarre, ha d'ar 14 a viz kerzu 1911, da 3070 metr uhelder, ez eo tizet penn-ahel kreisteiz an Douar.

N'eo ket bet gounezet an trec'h-se gant ijinennou (mekanikou) a vremañ, hogen gant traou ma ra ganto bemdez an dud ouez a gantre abaoe mil ha mil vloaz.

vez dre gompezennoù (plaenennou) skournet hanternoz Azia hag Amerika : skiou, tranellou, chas. Nann, n'eo ket spered an Den en deus bet an trec'h, hogen e rakwelerez, e nerz-kalon hag e youl.

Distro eo Amundsen d'ar 25 a viz genver 1912, goude 99 devez beaj. Aesaet eo bet e dro gant an amzer vras, eul labour-aoza burzudus (rakwelet en doa betek torridigez eul lerenn-gi) hag eur chañs spontus. Penaos ! Ken aes-se eo mont betek ar penn-ahel ! Dioustu e welot.

## Gounezerien ar penn-ahel. — Scott adarre (1911-1912).

E-pad m'emañ Amundsen e pleg-mor ar Balumed, Scott a sav e annez-goañv en enez Ross. Daouzek den a zo chomet gantañ. Ar gudenn vrasa evito eo hounnez : penaos kas bevañs a-walc'h d'o lakaat da dizout ar penn-ahel. Setu amañ ar pez a gav Scott : bagadou-skoazell a yelo gantañ, hag a zilezo anezañ goude savet ganto dastumlec'hiou-bevañs evit an distro.

Pa 'z a kuit, d'an 2 a viz du 1911, emañ e penn eun aridennad (linennad) tranellou : diou dranell dre dan, dek tranell tennet gant dek marc'h bihan eus Mandchouria, ha re all c'hoaz stlejet gant chas. Hep dale ez eo ret dilezel an tranellou dre dan. Brumenn a zo. D'an 10 a viz kerzu, Scott en em gav e-harz ar skourneg Beardmore. Lazet eo ar c'hezeg bihan. Ar seiz den a zo chomet gant Scott en em laka da stleja an tranellou o-unan. D'an 3 a viz genver 1912, e kas tri eus e dud en-dro. Ne chom gantañ nemet an doktor Wilson, ar c'habiten Oates, al letanant a vor Bowers, an isofiser (« souz-ofisie ») Evans.

Ha setu ma welont er sav-heol, pell diouto, roudennou, evel ma vije tremenet tranellou dre eno. Graet gant an erc'h savet gant an avel, a soñjont, mar-teze. Hogen antronoz, e weler atao an hevelep roudennou, tostoc'h. Pep unan eus ar pemp den-se a zeu d'ezañ an hevelep soñj, hag erfin unan a lavar ez eo ret mont da welout petra eo. Den ebet ne rann ano Amundsen, hogen an holl a soñj ennañ. Siouaz ! anat eo bremañ : setu merkou skiou, tranellou ha paouioù chas. Amundsen hag e geneiled (kenseurted) a zo tremenet eno. Tizet o deus ar penn-ahel ar re genta !

Ankeniet, digalonekaet, evit an enor da gas da benn al labour boulc'het, ar pemp den a zalc'h gant o hent. Heulia a reont roudou Amundsen betek an

deltennig en deus lezet er penn-ahel evel testeni eus e drec'h. En he c'hichen, ar Saozon a blant banniel Bro-Saoz, hep youc'hadennou, hep birvidigez. N'eo nemet banniel tud trec'het !

Goude e voe an disparti. D'an dud-se a stlej o-unan o zranellou adalek ar skourneg Beardmore, ar samm a hañval (seblant) beza pounneroc'h. Klañv eo an isofiser Evans. N'en deus ket nerz a-walc'h d'en em stleja e-unan. Koueza a ra en eun toull erc'h. Hen lakaat a reer en e sav gant eur gouli en e benn. Balbouza a ra atao an hevelep geriou : « Ar penn-ahel ! ar penn-ahel ! ar re genta ! » Aet eo diskiant ! Lakaet ez eo war eun dranell, hag evel-se e tiskennont gant ar skourneg Beardmore. N'eo ket hep poan : ret eo stleja an tranellou a-unanou, adober dek gwech an hevelep hent.

Yen-spontus eo an amzer : 40 derez dindan o-gwan (zero). An dremm (fas), an daouarn hag an treid a skourn. Hag an hañv eo ! Erfin, d'ar 15 a viz c'houevrer, e tilezont en a-dreñv ar skourneg Beardmore. N'eus nemet c'houec'h kant kilometrad d'ober ken !

Evans ne zebr mui. Mervel a ra. Bremañ ar pevar den a c'hell mont buanoc'h. Hogen, ar gwall-amzeriou a grog adarre, hag an erc'h a gouez. Oates a zo skournet e dreid. Ne c'hell ket heulia. Ret eo e c'hortoz. Sizunveziou ha sizunveziou a dremen. Kompren a ra ne da ket e genseurtes war-raok abalamour d'ezañ. En em laza a ra.

Ar re all a gendalc'h gant o hent, er vrumenn hag en erc'h. N'eus ken kalz a vevañs ganto, ha naon o deus alies. Ret-mat eo d'ezo mont betek dastumlec'h bras an 79 derez 30. D'an 21 a viz meurz ne chom

nemet ugent kilometrad d'ober. Hogen, ken kreñv e c'houez an avel ha ken stank e kouez an erc'h ma ne c'heller ket ober kant metrad !

Deut eo poent an dremenvan ! Eun dremenvan c'horrek ha dispi. N'eus ket a varo euzusa. Er-maez, ar wall-amzer, an avel diroll a hej-dihej an deltenn a chom war-sav dre vuzud. Lavaret e vije e fell d'an Natur o bruzuna. E-barz an deltennig, kollet e-kreiz kompezennou ar c'hreisteiz, emañ tri den o c'hortoz ar maro. Daou anezo, Wilson ha Bowers, a zo astennet war an douar, skuiz-divi. Scott, heñ, en dije marteze nerz a-walc'h da vont betek an dastumlec'h. Wilson a bed anezañ da vont, da arnodi (esaea) da nebeuta. Scott, avat, ne respont ket.

Wilson ha Bowers a varv d'an 23 a viz meurz. Scott a chom e-unan-penn. Beva a raio c'hoaz e-pad c'houec'h devez. Skriva a ra war ar c'haier m'en deus notennet warnañ bemdez darvoudou ar veaj : « Ma vijen deut en-dro, em dije gallet lavarout d'ar bed peseurt tud e oa va c'henseurtes ha petra e oant gouest da ober. »

Gortoz a ra ar maro. Goustadik e tremen an amzer. Mervel a ra d'an 29 a viz meurz 1912. Eun tammig araok mervel e krog eur wech diweza en e gair, hag e skriv : « N'em eus keuz ebet. M'em dije da gregi adarre gant ar veaj-se, o c'houzout kement a goustje d'in, e rajen. Ne vezo ket bet didalvoud dre m'he devo diskouezet kaleted ar Saozon, o spered a genlabour, ha penaos e ouzont sellout ouz ar maro gant kement a nerz-kalon ha gwechall ».

Adkavet e voe korfou Scott hag e geneiled e miz here an hevelep bloaz.

EREL KERALBAN.

## PENAOES DESKI LENN BREZONEG

Alies eo bet goulennet diganimp penaos ober evit deski lenn brezoneg d'ar re a oar komz brezoneg, d'ar vugale, pe zoken d'ar re vras o deus c'hoant pe ezomm da lenn.

Respontet hon eus e vije graet eul levr a-ratoz, ha spi hon eus ne zaleo ket al levr-se da zont er-maez.

O c'hortoz, avat, setu amañ eun nebeut aliou, a vo talvoudus, a gredomp. d'ar re o deus c'hoant d'ober skol d'o c'henvroiz. N'eo ket rej evit se beza mestrskol, daoust m'eo ar vistri-skol, evel just, a c'hell ober ar muia a vat, ma karont.

### Eun nebeut komzou a-raok staga

Lakaomp oc'h eus bodet en-dro d'eoc'h eur bagadig bugale (pe dud vras), hag e fell d'eoc'h, e berr amzer, deski d'ezo lenn (ha skriva marteze) ar brezoneg.

Ar vugale-se (pe an dud-se) a oar holl kaozeal yez o bro. Ne vo eta nemet da deurel evez ouz eun dra : ar yez a gomzont a zo yez o c'horn-bro, da lavarout eo, ne zistagont ket atao ar geriou evel m'o skriver e brezoneg unvan, hag an holl c'heriou n'int ket ana-

vezet ganto. Labour ar c'helenner eta a vo disheñvel, hervez ar rannvro. Geriou evel « kilhog » pe « vi », da skouer, a ranko beza diskleriet e bro Dreger. E Goueled-Leon e vo ret diskleria « izel », « bruzun », « ezomm », hag all. E bro Wened en devo ar c'helenner da deurel evez bras ouz ar geriou, enno eur « z », pe eur « v », pe eun « ou ». Hag evel-se e pep parrez. daoust d'imp da veza dibabet peurliesa furmou boutin implijet dre-holl.

Ne vo ket a levr gant ho skolidi. Evel-se, mat e vezo d'eoc'h kaout eun daolenn du. Kalz gwelloc'h e vo ouspenn, ma 'z eus gant ho skolidi pep a gair, da skriva warnañ ar pez ho pezo merket war an daolenn, ha da dresa warnañ ar skeudennou, mar dint barrek d'hen ober.

Ma ouzont lenn dija, e c'hellit mont buan a-walc'h. Ma ne ouzont ket lenn, e rankot mont goustad. Kredit ac'hanomp, avat : deski a raint lenn kalz buanoc'h eget e galleg.

Ne c'hellomp, er pennadou da heul, nemet diskouez d'eoc'h an hent dre vras. D'eoc'h da ober ar peurrest ha da wellaat ho kelennerz tamm-hattamm, hervez ar skiant-prena ho pezo gounezet.

### Kenta kentel : i

Skeudennou : tresa war an daolenn du, pe diskouez skeudennou, en eur skriva an ano fraez dindan (hep klask, avat, deski lenn an anoieu-se) : ti, ki, iliz, milin, fri, krib.

Lennadenn : (el lennadeñnou ne roomp nemet skoueriou eus ar pez a c'heller ober).

i.

### Eil kentel : t

Skeudennou : ti, toull, tan, teod, c'houtell, hent.

Lennadenn :

ti. — it.

### Trede kentel : n

Skeudennou : tan, milin, azen, neud, gwenan, menez.

Lennadenn :

ni. — tintin.

### Pevar kentel : a

Skeudennou : bag, yar, tan, lagad, marc'h, aval.

Lennadenn :

a. — an tan. — ti Anna. — tintin Anna.

### 5-vet kentel : l

Skeudennou : lagad, logod, iliz, milin, alc'houez, c'houtell.

Lennadenn :

al lann. — ilin Alan. — an alan. — tal Anna.

### 6-vet kentel : e

Skeudennou : pesk, menez, hent, beleg, ejen, telenn.

Lennadenn :

e ti Alan. — e-tal ti Lena. — telenn Anna. — al linenn. — an tan e ti Elena. — te a lenn, Anna. — lennit, Alan, e-tal an tan. — Tenenan.

### 7-vet kentel : m

Skeudennou : milin, marc'h, menez, meud, flamm, koumoul.

Lennadenn :

me a lenn mat. — Alan a lamm e-tal milin Anna. — mantell Elena. — ti melen Lina e-tal al lann. — an ael mat. — lennit, mamm. — melen eo an tamm amann.

### 8-vet kentel : o

Skeudennou : skol, logod, dor, forn, pod, krog.

Lennadenn :

e ano eo Malo. — tomm eo an tan. — teo eo Alan. — lennit mat, Mona. — melen eo taol Elena. — nao maen e-tal milin Anna. — Lena, lennit atao. — toenn an ti. — te eo, Lan. — oan Elena. — tonton Alan.

### 9-vet kentel : r

Skeudennou : bara, yar, fri, archer, krib, kroaz.

Lennadenn :

an ti e-tal ar mor. — al laer a lamm en ti. — malit mat, miliner. — maro eo mamm Renea. — lammat a ra an oan. — lenn a rit mat, Elena. — tenna a ra an tan. — teo eo eontr Mari. — Alan ne oar lenn netra. — melen eo armel Lina. — maro eo oan Mona, e-tal milin tonton Leon. — naet eo mantell Renea atao. — torret e oa taol an ti. — tennit tiretenn an armel. — maro eo an taro.

### 10-vet kentel : k

Skeudennou : skol, ki, kaz, kador, karr, pesk.

Lennadenn :

ki. — karr. — kaol. — kana. — kaier. — kalon. — kana a ra Anna. — mamm, kemer mantell Elena. — kaer eo ki ar miliner. — melen eo kasketenn Alan.



# PAJENN AR VUGALE

## Sindbad ar Martolod

### AR GENTA BEAJ

#### Ar Pesk Burzudus ha Kazekenned ar Roue Mirdjan

— Va zad, eme Sindbad, a oa eur marc'hadour, eus ar re vrasa er vro, pinvidik-meurbet. Mervel a reas diouzin pa ne oan c'hoaz nemet eur bugel. Kerkent ha ma teuis d'am oad, kemer a ris etre va daouarn an holl vadou a oa chomet a ziwar e lerc'h. Ha me da zebri, da eva, da brena dilhad kaer, ha da zispign va feadra a-hed hag a-dreuz, gant tud yaouank evel-doun, o kredi e padje an doare buhez-se atao.

Eun deiz, a-greiz-holl, e kavis em boa foranet va holl zanvez, hag e oan hep gwenneg ebet mui war va ano. Va skiant-vat a zeuas d'in adarre, hag e voen leun a vez hag a spont en eun taol.

Sevel a ris, hag e werzis kement tra am boa bet : va zi, va arrebeuri ha zoken va dilhad. Tri mil drakm (1) a zastumis evel-se. Ha me da brena ganto marc'hadourez, evit mont da veaji er broiou pell.

Pignat a ris, gant marc'hadourien all, war bourz eul lestr dare da loc'ha. Merdei a rejomp e-pad meur a zevez hag a nozvez, o tremen eus eun enezenn d'eben, hag eus eur mor d'egile. Seul dro ma ehane al lestr en eur porz, e tiskennjomp d'an douar da werza, da brena ha da eskemm hor marc'hadouzeziou. evel-se betek tizout eun enezenn, a oa heñvel, a gave d'imp, ouz liorzou (2) ar Baradoz.

— lakaat a ran kaol e karr Malo. — konta a ran naontek kaolenn. — kanna a ra Ronan ki Renea. — keleier mat. — kemerit kreion Mona. — lakait en tan kaier Tenenan. — mat eo kalon Lina. — torret eo kein mamm Alan. — Ronan ne lenno ket.

(da genderc'hel)

Notenn. — evit ar vugale vihan, mat e vo skriva pep tra gant lizerennou bihan ; da skouer : kanna a ra ronan ki renea.

Kabiten al lestr a roas urz da eoria, ha kement den a oa er bourz a yeas d'an enezenn. Hag eno ober tan, darn da boaza o boued, ha darn all da walc'hi o zraou.

Evidoun-me, ez is da vale gant eur bagad re all. Setu ma klevjomp trumm mestr al lestr o huchal a-bouez-penn :

— Ata, paotred, hastit afo da savetei ho puhez ! Lezit war ho lerc'h kement a zo ganeoc'h ! An enezenn m'emaoc'h warni n'eo tamm ebet eun enezenn. Eur pesk eo, eur mell pesk, a zo chomet difinv pell amzer e-kreiz ar mor. An traez en deus en em verniet warnañ, hag ar gwez o deus kresket warnañ aba gantvedou ha kantvedou. Hogen, pa hoc'h eus graet tan, ar wrez he deus e zihunet, hag emañ o vont da spluja. Tec'hit d'ar red, pe bremaik e viot kollet !

An holl n'o devoe ken soñj raktal nemet dont endro d'al lestr, o tilezel kement o doa kaset ganto, o dilhad, o forniou, o boued hag o marc'hadourez. Darn a c'hellas lestra. Re all, ha me en o zouez, a voe re zivezat. An enezenn a finvas hag a splujas e doun ar mor, o lakaat an dour da droiellat el lec'h ma oa bet. Sanka a ris e-kreiz an tonnou. Hogen Alla Holl-c'halloudek am diwallas, o kas betek va dourn eur gibell vras he doa talvezet d'am c'heneiled (3) da ober ar c'houez. Kregi a ris enni. Ha me a-c'haoliad warni, oc'h ober gant va zreid e-giz roeñvou da skei an dour en daou du.

Kabiten al lestr a lakaas da ouel, dichal-kaer ouz ar re a oa o vont da veuzi. Sellout a ris ouz al lestr ken na 'z eas diwar wel. An noz a zeuas. Kredi a raen e oan tost d'ar maro. E-pad an holl nozvez-se hag an deiz war-lerc'h, e voen douget gant an tonnou ha lusket gant an avel. En diwez ez eas ar gibell a-stok ouz ribl eun enezenn. Hag o kregi e skourr eur wezenn, e teuis a-benn da baka douar war-bouez va divrec'h. Morzet e oa va divesker, ha drailhet e oa bet soliou va botou gant ar pesked.

Koueza a ris war an douar, hag e chomis eno, as-tennet e-giz eun den maro, betek antronoz. Heol ar

beure (4) a restaolas d'in ar vuhez. Gwall goeñvet e oa va zreid, en doare ma ranken ruza war va daoulin da gerzout.

An enezenn a oa leun a frouez hag a eien-dour. E-pad meur a zevez, n'em boe da zebri nemet frouez, ha dour da eva. Tamm-ha-tamm, avat, e teue va nerz d'in en-dro. Ha me da furchal en enezenn. Eun deiz, o hedi ribl ar mor, e welis eun dra bennak en di-bell, ha na c'hellis ket spisa mat petra oa, pe eul loen gouez, pe eur morvil (5) bennak chomet war ar sec'h. En eur dostaat, koulskoude, e kavis e oa eur gazeg eus ar brava. Klask a ris tapout anezi. Hogen ober a reas eur c'houirinadenn ken taer ma krenis gant ar spont. War se e teuas eun den a zindan an douar, hag a redas war va lerc'h en eur hopal :

— Piou out-te, hag eus pelec'h e teuez-te, ha perak out deut amañ ?

— Aotrou, a respontis, n'oun nemet eur paour kaez den, bet diwallet diouz ar mor gant dourn madelezes Alla.

— Deus ganin, eme an den.

Hag e kasas ac'hanouñ dindan an douar e-barz eur c'heo. Eno e oa eur sal vras leun a voued. Rei a reas d'in da zebri, ha p'em boe debret va gwalc'h, e kontis d'ezañ va istor, en doare ma voe souezet-mik.

— Hogen te, Aotrou, emezoun, lavar d'in ivez piou out, ha perak e chomez amañ er c'heo-mañ, gant ar gazeg-se staget war an aod.

Respont a reas :

— Bez' ez oun unan eus mevelien ar roue Mirdjan. Deut omp amañ gant pep a gazeg. Ma n'ez pije ket va c'havet, marvet e vijes amañ, hep mar ebet.

War se e klevjomp tourni ha safar bras er-maez, hag aet betek dor ar c'heo, setu ar pez a weljomp :

An tonnou a oa goloet-holl a gezeg brao-dispar, hag a c'halve ar c'hazekenned, o klask o dedenna ganto e doun ar mor. Ne c'hellent ket, avat, peogwir e oant staget. A-hed an aod, e oa ar vevelien all oc'h argas ar mirc'hed (6), hag o vont kuit gant ar c'hazekenned.

Lakaet e voen war gein eur gazeg, ha ni en hent, hep chom a-sav neblec'h a-raok tizout kêr ar roue Mirdjan. Eno e voen kaset dirak ar roue, a reas d'in ar gwella degemer. Ober a reas d'in displega d'ezañ kement a oa c'hoarvezet ganin. P'em boe echu, e lavaras :

— Eur burzud eo, pa 'z out bet diwallet ! Alla ra vo meulet evit e vadelez ez keñver !

Hag e reas stad vras ac'hanoun. Anvet e voen gantañ da vestr ar porz, karget da evezia ouz an holl listri a zeue eno bemdez.

Pell amzer e chomis evel-se, gwelet mat gant ar roue, ha doujet gant ar bobl. Bemdez, e c'houlennaten ar veajourien, ar vartoloded hag ar varc'hadourien estren a gejen ganto diwar-benn Bagdad, e spi da c'hallout distrei d'am bro c'henidik. Hogen den ne c'helle rei d'in an distera tamm kelou.

Ankeniet-bras e oan, rak hir e kaven an amzer, pell diouz va bro. Eun deiz, e oan war ar porz evel boaz, pa zegouezas eul lestr bras, displeget e holl oueliou. Kerkent ha ma voe staget ouz ar ribl, ar c'habiten a lakaas gouziza ar plenk evit dilestra. Ha me da skriva an anoiou merket war ar pakadou, a-feur ma vezent diskennet.

Ar vartoloded o doa tost echuet o labour, pa c'houlennis ouz ar c'habiten :

— Daoust hag e chom marc'hadourez c'hoaz war da lestr ?

— Ya, Aotrou, a respontas. Bez' ez eus marc'hadouzeziou eun den a zo bet beuzet e-pad ar veaj. C'hoant hon eus d'o gwerza, da zegas ar priz d'e gerent, e Bagdad.

— Ha pe ano, emezoun, en doa perc'henn ar madou-se ?

— E ano a oa Sindbad, emezañ.

O klevout se, sellout a ris piz ouz ar c'habiten. E anavezout a ris, hag e c'harmis a vouez uhel :

— Siouaz, kabiten, me eo Sindbad, an hini a oa war da lestr ! N'oun ket bet beuzet, evel ma kred d'it, hogen setu-me amañ, Alla ra vo meulet !

— Dre Alla, eme ar c'habiten, n'eus na gwirionder na feiz e-touez an dud !

Goulenn a ris outañ perak e komze evel-se.

— Peogwir, emezañ, adal m'ec'h eus va c'hlevet o lavarout e oa beuzet perc'henn ar madou, e fell d'it lakaat krog warno hep dispign eur gwenneg. Sindbad a zo bet beuzet, gant kalz a re all. Hen gwelet hon eus gant hon daoulogad.

Neuze e kontis d'ezañ va istor penn-da-benn, hep ankounac'haat traou na oant tremenet nemet etrezañ ha me, ken na rankas va c'hredi. Anavezet e voen gantañ en diwez, ha gant marc'hadourien all eus al lestr. Hag int da ober d'in gourc'hemennou en eur veuli Alla, en doa roet d'in evel eur vuhez nevez.

Kavout a ris va marc'hadouzeziou. Eus va fakadou e tennis eun nebeut traou prizius, a ginnigis d'ar roue a oa bet ken madelezes em c'heñver. Lavarout a ris d'ezañ em boa kavet va c'heneiled, ha goulenn a ris digantañ an aotre da vont kuit. An aotre-se a roas d'in raktal, en eur heti d'in eur veaj vat, hag oc'h ober d'in profou kaer.

## G WALARN

Kelaouenn viziek

Rener: Roparz Hemon

Priz: 30 lur ar bloaz (broiou estren: 35 lur)

Chomlec'h:

Journal de Gwalarn, Boîte Postale 75, BREST

(C.C. 96.38, Rennes)

## KANNADIG GWALARN

Kazetenn viziek

Rener: Roparz Hemon

Priz: 10 lur ar bloaz (broiou estren: 15 lur)

Adres:

Journal de Gwalarn, Boîte Postale 75, BREST

(C.C. 96.38, Rennes)

Eskemm a ris va marc'hadourezioù ouz traou graet en enezenn, gant gounid bras. Savet an eor, al lestr a yeas war-eeun da v-Basora, hag ac'hano e tistrois da v-Bagdad.

Neuze e preñis eun ti gant va finvidigeziou nevez. Hag hep soñjal mui e kement am boa gouzañvet, en em rei a ris da holl blijadureziou ar vuhez, o tebr hag oc'h eva mat, e-touez va mignoned.

Setu aze eta istor va c'henta beaj. Warc'hoaz, gant gras Alla hollec'halloudek, e tisplegin d'it an eil.

(da gendere'hel)

(1) *drakm* : pezh-mouneiz implijet e bro Hellas hag e meur a vro eus ar Sav-Heol. — (2) *liorz* : jardrin. — (3) *keneil* : mignon. — (4) *beure* : mintin. — (5) *morvil* : loen-mor. — (6) *marc'hed* : kezeg.

### ARAOKADENNOU

el

### LUC'HSKEUDENNEREZ

Evel pep tra all war dachenn ar ouiziegezh emañ al luc'hskeudennerez (fotografiezh) o vont atao war-raok. An holl dud a gemer dudi en traou-se a oar pegen aesoc'h e vez luc'hskeudenna hizio eget gwechall. Abaoe eun nebeut bloaveziou zoken, ez eus bet graet araokadennoù a bouez, er binvioù kenkoulz hag en taolennou (plakou) hag er c'hoc'hennou (peliku-

lou). Bez' e c'heller hizio, gant eur benveg mat, luc'hskeudenna pa vez teñval an amzer, tost ken mat ha pa vez an heol o splanna.

#### O luc'hskeudenna en deñvalijenn

Unan eus an araokadennoù souezusa eo al luc'hskeudenna en deñvalijenn.

Bez' ez eus, — an dra-se a zo anavezet a bell 'zo, — skinou (bannou) goulou, na vezont ket gwelet gant hon daoulagad, hag a ra merkou koulskoude war daolennou pe goc'hennou ar binvioù luc'hskeudennerez. Anvet int skinou « gouruz ». Gant ar re-mañ eo e luc'hskeudenner en deñvalijenn.

Lakaet e vez er benveg eun daolenn pe eur goc'henn graet a-ratoz da virout merk ar skinou gouruz. Eun dra bennak, e-kreiz an deñvalijenn (evit hon daoulagad da vihana, na welont ket ar skinou-se) a c'hell neuze beza luc'hskeudennet. Arabat kredi koulskoude, ez eo heñvel-mik al luc'hskeudennou graet evel-se ouz al luc'hskeudennou all. Traou, evel delioù ar gwez, kroc'hen pe vleo an den, a zo kalz sklaeroc'h, ha traou all, evel an oabl da skouer, a zo kalz teñvaloc'h.

N'eo ket hepken da luc'hskeudenna en deñvalijenn ez eo talvoudus ar skinou gouruz. Talvezout a reont ivez da luc'hskeudenna a-dreuz d'al lantar, pe en oabl, stered 'zo, na c'hellfent ket beza dizoloet e doare all.

KENSTRIVADEG AR VUGALE

A VO ER MIZ A ZEU